

HISTOR ZANTEL

TESTAMANT KOZ


HA

TESTAMANT NEVEZ

Diocèse de
Quimper & Léon
Evêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

Great gant an Aotrou MADEC
e Kérinou Lambézellec.



BREST

A. DERRIEN, LEORIER, 52, RU SIAM,

1929

NIHIL OBSTAT :

Henri PÉRENNES

Docteur en théologie

Censeur.

Quimper, le 23 décembre 1926

Imprimatur:

Quimper, le 20 janvier 1927

A. COGNEAU,

v. g.

D'AL LENNER


Histor an Testament cox hag an Testament nevez,
aotreet gant an aotrou 'n eskop er bloaz 1869, a zo
bet asmoullet evit an dekved guech er bloaz 1914.
Goulen a zo bet great digant an aotrou Benziger, a
oa o choum en Einsiedeln, araok ar brezel bras,
hag a zo breman e Strasbourg, asmoulla al leor eur
vech muioc'h, mes lavaret en deus nan. Ne fell
d'ezhan na nevezi an Testament, nak aotrea re all
d'ober al labour-ze, na rei ar skeudennou a gaera
he leor. Neuze, abalamour ma 'z eus ezm bras da
gentelia ar gristenien var Histor hor Zalver Jesus-
Christ, hon eus goulennet, da genta bennoz an
Aotrou 'n eskop. Da c'houde, hon eus poaniet da rei
sklerijen d'al lennerien var ar peb brasa euz an
traou kaer ha burzudus en deus great an Aotrou
Doue evit an dud, abaoe ar penn kenta euz ar
bed betek an deiz m'eo pignet Hor Zalver Jesus-
Christ en nenv.

Dizaour eo eur gentel gatekiz d'ar vugale, eur
brezegen d'ar barresioniz, ma n'eo ket anavezet an
Histor Zantel.

Ra blijo gant an Aotrou Doue skuill he vennoz
var hon labour ha var hon lennerien.

Kérinou, d'an 8 a viz guengolo 1927.

Y.-M. MADEC.



Lezit ar vugale da zont betek ennen

HISTOR ZANTEL

Eur ger araok

Testamant Koz ha Testamant Nevez

Daou rann a zo en histor zantel: an Testamant koz hag an Testamant nevez.

Ober a reomp Testamant Koz euz an unani a oue sinet etre Doue ha pobl Israel e kichen menez Sinai, unani hag a oue siellet gant goad an anevaled Einniget e sakrifis d'ar guir Doue gant Moysez hag Aaron; ober a reomp Testamant Nevez euz an unani a oue great etre Doue hag an dud var menez Kalvar, pa roas Mab Doue he vuez evidomp. An Testamant Koz en deus renet betek m'en deus Mab Doue siellet gant he C'hoad Sakr an Testamant Nevez: an Testamant-man a bado da viken.

Hag an abostol sant Paol a lavar d'eomp: Guelit pegen talvoudus eo an Testamant Nevez var an Testamant Koz, kement a gem a zo etrezho evel ma 'z eus etre goad eun Doue ha goad loened.

Leoriou ar Skritur Zakr

Ar Skritur Zakr a zo santel dreist an oll leoriou all, abalamour ma ro d'eomp komzou an Aotrou Doue. Skrivet eo bet gant an dud, guir eo, mes an dud-se a oa sklerijennet gant ar Spered Santel.

Ar Skritur Zantel a zo rannet e 72 leor: bez' ez eus 45 evit an Testamant Koz ha 27 evit an Testamant Nevez. Leoriou an Testamant Koz a c'hell beza rannet e tri rum: ar re genta a verk d'eomp

histor ar bed, p'eo bet krouet gant an Oll C'halloudek, hag histor an Israelited, pobl muia karet an Aotrou Doue, abalamour ma flie he Vab genel euz ar bobl-se, e kement ha ma oa den-Doue. An eil rum leoriou euz ar Skritur Zakr a ziskuill d'an dud, dre bluen ar bropheted, meur a dra hag a dlle digouezout en amzer da zont; an trede rum a ro d'an dud aliou ha kenteliou leun a furnez evit sikour ar bec'herien da jench buez, ha ren ar guir gristenien var hent ar zantelez. Pa ves lennet pe ganet an Abostol d'ar zul, ar gentel a gavoc'h en ho leor oferen a zo tennet: guech diouz Lizeri eun Abostol benag, ha guech diouz eul leor euz an Testamant Koz: ar Jenes, an Exod, ar Furnez, ar Prophet Isai, etc.

Leoriou an Testamant Nevez a zo: an Aviel, Oberou an Ebestel, Lizeri pemp euz an Ebestel, hag Apokalyps an abostol sant Ian. En oferen, an Aviel a ves kemeret atao e Leor unan euz ar pevar Aviel.

Labour ar skrivanierien

Leoriou ar Skritur Zakr a ves lennet ha studiet gant ar brasa evez en oll boblou kristen, rak bez' e roont d'eomp koinzou an Aotrou Doue. Guir eo, n'int ket bet skrivet gant Doue he-unan, evel m'en deus skrivet an dek gourc'hemen var diou daolen vean, evit ho rei da Voysez var menez Sinaï, mes sklerijennet en deus ar skrivanier.

Leoriou ar Skritur Zakr a zo bet skrivet eta gant tud santel, hag o doa sikour an Aotrou Doue ho sklerijenne, hag ho c'hennerze en ho labour.

Abalamour da-ze, na c'hell beza ger gaou ebet er Skritur Zakr; abalamour da-ze c'hoaz, an doktored

hag an dud desket a zo o studia heb ehan ar c'homzou santel-ze, evit kaout ennhou guirioneziou talvoudus bras d'hor zilvidigez.

Ar skrivanier galvet gant Doue da skriva en he hano d'an dud, a zante, en he galon, c'hoant d'ober al labour; dre ma skrive, Doue a zigase da zonj d'ezhan euz an traou en doa guelet pe glevet, hag e oa mad d'ezhan ho skriva. Ar bropheted o deus bet, digant an Aotrou Doue, muioc'h a sklerijen eget ar skrivanierien all, rak int-hi a vele, evel var eun daolen, an traou a dlle c'hoarvezout en amzer da zont, hag a dlient ober kaoz anezho en ho leor.

Skrivanierien ar Skritur Zakr o deus peb hini he zoare da skriva, mes ho c'homzou a ves henoret kement ha kement gant an Iliz, abalamour ma 'z int oll komzou Doue.

An doktored a lenn gant evez ar Skritur Zakr, ha kaer o deus lenn hag astenn kant ha kant guech all ar c'henteliou a zo ennhu, e kavont ennhou, bemdez, eur sklerijen nevez. Daoust ha lenn a rit, gant evez, diou gentel ar Skritur Zakr d'ar zul: an Abostol hag an Aviel. Daoust ha selaou a rit, gant doujans ha karantez, kenteliou ar beleg, p'eman o tisplega dirazoc'h ar guirioneziou-ze?

Pa deu, en eun tiegez, eul lizer digant ar mestr, divar benn priz ar gouel Mikeal, ar paper-ze a vezo sellet piz outhan; pa deu deoc'h, digant ar barner, e koulz eur prosez, eur gemennadurez benag, al lizer-ze a vezo lennet meur a vech ha poezet piz peb ger anezhan, perak? kalz a-zo da c'hounit ma ves ententet mad lavarou ar barner, lavarou ar mestr.

Doue, ar mestr kenta, a ginnig d'eomp he varadoz; Doue, ar barner bras, a ranno an dud e daou rum, evit ar baradoz pe an ifern; merket en deus d'eomp he volonteiz er Skritur Zantel, daoust ha lenn a reomp he lavarou gant evez? Gant pebez aked e lennit-hu al leorik-man, gant he genteliou?

HISTOR AN TESTAMANT KOZ

KENTA PENNAD

Euz Adam betek Abraham

KENTEL 1. — Krouidigez ar bed

Doùe a zo a oll viskoaz ; an traou a velomp a zo bet krouet ganthan : n'eus ket bet anezho a oll viskoaz.

Er penn kenta, Doue a grouas an nenv hag an douar.

An douar a oa noaz ha dizoare, hag an denvalijen a c'holoe an oll draou krouet. Doue a lavaras neuze : « Ra vezo sklerijen ! » ha kerkent, ar sklerijen a oue anezhi. Neuze, Doue a zispartias ar sklerijen diouz an denvalijen, hag ho hanvas an deiz hag an noz. Ha setu klozet an dervez kenta euz krouidigez ar bed.

En eil dervez, Doue a grouas an oabl, hag a zispartias doureier an douar diouz doureier an nenv.

En trede dervez, Doue a lavaras : « Ra zeuio an doureier a zo dindan an oabl d'en em zastum en eul leac'h, ha ra zeuio an douar a vel » ; an doureier bras-se a oue hanvet mor. Var urz Doue, an douar a zougas geot, plant ha guez, ha peb hini anezho a roe he frouez.

Er pevare dervez, Doue a grouas an heol, al loar, hag ar stered : an heol evit sklerijenna an douar ha rei groez d'ezhan, evit ranna an amzer e derveziou, miziou ha bloaveziou ; al loar evit para en noz.

D'ar pemped dervez, Doue a grouas al laboused

hag ar pesked; ho benniga a reas en eur lavaret :
« Mirit ar ouenn, hag it var gresk. »

D'ar c'houec'hved dervez, Doue a grouaz euz an douar an oll anevaled a dle beva varnhan. Lavaret a reas da c'houde: « Greomp an den diouz hor patrom hag hon henvelidigez; ra zeuio da ren var besked ar mor, var laboused an nenv, var al loened hag an douar a bez. »


Evel ma veler, Doue en deus krouet, da genta, an traou gros ha dibarfet: an douar hag an dour; da c'houde, ar guez, traou hag ho deus nebeud a vuez; divezatoc'h, en deus great an anevaled, o deus eur vuez parfetoc'h; da ziveza, en deus krouet an den, hag a zo ar c'haera euz oberou Doue var an douar-man.

Pegit e padas an amzer a c'houec'h dervez-se ? Ne ouzer dare. Pa lavar ar Skritur Sakr : eun dervez, ar gerze, er penn kenta euz ar bed, a verk eur pennad amzer hag a zo padet marteze, meur a gant vloaz ha meur a vil vloaz.

KENTEL 2. — An den kenta

Doue a furmas korf an den kenta euz an douar, hag a roas d'ezhan eur c'houezaden a vuez: evelse eo e oue great an den kenta, hanvet Adam gant an Aotrou Doue. En eur c'houeza buez er c'horf, Doue a roe d'ezhan eun ene, setu ma oa gwest da anaout ha da garet he Grouer.

An anevaled a oa bet krouet daou ha daou, an den a oue krouet he-unan, met neuze Doue a zisklerias: « N'eo ket mad e c'houmfe an den he-nan. » Digas a reas eta d'ezhan eur c'houisk burzudus, hag epad ar c'houisk-se, Doue a furmas ar vaouez kenta diouz unan euz kostou an den, hag a roas d'ezhi eun ene evel d'ar goaz.



Krouidigez Eva

Adam a lavaras, kerkent ha ma tihunas: « Setu eun askorn diouz va eskern, setu ar c'hig euz va c'hig. Abalamour da-ze, an den a zispartio diouz tad ha mam, hag a vevo gant he bried. » Adam a hanvas he bried Eva, da lavaret eo: « Mam an dud leo. » Ha Doue a lavaras d'ezho: « Mirit ar ouenn,

hag it var gresk, goloit an douar, ha renit var an oll draou. »

Dre ar c'homzou-ze, Doue a zave ar famill; rei a rea deveriou d'ar priedou, gant ar grasou m'o deus ezom anezho evit ober mad ho labour er bed-man.

Neuze, Doue a ehanas. Abalamour da-ze, ar Juevien a vire lezen an ehan da zadorn. Ar gristenien, er c'hontrol, a jom heb labourat da zul.

Na peger mad eo an Aotrou Doue evidomp ! Hor c'hrouet en deus, roet en deus d'eomp eun ene gwest d'he anaout ha d'he garet, eur c'horf gwest d'he zervicha. Roet en deus d'eomp galloud d'ober implij euz an oll pinvidigezou a zo kuzet en douar, hag euz an oll drevajou a zizouan var an douar, roet en deus d'eomp galloud var an oll anevaled. Ia, mil bennoz d'an Aotrou Doue !

KENTEL 3. — Krouidigez an elez

Baradoz an douar

Er penn kenta euz ar bed, Doue a grouas ive an elez, sperejou pur, parfetoc'h eget an den. Gant he ene, an den a c'hell anaout Doue, mes tenna a ra d'an anevaled, dre he gorf. An elez, er c'hontrol, a zo spered, ha netra ken; n'o deus korf ebet.

Krouet int bet oll pur, dinam, gant ar c'hraas a ro ar zantelez, ha dre-ze, din da gaout eürusdet ar baradoz. Doue, evelato, na ro he varadoz nemet d'an neb en deus he c'hounezet, ha setu perak ec'h amprouas an elez. Darn anezho, gant Lusifer en ho fenn, en em zavas eneb ho C'hrouer; darn all, renet gant sant Mikeal, a enebas ouz Lusifer, hag her strinkas en ifern, gant he elez fall. Doue a zigemeras neuze an elez mad en he varadoz.

An eal kouezet a zo bet strinket gant an Aotrou

Doue en ifern dioc'htu; d'an den kouezet, Doue a ginnig ar pardoun. Perak? An den a zo semproc'h, dibarfetoc'h eget an eal.

Doue a lakeas an daou zen kenta en eul liors pe jardin kaer dreist, hanvet Baradoz an douar. Adam hag Eva a gave eno kement tra a zo kaer da velet, kement frouezen a zo mad da zebri, eun ezen yac'hus ha fresk, evit miret ho nerz. Unan euz guez ar jardin dudiose, ar vezen a vuez, e dije douget, e peb amzer, eur frouezen gwest da viret ar vuez hag ar yec'hed da gorf an den.

Doue a reas d'hon tud kenta beza mistri ar jardin burzudus-se. Evelato, evit amprou ho zentidigez, Doue a lavaras d'ezho: « Deberi a c'helloc'h diouz frouez oll guez ar baradoz nemet unan: guezan skiant an drouk hag ar mad. Ma tebrit euz frouez er vezen-ze, e viot skoet gant ar maro. »

Na pegen eas e oa d'an den kenta ! Bez' en doa frouez kaer, leun a zaour; n'en doa tam ezom ebet da danva euz ar frouezen difennet. Bevet en defe heb poan, labourer en defe evit dizinoui, ha netra ken, heb morse en em skuiza; na klenved, na diezamant ebet; na skourn, nag erc'h, nag heol re dom; eat e vije euz ar bed-man heb gouzanv ar maro. Ia, pegen eas e vije bet ar vuez !

KENTEL 4. — Dizentidigez an den. — Ar pec'hed orijinel

An drouk spered, goude beza kollet he-unan peb guir d'ar baradoz, en devoe avi ouz an den, hag a glaskas he ziskar. Ar re fall o deus plijadur oc'h ober drouk.

Kemeret a reas furm eun aer vras pe zarplant, hag e c'houlennas digant ar vaouez: « Perak na zebrit-hu ket euz oll frouez ar jardin? » Eva a respontas: « Deberi a c'hellomp euz oll frouez ar jar-

adin, nemet euz re ar vezen a zo guezzen skiant an drouk hag ar mad, rak ma tebrfemp euz ar frouezen-ze, e varvfemp marteze. — Na varvoc'h ket, eme an aer, met en dervez m'o pezo debret euz ar frouezen-ze, ho taoulagad a zigoro, hag e viot henvel ouz doueou, rak anaout a reot an drouk hag ar mad. »

Eva a roas skouarn da zelaou lavarou an erouant. Sellet a reas ouz ar frouezen difennet, kaer e oa da velet; lavaret a reas en he c'haloun « Mad e tlie beza da zebri. » Kemeret ha debri a reas anezhan; da c'houde, e roas eur frouezen da Adam, hag he-man a zebras evelldhi.

Neuze, re zivezad, e veljont o doa great eur pe-c'hed bras, ho daoulagad a zigoras, mez o devoe en noaz hag ez ejont da guzat: aon o doa rak an Aotrou Doue.

Pegen diskiant eo bet hon tad kenta o tebri euz ar frouezen difennet-se !

KENTEL 5. — An den kastizet. — Eur Zalver promettel

Doue a c'halvas hon tad kenta, kuzet etouez ar guez: « Adam, e pe leac'h emañ ? — Deut oun da guzat, eme Adam, rak en noaz emañ. — Ha perak out eat da guzat, eme an Aotrou Doue, nemet abalamour m'ec'h eus debret euz ar frouezen difennet ? » E leac'h anzañ he bec'hed gant humilite, hon tad kenta a glaskas taoler ar beac'h var ar vaouez: « Ar pried am eus bet diganeoc'h e deus kinniget d'in euz ar frouezen difennet, hag em eus debret. »

Doue a c'houlenas neuze digant Eva: « Perak e peus great an dra-ze ? — Ar zarpant eo en deus va zouellet, emezhi. »

Doue a zougas kerkent ar zétans. Lavaret a reas d'an aer: « Abalamour m'e peus touellet ar vaouez, te a vezo milliget etre an oll anevaled, ha ne c'helli kerzet nemet a ruzou var da gof. Kassouni a vezo etre ar vaouez ha te, etre da ouenn hag he hini, hag eun dervez, hi a flastro d'id da benn. »

Doue a lavaras da Eva: « Bez e pezo, epad da vuez, poaniou bras ha diezamanichou niverus, ha bez' e vezi dindan galloud ar goaz. » Ha da Adam e lavaras: « Abalamour m'e peus selaouet mouez da c'hreg kentoc'h eget va difen, an douar a vezo milliget evidot. Diouiz c'houezen da dal e tebri da vara, betek ma tistroi d'an douar euz a behini out bet furmet, rak poultren out, hag e tistroi e poultren. »

P'en devoe douget ar zétans, Doue a viskas hon tad hag hor mam genta gant krec'hin loened, hag ho c'hasas kuit diouz baradoz an douar. Eun eal galloudus, eur c'hleze tan ganthan, a stanke outho hent an distro.

Setu aze, e berr gomzou, frouez ar pe-c'hed kenta, ar pe-c'hed orijinel: dichadennet en deus var an douar an oll boaniou hag ar maro. Doue en he vadelez, a bromet d'hon tad kenta eur Zalver hag a dlie beza den ha Doue asambles. Evel den, e tlie kaout poan, gouzanv evit an dud, he vreundeur, bugale Adam evelldhan; evel Doue, e tlie rei eur priz heb muzul d'he boaniou.

KENTEL 6. — Kain hag Abel

Daou grouadur kenta Adam hag Eva a oue Kain hag Abel: Kain a laboure an douar, Abel a oa pastor denved. Kinnig a rejont ho daou sakrifisou da Zoue, met sakrifis Kain ne oue ket kavet mad, abalamour ma oa eun den fallakr, e leac'h Doue a reas eur zell a garantez var sakrifis Abel, abalamour ma oa pur.

Kain a yeas drouk ennhan o velet e tisprije an Aotrou Doue he zakrifis. Lavaret a réas d'he vreur: « Greomp eur bale var ar meaz, » met a greiz pourmen, e lamas var Abel, hag e lazas anezhan. Kerfent ha m'en devoue great he dorfet, Kain a oue spountet oll, hag a dec'has. Guelet a rea petra eo ar maro.

Mouez Doue a gavas ar muntre el leac'h m'oa eat da guzat: « Kain, eme an Aotrou Doue, e pe leac'h eman da vreur? — N'oun dare; a respountas an den fall, daoust ha karget oun da ziuall va breur? — Pe seurt e peus great? eme an Aotrou Doue. Goad da vreur az peus skuillet a c'houlén justis diganen. Milliget e vezi, an douar ne zougoket a frouez evidot, ha redet a ri bro heb kaout peoc'h. — Va fec'hed a zo re vras, eme Kain, evit m'em befe ar pardoun anezhan, an nep am c'havo am lazo. — Nan, eme an Aotrou Doue, na vezi ket lazet, » hag e lakeas eur merk var ar muntre evit Giouall he vuez.

Kain a dec'has pell diouz an dud. Bez' en devoue kalz bugale, met ar re-man a oue fall eveldan. Deski a rejont labourat an houarn hag ar c'houevr, ha c'hoari gant ar musik.

Pebez rann galoun evit Adam hag Eva pa veljont, dirak ho daoulagad, korf ho mab heb. buez! Entent a rejont neuze pegen drouk eo ar gassouni, peger spountus eo ar pec'hed.

KENTEL 7. — Seth hag he lignez

Goude maro Abel, hon tud kenta o devoue eur mab hag a oue hanvet Seth: hén a vevs e karantez Doue, evel he vreur Abel.

Goude m'en devoue bet kalz bugale all, Adam a varvas, d'he 930 vloaz.

Bugale Seth a oue niverus, hag a zervichas an Aotrou Doue, evel ho zad, rak savet mad e oant bet ganthan.

En ho zouez e oa Enos, eun den devot bras; Enoch, santel ivé, pa 'z eo guir eo bet savet divar an douar-man, heb mervel; Mathusalem, kosa den a zo hano anezhan, pa 'z eo guir e vevs 969 vloaz, ha Lamech, tad an den santel Noe.

Bugale Seth, abalamour ma 'z int bet devot, a oue hanvet bugale Doue; bugale Kain er c'hountrol, a oue great anezho bugale an dud.

En amzer-ze, pa veve an dud ker koz, e oa eas d'an tad kentelia he vugale. An douar na veze ket labourer nemeur, divisoc'h e oa sevel loened, pa 'z eo guir an douar a oa d'an oll, hag a oa goloet gant eur peuri kaer ha druz.

Ex gentel-se e velomp e ves alies ar bugale fall pe vad, dioc'h ma vezont bet savet gant ho zad; alies, met na lavaran ket atao.

KENTEL 8. — An dour beuz

Epad eur maread bloaveziou, bugale Kain ha bugale Seth a vevs disparti, met gant an amzer e oue dimeziou etre tud an daou rum. Ar re fall, neuze, a reas gaou ouz ar re vad, hag ar pec'hejou a oue stank. Doue a lavaras: « An dud zo eat ker fall, ma 'z eo red d'in karza dioutho an douar oll. » Eun den hebken, Noe, a oa choumet disklabes dirak an Aotrou Doue.

Setu ma lavaras, eun dervez, an Aotrou Doue da Noe: « DISTRUJA A RIN KEMENT EN DEUS BUEZ DINDAN bolz an nenv. Grea eun arc'h gant plench ha koatoc'h, bras aoualc'h evit sayetei eur c'houblad eun an oll anevaled a vev var an douar, pe a nij en ear. An arc'h e dezo 512 troatad a hirder, 85 troa-

lad a ledander, ha 51 troatad a zounder. Epad ma ri da labour, e liviri d'an dud ober pinijen. »

Noe a implijas kant vloaz da ober he arc'h. Alia a reas an dud d'ober pinijen, met he genvroiz na reant van oc'h he glevet. Pa oue deut an amzer merket gant Doue, e lavaras da Noe : « Sav breman en arc'h gant da famill, ha kemer en arc'h eur c'houblad euz an oll anevaled gant pemp koublad guspenn euz eul loden anezho, rak an oll a ranko kaout bevans en arc'h epad amzer an dour-beuz. »

Noe a zentas, hag a zavas en arc'h gant he dud hag an anevaled. Neuze Doue a reas koueza eur glao puill, ha digeri ranvellou bras an oabl. An dour a gouezas daou ugent dervez ha daou ugent ncsvez, heb an disterra ehan. An douar a oue beuzet, hag ar menezioù huela a oue goloet gant 25 troatad dour, met an arc'h a zave gant an dour hag a joñm atao var c'horre. An douar a oue goloet a zour epad pemp miz leun pe 150 dervez.

Eun avel krenv a zirollas neuze, hag a c'houezas var ar mor bras-se, hag an dour a izeleas a nebeudou. Daou viz divezatoc'h, da lavaret eo, seiz miz goude ar glaoeier, an arc'h a joñmas a za var ar menez Ararat, en Armeni. Goude daou-ugent dervez all, Noe a zigoras prenestr an Arc'h, hag a laoskas eur vran da nijal er meaz, met ar vran na deuas ket en dro.

Abenn eiz dez divezatoc'h, Noe a reas d'eur goulmik ven nijal euz an arc'h, met al labous na gavas plas seac'h ebet d'he dreid, hag a deuas en dro. Goude eiz dez all c'hoaz, ar goulm a nijas a nevez, met er vech-man, e tistroas d'an arc'h gant eur skour olived en he beg. Eiz dez varlerc'h, ar goulm a oue laosket adarre, mes neuze na zistroas mui. Noe, laouen bras, a zizavas goulc'her pe doen an arc'h, hag a velas e oa dizolo an douar, ha seac'h bras.



Sakrifs Noe goude an dour-beuz

Mont a reas neuze er meaz euz an arc'h, gant he bried, ho zri mab gant ho gragez, hag an oll anevaled.

Peger bras drouk eo ar pec'hed, en deus dichadennet var an dud eur voalen ker spoutus ! Na pegement e tleomp diouall rak ar pec'hed marvel !

KENTEL 9. — Sakrifiks Noe goude an dour-beuz

Pa velas e oa e savete, Noe, leun a anaoudegez vad, a zavas raktal eun aoter, hag a ginnigas da Zoue eur zakrifiks-euz an oll anevaled pur. Doue a blijas d'ezhan ar zakrifiks-se, hag a reas d'eur ganeveden euz ar ra gaera lugerni en oabl. Benniga a reas da c'houde Noe hag he vugale, hag e lavaras d'ezho: « Kreskit, bezit niverus, ha goloit an douar a bez. Ar bed na vezo mui kollet hiviziken gant an dour-beuz. Keit ha ma pado an douar, amzeriou ar bloaz a gendalc'ho da zont an eil varlec'h eben, evel an noz varlerc'h an deiz. Ar ganeveden am eus lakeat e kreiz ar goumoulen a vezo merk an emgleo a ran hirio ganeoc'h. »

Ar skrivagnerien goz a lavare: Adam a zo bet krouet 4.000 vloaz araok ginivelez Hor Zalver, ha 1.656 vloaz araok an dour-beuz, met hirio na greder mui kounta ar bloaveziou ker sklear-ze, er penn kenta euz ar bed. Azalek amzer Abraham hebken betek ginivelez Jesus-Christ, e c'heller anaout, tost da vad, bloavez ha bloavez, ar peb brasa euz oberou pobl Doue.

Bugale Noe a oue Sem, Kam ha Japhet. Divar an tri-ze eo e deut an oll dud.

Noe a oa labourer douar, hag a blantas eur viñien. Eus a reas guin eun dervez, setu ma oue mezo, ha mac'h en em roas da gouskat hanter noaz en he delt. Kam, tad Kanaan, a velas da genta e pe stad e oa he dad, hag a yeas d'hen diskleria d'he vrendeür. Sem ha Japhet a gemeras dioc'htu eur vantel evit mont da c'holo ho zad, heb sellet ouzthan.

Pa zihunas Noe, e tisklerias:

Ra gouezo malloz an Aotrou Doue var Ganaan;
Ra vezo servicher servicherien he vrendeür!
Benniget ra vezo Sem gant an Aotrou Doue;

Ra vezo Kanaan he vevel!

Ra zeuio Japhet d'en em astenn, da veva e teltou
Ra vezo Kanaan he vevel! [Sem,

Noe n'anaveze ket nerz ar guin, p'en deus evet anezhan betek beza mezo, n'en doa ket eta a bec'hed. Daou euz he vugale a ziskouezas respet d'ho zad, benniget int; an trede, Kam, a oue fall evithan, hag a oue milliget en he vab. Ni a zo bugale Japhet; tud an Asie a zo bugale Sem; ar vorianed eo a zo bugale Kam ha Kanaan. Malloz Noe a boues c'hoaz hirio var ar vorianed: bez' ez int an dud diveza er bed. Diskouezomp respet d'hon tud.

KENTEL 10. — Tour Babel

Epad eun amzer, bugale Noe a joumas da veva asambles. Pa oue kresket kalz niver an dud, e rejont ho zonz d'en em zispartia. Komz a reant oll ar memez yez. Kerzet a rejont varzu ar zav haol, hag e tigouesjont e koumpezen vras Sennaar. Lavaret a rejont neuze: « Savomp ama eur gear, ha greomp eun tour hag a zougo he fenn betek an nenv. » Staga a rejont gant al labour-ze.

Met Doue a lavaras: « Diskennomp ha druillomp ho yes, en hevelep doare na e'hellint mui en em glevet. » An dud a zispartias neuze, pa'z eo guir ne oa mui a emgleo etrezho, hag a yeas dre ar bed, goude beza laosket ho labour a dreuz.

Ar gear a oue hanvet neuze Babel, da lavaret eo, rouestl, abalamour m'en doa an Aotrou Doue rouestlet ar c'haoziou eno.

Kavet eus bet, var dismantrou kear vras Babylon, eur bern atrejou hag a ves great anezho Tour Nemrod. An atrejou-se, dioc'h ma lavar an dud desket, a zo ar pezh a joum euz an tour-ze a dlle sevel betek an nenv! Doue hebken a zo bras.

EIL PENNAD

Euz Abraham betek Moysez

KENTEL 11. — Abram, tad bugale Doue

Pa oue eat an dud dre ar bed, da veva pell an eil dioc'h egile, eur maread anezho a ankounac'heas an Aotrou Doue, hag a adoras an idolou. Doue a reas neuze eur zell a drugarez var unan euz bugale Sem, he hano Abram, evit he lakât e penn he vir zervicherien.

Gourc'hemen a reas d'ezhan kuitât he vro hag he gerent, evit beza tad eur bobl hag a dlie miret ar guir feiz e kreiz ar boblou paian.

Abram a ves great anezhan tad bugale Doue, abalamour d'ar zentidigez en deus bet atao d'he Grouer.

Thare, unan euz bugale-vian Sem, a oue tad Abram Nakor hag Aram. Loc'h a reas gant he vab Abram, euz ar gear hanvet Ur, e bro Kaldee. Bale a rejont varzu bro Kanaan, met pa zigouezas Thare en Haran, e choumas eno da vad. Thare a varvas er gear-ze.

« Diles breman da vro, da familh ha ti da dad, eme eun dervez Doue da Abram, ha kea d'ar vro a ziskouezin d'id. Bez' e vezi, gant va bennos, tad eur bobl niverus, hag ennout e vezo benniget oll broiou ar bed. »

Abram a yeas en hent dioc'htu gant he c'hreg Sara, gant he niz Lot, ho zervicherien d'ezho ho daou hag ho oll vadou; kerzet a rejont betek bro Kanaan. (Vardro ar bloaz 2050 araok ginivelez Hor Zalver).

Abram a yeas adreus ar vro betek Sichem hag eno an Aotrou Doue a lavaras d'ezhan: « Rei a rin ar vro-man d'az pugale. » Neuze, ar patriarch

santel a zavas eno eun aoter d'ar guir Doue, hag a yeas da c'houde dounnoc'h er vro, varzu ar c'hrest-teiz.

Doue a vennigas Abram ha Lot, setu ma kreske kals ar chatal gantho. Eun dervez e savas eun tam kaoz etre ho fastored divar benn ar pastur. Abram a lavaras eta d'he niz: « Arabat e ve droulans etre va fastored ha da re: daoust ha n'oump ket kerent? Setu aze ar vro a bez dirak da zaoulagad: ma troes a gleiz, me a yelo a zeou; mar troes a zeou, me a yelo a gleiz. »

Lot a gavas kaer ha dudius traonien ar Jourden, hag a 'z eas da jom e kichen Sodom.

Abram a skoas varzu Mambre demdost da Hebron, hag a ginnigas eno eur zakrifis da Zoue.

Peger bras e oa karantez Abram evit ar peoc'h!

KENTEL 12. — Galloud Abram

En amzer-ze, e savas brezel etre rouaned bro Sodom, ha Loth a oue trec'het ha paket en eun emgann. Abram a roas kerkent armou da 318 euz he zervicherien vella, a zaillas epad an noz var ar brezellerien o doa gounezet, hag a oue treac'h d'ezho. Diframma a reas digantho Loth hag he zanvez.

Pa oa Abram o tistrei laouen d'ar gear, e kavas var he hent Melkisedek, roue Salem, beleg ar guir Doue, hag a ginnigas bara ha guin e sakrifis evit Abram, da drugarekât an Oll C'halloudek. Doue a vennigas Abram abalamour ma oa eun ha leal, hag a lavaras d'ezhan: « Arabat eo d'id kaout aon rak netra, me a harpo ac'hanout hag a vezo da c'hopr. Sav da zaoulagad varzu an nenv, ha kount ar stered mar gelles: tud da lignez a vezo ken niverus hag hi. Ober a ran ac'hanout va mignoun, ne vezi mui hanvet, Abram, met Abraham, Tad ar boblou,

rak eur maread poblou a c'hano euz da ouenn. Da vugale vian a vezo e sklavaj, breset e vezint epad 400 vloaz, met skei a rin ar bobl en dezo great he vestr d'ezho, hag ez aint kuit gant madou bras. »

Doue a lavaras c'hoaz: « Benniga a rin Sara, hag e roio d'id eur mab hag a vezo hanvet Isaak; hen a vezo iye va mignoun, koulz hag he vugale var he ierc'h. »

Evel merk euz ar mignouniach-se, Doue a c'houre'hemennas ma vije sirkonsizet ar baotred, eiz dez goude ho ginivelez.

Na kaer eo ar promesaou great da Abraham! Na kaer eo an digoll a roio an Aotrou Doue d'an nep piou benag a boanio d'he zervicha!

KENTEL 13. — Abraham a bed evit Sodom

Eun dervez, tri zivroad a rea hent tost da delt Abraham, e kichen Mambre, Abraham a yeas dioc'h-tu d'ho digemeret, evit ho fedi d'ober eun diskui. Sara a reas kerkent eur gouign gant bleud flour, epad ma 'z ea ar patriarch santel da laza ar guella leue a oa er c'hraou. Pa oue poaz ar gouign hag ar c'hig leue, Abraham ho zervichas d'an dremenidi gant leaz da eva, hag aman da zruza ar gouign. Ar c'henta euz an tri zen, pa oue achu ar pred gantho, a zisklerias da Abraham: « Dont a rin adarre a benn bloaz ama, ha neuze Sara e devezo eur mab. »

Abraham a gredas var ger Doue, daoust ma oa eat Sara koz neuze.

Epád ma yea an tri zivroad kuit, ar c'henta a lavaras da Abraham: « Mouez pec'hejou Sodom ha Gomorrh a zo savet betek ennon, hag ar pec'hejou-ze a c'houlén beza kastizet. Mont a ran betek ar c'heariou-ze, d'ho gullet. »

Abraham a zonzas: « Doue he-unan eo a zo dirazon, dindan furm eun den, pedi a rankan evit ar

geiz a zo o vont da veza kastizet. » Setu ma c'houlennas: « Aotrou, ma 'z eus hanter kant den hag a vez en ho toujans e mesk an dud direol, daoust ha ne bardounoc'h ket da Zodom abalamour d'ezho? » « Doue a respountas: « Ho espern a rafén. — Ha na ve pemp ha daou-ugent hebken, eme Abraham, daoust ha skei a rafec'h? — Neuze c'hoaz, eme an Aotrou Doue, na ziztrujfen ket kear. »

Abraham a gendalc'has da bedi: « Mar deus daou ugent, tregont, ugent, dek den a zoujans Doue e kear, daoust ha skei a rafec'h? — Nan, eme an Aotrou Doue. »

An dek den eün ha leal a c'houlénne Doue evit pardouni, na ouent ket kavet er c'heariou milliget, ha setu perak antronoz, goude m'o devoue daou eal henchet Lot, he c'hreg hag he ziou verc'h er meaz euz Sodom, eun dourbill tan ha soufr a zegas hag a buluc'has an dud a oa o choum er c'heariou a oa brein gant ar pec'hed.

Greg Lot a droas he fenn, en desped da zifen an eal, evit sellet ous kear o tevi, hag a oue troet kerkent en eur skeuden c'hoalen.

Peger spountus eo, dirak an Aotrou Doue, ar pec'hed vil! Siouaz! nak a bed a gues en ifern abalamour d'ezhan!

Pegen nerzus eo ar beden! Ma vije bet dek den a zoujans Doue er c'heariou milliget, Doue en defe pardounet d'ezho, en desped d'an oll dud fall o oa enno.

KENTEL 14. — Sakrifs Abraham

Abraham en devoue eur mab d'ar mare merket gant an eal, hag he hano a oue Isaak. Pa oue savet ar mab-se, Doue, evit amprou he zervicher, her galvas eun dervez; « Abraham! — Setu me ama, Aotrou Doue. — Kemer da vab pennher, da vab muia karet, Isaak, kea ganthan da vro Moriah, hag eno, kinnig

anezhan d'in e sakrifiks var unan euz ar menezioù a ziskouezin d'id. »

Abraham na glemmas ket; taoler a reas ar baz var eun azen, samma a reas eun nebeud keuneut var an azen-ze, ha setu hen en hent gant daou vevel, hag he vab Isaak.

D'an trede dervez beach, ar patriarch santel a velas dirazhan ar menez a oa bet diskleriet d'ezhan gant Doue, hag a lavaras d'ar mevelien: « Choumit aze, c'houi, gant an azen, me a zavo gant va mab var an dorgen evit adori, hag a zistroio d'ho kaout. » Neuze e savas ar c'heuneud var diouiskoaz he vab, hag e pignas var ar menez gant an tan hag ar gountel vras.

Pa oant o pignat, Isaak a c'houlennas: « Tad, gullet a ran an tan hag ar c'heuneud evit ar zakrifiks, met e pe leac'h ema an hosti? — Doue a bourveo, va mab, » eme Abraham.

Pa oue digouezet var ar menez, ar patriarch santel a zavas eno eun aoter, a lakeas ar c'heuneud varnhan, hag a liamas var c'horre Isaak, he vab muia karet. Met pa oa an tad o kregi en he gountel evit skei, e klevas mouez eun eal euz an nenv: « Abraham, Abraham! Na sko ket da grouadur! Arabat eo d'id ober drouk d'ezhan; gouzout a ran breman e peus doujans evit Doue, pa 'z eo guir e eas o vont da ginnig d'ezhan e sakrifiks da vab, hag hen pennher goulskoude. »

Ar patriarch santel a zellas neuze en dro d'ezhan, hag a velas eur maout taro paket dre he gurniel e kreiz eur voden doupok. Kregi a reas ennhan rak-tal, evit he ginnig e sakrifiks var an aoter savet evit Isaak. Doue a zisklerias kerkent d'ezhan dre vouez an eal: « Hen touet em eus dreizon va-unan, abalamour n'e peus ket espernet da vab hag hen penner,



Sakrifiks Abraham

me da vennigo. Ar vugale a zavo euz da lignez a vezo niverus evel stered an oabl ha greun treaz an aod. An oll boblou a vezo benniget en unan euz da ouenn, abalamour m'e peus sentet ouzin. »

Isaak, o pignat var ar menez dindan keuneud he sakrifiks, a zo eur skeuden gaer euz Hor Zalver o pignat,

sammet gant he groaz, var menez Kalvar. Pegen dispar eo feiz Abraham! Peger kaer eo Isaak, o soubla heb klem da volonteiz an Aotrou Doue !

KENTEL 15. — Isaak a zimes da Rebeka

Goude ma oue maro Sara, d'he zeiz vloaz ha c'houec'h ugent, Abraham a zontas dimezi Isaak, mab promessaou Doue. Gant aon na vije kollet gant merc'hed ar vro, abalamour mac'h adorent an idolou, ar patriarch santel a lavaras da Eliezer, ar mevel devot en doa oll fizians he vestr: « Kea d'ar vro ma z'oun ganet ennh, ha klask eno eur vero'h a zoujans Doue, hag a vezo pried Isaak. »

« Tou d'in, dre hano an Doue guirion en deus krouet an nenv hag an douar, na roi d'am mab nikun euz merc'hed Kanaan. » Eliezer, ar mevel fur, a c'houennas neuze: « Ha ma ne fell ket d'ar verc'h am bezo choazet evit va mestr yaouank dont da jour e bro Kanaan, daoust ha distrei a reot d'ho pro genta? — Biskoaz, eme Abraham, na rin kement-se. Doue an nenv, an hini en deus great d'in dilezel va zud ha va bro, en deus touet e roio ar vro-man da dud va lignez. Doue a roio d'id eun eul evit da ren hed da veach. Mar chom ar verc'h heb dont ganez, te a vezo diskarg euz da le. » Eliezer a douas neuze evel ma c'hoantea he vestr.

Ar mevel mad a gemeras dek kanval, samma a reas varnho eur bern pinvidigeziou, hag ez eas en hent gant eun toulladik mevelien all varzu ar gear ma oa ganet ennh. Abraham hag he vreur Nakor. Ar gear-ze a oa Haran.

Pa oue tost da gear, Eliezer a roas urz d'an oll, tud ha kanvaled, chom a zav e kichen eur puns, hag a reas ar beden-man da Zoue: « Aotrou Doue,

va zikourit, ha grit trugarez d'am mestr Abraham. Dont a raio ama bremaik merc'hed yaouank kear da gerc'hat dour. Goulen a rin da eva digantho, ha ma lavar unan anezho d'in: « Evit da genta: da c'houde, me a denno dour evit ho kanvaled, hounevez eo a vezo an hini o peus galvet da veza pried Isaak. »

A veac'h e oa achu he beden ganthan, ma velas eur plac'h yaouank euz ar re gaera o tisken gant he fod evit kerc'hat dour. Pa reas Eliezer he c'houien, ar plac'h a lavaras d'ezhan: « Evit, aotrou. » Pa oue torret sec'hed an den, hi a lavaras c'hoas: « Mont a ran da denna dour bremen evit ho kanvaled — Piou oc'h? a c'houennas neuze Eliezer — Me, emezhi, a zo merc'h Bathuel, ha merc'h vian Nakor; kaout a reot lojeiz duman evidoc'h hag evit ho kanvaled. »

O klevet ar c'homzou-ze, Eliezer a roas d'ar plac'h yaouank, he hano Rebeka, braouigou aour pur, hag a adoras an Oll C'halloudek, en eur lavaret: « Benniget ra vezo Doue Abraham, va mestr, en deus va henchet var eun betek ti he vreur, Nakor. »

Ar plac'h yaouank a zistroas buan d'ar gear evit diskoues ar rillennou aour e doa lakeat en dro d'he divreac'h, hag he breur, Laban, a ziredas ker buan all da bedi an dianveziad da zont d'he di gant he ganyalet. Gualc'hi a reas treid ar veachourien hag he fedi a reas da c'houde da vont ouz taol da zebri ho fred.

Eliezer a zisklerias neuze: « Me a zo servicher Abraham, ha va mestr a zo pinvidig mor. Deut oun ama da glask eur pried evit Isaak, mab va mestr, ha ma plij va goulenn d'eoc'h, ar pried-se a vezo Rebeka, rak va mestr Abraham na fell ket d'ezhan klask eur verc'h kaer etouez merc'hed Kanaan. » Tud Rebeka a respontas: « Bolonteiz Doue a zo

sklear: ar verc'h yaouank a c'hello mont ganeoc'h. »
 Var ar c'homzou-ze, Eliezer hag he dud a zebras
 hag a evas; da c'houde, ec'h ingalas an traou pin-
 vidig a oa deut var gein ar c'hanvaled, hag e tis-
 troas varzu he vestr, laouen bras. Rebeka a oa
 ganthan, douget var unan euz ar c'hanvaled: n'e
 doa kemeret nemet eun dervez da lavaret kenave-
 zo d'he zud.

Abraham a zigemeraz Rebeka gant levezeg, hag
 an dimezi a oue great kerkent.

Peger kaer eo komzou Abraham d'he vestr mevel !
 Meur a hini a lavar: « Me a gemero kenta hini a gavin,
 gant ma vezo pinvidig aoualc'h diouzin. Ma n'eo ket den
 a zoujans Doue, m'her chenchou, goude ma vezimp eat
 asambles. »

Nak a bed, siouaz! e leac'h chacha ho fried var an
 hent mad, a zirikl ganthan var an hent fall! Abraham a
 lavar da Eliezer: « Kemer eur plac'h fur hag a zoujans
 Doue. » Na zelle ouz netra a hent all: setu aze komzou
 eun den a skiant. Honestiz eur guir gristenez a dal meur
 a vil lur.

KENTEL 16. — Agar. — Maro Abraham

Ouspenn Isaak, mab ar brömesa, Abraham en deus
 bet bugale all. Unan anezho, Ismael, mab Agar, a
 oue varnez mervel gant ar zec'hed, pa oa eat gant
 he vam dioc'h telt Abraham. Agar a reas d'he mab
 gourves e skeud eur vezen, en dezert, epad ma'z
 ea larkoc'hik, rak na felle ket d'ezhi beza a vel
 d'he mab, pa varfe. E kreiz ma lenne ha mac'h en
 em roe d'an dizesper, eal Doue he galvas hag a
 zisklerias d'ezhi: « Agar, n'o pezet aon ebet. Doue
 en deus selaouet mouez ho krouadur. Savit ha renit
 anezhan dre an dorn, rak Ismael a ouenno, hag
 a vezo tad eur bobl yras. »

D'ar mare-ze, Doue a zigoras daculagad ar vam
 glac'haret, hag e velas eur puns demdost d'ezhi.
 Mont a reas dioc'htu d'ar puns-se, kemeret a reas
 dour, hag e reas d'ar c'hrouadur eva. Kennerzet oll,
 Ismael a zavas, hag a rekouras he nerz. Dont a reas
 da veza bras ha krenv, hag e timezaz neuze gant
 eur verc'h euz an Eijpt.

Abraham a varvas pa oa pemzek vloaz hag eiz
 ugent (175); Isaak hag Ismael her sebelias, e kichen
 he bried Sara, e roc'h kleuz Hebron.

Peger mad eo an Aotrou Doue evit ar re zistera euz he
 vugale! Agar na blije ket da Zoue kement ha ma re
 Sara, ha goulskoude, Doue a gas eun eal da gaout Agar,
 evit ma c'hellö savetei he c'hrouadur. Bezomp fizians e
 Doue !

KENTEL 17. — Jakob hag Esaü. (1965 araok J.-C.)

Isaak ha Rebeka a joumas disher epad ugent vloaz.
 Neuze evelato, Rebeka e devoue eur c'houblad: Esaü
 ha Jakob. Esaü, ganet da genta, a oa rouz he gro-
 c'hen ha bleveg evel eul loen goues; Jakob a oa koant
 da velet. Esaü, dre ma kreskas, a deuas da veza eur
 paotr dispount, hag eur chaseour bras; Jakob a oa
 kalz habaskoc'h.

Eun dervez ma oa eat Esaü d'ober eun dro er
 parkeier, Jakob en doa aozet eur pred piz-ruz. Pa
 zistroas Esaü d'ar gear, e oa skuis-maro, ha dare
 gant an naoun. « Ro d'in ar pladat piz-se, a lavaras
 hen da Jakob. — M'hen roio d'id, eme Jakob, gant
 ma roi d'in en distro, da vir a vab hena. — Er me-
 nez tra, eme Esaü, va guir ne dalvezo d'in da netra
 ma varvan gant an naon. — Hen toui a res? a c'hou-
 lennas c'hoaz ar breur yaouanka. — Hen toui a
 ran, » eme Esaü.

Jakob a roas kerkent bara d'he vreur gant ar pladad piz, hag heman a zebras evel eun den ha na ra fors euz he vir a vab hena.

Doue a roe da vab hena ar batriarched grasou ha pinvidigeziou euz ar re gaera, rak euz a ouenn ar mab hena eo e tlie genel Salver ar bed. O verza ar guir pinvidig-se evit nebeut a dra, Esaü a zo eur skeuden euz ar pec'her a vers he lod baradoz evit eur blijadur verr.

D'he zaou ugent vloaz, Esaü a zimezas da ziou verc'h yaouank dizoue euz bro Heth. Bez' e oa e riskl bras da goll he feiz gantho, hag he dad hag he vam a oue glac'haret oll.

Ar patriarch Isaak a oa eat koz bras neuze, rak bez' e oa seitek vloaz ha c'houec'h ugent. Gant aon na vije bet skoet gant ar maro araok m'en defe beniget an hini a oa galvet gant Doue da reseo he vennoz, e c'halvas eun dervez Esaü, ar c'hosa euz he vugale: « Va mab, emezhan, eat oun fall em guele, ha tostât a ran ouz ar bez. Kemer eta da voareg ha da virou, ha digas d'in euz frouez da chase, eun tam kig hag a raio plijadur d'am c'halon. Da c'houde, me a roio d'id va bennoz diveza. » Esaü a zentas dioc'htu.

Rebeka a gare Jakob kals mpioc'h eget Esaü; klevet e doa komzou he fried Isaak. Setu ma lavaras da Jakob: « Va mab, kea da glask d'in diou c'havrik ouz ar re vella, evit m'ho foazin en doare a blij ar muia d'az tad. Te da-unan ho zervicho d'ezhan, evit kaout he vennoz. — Oh! mam, gouzout a rit eo bleveg Esaü, e leac'h me n'oun ket. Mar tigoues d'am zad guele e ran goab anezhan, e tennin varnoun he valloz e leac'h kaout he vennoz. — Me a

gemer ar malloz-se varnoun, eme Rebeka, kea buan da glask d'in an diou c'havrik. » Neuze, Jakob a zentas.

Ar vam a lakeas an diou c'havrig da boazat, hag a viskas d'he mab karet, Jakob, guella dillad Esaü. Golo a reas, da c'houde, daouarn ha gouzoug he mab gant krec'hin bleveg ar giouri, ha pa oue poaz ar pred, Jakob a yeas gant bara fresk ha kig dirak he dad. « Tad! emezhan. — Klevet a ran, eme Isaak. Piou out-te, mab? — Me eo Esaü, ho mab hena. Great em eus ar pez o poa goure'hemennet d'in, ha breman e tiganas d'eoc'h frouez va chase. Savit ha debrit, va zad, da c'houde, c'houi a roio d'in ho pennoz. — N'eo ket padet pell da chase, va mab. — Doue, tad, en deuz great d'in kaout heb dale ar preiz a glasken. »

Ar patriarch santel na vele mui nemeur, hag a lavaras: « Tosta ama, va mab, ma touchin ouzit evit guele ha te eo, e guirionez, va mab Esaü. » Jakob a ieas tost-tost d'he dad, heman a zisklerias neuze: « Ar vouez a zo mouez Jakob, met an daouarn a zo daouarn Esaü. »

Goude beza debret ar pred a oa bet aozet d'ezhan, ha goude beza evet euz ar guin a roas d'ezhan he vab, Isaak a vennigas Jakob dre ar c'homzou-man: « C'houez vad va mab, emezhan, a zo henvel ouz ar c'houez a zav dioc'h eur park leun. O va mab, ra zeuio Doue da rei d'id gliz an nenv ha druzoni an douar, ra vezo founnus atao an ed hag ar rezin en da zouarou. Ra vezi treac'h d'an oll boblou, ha ra blego da vreudeur d'id, evel d'ho mestr. »

A veac'h e oa eat Jakob kuit, ma tigouezas Esaü gant ar pred en doa aozet. Isaak, souezet maro, a c'houlennas diganhan: « Piou out-te? — Me eo Esaü, ho mab hena. » Ar patriarch santel a ententas neuze en doa Jakob paket dre laer bennoziou

pinvidig ar mab hena. Esaü a oa ker kounnaret ma reas kaoz da laza he vreur. Setu ma lavaras Rebeka d'he mab muia karet: « Gueñl eo d'id tec'het diouz ar gear, ken a vezo torret var gounnar da vreur. » Isaak a c'halvas Jakob evit diskleria d'ezhan: « Kea da di Laban, breur da vam, ha kemer evit pried unan euz he verc'hed, rak merc'hed ar vro-man na blijont ket d'in. » Jakob a zentas.

Daoust ha mad a rea Jakob pa lavare gevier d'he dad? Nan zur, rak ar gevier a zo difennet, Doue en deus lezet, evelato, laeres guirioù Esaü, abalamour m'en doa heman ho guerez dre fae ha ma oa Jakob devotoc'h eget he vreur. Ar zent a lavar ouspenn-ze: « Jakob a zo bet leun he vuez a drubuilhou hag a anken, abalamour d'ar gaou-ze, marteze. »

KENTEL 18. — Jakob ha Skeul an nenv

Epad ma tec'he Jakob, ha ma kerze varzu ar vro m'oa ganet Abraham enni, an noz a deuas varnhan, hag ar beachour a gemeras eur mean da benn-vele. Epad he gousk, Jakob a velas eur skeul hag e doa he zroad var an douar, hag ar penn huella en nenv. Elez a bigne er skeul heb ehan, pe a ziskenne ganthi: Doue, euz bar an nenv, a harpe anezhi. An Oll C'halloudeg a gomzas neuze: « Me a zo Doue Abraham hag Isaak, rei a rin d'id ha d'az pugale var da lerc'h ar vro m'emaout enni, hag oll boblou ar bed a vezo benniget ennout, hag en Hini a dle genel euz da lignez. »

Pa zihunas, Jakob a lavaras, leun a respet: « E guirionez, Doue a zo ama ha n'her gouien ket. Al leac'h-man a ra d'in krena. Ama ema, e guirionez, ti an Aotrou Doue, ha dor an nenv. » Sevel a reas neuze, en he zav soun, ar mean a oa bet dindan he benn, hag e skuillas oleo varnan, e sakrifiks d'ar guir Doue. Hen-

vel a reas al leac'h-se Bethel, da lavaret eo, ti Doue. Lavaret a reas neuze: « Mar gellan distrei, e savin ama eun aoter d'an Oll C'halloudek. »

An-elez o pignat hag o tisken heb ehan etre an douar hag an nenv, a verke da Jakob emaint atao var evez euz an dud; Jakob a dlie kaout fizians enno, hed he veach. Komzou Jakob dirak mean Bethel a ves lakeat gant an Iliz var muzellou an Aotrou 'n Eskob, pa vennig eun iliz nevez.

Jakob a zigouezas e ti Laban, hag a oue digemet mad. Choum a reas eno ugent vloaz, dimezi a reas, ha Doue a skuillas he vennoz varhan, bez' en devoue daouzek paotr hag eur verc'h. Etretant, Jakob a rea pastor denved dindan he dad-kaer da genta, en he gount he-unan da c'houde, hag he zavez e kanvalezed, ezen ha denved a greskas kement, ma reas avi d'he dad-kaer. Kalz servicherien en doa Jakob, evit he zikour da ziuall he chatal.

Doue a lavaras d'ezhan eun dervez: « Distro d'ar gear, rak Laban a c'helfe noazout d'id gant he aviozid. » Jakob a zentas dioc'htu ouz mouez an Aotrou Doue.

Pa oa var hent an distro, e kasas hiniennoù euz he zervicherien da rei kelou d'he vreur Esaü, met ar re-man a deuas buan en dro: « Esaü, emez-no, a deu d'ho tiambroug, ha pevar c'hant den gant han. Pa glevas kement-se, ar patriarch santel en devoue aon. Penaoz enebi ouz Esaü, ma oa droug ennihan atao? Ober a reas da Zoue eur beden stard, ha da c'houde e tibabas daou c'hant gaor, daou c'hant danvad, daou ugent beoc'h, tregont kanvalez gant eur maread chatal all, evit ho c'hinnig d'he vreur.

Araok goulou deiz, eun den a deuas da c'houren gant Jakob. Ar stourmad, a badas pell, met an den na c'hellas ket douara ar patriarch santel Touch a reas eun nerven euz morzed Jakob evit diskoues he nerz burzuduz, ha ke-kent an nerven-ze a zizec'has. Setu ma lavaras da Jakob: « Va list da vont kuit, rak em a goulou deiz. — N'ho lezin biken da vont kuit, eme Jakob, nemet p'o pezo va benniget. — Pe hano e peus? a c'houlennas an eal en doa kemeret furm eun den. — Jakob, emezhan. — Divar hirio, eme an den, da hano a vezo Israel, da lavaret eo: krenv eneb Doue, ha mar dout bet krenv eneb Doue, na peger bras e vezo da nerz eneb an dud! » An den a dec'has, goude m'en devoue benniget Jakob.

« Guelet em eus Doue, a zonjas neuze ar patriarch, ha n'oun ket bet skoet gant ar maro. » Gourenn en doa ranket da vad, ha divar an dervez-se, Jakob a joumas kam en he vale.

An den-ze a oa unan euz elez an Aotrou Doue.

Ar frapad gouren-ze a zo eur skeuden euz buez pobl Israel, eur skeuden euz buez peb den: Pobl Israel a rankas enebi ouz ar boblou paian a oa en he gichen, hag a glaske ober d'ezhan adori an idolou: Evelse c'hoaz, peb den a rank enebi hed he vuez, evit trec'hi he dechou fall. Jakob, krenveat gant ar bennoz en doa bet digant Doue, a grenas nebeutoc'h dirak Esaü, ha ni, a zo Doue ganeomp dre ar zakramanchou, a vezo ive treac'h mar keromp. Evelato, poania a rankomp, evel Jakob.

KENTEL 19. — Maro Isaak (1845 araok J.-C.)

Pa zigouezas Jakob gant he vreur, e verkas d'ezhan he respet hag he humilite: stoui a reas seiz guech dirazhan: Esaü a bokas d'he vreur gant karantez:

« Deomp asambles da gaout hon tad, emezhan. — Nan, eme Jakob. Da dud ha te, a zo gwest da vale buan, me a zo ganen, etouez va denved ha va giou-ri, kalz re vian hag a rank mont var ho fouezik; distro d'ar gear var eün, me a ehano meur a vech evit rei amzer d'am chatal da beuri. » Dispartia a rejont eta.

Pa zigouezas el leac'h m'en doa guelet ar skeul hag an elez, Jakob a zavas eno eun aoter, evit seveni ar bromesa en doa great da Zoue. Eun dervez benag divezatoc'h, Rachel, pried muia karet Jakob, a varvas o lakât er bed Benjamin, daouzekved mab ar patriarch santel.

En despet d'he c'hlae'har ha d'he rann galoun, Jakob a oue laouen pa zigouezas e ti he dad Isaak, ha pa c'hellas he vriata gant karantez, goude eun disparti ken hir. Eun nebeud bloaveziou goude, ar patriarch a varvas d'he nao ugent vloaz, hag a oue sebeliet e bez he dad Abraham.

Daouzek mab Jakob a oue ar pennou euz an daouzek rummad tud a oue rannet etrezho an douar promettet, rummajou hag a ves hanvet *tribu* e galleg.

KENTEL 20. — Joseph: he hunvreou: guerzet eo

Isaak a gare he vab Joseph dreist he vugale all, hag a reas d'ezhan eur zae marellet, kaeroc'h eget ho re. Joseph a oa chomet pur, hag a ziskuillas d'he dad an traou mezus a reas pevar euz he vreur, eun dervez ma tiquallent ho denved. Ar roman, pa ouent skandalet a zoare gant ho zad, a gemeras drouk ouz ho breur.

Eun dervez, dre he gousk, Joseph a zonjas e oa oc'h endram ed, hag he orden a joume en he zav e kreiz unnek all, pleged evel ma vijent bet oc'h he adori.

Eun dervez all, e sonjas d'ezhan guelelet an eol, a' loar hag unnek stereden o stoui dirazhan. Pa zisklerias an huvreou-ze, Jakob her skandalas : « Daoust ha kaout a ra d'id e veli, eun dervez, da dad, da vam ha da oll vreudeur o stoui dirazout? » An huvreou-ze a greskas ar gasouni o doa he vreudeur outhan.

Bugale Jakob, kalz chatal d'ezho, a ranke mont, pell pell avechou, da glask peuri. Eat e oant, eun dro, varzu Sichem, pa lavaras Jakob da Joseph, hag a oa choumet ganthan er gear : « Kea ta da vellet ha mad ez a an traou gant da vreudeur, var dro Sichem! » An den yaouank a zentas dioc'htu.

Kerkent ha ma veljont ho breur o tostat, bugale Jakob a lavaras etrezho : « Setu an huvreer o tont, saillomp varnhan, ha lazomp anezhan, guelelet a raio neuze petra dalv d'ezhan he huvreou! — Arabat eo d'eoc'h, eme Ruben, ar c'hosa, d'ar re all, skuill goad ho preur, met taolit-hen er puns seac'h a velit aze, en ho kichen. » Ruben a oa en he zonj savetei he vreur yaouank.

Pa oue Joseph tost d'he vreudeur, ar re-man a yeas a lamm varhan, a ziframmas diganhan he zae marellet, hag en taolas heb dale en eur puns : koz ha seac'h. Da c'houde, ar breudeur a azezas evit debri ho fred.

Epad ma tebrent, setu marc'hadourien a bell bro o vont dre ho c'hichen da verza ezans, roussin ha myrrh d'an Ejipt. Juda, ar pevare euz bugale Jakob, a lavaras : « Petra dalvezo d'eomp beza lazet hor breur? Daoust ha n'eo ket guelloc'h he verza, eget ne deo ruzia hon daouarn gant he c'hoad? » Ar re all a gavas mad ar c'homzou-ze, setu ma oue tennet Joseph diouz ar puns, ha guerezet ugent pezar arc'hant d'an dremenidi-ze. Int-hi her c'hasas d'ho heul d'an Ejipt.



Joseph guerezet gant he vreudeur

Great gantho ho zaol fall, bugale Jakob a lazaz eur bouc'h, a zoubas ar zae marellet er goad, hag he c'hasas da Jakob en eur lavaret : « Setu ama eur rae hag hor beus kavet, guelit ha n'eo ket hini ho mab eo! » An tad keaz a zirollas da ouela fors, en eur

lavaret: « Sae Joseph eo, eul loen gouez benag en deus lazet va mab! » Hag an tad, glac'haret, a zougas kanv d'he vab karet.

Peger spountus eo an avi, ar goarizi! Ober a reas da Gain laza Abel, ober a ra da vugale Jakob guerza ho breur Joseph.

Jakob a rêa fall oc'h ober da Joseph dishenvel diouz he vugale all. Tad ha mam a ziskouezo eur garantez teneroc'h d'ar c'hrouadur keit ha ma choumo bian, evit gouait he galoun: anez, ema e riskl da veza goues.

Eur vech savet ar vugale, mar deus unan mac'haniet en ho zouez, hennez en deus guir da gaout eur garantez tommoc'h aberz he dud, abalamour m'eo pouneroc'h he groaz da zougen. A hent all, tad ha mam a dle ober henvel d'an oll, e kement ha ma c'hellont.

KENTEL 21. — Trubuil hag eürusted

Pa zigouezas ar varc'hadourien en Ejipt, kenta a rejont a oue guerza Joseph da Butiphar, kabiten goardou ar Pharaon pe roue ar vro. Pa velas pegen eün ha peger pur e oa he sklavour yaouank, Putiphar en devoue buan fizians enñhan, hag a reas d'ezhan gouarn peb tra en he di. Abalamour ma oa mad ar mestr evit Joseph, Doue a skuillas he vennoz var ar c'habiten hag he dud: he vadou a greskas buan.

Greg Putiphar, o velet Joseph ker kaer, ker mad d'ober he labour, a ziuuanas eur garantez fall en he c'halon, hag a glaskas, eun dervez, dougen ar sklavour yaouank d'ar pec'hed. Joseph a lavaras nan krak ha berr, hag evit gellout tec'het, a laoskas he vantel etre daouarn ar c'hreg fall. He c'harantez d'ezhi a droas kerkent en eur gounnar spountus, hag e tamallas Joseph, an den yaouank pur ha chast, da veza klasket he dougen d'ar pec'hed. Ar mevel di-

vlam a oue kerkent klozet en eur prizoun tenval, heb m'en defe gellet lavaret eur ger d'en em zifen.

Eun nebeud amzer goude ma oa bet taolet an den yaouank er prizoun, ar mestr a reas d'ezhan gouarn ar brizounerien all, rak ker fur, ker vertuzus e oa Joseph, ma rea atao peb tra evit ar guella. Daou euz offiserien ar Pharaon a oue taolet er prizoun goude Joseph, unan a oa paotr ar bara hag egile paotr ar guin pa veze ar roue oc'h taol. Bloaz goude ma oant bet barnet d'ar prizoun, an daou zen o devoue bep a huvre eun nosvez, met na ententent ket ar pez a verke ho huvreou.

Peb hini anezho a zisklerias he zonz da Joseph, hag heman a lavaras da baotr ar guin: « Abenn tri dervez ama, ar Pharaon a deui da zonz d'ezhan ac'hanout, hag a roio d'id da garg en dro, neuze, mar plij, bez sonj ac'hanoun, rak me a zo bet taolet ama heb beza great an disterra drouk. Te, eme Joseph da baotr ar bara, ar roue en dezo sonj ac'hanout-te ive, met siouaz evidot, te a yezo staget ouz eur groaz, hag a varvo eno. »

An traou a c'hoarvezas evel m'en doa diskleriet Joseph, met ar mevel, pa oue deut mad d'ar roue adarre, n'en devoue ket an disterra sonj euz Joseph.

Lilien gaer ar burete a zo dies da ziuall avechou, mes nak a c'hrasou hon eus dreizhi, evel Joseph!

Var dro daou vloaz divezatoc'h, ar roue en devoue eun huvre souezuz, eun nosvez. Seblantout a rea d'ezhan beza en he zav var ribl ster vras an Ejipt, pa velas seiz bioc'h lard ha kaer o sevel anezhi evit mont da beuri er guernioù a zo eno. Prestik goude, seiz bioc'h, treud iskiz, a zavas euz ar meméz ster, a zaillas var ar zaout lard, hag ho debas. Ar roue en em roas d'ar c'houket adarre, setu ma velas, en eun huvre all, seiz penn ed kaer ha melen aour var ar memez troad, ha seiz all treud, hanter-zeac'h, hag

a zebras ar seiz penn druz. Ar roue, pa zihunas, a deuas da zonzj d'ezhan euz he huvreou hag a gemenas da zivinnourien an Ejipt diskleria d'ezhan ar pez a verkent, met nikun anezho na c'hellas sklerijenna ar Pharaon.

Offiser ar guin a deuas da zonzj d'ezhan neuze euz he gamarad prizoun, Joseph, hag a zisklerias d'ar roue ar skiant en doa roet Doue d'an Israelit yaouank-se. Setu ma reas ar Pharaon digas dirazhan dioc'htu ar prizounier Joseph, guisket kaer.

Joseph a lavaras d'ar Pharaon: « Roue, n'eo ket me eo a roio ar respount d'eooc'h, mes Doue eo. Ar seiz bioc'h lard hag ar seiz penn ed leun a verk ar memez tra: seiz bloaveziad eost euz ar re builla; ar seiz bioc'h treud hag ar seiz penn ed goulo a verk seiz vloaz a gernez. Red e vefe d'eooc'h, Roue, lakât eun den gouizieg ha fur da ren an Ejipt dindannoc'h. Sevel a raio grignoliou nevez dre ar vro a bez, dastum ha gorron a raio enno ar bemped euz ed ar bloaveziou druz, ha pa deuo ar bloaveziou a gernez, ho sujidi o dezo boued da zebri. »

Ar Pharaon a gavas mad an ali: « E pe leac'h, e kavin-me eun den furoc'h egedout, pa 'z eo guir out sklerijennet gant Doue he unan? Te a vezo an den-ze, karget da ren an Ejipt, an oll a blego d'id, rak te a vezo da eil em rouantelez. » Hag ar Pharaon a reas leshenvel Joseph: Salver ar bed. »

Joseph, mab Jakob, a zo unan euz skeudennou kaera Hor Zalver Jesus-Christ. Joseph a zo bet kaseat gant he vreudeur; Hor Zalver a zo bet kaseat gant pennou bras ar vro, he vreudeur dre ar ouenn. Joseph a zo bet guerzet gant he vreudeur, Jesus a zo bet guerzet gant Judas, savet ganthan e renk he vreudeur pe ebestel, Joseph a zo bet taolet er prizoun: Jesus ive, en nosvez araok he varo. Joseph a zo bet Salver an Ejipt; Jesus a zo e guirionez Salver ar bed.

KENTEL 22. — Joseph, rener an Ejipt He vreudeur a 'z a di

Tregont vloaz e oa Joseph pa oue lakeat ar stur etre he zaouarn gant ar Pharaon. Sevel a reas grignoliou bras; bernia a reas enno ar bemped euz an ed epad ar bloaveziou puill, ha pa deuas ar bloaveziou treud, e oue kavet implij d'an ed-se.

D'ar re oll a deue da c'houlenn bevans diganthen, ar roue a roe atao ar memez respount: « Ite ad Joseph: it da gaout Joseph. » Rei a reas d'ezhan, da bried, eur verc'h euz ar ouenn huella en Ejipt, setu m'en devoue Joseph daou vab, Manasse hag Ephraim, araok ma tirollas ar bloaveziou a gernez.

Pa oue berr ar bevans en Ejipt, e oue ive naounegez e bro Kanann, ha Jakob a zisklerias eun dervez, d'he vugale: « It d'an Ejipt da brenâ ed; anez, ni a varvo ama gant an naon. » Breudeur Joseph a yeas eta d'an Ejipt, dek anezho da viana, rak an tad a zalc'has, er gear, Benjamin, ar yaouanka: aon en doa na vije c'hoarvezet eun drouk benag ganthan, en hent, ha keuz en doa atao da Joseph.

Ar breudeur a yeas var eun da gaout Joseph, pa z'eo guir e oa mestr bras var an ed, stoui a rejont dirazhan, heb he anaout. Hen, er c'hountrol, ho anavezaz dioc'htu, hag a deuas da zonzj d'ezhan euz an huvreou a reas, guechall, pa oa paotr yaouank flamm e ti he dad. Komz a reas outho dichek: « Daoust ha n'oc'h ket deut ama evit anaout doare ar vro, hag ober brezel d'eomp, easoc'h a-ze, divizatoc'h? — Nan, aotrou, ni a zo deut ama da brenâ ed, ha netra ken. Ni a zo oll breudeur, bugale ar memez tad, hag a gar ar peoc'h. — Gevier a zo ganeoc'h, eme Joseph, deut oc'h da studia ar vro, evel spieren. — Nan, emezho, daouzek breur e oamp, unan, ar yaouanka; a zo choumet gant hon

tad er gear, egile a zo maro. — Guelet a rin ha guir eo ho komzou : hen toui a ran dre benn ar roue Pharaon, choum a reot ama er prizoun ken o pezo digaset dirazon ho preur yaouanka. » Var ar c'homzou rust-sé, goardou Joseph a brizounias an dek den estren.

Choum a rejont tri dervez er prizoun, neuze Joseph ho galvas dirazhan: « Doujans Doue, emezhan, a zo em c'halon, rak-se, n'ho pezo drouk ebet ma sentit ouzin. Unan ac'hanoc'h a joumo ama chadennet, epad ma yelo ar re all d'ar gear gant an ed o peus da gaout evit hoc'h arc'hant, ha d'an distro, e tigasoc'h d'in ho preur yaouanka. N'am guelot ket, ma tistroit ama hebdhan. »

Ar breudeur a joumas sebezet: « Kastizet ounp gant Doue, emezho etrezho, abalamour m'hon eus pec'het eneb hor breur. Hor pedi a rea gant daelou, epad m'he verzemp da varc'hadourien Ismael, ha n'her selaouemp ket. Doue a ra d'eomp paea brema hor pec'hed. »

Kaout a rea d'ezho ne oant ket ententet gant Joseph, rak hen a gomze gantho e yez an Ejiptianed, met ho entent a rea ker mad, ma teuas he galon da denerrât, ha ma pelleas dioutho evit mont da vouela en eur gampr a gostez.

Dont a reas dirazho goude m'en devoue sec'het he zaelou, neuze, gant eun doare rust, e reas chadenna Simeon, an eil kosa anezho, hag e lavaras d'he zervicherien: « Kargit a ed sier an divroidize, ha kuzit ho arc'hant etouez an ed. » Ar mevelien a reas penn da benn lavarou ho mestr.

« Ité ad Joseph: It da gaout Joseph. » Setu komzou ar roue Pharaon d'an Ejiptianed, pa c'houlennent ed diganthan. Setu ive komzou an Iliz d'ar gristenien o deus ezom euz eur c'hras kaer benag: « It da gaout sant Joseph, tad mager mab Doue en em c'hreat den, hen en deus, etre he zaouarn, an oll grasou m'ho peus ezom

KENTEL 23. — Benjamin a 'z a ive d'an Ejipt

Pa ouent distro d'ar gear, ar vugale a zisklerias d'ho zad kement tra a oa c'hoarvezet gantho. Souezet bras e ouent pa veljont e oa bet rentet ho arc'hant d'ezho en dro gant ho ed. Jakob a lavaras: « Kollet em eus dija Joseph, ha breman e fell d'eoc'h kemeret ive Benjamin, nan, biken n'he lezin da vont ganeoc'h d'an Ejipt. »

Ar patriarch santel a oue red d'ezhan plega, gant an amzer, rak an naounegez a zo kalet. Pa oue debret ar peb brasa euz an ed a oa deut gant he vugale dioc'h an Ejipt, Jakob a zonjas na c'helle ket herzel pell mui, setu ma lavaras: « Distroit d'an Ejipt da c'houlén ed adarre. » Ar pevare euz ar vugale, Juda, a respontas: « Tad, na vezo roet tam ed ebet d'eomp eno, nemet Benjamin a vefe ganeomp. Ar mestr en deus hen diskleriet d'eomp. Roit d'eomp Benjamin, ha me a respount anezhan. — Grit a gerot, eme neuze Jakob, kasit hen ganeoc'h, pa 'z eo guir n'o pezo ket eur c'hreunen ed hebdhan. Kasit ganeoc'h an arc'hant a oa bet lakeat en ho sier er vech all, ha digasit d'in en dro Simeon ha Benjamin. »

Pa zigouezas bugale Jakob en Ejipt, Joseph ho digemeras gant levezeg, hag ho fedas da leina ganthan. Goulén a reas digantho: « Daoust hag he-man eo ho preur yaouanka, o poa great d'in kaoz anezhan? — Ia, emezho, hen eo. — Va mab, eme Joseph neuze, ra zeuio Doue d'ho miret. » Evelato, tec'het a rankas buan da vouela e kuz, rak he galon a oa tenerreat adarre.

Goude beza sec'het he zaelou, Joseph a reas servicha eur pred mad ha pinvidig d'he vreudeur, ho renka a reas he unan dioc'h oad, setu ma ouent souezet-maro. Debri a reas gantho. Da c'houde, e

roas he urziou d'he vestr-mevel. « Karga a reot bar sier an dud-se, ho arc'hant a rentot d'ezho en ho zier, en dro, ha kuzat a reot va hanaf arc'hant e sac'had ed ar yaouanka. » Urziou Joseph a oue heuillet penn da benn.


Laouen bras abalamour d'an digemer kaer a oa bet great d'ezho er vech man, bugale Jakob a oa inall gantho distrei d'ar gear. Kimiada a rejont eta diouz Joseph, ha setu hi en hent, an ed sammet var gein an ezen a oa deut gantho. Ne oant ket eat pell c'hoaz, pa gemennas Joseph d'he c'houarner : « Kea buan ha buan varlerc'h an dud-se, ha lavar d'ezho rust : « Petra eo d'eoc'h renta an drouk evit ar mañ evel m'oc'h eus great ? Perak oc'h eus laeret hanaf arc'hant va mestr ? »

KENTEL 24. — « Me eo ho preur Joseph ! »

Ar gouarner a redas dioc'htu gant he dud varlerc'h ar veachourien, hag a rebechas d'ezho ho laeraden. Int-hi a respountas, soun ho fenn : « Divlam oump euz eun torfed ker bras ! Mar bes kavet an hanaf arc'hant en unan euz hor zier, ra vezo kaset an den-ze d'ar maro, hag ar re all a vezo ho sklavourien ! » An Ejiptianed a furchas ar zier : an hanaf a oue kavet e sac'had ed Benjamin.

Bugale Jacob a joumas mantret, hag a rogas ho dillad. Distrei a rejont da gaout Joseph ; hen, goude beza rebechet d'ezho ho fallagriez, a zisklerias : « Al laer a joumo ganen evel sklavour, ar re all a c'hello distrei d'ar gear. »

Juda, rannet he galon, à yeas neuze tostik da Joseph : « Aotrou, emezhan, hon tad a varvo ma choum Benjamin heb distrei d'ar gear. M'em eus respountet anezhan, rak-se 'ta, grit d'in beza ho



Joseph anavezet gant he Vreudeur

sklavour, met lezit va breur da zistrei d'ar gear. Penaoz e c'helfen-me mont dirak daoulagad va zad, heb va breur Benjamin. »

Tenerreat he galon dre ar c'homzou-ze, a verke eur guir garantez etre he oll vreudeur, Joseph a reas d'an oll Ejiptianed mont kuit ; neuze, beuzet

en he zaelou, e tisklerias d'ezho a bouez penn : « Me eo Joseph ! Daoust ha va zad a zo beo c'hoaz ? » He youez a oa ker krenv ma tregarne ar palez ganthan, met he vreudeur, spountet oll, na gredent ket respount.

Lavaret a reas neuze d'ezho gant dousder : « Deuit tost d'in, ha n'ho pezet aon ebet. Daou vloaz kernez a zo bet, met pemp a joum c'hoaz, ha Doue en deus va digaset ama evit m'ho pefe bara da zebri. Me a zo ama mestr ar vro, dindan ar Pharaon. It, ha livirit d'am zad : Deuit d'an Ejipt, eno e velot Joseph, ar mab ho poa kollet, eno ez eus bara evidoc'h hag evit ho tud. » Neuze, gant eur mor a zaelou, Joseph a bokas d'he oll vreudeur, an eil goude egile, hag ar Pharaon, kerkent ha ma ouezas en doa Joseph kavet he dad hag he vreudeur, a lavaras d'ezhan : « Grit d'ezho dont buan d'an Ejipt, rei a reot d'ezho douar Jessen, pinvidika ha drusa douar a zo er vro. » Bugale Jakob a oue mall gantho senti, bez' o doa eur maread traou kaer ha pinvidig roet d'ezho gant ho breur evit ho zad. Laouen e oant o lavaret d'ezhan er gear : « Joseph a zo beo, hag a zo gouarnner bras an Ejipt, hast en deus d'ho kuelef. » Ar patriarch santel n'ho c'hrede ket da genta, met pa velas an traou a briz bras roet gant he vab evithan, e lavaras : « N'em eus mui netra da c'houlén digant Doue, pa 'z eo guir eo beo va mab Joseph, mont a rin, hag her guelef a rin araok mervel. »

Peger kaer eo buez Joseph ! Leac'h en doa da vaga kasouni ouz he vreudeur, abalamour m'o doa he verzet dre fallagriez, diskoues a c'helle, da viana, yenien d'ezho. Hen, goulskoude, a ziskoues d'ezho ar garantez vrasa. Guir eo, eun doare rust a gemer gantho da genta, met evit ho amprout eur pennad, ha netra ken. Peger kaer eo ar pardon a ro d'ezho ! Peger karantezus eo !

Gouela a ranke, dre nerz he garantez, d'ar mare ne

c'helle ket c'hoaz diskleria d'he vreudeur piou e oa. Joseph a zo eur skeuden euz ar re gaera euz Hor Zalver Jesus-Christ o pardouni, var ar groaz, d'he vourrevien.

KENTEL 25. — Maro Jakob ha Joseph en Ejipt

Araok mont er meaz euz bro Kanaan, Jakob a ginnigas eur sakrifiks d'an Aotrou Doue, hag an Oll C'halloudeg a zisklerias d'ezhan dre he gousk : « Me a zo Doue da dad, kea d'an Ejipt heb aon, rak te a vezo tad eur bobl niverus, ha me vezo ganez, eno, koulz hag en distro. » Kennerzet gant ar c'homzouze, ar patriarch santel a yeas da joum en Ejipt gant he vugale hag he dud : dek den ha tri ugent e oant, etrezho oll.

Ar Pharaon ha Joseph a roas da Jakob guella douar a oa neuze e bro an Ejipt : douar Jessen. Pa c'houlennas ar roue digantan pe oad e oa, ar patriarch santel a respontas : « Dek vloaz ha tri ugent so abaoue m'oun beachour var an douar, ha va buez a zo bet leun a drubuillou. » (Var dro 1835 araok J. C.).

Jakob a vevas seitek vloaz c'hoaz en Ejipt, ha pa velas ar maro o tostât, e vennigas Joseph, abalamour ma oa bet ker mad evithan. Joseph a reas neuze d'he zaou vab, Manasse hag Ephraim, dont da reseoe bennoz ho zad koz. En despet da Joseph, en doa c'hoant e vije bet Manasse, ar c'hosa, da genta, Jakob a roas he vennoz kaera da Ephraim : « He lignez, emezhan, a vezo krenvoc'h ha niverusoc'h eget hini he vreur, evelato, ho lakât a ran ho daou e renk va bugale. »

Ar patriarch santel a vodas neuze, he oll vugale en dro d'he vele, ho binniga a reas oll, met Juda, ar pevare, a oue savet ganthan dreist ar re all. « Ar galloud a rener ne yelo ket diouz lignez Juda,

nak ar vialen a vestr euz a dre he dreid, ken a vezo
 éeant an Hini a dle dont, (ar *Messias*) hag a zento
 an oll boblou outhan. »

Prestik goude, ar patriarch santel a varvas.
 (1818 araok J. C.). He gorf a oue balzamet, hervez
 giz an Ejiptianed, ha kaset, gant he vugale, e bez
 Abraham hag Isaak.

Joseph a renas an Ejipt epad pevar ugent vloaz,
 hag a varvas d'he dro, d'he zek vloaz ha kant. Gal-
 vet en doa, araok mervel, he vreudeur var he dro :
 « Touit d'in, emezhan, e reot kas va eskern ga-
 neoc'h, d'ar vro en deus promettel Doue d'hon tud
 koz : Abraham, Isaak ha Jakob. » He vreudeur a
 douas, var ho le, her grafont.

Peger ke e rank eun den paea, avechou, he bec'hed :
 Ar c'hosa euz bugale Jakob a oa dleet d'ezhan, dre vir,
 kaout guirioù ha bennoz ar mab hena, ha goulskoude ar
 patriarch santel, sklerijennet gant Doue, a nac'h he vir
 outhan, hag ouz an daou a deue da genta var he lerc'h.
 Great o doa pec'hejou pounner. Juda, ar pevare euz ar
 vugale, eo en deus ar bennoziou pinvidig, euz he ouenn
 eo e c'hano Jesus, guir Zalver ar bed oll. Da c'hedal ar
 guinivelez benniget-se, lignez Juda a vezo atao ar c'hren-
 va hag an niverusa euz daouzek lignez bugale Jakob. Ar
 re o deus renet ar bobl : David, Salomon, Ezekias, Juda
 Makabee, a oa euz al lignez-se.

Nak a sklerijen a reseo digant Doue he vir serviche-
 rien. Jakob a oa sklerijennet var he vugale ha var ho
 lignez da c'houde, betek amzer ar C'hrist.

KENTEL 26. — An den santel Job Eürusdet ha gualheuriou

En amzer ar batriarched, e veve e bro Hus, er
 Zao-Heol, eun den santel, he hano Job. Pinvidik
 bras e oa, rak bez' en doa 7.000 danvad, 3.000 kan-
 val hag eur maread mevelien. Doue en doa roet

d'ezhan seiz mab ha teir merc'h, ha bemdez e kin-
 nige da Zoue eur zakrifis evitho. Brudet e oa etouez
 oll boblou ar Zao-Heol, dre he zanvez hag he
 furnez.

Satan, enebour touet an dud, a c'houlennas
 konje da denti an den santel, ha Doue a roas d'ez-
 han galloud d'he skei en he vadou, evit he amproù.
 Eun dervez eta, pa oa oll vugale Job o tebri ho-
 fred e ti ho breur kosa, e teuas, a benn herr, eur
 mevel da ziskleria da Job : « An ejenned a oa star-
 niet ouz an alar, an azennez a oa o peuri en ho
 c'hichen, ha setu padal ! ar Sabeaned o sailla var-
 noump. An oll mevelien nemedon a zo bet lazet,
 hag ar chatal, laeret. »

A veac'h en doa an den-ze achu he gaoz,
 ma teuas eun all, hag a lavaras : « Tan an nenv
 a zo koezet var ho pastored hag ho chatal. Devet
 ha puluc'het int oll ; n'eus choumet nemedon beo
 da zigas d'eoc'h ar c'helou. »

Araok m'en doa an den achu he gomzou, setu
 eun trede kannad oc'h en em gaout : « Tri rum Kal-
 deaned, emezhan, o deus lamet var renerien ho
 kanvaled. Lazet o deus an dud, ha kaset o deus ar
 chatal gantho. N'eus choumet nemedon beo, evit
 dont betek ennoc'h. »

Ne oa ket achu mad aoualc'h he gomzou, pa zire-
 das eur pevare kannad, berr varnhan : « Ho
 pugale, emezhan, a oa oll o tebri hag oc'h eva e
 ti ho mab hena, pa zirollas eun avel foll hag a bilas
 an ti ma oant ennhan. Flastret int bet oll gant ho
 zervicherien, n'eus choumet nemedon d'hen dis-
 kleria d'eoc'h. »

O klevet ar c'heleier spontus-se, Job a zavas, a
 rogas he zillad evit merka he c'hlaç'har, a dou-
 zas he vleio, hag a stouas d'an douar evit adori an
 Oll C'halloudek : « Noaz oun deut var an douar,
 emezhan, noaz e tistroin en douar. Doue en doa

roet peb tra d'in, Doue en deus tennet peb tra diganen: ra vezp benniget he hano santel ! »

Peger bras eo patianted Job ! Peger kaer eo ar skouer roet d'ar gristenien gant an den-ze, a veve e kreiz ar baianed ! Koll a ra en eun dervez he oll vugale, he oll zanvez, ha ne goues ket an distera klem divar he vuzel-lou. Doue a zo ar mestr, ra vezo meulet, atao hag e peb tra, he volentez santel !

KENTEL 27. — Poan hag Eürusted

Doue a lavaras d'an drouk-spered: « Daoust ha gullet e peus va zervicher Job ? Choumet eo mignoun d'in, kaer ec'h eus bet he skei. — Guir eo, eme an diaoul, met n'en deus kollet nemet he vadou. Roit d'in guir var he izili, hag e laosko eur malloz benag varnoc'h. — Galloud a roan d'id var he izili, eme an Aotrou Doue, met arabad eo lemel he vuez diganthan. »

Job a oue skoet kerkent gant an drouk-spered. He gorf oll, penn kil ha troad, a oue goloet gant eur gouli heuzus. An den keaz, azezet var eur bern teil, a oa eun donjer evit an oll dud; rakla a rea ar vreinadurez divar he c'houliou, gant tamou poudu torret.

He c'hreg a lavaras d'ezhan: « Ro da valloz da Zoue, ha marv ! — Komz a rit evel eur vaouez dis-kiant, eme an den santel. Digemeret a reomp ar madou diouz dorn an Actrou Doue, perak 'ta ne zigemerfemp ket ar boan ? »

Dont a reas neuze tri euz he vignouned d'he gon-soli, d'he frealzi, met pa veljont he stad truezus, e choumjoint seiz dervez ha seiz nosvez dirazhan, heb trouc'ha eur ger.

Da c'houde, e klaskjont, an eil goude egile, dis-koues da Job na c'hell beza skoet eun den, gant ar

boan, nemet abalamour d'he bec'hejou. Job a res-pounte d'ezho: « Doue a zigas ar boan da veur a hini evit kastiza ho fec'hejou, ha da veur a hini all evit ho amprou. Evel ma ves an aour en tan, evelse e ves netteat servicherien Doue er boan. »

En despet da falz lavarou he vignouned, an den santel a gendalc'has da gaout fizians e Doue: « Ha pa deufe Doue d'am laza, emezhan, er memez tra em bezo fizians ennhan. Gouzout a ran eo beo va Zalver. Guisket gant ar c'hig-man, me a velo Doue, m'her guelo gant va daoulagad, m'her guelo, me va unan, n'eo ket eun all eo. An esperans-se a joum beo em c'hreiz. »

Doue en em ziskouezas d'ar pevar den, hag a lavaras d'an tri vignoun: « N'oc'h eus ket kom-zet dirazhon gant kement a furnez ha va zervicher Job. Hen a ginnigo eur zakrifis evidoc'h, hag e pardounin d'eoc'h, abalamour d'ezhan. »

Doue a zigollas da c'houde an den santel euz he drubuilloy, o rei d'ezhan daou gement all euz an danvez en doa kollet: « pevarzek mil danvad c'houec'h mil kanval, mil koublad ejenned ha mil azenez. » Bez' en devoue, ouspenn-ze, seiz mab all ha teir merc'h koant evel an deiz. Beva a reas c'hoaz seiz ugent vloaz.

Job a zo eur skouer kaer evit an oll gristenien. Tentet e vezimp evel dan gant an drouk-spered, met evel m'hel lavar d'eomp an abostol sant Paol: « Doue n'hon lezo biken da veza tentet en tu all d'hon nerz. » Galloud an drouk-spered a zo sparlet gant an elez mad, rak Doue a joum atao ar mestr bras, e peb tra. Lakomp, evel an den santel Job, hor fizians ennhan, hag e vezimp treac'h d'an drouk-spered.

TREDE PENNAD

Euz Ginivelez Moysez betek an roue David
(1430-1013 araok Jesus-Christ)

KENTEL 28. — Ginivelez Moysez

Bugale Jakob a oue eürus epad kalz bloaveziou en Ejipt; an dud hag ar chatal a yeas buan var gresk. Sevel a reas var an trôn, gant an amzer, eur roue ha ne oa ket euz orin ar rouaned a oa en em glevet gant Joseph, hag ar Pharaon-man a voas kas bugale Israel. Lavaret a reas d'ar pennou bras a oa da dosta d'ezhan: « An Israelited a vezo dizale krenvoc'h ha niverusoc'h egedomp, miromp outho da vont var gresk. »

Ar vistri bras a zammaz neuze bugale Israel dindan labourou pounner, hag ho bourrevas egiz sklavet. Kaer o doa ober d'ezho guasa a c'hellent, niver an Hebreed a greske. Neuze ar Pharaon a zougas ar zefans didruez-man: « Kement paotr a c'hano d'an Israelited a vezo hiviziken taolet e ster an Nil ha beuzet. »

Prestik goude, eur c'hreg euz lignez Levi a c'hanas eur mab hag a oa koant evel an deiz o c'houlou. Bez' e doa bet dija, digant Doue, eur verc'h, Mari, hag eur paotr, Aaron, ganet araok urz kriz ar roue, an trede-man a oa ker koant m'her c'huzas epad tri miz. Neuze, e savas aon ganthi na vije diskuillet. Kemeret a reas eta, eun dervez, eur baner vrouan, lakât a reas eur guiskad pek en dro d'ezhi, da c'houde e fiskennas ar c'hrouadur er baner, etouez ar raoskl a oa var ribl ar ster. Mari, he merc'h, a oa demguzet e kichen, var evez euz he breurik.

D'ar mare-ze, merc'h ar roue Pharaon a ziskenne d'ar ster d'en em voalc'hi. Guelet a reas ar c'havel, hag he c'halon a oue tenerreat: ar bugelik a oa ker koant! Mari a deuas neuze a vel, mont a reas dioc'htu da glask he mam, ha merc'h ar Pharaon a lavaras d'ezhi: « Kemerit ar c'hrouadur-ze, magit-hen d'in, ha me ho tigollo. »

Ar vissionerien hag al leanezed a entent ouz ar vugale a zonj, alies, er c'homzou-ze euz ar Skritur Zakr. N'int ket bet galvet gant Doue da gaout bugale ho-unan, met sevel a reont bugale ar re all, hag e sonj d'ezho klevet Doue o lavaret: « Savit ar bugel-ze, ha me ho tigollo, em baradoz. »

KENTEL 29. — Moysez galvet gant Doue

Pa oue bras ar c'hrouadur, he vam her c'hasas da verc'h, ar Pharaon, hag houman hen hanvas Moysez, da lavaret eo: saveteat diouz an dour. Savet e lez ar roue, an den yaouank a oue kelenet gant mistri gouiziege, hag o veza m'en doa eur spered kaer dreist, e oue desket bras, evit an amzer-ze.

D'he zaou-ugent vloaz, Moysez a dec'haz euz lez ar roue evit mont da veva gant he vreudeur, an Israelited, e bro Jessen: c'hoant en doa ober eur vad benag d'ezho. Met stad bugale Israel a oa truezusoc'h eget biskoaz: ho mistri fallakr a yea bemdez var voasât. O velet eun dervez eun Ejiptian o vourrevi eun Hebreed, Moysez, drouk ennhan, a lazas an Ejiptian. Divar an taol-ze, e tec'has pell en dezert, gant aon rak offiserien ar Pharaon.

En dezert, da lavaret eo, en eur vro c'houes, Moysez a gavas eun den eun ha leal, Jethro, euz a ouenn Abraham. Dimezi a reas gant he verc'h, ha mont a reas da ziousall deved he dad-kaer, ken a oue galvet gant Doue da zavetei he vreudeur.

Eun dervez ma oa ead Moysez, gant he zenved, demdost da venez Horeb, e velas eur voden entanet oll ha keuneud ar voden a flamine, heb mont e ludu. Souezet-maro, ar pastor denved a dostea evit gullet guelloc'h, pa glevas mouez an Aotrou Doue : « Moysez, Moysez ! — Setu me ama, emezhan. — Na deues ket larkoc'h, eme Doue neuze, ha tenn da voutoù, rak bez' emañ ama var eun douar santel. Me a zo Doue da dad, Doue Abraham, Doue Isaak ha Doue Jakob. Klevet em eus klemmou va fobl a zo guasket en Ejipt. He hench a rin en eur vro binvidig, e leac'h ma red al leaz hag ar mel. Te eo a gasin da gaout roue an Ejipt. — Piou oun-me, eme Voysez, evit mont da gaout ar Pharaon ? — Me a-vezo ganes, eme Doue. Pa deui gant ar fobl euz an Ejipt, te a ginnigo d'in eur zakrifis var ar menez-man.

— Mont a rin eta varzu va breudeur en Ejipt, eme Voysez, hag e livirin d'ezho : « Doue hon tud koz en deus va digaset d'ho kaout. Met, ma c'houlennont diganen : Pe hano en deus ? pe seurt respount a roin d'ezho ? — Respount n ri, eme an Aotrou Doue : « Me eo an hini a zo. — N'am zelaoint ket, eme Voysez. — Taol da vialen d'an douar, » eme an Aotrou Doue. Moysez a zentas, hag ar vialen a deuas da veza eun aer. « Astenn da zorn, eme an Aotrou Doue, ha krog en he lost. » Moysez her greas, hag an aer a oue chenchet e guialen. « Aotrou, eme c'hoaz Moysez, fall oun da gomz. Digasit an hini a dle dont. » Doue a respountas : « Da vreur Aaron a gomzo evidot. Te, gant ar vialen a zouges en da zorn, a raio traou burzudus. »

Doue a ro da Voysez eul labour bras da ober : tenna pobl Israel euz a dre zaouarn an Ejiptianed. An Oll C'halloudek en doa furmet anezhan dioc'h he zorn, roet en doa d'ezan eus spered lem ; mis-

tri guizieg a zeskas d'ezhan, e-lez ar roue Pharaon, skianchou ar bed-man, gant an doare da ren an dud, betek he zaou ugent vloaz. Ober a reas, da c'houde, daou ugent vloaz retred, o tiouall bemdez denved he dad kaer, he unan gant Doue. He vam e doa desket d'ezhan, er gear, petra eo Doue ; ar pastor denved en devoue amzer, ha kalz amzer, da zonjal en he berfeksionou heb muzul. Ha setu aze eur merk kaer euz furnez ha madelez an Aotrou Doue : an neb piou benag en deus bet galvet d'ober eul labour vras var an douar-man, en deus resevet atao digantan sklerijen ha nerz evit ober mad he labour. Doue a ren peb tra.

Bleniet en deus merc'h ar roue var ribl ar ster Nil pa oa ezm anezhi eno, great en deus d'ezhi sevel mad ar c'hrouadur-ze barnet d'ar maro.

Pa studiomp gant evez ar Skritur Zakr, nak a leac'h hon eus da gaout fizians en Aotrou Doue ! Gullet a reomp dorn Doue o ren buez Moysez en eun doare sklear, ha gullet a reomp, ker sklear all, an dorn-ze o ren peb hini ac'hanomp ma ouzomp en em anaout.

Moysez a c'houlennas digant Doue digas an Hini a dle dont, ar Messias, mes amzer ar Messias pe Zalver ne oa ket deut c'hoaz.

KENTEL 30. — Goalinier gastiz an Ejipt

Moysez hag Aaron a zisklerias dirak ho breudeur, an Hebreed, e oant karget gant Doue d'ho zenna diouz an Ejipt, ha d'ho ren er vro a oa bet promettet da Abraham ha d'he lignez. Fizians a oue enno, abalamour d'an traou burzudus a reant.

Goude, ez ejont da gaout ar roue Pharaon, met e leac'h rei konje d'an Israelisted da vont kuit, hen a reas ho guaska muioc'h c'hoaz eget araok. Neuze, var urz Doue, Moizes a zichadennas nao goalen gastiz var an Ejipt.

- 1 Dour ar ster Nil a deuas da veza ruz goad.
- 2 Guesklered a gargas an tiez, hag ar gueleou zoken.
- 3 C'huibu heb niver a c'holoas ar vro, hag a dagas tud ha chatal.
- 4 Keillen louz a beurachuas labour ar c'huibu.
- 5 Ar vosen a skubas eur maread chatal.
- 6 Eur c'hlenved all, ker spegus hag ar vosen, a zichadennas gouliou var an dud hag al loened.
- 7 E kreiz ar gurun hag al luc'hed, eur glao kazarc'h bras a rivas an drevajou, hag a lazas an dud hag ar chatal a oa er parkeier, er vro oll, nemed e bro Jessen.
- 8 Killeien raden heb niver a beurzebras an traou a oa choumet varlerc'h ar c'hazarc'h.
- 9 Eun denvalijen spountus (na velet ket pañ an dorn) a c'holoas an Ejipt epad tri dervez leun.

Pà veze kastizet an Ejipt gant hini pe hini euz ar voalinier, ar Pharaon, spountet, a c'houlenne truez, a rea promessaou kaer da Voysez ha da Aaron, met kerkent ha ma paoueze an Aotrou Doue da skei, ar roue a yea eneb he c'her. En doare-ze, ar bobl n'en doa ket aotre da vont kuit.

Sorserien an Ejipt a boanias d'ober ar burzudou a rea Moysez, an daou genta a rejont, met na c'hellont ober nikun euz ar burzudou all. Eun dra a oa souezus er goalinier gastiz-se: skei a reant an Ejiptianed, heb ober drouk d'ar re a oa var douar Jessen, var douar bugale Israel.

Pa velas an Aotrou Doue ne felle ket d'an Ejiptianed plega, e kasas d'ezho eal ar maro : an eal galoudus a reas d'ezho soubla.

Peger mad eo an Aotrou Doue ! Skei a ra en desped d'ezhan. Promettet en doa da Abraham ha d'he vugale, en defe roet d'ezho an douar pinvidig hanvet neuze Bro Kanaan, ha divezatoc'h ar Judee, met an Ejiptianed o doa

c'hoant miret bugale Israel en ho zouez. Labourat a reant evit netra, evel sklaved an Ejiptianed. Doue na c'hell ket mont eneb he c'her.

Ober a ra goulenn aotre an Ejiptianed, ar re-man na reont van. Skei a ra taoliou skanv, da genta; taoliou krenvoc'h, da c'houde; van ebet atao. Neuze e sko kalet, hag an Ejiptianed a bleg. M'o defe pleget dioc'htu, na vijent ket bet kastizet ker kalet-se.

Pa anavezimp bolontez an Aotrou Doue, plegomp d'ezhi.

KENTEL 31. — An Dekved Goalen

Moysez a gomzas, var urz Doue, d'ar Pharaon, hag a zisklerias d'ezhan : « Setu ama lavar an Oll C'halloudek : E kreiz an noz, e treuzin an Ejipt, lakât a rin d'ar maro ar mab hena euz a bep ti, gant ar c'hosa euz re vian al loened. Bugale Israel na vezint ket skoet. »

Ar rener santel a lavaras, neuze, da bobl Israel : « En dekved dervez euz ar miz-man, peb famill a gemero eun oan bloaz. Lazet e vezo d'ar pevarzek dervez, dioc'h an abardaez. Gant goad an oan-ze, c'houi a livo postou ha gourinou dor an ti ma vezo debret an oan ennan. En nosvez-se zoken, c'houi a zebro ar c'hig goude m'ho pezo he rostet var an tan, gant bara poazet heb goell, ha gant geot c'houero. Ober a reot ar pred-se en ho sav, d'ar red, ho treid en ho poutou, gant eur gouriz en dro d'ho kroaz-lez. Ar pred-se a vezo hanvet ar Pask. Lavaret en deus Doue : « En nosvez-se, me a dremeno dre an Ejipt, hag a roio ar maro d'ar mab hena euz peb ti, abaoe mab ar Pharaon betek mab ar baoura intañvez euz ar vro; ar maro d'ar c'hosa euz ar re vian e peb kraou. Ar goad a livo ho toriou a vezo eur merk a zilvidigez : me a dremeno heb ho skei. »

En noz merket gant Doue, an Ejipt a dregarnas oll gant an hirvoud hag ar goelvan : ti ebet ne oa heb eur c'horf maro. En ho mall da velet an Israelited

pell dioutho, an Ejiptianed na c'hedjont ket an deiz: « It buan divar hon tro, emezho, anez, e varvimp oll. » An Israelited o doa amprestet, en derveziou araok, traou aour, arc'hant ha guiskamanchou kaer digant an Ejiptianed; ne ouent ket goulennet en dro digantho.

En dervez-se zoken, pobl Israel a loc'has diouz an Ejipt, tud ha chatal asambles. Evit derc'hel envor euz an dervez-se, Israel a dlle lida, bep bloaz, gouel Pask, gant bara heb goell hag eun oan bloaz e peb famill. Moysez a gemeras relegou ar patriarch santel Joseph evit ho dougen ganthan d'al leac'h matliant mont. Doue, abalamour m'en doa espernet, e nosvez ar Pask, ar re gosa euz bugale Israel, a c'houlennas ma vije konsakret d'ezhan, hiviziken, ar mab hena euz a bep famill.

An oan Paskal a oa eur skeuden gaer euz Hor Zalver Jesus-Christ. Goad an oan-ze en doa saveteat diouz ar maro ar mab hena euz peb famill, goad Hor Zalver en deus saveteat diouz ar maro eternal oll dud ar bed, e peb amzer. Kig oan al Lezen goz a veze debret gant al lidou en doa merket Doue, dre c'hinou Moysez; korf Hor Zalver, oan al Lezen nevez, a vag ar re her resego gant al lidou merket gant mab Doue.

Maro an oan Paskal a dennas Israel euz a dre zaouarn an Ejiptianed, ho mistri fallakr; maro an oan Doue a denn an oll dud euz a dre skilfou an drouk spered, ho enebour touet.

KENTEL. 32. — Israel a dreus ar Mor Ruz

Pevar c'hant tregont vloaz araok, pa oa deut Jakob d'an Ejipt gant he dud, e oant dek den ha tri-ugent. Bez' e oant, en eur vont kuit, c'houec'h kant mil den e kreiz ho brud, heb ar mero'hed hag ar vugale. Deut e oa eta da vir ar bromesa great gant Doue d'ar patriarch santel Abraham: « Bez' e vezi tad eur bobl vras. »

Var urz an Aotrou Doue, Moysez ne 'z eas ket var eun da vro Kanaan. En he vadelez, an Oll C'halloudek a henchas he unan pobl Israel: eur goummoulen, gobari eun tour d'ezhi, a 'z ea dirak ar bobl, tenval en deiz, lugernus en noz. Israel a 'z ea da heul ar goummoulen, pa gerze; hag a joume a zav, evel-dhi.

Pa glevas lavaret ar Pharaon e oa tec'het an Israelited, e savas drouk ennhian, keuz en doa da veza lavaret d'ezho mont kuit. Setu hen o voda he zoudardet hag he girri brezel, hag o redet, buan ha buan, varlec'h an Hebreed. Ho faka a rejont e berr amzer, hag an dud keiz a oue nec'het bras, ha spoutet oll. Pardaez e oa; pobl Israel en doa dirazhan, ar Mor Ruz; adrenv he gein en doa brezellourien an Ejipt. Na c'helle ket tec'het.

Sevel a reas neuze grósmol ha klemmou etouez an dud-se: « Daoust ha ne oa ket a veziou aoualc'h, en Ejipt, evit resego hor c'horfou goude hor maro? Perak hon digas da vervel er vro c'houes-man? » Moysez a respountas d'ezho: « Bezit dinec'h, Doue eo a skoio evidoc'h. Sellit mad ouz an Ejiptianed-se, n'ho guelot mui divar hirio. »

Neuze ar c'hoabren a oa araok ar bobl a 'z eas adrenv, dioc'h tu an Ejiptianed, setu ma vire ouz ar re-man da vont var araok.

Moysez a zavas neuze he vialen a zioc'h ar mor, hag an dour a zigoras kerkent. Eun hent a oue gullet var strad ar mor, an dour a reas moger, en eun taol, tu ha tu d'ezhan, hag eun avel krenv a zizec'has buan an hent-se. Pobl Israel a dreuzas eaz ar mor. Pa darzas an deiz, an Ejiptianed a velas an hent-se, digor dirazho, dre vuzud. Dallet gant ho c'hassouni, e redjont dre eno varlerc'h Israel, met Moysez a zavas he vialen eun eil guech, ha dour ar

mor a vezas kerkent ar Pharaon, he offiserien, he gezek, he girri brezel hag he zoudardet; ne joumas nikun da gas ar c'helou d'ar gear.

Neuze, leun a anaoudegez vad evit an Aotrou Doue, pobl Israel a ganas eur c'hantik kaer savet gant Moysez evit meuli an Oll C'halloudek hag he drugarekât.

Na pegen eaz e oa da bobl Israel kaout fizians e Doue! Guelet a reas ar mor o tigeri dirak he zaoulagad, evit rei hent dezhan, ha pa oue e savete en tu all, e velas ar Mor o kloza evit lounka he enebourien. Pebez gras kaer ha pebez burzud! Guelet a reas, epad daou ugent vloaz, ar goummoulen, tenval en deiz, skedus en noz, hag a lavare da Israel heb chan: « Lagad Doue a zo o para var-nout atao. » Ni, ma sonjemp en hor buez gant evez, ha ne anavesfemp ket sklear dorn Doue, e meur a heur euz hor buez?

KENTEL 33. — Ar C'hoailled, ar Mann

Pa oue eat bugale Israel e savete en tu all d'ar Mor Ruz, e veljont dirazho eur vro c'houes ha treut, hanvet ar gouelec'h pe an dezert. Bale a reant hed an deiz avechou, met mont a rankent var ho fouezik, gant ar vugale hag ar chatal; sevel a reant ho zeltou dioc'h ar pardaez, evit beza er guasked hag er goudor epad an noz.

Pa velas an Hebreed pegen noaz e oa ar vro, ec'h en em rojont da glem da Voysez ha da Aaron: « Mervel a raimp gant an naon er vro-man, ni, bara mad ha kig d'eomp en Ejipt, hag hon doa eno pesked evit netra. Nak a legumach er vro-ze! ougnoun, kignen, pour! Salo e vemp maro eno! » Moysez a respountas d'ezho: « Er pardaez-man o pezo kig da zebri, ha varc'hoaz vintin o pezo bara an nenv, evelse e ouezoc'h eo an Oll C'halloudek en deus ho tennet diouz an Ejipt. »

Var ar pardaez, millerou a c'hoailled a gouezas var dro teltou an Israelited, ha ne oa ken d'ober nemet astenn an dorn evit ho dastum. Evelato, kalz tud a varvas, abalamour ma tebrjont betek re euz ar bevans-se.

Kaout a reer koailled, en eskopti Kemper, epad an hanv: hiniennou a ra *pemp guenneg* anezho.

Antronoz vintin, an douar tro var dro d'an teltou, a oa goloet a c'hreunennou bian, guen evel ar c'hazarc'h. Bugale Israel, souezet maro, a c'houlenne an eil digant egile: « Manhu? » da lavaret eo: « Petra eo an dra-ze? » Moysez a respountas d'ezho: « An dra-ze eo ar bara a ro Doue d'ho maga. » Abalamour d'ar goulenn a reas an Israelited an eil d'egile, ar boued-se a oue great Mann anezhan.

Ar mann a gouezas bemnoz, epad an daou ugent vloaz ma choumas pobl Israel da vale varzu an Douar promettet d'ezho gant Doue: merk sklear euz Providans Doue evit he vugale. Kenta bannou an heol a rea d'ar Mann teuzi a nebeudou, evel an erc'h; red e oa eta he dastum abred kaer.

D'ar zadorn, a oa dervez an ehan evit ar Juezien, ar bara burzudus na goueze ket, rak labour a vefe bet d'he zastum, ha peb labour a oa difennet d'ar zadorn, setu perak, an dud a zastume an hanter muic'h euz ar Mann da vener. En dervezioz all, an neb a zastume re euz ar Mann evit an dervez, a gave, antronoz, he vagadurez prenvedet ha breinet. Ar Mann e doa blas ar bleud mad ha blas ar mel er memez amzer, met an neb piou benag a c'hoantea saouri eur vlazen all, a gave ar zaour-ze enni.

Evel testeni euz ar burzud kaer-ze, a badas daou ugent vloaz leun, Moysez, var urz an Aotrou Doue, a lakeas divezatoc'h eur muzul euz ar Mann en tibernakl, hag ar Mann-ze na vreinas ket.

Ar Mann a zo ar skeuden gaera euz Hor Zalver er Zakramant meulet ra vezo. Jesus en deus hen diskleriet d'ar Juzevien demdost da gear Kapharnaüm. Ar Mann a veze kinnigët bemdez d'an dud, evel ar gommunion zantel d'ar c'hristen. Ar Mann a oa guen, ker guen ha spes ar bara. Ar Mann a veze dastumet abred, ar gommunion a ves resevet ken abred all, var yun. Ar Mann a zioualle diouz klenvejou ar c'horf, ar zakramant a ziarbënn klenvejou an ene. Ar Mann a gennerzas Israel hed he veach en eur vro noaz, betek ma tigouëzas en douar promettët, ar Gommunion a vâg ar guir gristen keit ha ma choum en draonien-man a zaelou, betek ma tigoues en douar promettët d'ezhan, ar Bâradoz.

KENTEL 34. — Eienen roc'h Horeb, An Amalestid

Pa zigouezas ar bobl e gouelec'h Raphidim, e savas sec'hed d'an dud, rak n'o doa ket a zour. Klem a rejont buan: « Perak ounp ni bet digaset ama da vervel gant ar zec'hed? »

Var urz an Oll C'halloudek, Moysez a c'halvas eun nebeudik euz pennou bras ar bobl, hag a 'z eas gantho betek roc'h Horeb. An den santel a skoas var ar roc'h dirazho gant he vialen, ha kerkent an dour a zinklas diouz ar roc'h-se, hag a oa bet seac'h betek neuze: Setu ma c'hellas an oll, tud ha loened, eva ho gualc'h.

Bugale Amalek, mad da redet euz an eil penn d'egile er vro c'houes-se, a deuas eno da daga bugale Israel. Moysez a bedas kerkent an Aotrou, setu ma lavaras Doue d'ezhan: « Grea da Josue mont d'an emgann gant an dud a zo e barr ho yaouankiz hag ho brud. »

Josue a zavas eta brezellourien, hag a 'z eas gantho d'an emgann eneb Amalek, epad ma pigne Moysez, gant he vialen, var eun dorgen huel, a vel d'an oll, evit pedi an Oll C'halloudek. Epad ma

choume divrec'h an den santel savet varzu an nenv, Israel en doa ar gounid, met pa goueze he zivrec'h, feaz gant ar skuisder. Israel a goll. Pa veljont kement-se, Aaron hag Hur, an daou o doa heuillet Moysez var ar menez, a reas da rener bras Israel azeza var eur mean, int-hi neuze a zalc'has he zivrec'h savet varzu Doue, betek ma ouë flastret an oll enebourien. Var urz Doue, oll vugale Amalek a ouë lakeat d'ar maro, eno.

Moysez, evit trugarekât an Aotrou Doue, a zavas dioc'htu eun aoter, hag a ginnigas eur zakrifik d'ezhan.

Petra eo bet da Voysez kemeret testou pa skoas var roc'h Horeb? C'hoant en doa kaout tud guest da lavaret: « Doue eo en deus roet galloud da Voysez da gaout dour euz eur roc'h seac'h, evit miret na varvfemp oll gant ar zec'hed. » An dourze, roet da bobl Israel, a zo eur skeuden euz ar grasou puill a resev ar gristenien er zakramanchou.

Pehini eo ar gentel a gavomp en emgann gant Amalek? Ni, kristenien, en emgann hon eus gant enebourien hon ene, a vezo treac'h mar keromp ober implij euz an daou zra o deus roet an treac'h da Israel: poania ha pedi.

KENTEL 35. — Al lezen embannet var menez Sinai

Tri miz goude ma oant deut er meaz euz an Ejipt, an Israelited a zigouezas dirak menez Sinai. Eno, Doue a zisklerias d'ar bobl, dre c'hinou Moysez, he zervicher: « Gouzout a rit ar pezh am eus great d'an Ejiptianed, hag ar garantez am eus diskouezet d'eoc'h. Breman 'ta, mar kirit selaou va mouez, ha choum a unan ganen, c'houi a vezo va fobl muia karet etre ar boblou. » Ar bobl a res-

miret evit beva e mignouniach Doue. An oll a pointas : « Ober a raimp kement a c'houlen Doue diganeomp. » Bez ' o devoue neuze urz da voalc'hi ho dillad, ha da veza neat a galon hag a gorf abenn an trede dervez divezatoc'h.

En trede dervez-se, abred kaer, ar gurun a grozas hag al luc'hed a zinklas azioe'h ar menez golet oll gant eur c'hoabren denval. Ar menez a orjelle er memez amzer, soun skiltrus an drompill a rea d'ezhan tregarni, hag an dud a grene dre ho spount. Euz a greiz an tan hag ar moged a c'holoe ar Sinaï, e oue klevet mouez an Oll C'halloudek :

1 Me eo an Aotrou, ho Toue. N'ho pezo két a zoue all dirazon-me. Na adoroc'h netra euz an oll draou krouet.

2 Na gemerot ket, en aner, hano an Aotrou, ho Toue.

3 Bezit sonj da zantifia an deiz ehan.

4 Henorit ho tad hag ho mam evit ma vevoc'h pell var an douar a ro d'eoc'h an Aotrou, ho Toue.

5 Na lazoc'h ket.

6 Na reot ket a avoultriach.

7 Na laeroc'h ket.


8 Na zougoc'h ket a falz testeni.

9 Na c'hoantaoc'h ket kaout greg ho nesa.

10 Na c'hoantaoc'h na ti ho nesa, nak he vevel, nak he blac'h, nak he ejen, nak he azen, na netra euz a gement a zo d'ezhan. »

Spountet oll, an Isralited a zisklerias : « Ober a raimp kement a c'houlen an Aotrou Doue diganeomp. »

Moysez a zavas neuze eun aoter gant daouzek mean, evel eur merk euz daouzek lignez Israel, hag a ginnigas da Zoue eur sakrifis a beoc'h, o laza liou. Skuill a reas an hanter euz ar goad var an aoter, da c'houde e lennas d'ar bobl al lezennou a dlie



Taolennou al Lezen

youc'has : « Miret a raimp al lezennou-ze. » Neuze, servicher bras Doue a zoubas eur sparf e goad ar sakrifis, hag he strinkas var ar bobl, en eur lavaret : « Ar goad-man a zo siel ar vignouniach etre an Aotrou Doue ha c'houi. »

« Doue a zougas he lezen e kreiz ar gurun hag' al luc'hed, evit ober d'ar bobl kaout muioc'h a zoujans evithi. Merka a rea d'ezho eo hen, e guirionez, an Oll C'halloudek. An Testamant kenta-ze, an Testamant koz, a oue siellet gant eur goad dic'halloud aoualc'h, goad anevaled; an Testamant nevez, kalz parfetoc'h ha nerzusoc'h, a zo bet siellet gant goad Mab Doue, skuillet var menez Kalvar evitomp.

KENTEL 36. — Al leue aour Nerz eur beden

Doue a reas da Voysez pignat var ar menez evit merka d'ezhan gant evez an doare da ren ar bobl ha da lida ar sakrifisou. Mignoun bras Doue a joumas ganthan daou ugent dervez ha daou ugent nosvez, heb debri nak eva, o komz gant Doue epad an amzer-ze. Doue a roas d'ezhan, araok ma tiskennas divar ar menez, an dek gourc'hemenn skrivet ganthan he unan var diou daolen vean.

Epad ma komze Moysez gant Doue, evel eur mignoun gant he vignoun, an Israelited choumet e traon ar menez a deuz da inoui, hag a zavas c'hoant d'ezho kaout skeuden eun doue faos evel m'o doa an Ejiptianed, « Na ouzomp ket, emezho da Aaron, e pe leac'h e choum da vreur. Gra d'eomp doueou hag a vezo douget dirazomp. »

Aaron a oue sempl aoualc'h evit rei d'ezho ho goulenn, ha gant an oll braoigou aour a zouge merc'hed Israel evit en em fissa kaer, a reas d'ezho eul leue aour. Bugale Israel a ginnigas eur zakrifis d'ar fals doue-ze, a zebras, hag a evas dirazhan; da c'houde, ec'h en em rojont da gana ha da zansal.

Pa ziskennas Moysez divar ar menez, pa velas an idol aour hag an dud o tansal dirazhi, e taolas, en he gounnar, an diou daolen oc'h eur roc'h euz ar menez, setu ma ouent bruzunet. Taoler a reas

buan al leue aour en tan, hag e reas rebechou c'houero d'he vreur Aaron. Heman a respountas : « Int-hi eo o deus great d'in teuzi an idol-ze evitho, me a oa en desped d'in. — Fall e peus great ! » eme Voysez.

« Piou a zo choumet a du gant Doue ? » a c'houlennas neuze rener Israel. Kerkent bugale Levi a zavas, setu ma lavaras Moysez d'ezho : « Lazit ar re a gavot euz an dud o deus torret mignouniach an Aotrou Doue ! » Senti a rejont dioc'htu, ha tri mil den a oue lazet gant ar c'hleze.

Al leue aour a verk d'eomp peger froudennus e oa pobl Israel. An dud-se a oa o paouez rei ho ger da Zoue : « Ni a zo d'eoc'h, ni a viro ho kourc'hemennou », spountet e oaant bet, eur pennad, gant tan ha kurun ar Sinai, ha breman, setu hi o trei kein da Zoue ! Peger bresk eo bolontez an den !

Antronoz, Moysez a lavaras d'ar bobl : « Great o peus eur pec'hed euz ar re voasa, pignat a ran da bedi Doue evidoc'h. » Mont a reas eta dirak Doue en eur grenn, rak Doue en doa dija lavaret d'ezhan : « Pobl Israel a zo re bennek, m'hen distrujo, hag a raio d'id ren eur bobl all, bras ha niverus. » Setu ma lavaras an den santel : « Me ho ped, Aotrou Doue, o pet truez ouz bugale Israel : great o deus eur pec'hed bras dreist, oc'h adori eun doue aour, met c'houi ho fardouno, rak ma n'her grit ket, tennit va hano divar ho leor a vuez. » Doue a respountas d'he zervicher : « Ar pe-c'her hebken a vezo tennet divar va leor; te a hencho ya fobl befek ar vro m'em eus komzet d'id anezhi. Rei a rin d'id eun eal d'az ren, hen da vleino betek ar vro hag a red ennhi guazennou leaz ha mel. Me, eme c'hoaz an Aotrou Doue, n'ez in ket ganeoc'h, rak bugale Israel a zo re galet ho fenn, hag emaoun e riskl d'ho skei epad an hent. — Ma ne deuit ket

hoc'h unan d'hon ren, eme Voysez, ni a joumo e' leac'h-man, rak anez, ne ouezimp ket mad ha ni a vezo a-unan ganeoc'h. » Doue, trec'het gant peden he zervicher, a respountas neuze : « Rei a ran d'id da c'houlén. »

Leun a fizians en Aotrou Doue, Moysez a c'houlennas c'hoaz eun dra all: gueleit Doue en he c'hloar. An Oll C'halloudek a respountas:

« Den na c'hell va gueleit em gloar heb mervel, » evelato, Moysez a velas Doue, e kement ha ma c'hell beza gueleit gant eun den var an douar-man.

Da c'houde, servicher bras an Aotrou Doue a zavas eun eil tro var menez Sinai, hag a joumas eno daou ugent dervez ha daou ugent nosvez, heb debri nak eva, o selaou komzou Doue. Reseo a reas, var diou daolen vean, an dek gourc'hemenn skrivet adarre gant an Aotrou Doue, ha pa ziskennas divar ar Sinai, he dal a oa lugernus gant daou vann sklerijen. Bugale Israel, dallet gant ar bannou-ze, ne gredent ket sevel ho daoulagad varnhan, setu ma rankas golo he vizach.

Divar an dervez-se betek he varo, bizach Moysez o veze goloet atao, nemet pa 'z ea da gomz gant an Aotrou Doue en delten en doa savet evit he henori. Gueleit e veze neuze ar goummoulen, a rene ar bobl, o loc'h, hag o tont azioc'h an delten; chom a reas eno keit ha m'en deveze Moysez goulennoù d'ober d'an Aotrou Doue. Etretant, bugale Israel a joumevar dreujou ho zeltou, hag a stoue da adori an Aotrou Doue, kuzet er goummoulen. Doue a gomze neuze ouz he zervicher bras, evel eur mignoun gant he vignoun.

Na peger kaer eo nerz ar beden! Doue en deus c'hoant distruja pobl Israel, ha Moysez a vir na skofe: an Oll C'halloudek eo a bleg. Da c'houde, Doue en deus c'hoant

chom diseblant o kenver Israel, ha Moysez a respount d'ezhan: « C'houi hoc'h unan, Aotrou Doue, eo a fell d'eomp kaout, d'hon ren. » Hag an Oll C'halloudek a bleg adarre, diskoues a ra zoken he c'hloar d'he zervicher. Goulennomp eun nebeud euz feiz Moysez evit pedi an Aotrou Doue egiz m'eo dleet.

KENTEL 37. — An Tabernakl, ar velelen, ar Goueliou

Er vech kenta ma oa savet Moysez var menez Sinai, Doue en doa gourc'hemennet d'ezhan: « Bugale Israel a raio d'in eun Tabernakl, ha me a joumo en ho zouez. Konsakri a ri beleien evit ar sakrifisou, sevel a ri goueliou, en envor euz ar burzudou am eus great evit Israel. »

Servicher bras an Aotrou Doue a lavaras eta d'ar bobl: « Setu ama urz Doue: « Peb hini ac'hanoc'h a ginnigo eur prof, evit herzel ouz ar mizou a vezo o sevel an Tabernakl, hag o c'hober guiskamanchou d'ar veleien. » An Israelited a oue brokus, setu e oue gellet ober guiskamanchou pinvidig.

I. — AN TABERNAKL

An Tabernakl a oa eun delt vras, pemzek metr benag a hirder d'ezhi var bemp metr a ledander. Diou gampr a oa en Tabernakl: al *Leac'h santel* hag al *Leac'h santela*. El *Leac'h santela* e oa *Arc'h an Allians*, great euz koad akasia guisket gant aour pur. Azioc'h an *Arc'h*, skeudennou aour daou Cherubin a astenne ho diouaskell evit he goaskedi. En *Arc'h* e oa diou daolen al Lezen, hag ouspenn, eur podik aour, mann ennhan.

El *Leac'h santel*, dispartiet dioc'h al *Leac'h santela* gant eur voal pe ridoch a briz bras, e oa *aoter an ezans*, rak eno eo e veze devet ezans en

henor da Zoue, *taol ar bara*, eun daol hag a zouge atao daouzek bara fresk, evit digas da zonj d'an Aotrou Doue euz daouzek dignez Israel, hag ar *c'han-tolor a zeis biz*, a zouge goulou hag, a joume var elum deiz ha noz. Tro var dro d'an Tabernakl e oa eur porz bras klotet mad. Er porz-se e velet *aoter ar sakrifisou* hag ar *vasin gouevr* vras. Var an aoter-ze eo e kinnige ar veleien sakrifisou al Lezen goz : lazet e veze ejennet, oanet, ouniri, en henor da Zoue, skuillet e veze eol, kollet e veze bleud evit anzaou o deus an dud resevet peb vad digant ar Mestr bras, Doue.

Ar vasin gouevr a oue savet etre an Tabernakl hag an aoter, a oa bras dreist; ar veleien a voalc'he ho daouarn hag ho zreid er vasin-ze, araok kinnig ho zakrifisou.

An Tabernakl a zo eur skeuden euz hon ilizou. Al Leac'h santela en hon ilizou a zo an tabernakl, rak eno, azioc'h an aoter, ema Doue sklearoc'h c'hoaz eget el Lezen goz; al Leac'h santel a zo ar c'hœur, rak eno e ves ar veleien; ar porz a zo an iliz, digor d'ar re oll o deus c'hoant renta henor da Zoue ha pedi.

2. — AR VELEIEN

Araok mac'h embannas Moysez lezen an Aotrou Doue, ar vugale hena eo a ginnige ar sakrifisou da Zoue e peb famill. Doue a c'hourc'hemennas da Voysez sakra Aaron evit he zervich en Tabernakl, hag ober a reas d'ezhan eur guiskamant pinvidig bras. Sakra a reas, er memez amzer, bugale Aaron beleien, evit sikour ho zad, ha kinnig sakrifisou da Zoue, en hano ar bobl. Var urz Doue, Moysez a zispartias c'hoaz bugale Levi evit beza dindan bugale Aaron, hag ho zikour el labour a reant e servich Doue. An eil rum-ze a veze great *Levited* anezho.

Ar beleg bras, hag hen hebken, en doa guir da vont, eur vech er bloaz, e leac'h santela : dougen a rea, var he dal, eul laonen aour merket varnhi : Santelez da Zoue. Bez' en doa, var he vruched, eun daolen gaer hag a oa varnhi daouzek mean prezius : ar re-man a verke daouzek dignez Israel.

Ar veleien a ginnige da Zoue meur a rum sakrifisou : lod evit anzaou eo Doue krouer ha mestr peb tra, ha neuze an hosti, ouner pe oan, a veze devet oll, evit adori Doue; lod all a veze kinniget evit goulenn pardoun euz ar pec'hejou, ha neuze, eul loden euz an hosti a veze devet, al loden all debret; lod all a veze kinniget, guech evit trugarekât Doue euz ar grasou tremenet, guech evit goulenn grasou nevez diganthan, ha neuze ne veze devet nemet eul loden euz an hosti, al loden all a veze rannet etre ar veleien hag ar re a ginnige ar zakrifis, ha debret gantho.

Etouez ar veleien katholik ez eus ive kem etre galloud an eil ha galloud egile: an Tad Santel ar Pab a ren an iliz a bez, e leac'h an aotrou Persoun na ren nemet eur barrez. E leac'h kaout meur a zakrifis, an iliz santel n'e deus nemet unan: an oferen. Ar zakrifis-se a rent d'an Aotrou Doue kalz muioc'h a henor hag a c'hloar eget oll sakrifisou al Lezen Goz asambles: Mab Doue, en oferen, an Hosti a zo dreist an oll hostiou, en em ginnig he unan d'he Dad, dre zaouarn ar beleg. Ar zakrifis-se a ves kinniget gant ar yaouanka euz ar veleien, koulz ha gant an Tad santel ar Pab he-unan: ar memez galloud o deus, an eil hag egile, var gorf sakr an Aotrou Doue.

3. — AR GOUELIOU

Deiz an ehan, evit ar Juzevien, a oa ar zadorn : en dervez-se eta, e tliet henori an Aotrou Doue, bep sizun, ha paouez da labourat. Ar goueliou bras a oa : 1° ar Pask evit digas da zonj d'an Hebreed euz an dervez ma oant deut diouz an Ejipt; 2° ar

Pantekost, evit derc'hel sonj euz an dervez ma oa bet embannet al Lezen var ar menez Sinaï ; 3° Gouel an Teltou, evit derc'hel sonj euz an daou-ugent vloaz ma oa choumet Israel en dezert ; 4° Gouel ar Binijen, savet evit paea an dle dastumet gant ar bobl dre he bec'hejou, hed ar bloaz. En dervez-se, dervez a yun hag a binijen evit an oll, ar beleg bras a laze eun ouenner e sakrifis evit he bec'hejou ha re ar veleien, hag eur bouc'h evit pec'hejou ar bobl. Ar beleg bras a ginnige neuze ezans d'an Aotrou Doue el leac'h santela, a skuille euz goad ar bouc'h eno evit goulenn pardoun digant Doue, ha var ar bobl evit he nettât ; hag a gase kuit, divar dro teltou Israel, eur bouc'h all, karget euz pec'hejou an oll.

Evel ar Juzevien, ar gristenien o deus savet gouelion evit derc'hel sonj euz grasou kaer an Aotrou Doue. Miret a reont ar Pask hag ar Pantekost ha kalz derveziou all santeleat gant Jesus-Christ, ar Verchez pe ar zent. An dervez ehan a zo bet kaset euz ar zadorn d'ar zul evidomp-ni, abalamour m'eo savet Hor Zalver euz a varo da veo en dervez sul, ha m'eo diskennet ar Spered-Santel var an ebstel, en dervez-se.

KENTEL 38. — Bloavez an ehan hag ar Jubile. Tabernakl benniget

Ouspenn al lezennou a dlïe beza miret dioc'htu, Doue a zougas lezennou all hag a vije miret divezatoc'h. Pa vije digouezet Israel e bro Kanaan, e tlïe rei eur bloavez ehan d'an douar bep seiz vloaz : er bloavez-se, an douar, an dud hag ar chatal a ziskuiজে, ne vefe great labour ebet vardro an douar.

Bep seiz guech seiz vloaz, da lavaret eo, d'an hanterkanved bloaz, e vefe great Jubile. Er bloavez-se, an neb piou benag en defe guerzet he zouar,

en devije he dra en dro. Abalamour da-ze, e veze kalz rabat var priz an douarou, pa vezet tost d'ar jubile, rak n'ho guerzet ket evit pell amzer. An Israelited a vefe en em verzet evel sklavourien evit kaout arc'hant, a vije libr adarre da vloavez ar Jubile, hag a jomfe libr, da c'houde, keit ha ma karfent.

Setu, e berr gomzou, eun nebeudik euz al Lezen-nou a oue douget gant Moysez var urz Doue. Sevel a reas an Tabernakl hervez gourc'hemen Doue ; pa oue achu, e oue sakret gant Moysez, a ginnigas da Zoue ezans ha sakrifisou, evel m'en doa goulennet. Gloar Doue a c'holoas neuze an Tabernakl, hag ar gommoulen a rene ar bobl a deus azioc'h al leac'h santel, hag a jomas eno hiviziken. Divar an dervez-se, pa ne dlïe ket ar bobl loc'h euz ar vro ma veze enni, ar gommoulen na finve ket, met kerkent ha ma save evit mont e tu pe du, an Hebreed a zispege buan ho zeltou diouz an douar ma oant krapet varnhi, a ruille an teltou-ze, hag a gerze gant urz, peb hini en he renk gant tud he lignez, varlerc'h ar gommoulen.

Na peger mad e oa Doue evit he bobl ! Ar gommoulen-ze, tenvall en deiz evit difenn Israel diouz ar groez, lugernus en noz evit sklerijenna an oll, a lavare sklear ha freaz da bep hini : « Lagad Doue a zo o para var-nout. » Al lagad-se a zo o para var bep hini ac'hanomp-ni ive, rak Doue a verk, en eun doare splain ha sklear, e buez pobl Israel, ar pezh a ra, en eun doare kuzet, evit peb den, atao.

KENTEL 39. — Spierien e bro Kanaan

Goude beza great gouel Pask e kichen menez Sinaï, bloaz goude ma oant tec'het diouz an Ejipt, Israel a loc'has varlerc'h ar gommoulen

vurzudus, hag a zigouezas var harzou douar Kanaan. Moysez a zibabas neuze daouzek den, unan euz a bep lignez Israel, evit mont d'ober eur bale var an douar a oa bet promettel d'ezho gant Doue. Choum a rejont daou ugent dervez d'ober ho zro, ha d'an distro e leverjont : « Ar vro hon eus guelel a zo druz ha pinvidig, redet a ra ennhi, e guirionez al leaz hag ar mel. Siouaz evidomp, tud ar vro-ze a zo rampsed, ha ni a oa ken dister ha killeien raden en ho c'hichen. » Diskouez a reant, er memez amzer, frouez euz ar re gaera, deut gantho euz ar vro-ze, ha dreist oll eur blokad rezin, ker bras ha ker pounher, ma oa douget gant daou zen var ho skoaz, a ispill ouz eur vaz krenv.

Ar bobl a glemmas hag a hirvoudas : « Salo e vefemp marvet en Ejipt, e leac'h beza digaset da laza er vro-man. Kemeromp eur rener all, ha distroomp var hor c'hiz. » Daou euz an daouzek kannad, Josue ha Kaleb, a zislavare ar re all, met ne oant ket selaouet. Moysez hag Aaron a stouas d'an douar, da c'houlen pardon digant Doue evit ar bobl, ha gloar Doue a baras azioc'h an Tabernakl.

« Betek peur, eme Zoue, e vezin-me offanset gant an dud-man? Digas a rin d'ezho ar vosen, hag e vezint distrujet. Te, va zervicher, rei a rin d'id eur bobl all da ren, eur bobl niverus ha krenvoc'h eget Israel. — Nan, Aotrou Doue, eme Voysez, n'her greoc'h ket, pardouni a reoc'h eur vech muioc'h — Abalamour d'id, ia, pardouni a ran, met nikun euz ar re a zo savet breman ne daolo troad var an douar am eus promettel d'ezho : nikun, nemet Josue ha Kaleb. Daou ugent dervez oc'h choumet da velet bro Kanaan, daou ugent vloaz e choumo ho pugale en dezert. Varc'hoaz e savoc'h an teltou, hag ez eot var ho kiz. »

Kerkent, an dek o doa dizaliet Israel da vont e bro Kanaan, a oue skoet gant dorn Doue, hag a gouezas eno maro.

Ar gentel-ze a zo eur skeuden euz histor Hor Zalver Jesus-Christ. Deut e oa evit savetei an oll dud, met karet a rea, da genta, ar Jusevien, he vreudeur, gouela en deus great var Jerusalem. Ar peb brasa euz ar Jusevien o deus great fae var he c'hrasou, o deus goulennet he varo. Setu perak ar bobl-se a zo breman taolet ha distaolet dre ar bed, hag ar zent a lavar d'eomp na gredo ar Jusevien e Jesus, nemet en derveziou diveza euz ar bed. Diouallomp na rafemp eun implij fall euz grasou an Aotrou Doue.

KENTEL 40. — **Kore, Dathan hag Abiron.** **Guia'en Aaron**

Prestik goude, Kore, Dathan hag Abiron en em zavas eneb Moysez hag Aaron, en eur lavaret : « Ni a zo skuiz ganeoc'h, n'ho c'heuilimp mui. » Gloar Doue a baras azioc'h an Tabernakl, hag an Aotrou a lavaras da Voysez ha da Aaron : « Pellait diouz an dud-se. — Aotrou Doue, eme kerkent an daou zen santel o koueza d'an daoulin, daoust ha skei a reoc'h an oll, abalamour da hiniennou ? » Doue a respountas : « Grit d'ar bobl pellât diouz Kore hag he genseurled, diouz Dathan hag Abiron gant ho zud. »

Moysez a zentas dioc'htu ouz Doue, ha kerkent an douar a zigoras, hag a lounkas ez-veo Dathan hag Abiron, teltou ha tud hag all.

Tan an nenv a gouezas er memez amzer, hag a zevas Kore hag an daou c'hant hanterkant den euz lignez Levi a oa a du ganthan.

En desped d'an darvoudou spountus-se, hag a ra d'ar goad sklase en izili eun den, pa zonj enno, bugale Israel a c'hrosmolos, antronoz, eneb Moysez hag Aaron, met tan an nenv a gouezas d'ho fuluc'ha.

Var urz Moysez, Aaron a zevas buan ezans da henori Doue, hag a redas e kreiz ar re veo hag ar re varo. Doue, neuze, a reas da eal ar maro choum a za, met pevarzek mil seiz kant den a oa bet skoet.

Moysez a lavaras, da c'houde, da vugale Israel, var urz Doue atao, rak ne rea netra nemet var lavarou an Oll C'halloudek : « Pep hini euz ar re a zo e penn peb lignez euz bugale Jakob a skrivo he hano var eur vialen, hag an daouzek guialen, gant hini Aaron ouspenn, a joumo, eun nosvez, dirak Doue, en Tabernakl. Guelet e vezo neuze, sklear, piou a zo galvet gant Doue da veza bras. » Urz Moysez a oue heuillet penn da benn; antroñz, daouzek guialen a oue kavet seac'h, met hini Aaron a oa goloet a boulzennou, a vleun hag a frouez. Setu ma lavaras Moysez : « Guialen Aaron a vezo lakeat en Arc'h Allians, ha miret eno evel eun testeni euz bolontez an Oll C'halloudek. »

Pegen dall e oa an Israelited ! Doue a skoe ar pennou fall, hag ar re all na felle ket d'ezho chench buez. Ha ni, pa velomp eur pec'her skoet gant eur maro trum, heb beza resevet he zakramanchou diveza, daoust ha lavaret a reomp : « Reh a rin eur vuez santel, gant aon da gaout eur maro henvel ouz hini an den-ze. »

KENTEL 41. — Difizians Moysez. Maro Aaron An aer gouevr.

Epad ma oa an Israelited o kerzet dre ar vro noaz ha gouez m'eo an dezert, ho dillad n'ez ejont ket da fall epad an daou ugent vloaz-se, met madelez vras an Aotrou Doue na vire ket outho da glem. Eun dervez, pa oant e bro Kades, eur vro zeac'h, ec'h en em gavjont heb dour, ha kerkent e savas grosmol adarre.

Doue a lavaras da Voysez : « Sko var ar roc'h gant da vialen, evel m'e peus great kentoc'h. » En taol-man, an den santel en devoe eun tamik difizians : « Daoust ha me c'hello, emezhan, kaout dour diouz ar garrek evit tud dizent evel doc'h-hu ? » Skei a reas ar roc'h diou vech, ha d'an eil taol, an dour a redas krenv ha nerzus. »

Met an difizians o doa bet Moysez hag Aaron a zisplijas da Zoue. Diskleria a reas dioc'htu d'an daou vreur : « Abalamour n'o peus ket bet a fizians aoualc'h em c'homzou, n'eo ket c'houi a hencho ar bobl-man d'an douar promettet. »

Prestik goude, an Israelited a zigouezas e kichen bro bugale Edom, met ar re-man a vire na 'z afet var ho douar. Moysez a dec'has eta divar an hent eun evit paka bro Kanaan, hag a velas traon menez Hor. Eno Doue a reas d'ezhan sevel var ar menez gant Aaron hag he vab Eleazar : Moysez a dennas he viskamant a veleg bras digant Aaron evit her rei da Eleazar, hag he vreur a varvas eno, var ar menez. Pobl Israel a voelas d'ezhan epad tregont dervez.

Peger kizidig eo an Aotrou Doue, pa vez difizians diouz he vadelez ! Moysez hag Aaron o doa kemeret poan ha kalz poan zoken evit ren pobl Israel azalek an Ejipt betek bro Kanaan, mall bras o doa da velet ar vro-ze, hag abalamour m'o deus eun tamik difizians, eur pennadik, setu ma rankont choum heb mont d'an douar promettet. Greomp, a greiz kaloun, bolontez an Aotrou Doue dioc'htu.

Dizale, bugale Israel a gavas tro da glem adarre : n'o doa ket a zour, hag ar mann a gavent divlas ha dizaour, keuz o doa d'ar bara. En dro-man, aered bilimus a deuas d'ho flemma, hag eur maread tud a varvas divar goust ar flemmou-ze.

Bugale Israel a zavas keuz gantho, hag a yeas da gaout Moysez. An den santel, goude beza pedet

Doue, a reas eun aer kouevr ha stean, hag a zavas anezhi e beg eur peul huel. « An dud flemmet a zello ouz an aer-man, eme Voysez, a vezo pare klok kerkenñ ha m'o dezo he gueleit. »

Divar neuze, an dud flemmet a bareas buan.

An aer-ze a zo eur skeuden gaer euz Hor Zalver Jesus-Christ, staget ouz ar groaz var menez Kalvar, evit silvigez an dud. An neb piou benag a zo bet flemmet gant an erouant hag en deus fizians en Hor Zalver stag ouz ar groaz, a vezo pardounet he bec'hed,, evel al laer deou.

KENTEL 42. — An diviner Balaam

Daou euz rouaned Kanaan a oa var hent bugale Israel, hag a glaskas kaeat outho, met trec'het e ouent. Roue Moab a zavas neuze aon ganthan, hag a gemennas d'an diviner Balaam dont da rei he valloz da bobl Israel.

Balaam a bedas ar guir Doue, ha Doue a zisklerias d'ezhan, en he gousk: « Arabat eo d'eoc'h rei ho malloz d'ar bobl-se, rak benniget eo. » En despet da-ze, Balaam a zavas var gein eun azenez, evit mont da vro Moab. En hent, an azenez a joumas heb senti, setu mia skoas he mestr varnhi « Perak e skoas ganen ? a c'houlenas an azenez. Petra 'm eus-me great d'id ? — Abalamour ma res da benn fall, » eme Valaam. Doue a zigoras d'ezhan neuze he zaoulagad, hag e velas eun eal gant eur c'hleze hoaz, en he zav var an hent. An diviner, spountet, a ziskennas trum divar he loen, evit stoui dirak an eal.

An eal a zisklerias d'ezhan: « Kea, ha lavar ar c'homzou a deui var da vuzellou. » Balaam, goude beza kinniget sakrifisou d'ar guir Doue teir guech, var torgennou huel, a vel da deltou Israel, her bennigas bevech. Lavaret a reas da ziveza, o komz

evel eur guir prophet: « Her gueleit a rin, met n'eo ket breman eo. Eur stereden a zavo euz Jakob, hag eur boulzen a zavo eus Israel. Ren a raio. »

Roue Moab, drouk ennan o klevet Balaam o rei teir guech he vennoz da bobl Israel, a reas d'an diviner distrei buan d'ar gear.

Meur a gant vloaz divezatoc'h, pa baras ar stereden vuzudus a verke d'an dud ginivelez Mab Doue e Bethleem, tri roue euz ar Zao-Heol a zavas, a lavaras kenavezo d'ho zud, hag a heuillas ar stereden betek Bethleem. Deut e oa da zonj d'ezho euz komzou Balaam a oa bet disklriet a rum da rum gant ar re goz.

KENTEL 43. — Maro Moysez

Diou euz daouzek lignez Jakob a joumas neuze er vro m'oant en em gavet ennhi, er zav heol euz ster ar Jourden, an hanter euz tud eul lignez all a joumas en ho c'hichen.

Da c'houde, Doue a lavaras da Voysez: « Josue, mab Nun, a reno Israel en da leac'h, rak deut eo evidot ar mare da vont gant da dud-koz. » Servicher bras an Aotrou Doue a zisklerias eta d'ar bobl bolontez an Oll C'halloudek. Achui a reas neuze rei he genteliou da Israel, ha rei a reas he vennoz da bep hini euz daouzek lignez Jakob ha da vugale Levi a oa an drizekved. Lavaret a reas d'ezho: « Doue a roio d'eoc'h eur prophet, henvel ouzin, hag a zavo euz ho touez: selaouit-hen. » Pignat a reas, da c'houde, var menez Nebo: ac'hano e velas eur c'halz euz bro Kanaan, eno eo e varvas, d'he c'houec'h ugent vloaz.

Euz an oll dud o deus bevet araok Mab Doue, n'eus nikun hag a ve bet ker bras ha Moysez. Josue a renas Israel var he lerc'h, met Doue na gomze ket da Josue evel ma rea gant Moysez: ar beleg bras Eleazar a roe urziou Doue da Josue.

Bugale Israel a ouelas Moysez epad tregont dervez, met nikun anezho na velas he gorf goude he varo: elez Doue, var a greder, a lakeas ar c'horf santel-ze en douar.

Ar prophet ma rea Moysez menek anezhan, a zo Jesus, Salver ar bed. He c'halloud a zo, sklear eo, brasoc'h eget hini Moysez, pa 'z eo guir eo Mab Doue. N'en deus ket torret al Lezen douget gant Moysez var urz Doue, parfeteat ha starteat en deus anezhi.

KENTEL 44. — Josue, Ar Jourden, Jeriko

Josue a gasas spierien da evesât ouz ar vro a oa en tu all d'ar Jourden, da c'houde, ez eas he unan betek ar ster. Tri dervez divezatoc'h, var urz Doue, Josue a reas d'ar veleien dougen an Arc'h betek ar Jourden, ha disken e strad ar ster.

An dour a oa hueloc'h eget bugale Israel a joumas kerkent a zav, soun evel eur voger savet ploum, an dour a oa izeloc'h a redas atao varzu an traon, setu ma oue buan eur roudous eaz da dreuzi Bugale Israel a ziskennas er ster, famill ha famill, heb glepia ho zreid, hag a dreuzas hep poan. Josue a reas tenna neuze daouzek mean bras diouz goueled ar ster, hag ho zevel eün en ho zav, var douar Gagara, e testeni euz ar burzud en doa great Doue eno. Pa oue treuzet an oll, ar veleien a zavas gant an Arc'h euz ar Jourden, ha kerkent, an dour a redas evel diagent.

Eno, var douar bro Kanaan, an Israelited a gavas frouez ha legumach, ha divar neuze, ar Mann a bauezas da goueza.

Jeriko a oa eur gear grenv, mogeriou huel d'ezhi, savet demdost d'ar Jourden. Keariz o doa fizians en ho mogeriou. Doue a lavaras da Josue: « Epad

c'houec'h dervez, brezellerien Israel a raio tro mogeriou kear eur vech bemdez. Bale a raint sioul, gant urz, hag an troumpillou hebken a zouno er penn anaok, hag a raio d'ar mogeriou tregarni. D'ar zeisved dervez, ho tud a vrezel a raio seiz guech tro kear, hag ar veleien a zouno adarre gant an droumpill. En dro-man, pobl Israel a youc'ho, nag ar mogeriou a gouezo. »

Josue a zentas, hag a yeas er gear heb poan, epad ma lavare d'he zoudarded: « Tud ha loened a vezo lazet, al listri aour hag arc'hant a vezo da Zoue, an tiez hag an arreubeuri a vezo devet; hini euz bugale Israel na gemero netra evithan. » An dud a zentas oll, nemet unan.

Euz Jeriko, ar vrezellourien a yeas dirak Haï, met eno an enebourien o devoe an treac'h; c'houec'h ha tregont euz bugale Israel a joumas maro var an dachen. Josue a 'z eas kerkent da stoui, dirak an Arc'h, hag a c'houennas digant an Oll C'halloudek: « Perak, Aotrou Doue, o peus-hu lezet ho pobl da goll gant he enebourien? — Savit, eme an Aotrou Doue d'ezhan, unan en deus torret an emgleo a zo etre Israel ha me. Keit ha ma choumo beo an denze, Israel a gollo atao. »

Josue a vodas kerkent an oll dud, hag a reas tenna d'ar blouzen verr evit gouzout piou en doa offanset an Oll C'halloudek. Ar blouzen verr a zigouezas gant Akan, ha Josue a lavaras d'ezhan: « Rent gloar da Zoue! Pe seurt e peus great? — Pec'het em eus, a anzavas Akan, o kemeret eur vantel vouk, eur rillen aour, ha kalzik arc'hant. »

Josue a zougas kerkent ar zetans: « Ra vezo lakeat d'ar maro, en hano an Oll C'halloudek! » Ar pec'her a oue eta lazet, hag he oll draou, devet.

Ar vrezellerien a zistroas neuze da gear Haï: kear a oue buan trec'het ha devet.

Nak a zrouk a c'hell dichadenna pec'hed eun den heben var eur boblad tud!

Pec'hed Akan a reas da Israel koll c'houec'h den ha tregont en eun emgann kenta. Ma n'o defe ket an Israelited sentet dioc'htu ouz an Aotrou Doue, ped-den all o defe kollet? Diouallomp rak ar pec'hed.


KENTEL 45. — An heol a joum a zav. Maro Josue

Rouaned Kanaan, spountet gant an Israelited, a zinas eun emgleo evit difenn ho bro. Emgann a oue, met Doue a roe nerz da zoudardet Josue, hag a reas d'eur glao mein koeza var an enebourien.

Gant aon na vije bet re verr an deiz evit peurflastra an enebourien, Josue a c'hourc'hemennas : « Choum a zav, heol, var Gabaon, ha te loar, choum azioc'h traonien Aialon. » An heol a zentas ha soudarded Kanaan a oue peurgaset. Pa oue achu an emgann, ar zoudardet a zigasas dirak ho mestr ar pemp roue fall o doa klasket flastra bugale Israel. Josue ho lazas, var urz an Oll C'halloudek, hag a reas staga ho c'horfou ouz ar groug, da c'houde.

Epad seiz vloaz, Josue a renas Israel en emgannou rak stourm a rankas evit kemeret dre nerz, ar vro roet gant Doue da vugale Jakob. Evelato, pobl Israel na c'hellas ket distruja, var neat, an oll boblou paian a oa var douar Kanaan: meur a gear grenv, ha meur a dachen a joumas dindan galloud bugale Amalek, Moab, Edom hag ar Philistined. Ha pa veze Israel dizent ouz he Grouer, pa baoueze an Aotrou Doue d'he gennerza, ar boblou paian-ze a veze treac'h d'an Israelited.

Josue a lodennas etre daouzek lignez Israel pe an daouzek tribu, an douar en doa gounezet var boblou paian ar vro; an drizekved tribu, Levi, a oue roet d'ezhi eiz kear ha daou ugent, hag a oa ama hag ahont dre ar vro.



Pemp roue fall Kanaan trec'het

Josue a vevas meur a vloaz goude m'en devoue diazezet bugale Israel var zouar Kanaan, hanvet ive Palestin pe Judee. Pa dosteas ar maro, d'he zek vloaz ha kant, e c'halvas dirazhan pennou bras an daouzek lignez evit ho alia da zervicha an Aotrou

Doue, ha da ziuall rak ar pec'hed a idolatri: « Ma troit kein d'an Aotrou Doue, emezhan, hen ho kastizo. Na adorit biken doueou ar broiou all. »

Bugale Israel a respountas d'ezhan en eur vouez: « Ni a zervicho an Aotrou Doue, hag a zento outhan. » Neuze e oue nevezet an unani etre an Aotrou Doue hag ar bobl, ha da c'houde, an den santel a varvas.

Peger kaer eo bet feiz Josue! Ober d'an heol choum a zav! Gouzout a reomp, evel Josue, eo Oll C'halloudek an Aotrou Doue, met na gredomp ket goulén diganthan burzudou bras.

Bezomp muioc'h a feiz hag a fizians e Doue hiviziken!

KENTEL 49 — Ar Varnerien. Jedeon ha Jephthe

Pa veze koezet pobl Israel er pec'hed, e veze guasket gant unan pe unan ouz poblou Kanaan, met Doue a roe neuze galloud da unan benag hag a hanvet Barner, da zavetei he vreudeur, an Israelited. C'houezek pe zeitek Barner a zo bet, ne gomzimp ama, nemet euz hiniennou anezho.

Jedeon a oue galvet gant Doue da flastra bugale Madian, abalamour ma rejont kalz gaou ouz Israel, bep hanv, epad seiz vloaz. Eal Doue e em ziskouezas da Jedeon, pa oa o torna an éd, en he leur: « Kea da skei var ar Madianited, me eo her gourc'hemén d'id. »

— Aotrou, eme Jedeon, va familh a zo euz ar rezistera etre familhou Israel. — Kea, eme an eal, me a vezo ganes. »

Jedeon a lazaz kerkent eur gavrik evit he c'hinnig e sakrifis, an eal a douchas an aneval gant eur vialen, hag heman a oue devet dioc'htu. Gant aon da veza touellet, Jedeon a zisklerias, eun nebeud deveziou divezatoc'h: « Lakât a rin va c'hroc'hen

danvad var va leur, epad an noz; ma ves glepiet ar c'hroc'hen gant ar gliz, epad ma choumo al leur seac'h, e velin ervad oun galvet gant Doue. »

Bez' en devoue he c'houlén. Neuze e lavaras da Zoue: « Aotrou, ho pezet ar vadelez d'am zelaou adarre: grit d'ar gliz koeza var al leur, hed an noz, ha ra joumo ar c'hroc'hen seac'h. » Doue a roas d'he zervicher an eil goulén-ze, en noz varlerc'h.

Divar neuze, Jedeon ne varc'hatas mui: gervel a reas goazed Israel d'an emgann, ha daou vil den ha tregont a zavas d'he zikour. Var urz Doue, ne viras en he gichen nemet tri c'hant heben; gant an nebeudik tud-ze, rannet e teir loden, e saillas e kreiz eun nosvez tenval var eur mor enebourien hag a oa kousket mik. Dallet ha spoutet gant Doue, ar reman en em lazaz etrezho, ha pa zavas an deiz, pa dec'has dre ar vro ar re ne oant ket bet lazé en noz, eur c'halz anezho a oue distrujet gant bugale Israel, a redas var ho lerc'h. Ar pardaez-se a velas c'houec'h ugent mil enebour lazé.

R'en em roas bugale Israel da adori an idolou, ar Philistined hag an Ammonited a reas ho mistri d'ezho epad trivac'h vloaz. Sevel a reas keuz gantho, setu ma c'houlénjont pardoun digant Doue, hag an Oll C'halloudek a roas nerz da Jephthe, euz lignez Galaad.

O vont d'an emgann, Barner Israel a reas le da ginnig da Zoue, e sakrifis, kenta hini a gavje var he hent, d'an distro, goude ar viktor. Kenta hini a velas a oue he verc'h, plac'h yaouank. Goulén a reas digant he zad daou viz amzer evit lenva d'he guerched gant he mignounezad var ar menezioù, hag he zad a asantas ganthi.

Jephthe a rea fall, eme ar zent, o toui var he le en dije kinniget unan benag e sakrifis da Zoue, hag

ober a reas fall c'hoaz ma sevenas he veu, o laza he verc'h. Ar Skritur Zantel ne lavar ket, freaz, e lazaz Jephthe he verc'h, hag hiniennou euz an doktored o deus diskleriet en doa, marteze, great d'ezhi choum heb dimezi, ha netra ken.

Histor Jedeon a zesk d'eomp e c'hell Doue, pa gar, ober an traou souezusa ha kaera, gant nebeud a dra, pa 'z eo guir tri c'hant den Jedeon a reas da c'houec'h ugent mill enebour en em laza.

KENTEL 47. — Samson, an den krenv

Er memez amzer, var eun dachen all euz bro Israel, Doue a zelaoue pedennou bugale Jakob, hag a roe d'ezho, evit ho difen, Samson, an den krenv.

Eun devez, e lazaz mil Philistin, o skei varnho gant eun askorn javed azen: Eal Doue en doa lavaret d'he dud: « Ho mab na zebro netra a gement a c'helfe mesvi, hag he vleo na vezint touzet biken: en doare-ze, e vezo treac'h d'an enebourien. » Samson a reas e guirionez kalz drouk d'ar Philistined, met e leac'h dimezi gant eur verc'h euz bugale Israel, ez eas gant Dalila, merc'h eur Philistin.

Houman, evit kaout arc'hant bras digant he c'henvrois, a c'houlennas digant ar Barner: « Euz a be leac'h e teu d'id da nerz? — Ma vefen liamet gant seiz rusken guez glaz, e vefen dinerz evel an dud all, » eme Samson en dro genta. « Ma vefen amarret gant seiz korden nevez, emezhan en eil tro, ma vefe staget va bleo oc'h an douar gant eun tach, emezhan en trede tro, e vefen henvel ouz an dud all. »

Epad kousk Samson, Dalila hen amarre bevech evel m'en deze diskleriet, met pa youc'he hi: « Samson! ar Philistined! » an den a zihune trum, a dorre an amarrou egiz pa vijent bet e stoup, ha biskoaz enebour na gredas tostât.

Neuze, Dalila a rebeche d'ezhan he c'hevier, hag a skuille daelou puill defaot na c'helle he verza. Tenerreat he galon gant an daelou trahis-se, Samson, pa 'z eo guir ne oa ket tost d'ezhan beza ker fur ha ma oa krenv, a anzavas outhi eun deiz: « Va galloud a zo em bleo. Mar befent trouc'het, va nerz a 'z afe da netra. » Ar pried trubard a reas trouc'ha he vleo da Samson epad he gousk, ha pa zihunas, e oue chadennet ken eas ha tra. Ar Philistined fallakr a ziframmas daoulagad ho frizounier diouz he benn, hag a reas da c'houde, d'ar c'heas dall, ober labour eun azen, o trei eur rod milin.

Eun dervez, pa oa poulzet he vleo en dro eun ramik, ar Barner dall a grogas en daou biller krenv a zouge tri mil Philistin bodet en eur gampr vras, azioc'h he benn. Ober a reas neuze eur beden galounek d'an Oll C'halloudek, hag e pilas ar pille-rour, setu ma oue lazet an oll Philistined, hag hen gantho.

N'eus bet den krenv oc'h eget Samson. Met n'eus fors peger krenv eo bet en he nerz, Samson a zo bet sempl bras, sempl evel eur c'brouadur, dirak Dalila, abalamour d'ar garantez en doa evithi. Nak a bed den a zo en em gollet, abalamour d'eur garantez fall ! Diouallomp atao hor c'hallon diouz kement karantez ha ne ve ket hervez Doue.

KENTEL 48. — Booz ha Ruth

Eun intañvez euz bro Israel, Noemi he hano, a oa eat da jom, gant he daou vab, etouez bugale Moab, hag a oa paianed. Dimezi a rejont eno ho daou, met mervel a rejont dindan dek vloaz. Noemi a lavaras neuze d'he diou verc'h kaer: « Choumit ama, c'houi, en ho pro, ha me a zistroio da zouar Israel. — Me, eme unan euz an diou verc'h-kaer, Ruth he hano, ho c'heuillo e kement leac'h ma 'z eot. »

Pa oue distro en he bro, Noemi a oa paour raz, setu ma lavaras Ruth d'ezhi, d'ar mare ma vedet an heiz: « Mam, ha ma 'z afen da bennaoui? — Kea, va merc'h, » eme Noemi. Mont a reas e park eun den pinvidig ha madeleuz, a oa he hano Booz; he-man a lavaras d'he zervicherien: « Dioc'h m'em eus klevet, ar c'hreg yaouank-se a zo merc'h-kaer Noemi, bezit mad evithi. » Lavaret en doa d'ezhi he-unan: « Heuillit atao va zud, ha pa 'z aint d'ho fred da gresdeiz, it gantho. C'hoant am eus ho sikour, rak gouzout a ran peger mad oc'h evit ho mam-gaer. »

Pa zistroas d'ar gear, gant eur zann ed pen-naouet ganthi, Ruth a zisklerias da Noemi: « Bet oun e park eun den hanvet Booz, ha mad eo bet evidoun. »

— Guell a-ze, merc'h, eme ar vam-gaer, laouen, Booz a zo dioc'h hor c'herent tosta, hag hervez lezen, Israel, e c'hell da gemeret da bried, pa 'z eo guir n'e peüs bet krouadur ebet digant va mab Mahalon. »

Ruth a gendalc'has da bennaoui e parkeier Booz; ker fur e oa, daoust ma oa ganet paianez, ma oue kemeret da bried gant Booz, en despet d'he faourentez.

Ar Skritur Zakr a ra kaoz euz an dimezi-ze, abalamour m'eo ganet ar roue David euz lignez Booz ha Ruth; lenn a reer ho hano d'ezho ho daou en Aviel sant Vaze, etouez tud koz Hor Zalver Jesus-Christ.

Perak e kavomp-ni menek euz Ruth, eur verc'h euz bro Moab, etouez tud koz Hor Zalver? Rak bugale Moal a veze alies e brezel gant bugale Israel. Abalamour m'en doa, marteze, an Aotrou Doue, c'hoant merka eur vech muioc'h, eo ganet he Vab var an douar, evit savetei an oll dud, ha n'eo ket deut evit bugale Israel hebken.

KENTEL 49. — Samuel ez-yaouank

Heli, beleg bras, a oue Barner Israel epad eun amzer: bez' e oa eun ha leal, met leskel a reas re a gabestr, pa oue koz, gant he vugale, Ophni ha Phinees. An daou-man, beleien dindan ho zad, a gemere evitho ar peb guella hag ar peb drusa euz al loened a veze kinniget e sakrifis da Zoue gant an dud, hag a zeve an tammou treuta en henor da Zoue. Fall a reant, hag ho zad na grede ket ho diarbenn.

Samuel a veve en ho c'hichen, Samuel, eur paotr kinniget abred da Zoue gant he dud, evit beva e skeud an Tabernakl.

Eun nosvez, ar paotr santel a glevas eur vouez o c'hervel: « Samuel! » Ar paotr a zavas dillo, hag a redas da gaout Heli, met ar beleg bras a zisklerias d'ezhan: « N'em eus ket da c'halvet. » Kement-se a c'hoarvezas teir guech; Samuel a zavas prim be-vech, met n'eo ket ar beleg bras eo her galve.

Heli a lavaras neuze d'ezhan: « Va mab, mar bezes galvet c'hoaz, e leac'h sevel ha dont d'am c'haout, respount dioc'htu: « Komzit, Aotrou Doue, rak ho servicher ho selaou. »

Eur bederved guech, Samuel a glevas ober he hano anezhan, hag a respountas dioc'htu: « Komzit, Aotrou Doue, rak ho servicher ho selaou. » Done a zisklerias d'ezhan neuze: « Ema tost an deiz mach astennin dorn pounner va justis var Heli hag he vugale. »

Da c'houlou deiz, Samuel a yeas da zigeri dorjou ti an Aotrou Doue, heb kredi mont dirak ar beleg bras. Heli her galvas abred dirazhan: « Petra en deus diskleriet d'id an Aotrou Doue? Anzav ar virionez ouzin penn da benn. » Samuel a zentas,

hag a aslavaras da Heli kement en doa diskleriet Doue d'ezhan. Ar beleg bras a zoubilas he benn, hag a lavaras gant humilite: « Doue eo ar mestr, ober a raio ar pezh a'blijo gant han. »

Sevel a reas brezel, en amzer-ze, etre ar Philistined ha bugale Israel, mes ar re-man a gollas en emgann kenta. Lavaret a rejont neuze: « Greomp da Arc'h an Allians dont en hon touez d'hor c'henn-nerza, hi a roio d'eomp ar gounid. »

Digaset e oue eta etouez bugale Israel, hag ar re-man a yeas d'an emgann adarre, met en taol-man e ouent flastret gant an enebourien: tregent mil den a joumas var an dachen. Ophni ha Phinees a oue kavet etouez ar re varo, hag ar Philistined a gemeras an Arc'h santel.

Eun den a ziredas da gas d'ar beleg bras ar c'he-lou glac'harus. Heli a oa neuze trivac'h vloaz ha pevar-ugent. Pa oue diskleriet d'ezhan: « An Arc'h santel a zo etre daouarn ar Philistined, » e kouezas a stok-korf divar he gador, hag e torras he benn.

An Aotrou Doue a zo pasiant peurliesia, mes skei a raklet avechou evit kentelia an dud. Kastiza a reas oll vugale Israel, abalamour d'ho fec'hejou, hag ive, abalamour da bec'hejou Ophni ha Phinees. Arabat eo d'eomp-beza souezet o velet ar Frans kastizet en hon amzer, pa 'z eo guir hor gouarnourien a gas ho amzer oc'h ober brezel da Zoue ha d'he vella servicherien: beleien, menez, Frered, leanezed.

KENTEL 50. — An arc'h santel Philistined kastizet. Eur Roue

Ar Philistined a oue laouen pa c'heljont ober ho mistri var an Arc'h santel: na zontent ket e galloud ar guir Doue. An Arc'h a oue kaset da dempl Doue bras ar Philistined, an doue Dagon: antronoz, skeuden ar falz-doue a oa astennet var an douar.

Drouk enno, beleien an idol a zavas Dagon: antronoz all, an doue a oa var an douar, bruzunet a dammou. Etretant, tud Azot, kear vras Dagon, a oue skoet gant klenvejou lous, razed a zavas diouz an druill, hag a rivinas ar meazioù tro var dro. An dud a varve-evel keillen. Spountet, tud Azot a gasas an Arc'h santel d'eur gear all.

Eno, koulz hag en Azot, e stagas klenvejou lous ha spegus ouz an dud, setu ma oue kaset ha digaset an Arc'h epad seiz miz euz eil kear ar Philistined d'eben, met e kement leac'h ma 'z ea, e veze klenvejou ha merven.

Spountet oll, ar Philistined a lakeas an Arc'h var eur c'harr nevez, gant diou vioc'h nevez alet stag outhan, hag ar bioc'hennet a yeas var eun da Vethsames, var douar Juda. Eno, an dud a ziredas da zellet ouz an Arc'h santel heb an distera respet, setu ma oue skoet gant eur maro trum dek den ha tri-ugent euz ar pennou bras, hag hanter kant mil den euz ar bobl.

Neuze, an Arc'h a oue kaset da Gariatiarim, hag a joumas eno.

Ugent vloaz benag divezatoc'h, an Israelited, gant keuz euz ho fec'hejou, a c'houlennas ar pardoun digant Doue. Samuel, beleg bras neuze, a zisklerias d'ezho: « M'hoc'h eus c'hoant beza da Zoue e guirionez, distrujit an doueou faoz a zo en hontouez. » Bugale Israel a zentas, bruzuna a rejont an doueou faoz.

Epad ma oant bodet d'ober pinijen, ar Philistined a dosteas evit sailla varnho: int-hi o doa armou mad. Israel a bedas neuze Samuel: « Kinnig it eur zakrifik da Zoue, ma teuo an Oll C'halloudek d'hon difen he-unan. » Samuel a ginnigas ar sakrifik, ha kerkent e savas eur guall amzer spountus azioc'h penn ar Philistined. Ar re-man, strafillet oll, a de-

c'has tu ha tu, met bugale Israel, kennerzet, a redas var ho lerc'h, hag a lazaz eur c'halz anezho. Dizale, an Israelited a gemeras, dre nerz, an oll geariou a oa dindan galloud ar Philistined.

Samuel en doa renet Israel gant furnez ha san-telez, evel Barner, epad kalz bloaveziou. Pa deuas da veza koz, e oue sikouret gant he zaou vab, met ar re-man ne oant ket ken leal hag hen. Ar bobl a c'houlennas neuze eur roue. Samuel a gavas dies, dizalia a reas an dud da gas ar mennoz-se da benn, met ar bobl a gendalc'has.

Var urz Doue, Samuel a zisklerias da vugale Israel e c'hell eur roue trei fall buan aoualc'h gant an ourgouill, ha gualgas he zujidi, met an dud a respontas: « Eur roue a fell d'eomp kaout, evel ar boblou all a zo en dro d'eomp. »

An Arc'h santel a oa eur skeuden euz sakramant an Aoter, met ar skeuden-ze a oa dister. Goulskoude, hanter kant mil den a zo bet skoet gant ar maro, abalamour d'ho nebeut a respet evit an Arc'h. Nak a respet a dleomp da gaout, ni kristenien, evit Hor Zalver er Zakramant!

KENTEL. 51. — Ar roue Saül. (1053-1013)

Doue a lavaras d'ar prophet Samuel: « Sakra a ri Saül, mab Cis. » Samuel a skuillas oleo var benn an den, en eur ziskleria d'ezhan: « Lakeat oc'h gant Doue da ren pobl Israel, he zavetei a reot dioc'h he enebourien. » Hag er memez amzer, eme ar Skritur Zakr, Doue a roe da Zaül eur galon nevez, eur galon a roue guest da ren eur bobl.

Samuel a vodas dizale ar bobl oll e kear Maspha, hag a lavaras: « Ober a rit fae var an Aotrou Doue, ha goulén a rit eur roue: tennit plouz herr da velet

piou a vèzo roue. » Tennet e oue, hag ar blouzen verr a zigouezas gant Saül: Ar roue nevez a oa kaer ha bras, ar bobl a youc'has laouen: « Bevet ar roue! »

Saül a zavas eun arme, prestik goude, evit en em ganna oc'h enebourien Israel; sikour Doue en devoe, met dizenti a reas diou vech ouz an Oll C'halloudek. En dro genta, e leac'h gortoz Samuel da ginnig eur sakrifi da Zoue araok eun emgann, Saül a ginnigas ar sakrifi he uñan, daoust ne oa ket beleg. Samuel a zisklerias d'ezhan: « Fall e peus great. »

En eil tro, Saül a espernas Agag. Doue en doa gourc'hemennet, araok an emgann: « Laza a reot an oll enebourien, ha devi a reot kement a zo d'ezho, » met Saül a espernas Agag, roue Amaleg, hag ar pennou kaera euz he chatal. « Perak, a c'houlennas Samüel, e peus-te espernet Agag, ha perak out-te choumet heb distruja he oll loened? — Sonj em oa, eme Zaül, kinnig an anevaled kaera e sakrifi d'an Aotrou Doue — Doue, a respontas Samuel, a zo guell ganthan kaout sentidigez eget sakrifisou. Abalamour m'ec'h eus dizentet, ar gurunen na joumo ket en da di. » Samuel neuze a lazaz he-unan Agag, ar roue espernet gant Saül, hag a zistroas d'he gear.

Prestik goude, var urz Doue, Samuel a zakras e kuz David, mab Isaï, roue Israel.

Peger mad an Ao. Doue, peger seimpl an den! Doue a ro galloud da Saül, hag, er memez amzer, e ro d'ezhan eur galon nevez, da lavaret eo, sklerijen ha nerz d'ober mad he labour evel roue, ha Saül, savet ken huel gant Doue, a zo trec'het buan gant an ourgouill, hag a zizent ouz he vestr, n'eus fors peger mad eo bet evithan.

KENTEL 52. — David ha Goliath

Daoust ne oa mui an Aotrou Doue a du ganthan, Saül a joumas evelato roue betek he varo. Ar Philistined Israel, hag ho renas d'an emgann. An diou arme a joumas an eil dirak eben, peb hini oc'h eun dorgen, gant eun draonien etrezho.

David, ar youanka euz eiz mab Isai, a yea, bep er mare, da gas boued d'he dri vreur brasa, a oa gant ar roue Saül. Setu mia velas eun dervez eur pikol den, Goliath he hano, ouspenn dek troatad a huedler d'ezhan, o tont da lavaret traou da zouarded Israel. Bez' en doa, var he benn, eun tok kouevr ha stean, var he gorf, eur guiskamant hag a boueze ouspenn kant lur; en he zorn, eul lans, hag an troad anezhi a oa henvel ouz karvan eur guader. Goliath a deue, soun he benn, etre an diou arme, en eur youc'hai: « Dont n'eus fors piou em eheb: m'am laz, ni vezo ho sklavourien; m'hen laz, c'houi a vezo sklavourien dindannomp. » Den na respountas grik, euz tu an Israelited, epad daou ugent dervez.

Pa glevas David komzou faeus ar paian krenv-ze, e c'houlennas: « Piou eo hennez? — Goliath eo he hano, a oue respountet d'ezhan. Saül a roio he verc'h d'an den a Israel a vezo treac'h da hennez. » An den yaouank a yeas da gaout Saül dioc'htu: « Me a yelo d'an emgann, laouen, ouz an den-ze. Piou eo hennez, a gred ober goap euz an Aotrou Doue, hag euz he zouarded? Pa deue eul leon pe eun ours da laeres eur penn danvad diganen, me a rede var he lerc'h, a ziframme vadand euz a dre he skiffou, hag a laze al loen gouez, ha da hen-man, roue, me a raio henvel. »

Saül a viskas da Zavid eun harnéz brezel, met



David ha Goliath

an den yaouank a oa gourd ha fall da vale dindan dillad kouevr. Teurel a reas an dillad-se a gostez, hag e kemeras he valtam, (fronde) hag he vaz. Dastum a reas er voazen-zour pemp meanik flour, ha da c'houde, e tostas dispount ouz he enebour. « Daoust ha me a zo eur c'hi, a c'houlennas

Goliath, ma teues d'in gant eur vaz ? Tosta, ha me roio da gorf e preiz da laboused an nenv ha da louned an douar. — Me a 'z a d'id, eme Zavid, e hano Doue Israel, e peus disprijet. Hirio, an Doue-ze da roio d'in, hag ar bed oll a ouezo en deus Israel eun Doue. »

Neuze e lakeas eur mean en he valtam, trei a reas ar valtam buan ha buan, ar mean a yeas, en eur froumal, da skei ar Philistin e kreiz he dal, hag heman a gouezas kerkent a strons-korf d'an douar, var he c'hinou. David a yeas a lamm betek ennhan, a zic'houinas kleze he enebour, hag a drouc'has d'ezhan he benn, gant ar c'hleze-ze.

Ar Philistined, spountet oll, a dec'has ; soudarded Israel kennerzet, a lazaz eur c'halz anezho.

David a zo eur skeuden gaer euz an Iliz. Pegen dister e oa an Iliz, p'eo bet savet gant Jesus-Christ ? Daouzek den dizek, gant eun toulladik tud paour hag heb galloud : setu an Iliz da zeiz ar Pantekost. An dud-se, ken dister da velet, o deus goulskoude diskaret idolou Rom, ker krenv ha ker galloudus da velet. Met Doue a zo gant he Iliz, evel ma oa gant David, hag ar gounid a-deu digan-than.

KENTEL 53. — Saül ha David

Goude ar viktor gaer-ze, Saül en devoue guarizi ouz David, rak menç'hed Israel a gane : « Saül en deus lazet mil Philistin, ha David, dek mil. » Betek neuze, pa veze guasket Saül gant barradou tristidigez, David a veze galvet da di ar roue, eno ar pastor derved a c'hoarie var an delen en eur gana, hag himor ar roue a goueze.

Divar an dervez ma oue David treac'h da C'holiath, ar roue a glaskas, meur a dro, skei ar pastor derved, met heman a c'hellas savetei he vuez. Jonathas, mab Saül, a oa mignoun leal David, hag

a rea vad d'ezhan, endra c'helle. Eun dervez ma oa Jonathas o tifen David dirak he dad, heman a lavaras d'ezhan : « Gouzout a ran e peus eur garantez vras evit mab Isai, met te a ra gaou bras ouzit en doare-ze, rak keit ha ma vezo beo hennez, te n'e pezo ket ar gurunen a roue : gra d'ezhan dont ama dioc'htu, m'hen lazin. — Tad, eme Jonathan, pe seurt drouk en deus great ? »

Fuloret oll gant ar goulenn-ze, ar roue a zic'hui-nas he gleze da skei he vab, met Jonathas a dec'has dillo. Mont a reas da gaout David : « Kea kuit, emezhan, rak va zad en deus atao kasouni ouzid. » An daou vignoun a bokas an eil d'egile gant karantez, hag a zispartias. Epad eur pennad mad a amzer, David a rankas beva dindan guz. Saül her c'hlaske evit he laza, met tec'het a c'hellas atao. David a gavas diou vech an tu da laza ar roue, met n'her greas ket, abalamour ma oa bet sakret Saül gant Doue.

Eun dervez, ar Philistined a zavas eun arme vras, rak c'hoant o doa sailla var Israel evit beza treac'h d'ezhan a nevez. An emgann a oue kalet, met an Israelited ne c'hellent ket gounit, pa 'z eo guir Doue ne oa mui a du gant Saül. Heman a oue gouliet, hag en em lazaz gant he gleze. Jonathas a oue lazet ive, ha daou euz he vreudeur gan-than.

Setu buez ha maro roue kenta Israel. Mad e oa d'ober brezel, met ne oue ket sentus aualc'h ouz an Aotrou Doue. Na reas ket eun implij mad euz he c'halloud, setu ma oue taolet a gostez gant an Oll-C'halloudek, ha nikun euz he vugale na renas var he lerc'h.

PEVARE PENNAD

Euz ar roue David betek

ar prophet Daniel e Babylon (1013 - 605)

KENTEL 54. — David roue (1013-973)

David a oa euz lignez Juda, setu ma oue lakeat da roue gant tud he lignez dioc'htu goude maro Saül. Eun nebeud bloaveziou divezatoc'h, pobl Israel a bez a blegas da roue Juda.

David a zavas neuze eun arme vras, hag a gemeras dre nerz Jerusalem, a oa kear grenv ar Jebuzeaned, tud hag a adore an idoloù. Ar roue a reas, da c'houde, sevel eul lez kaer evithan he unan, e kreiz kear Jerusalem.

Mont a reas gant kanerien da glask Arc'h an Allians etre Doue ha ghe bobl, Arc'h hag a oa choumet e ti Abinadab, e Kariatiarim. Ar roue santel a oa he-unan etouez ar ganerien, hag he bried, Mikol, a reas rebechou d'ezhan: « Ma n'eo ket eur vez guelet eur roue e kreiz he vrud, o kana gant tud ken dister! » David a respountas: « Meuleudi an Ol C'halloudek eo am eus kanet, bian oun dirazhan, hag hen anzañ a ran. »

Pa oue an Arc'h e kear Jerusalem, dindan eun telt kaer, ar roue a reas he zonj da zevl eun templ bras ha pinvidig da zigemeret an Arc'h santel, met ar prophet Nathan a zisklerias d'ezhan, a berz Doue: « Pa vezi eat gant da dadou, me a zavo da lignez var da lerc'h. Da vab 'eo a raio eun ti d'in. Me a vezo he dad, hag hen a vezo va mab; he c'halloud a vezo starteat evit atao. »

Ar roue a lakeas eun urz kaer da ren er vro. Bez' en deze pemp mil den var 'n ugent benag dindan an armou e peb amzer, rak peb lignez a roe d'ezhan ar gount-se d'he zro. En doare-ze

David en deze atao soudarded, vad, ha d'an derveziou brezel, e c'helle boda tri c'hant mil den var an dachen. Trec'hi a reas, hini hag hini, a nebeudou, ar peb brasa euz ar bobloù a oa en dro d'ezhan: Philistined, Moabited, Syrianed, Idumeamed.

Lakât a reas eun urz ker kaer all etouez ar veleien hag al levited a rea labour an Aotrou Doue en templ. Ar veleien a oue rannet e pevar rum var 'n ugent hag a ginnige ar sakrifisoù pep hini d'he dro, sikouret gant al levited. David a zibabas pevar mil den euz a lignez Levi, evit kana, peb rum d'he dro, meuleudi Doue en templ.

Na kaer e oa ar sakrifisoù lidet e templ Jerusalem! Nak a ganerien!

Oferen ar gristenien a zo mil guech hag ouspenn kant mil guech talvoudusoc'h eget oll sakrifisoù al Lezen goz. Er sakrifisoù-ze na c'hellet kinnig da Zoue nemet kig loened, e leac'h an Iliz a c'hell kinnig d'ezhan korf ha goad he Vab, Doue evel dan, hag ar sakrifis-se en deus eun dalvoudegez heb muzul.

KENTEL 55. — Pec'hed ar roue David
Kastizet eo

Epad ma oa he zoudarded, renet gani Joab, oc'h e em ganna gant bugale Ammon, David a oa choumet dibreder e Jerusalem. Setu ma velas eun devez Bethsabée, greg unan euz he zoudarded vella, Uri he hano, oc'h en em voalc'hi. David a reas d'ezhi dont en he di, rak koant e oa, setu m'en devoue c'hoant he c'hemeret.

Skriva a reas eta da Joab: « Grea da Uri mont el leac'h ma vezo starta an emgann, ha choum heb he zikour. » Joab a zentas, Uri a stourmas gant nerz, met an enebourien he lazas. David a gemeras prestik goude Bethsabée da bried, hag en devoue eur mab.

Doùe a c'halvas neuze ar prophet Nathan: « Kea da gentelia ar roue David. » Ar prophet a yeas var eün d'he gaout evit rebech d'ezhan an daou beched an doa great: avoultriach fra lazerez.

Ar roue a anzavas, gant eur guir glac'har: « Pec'het em eus eneb Doue. » Ar prophet a zisklerias d'ezhan kerkent: « Pardounet out gant Doue, met kastizet e vezi, roue; krouadur Bethsabée a varvo. »

An doktored a lavar: « David a zo koezet er pec'hed abalamour ma oa choumet dibreder er gear, epad ma oa he zoudarded oc'h en em ganna. Doue, leun a drugarez, a ra d'eur prophet mont da gaout ar roue, evit he zikour da anzañ he dorfet. Ofanset oc'h eus marteze an Aotrou Doue kement hag ar roue David, goulennit pardoun e sakramant ar binijen, ha Doue a vezo atao digor he galoun da bardouni ho pec'hejou.

Krouadur ar pec'hed a oue skoet gant ar maro, seiz dervez goude ma oa deut ar prophet da c'hourdrouz David a herz an Aotrou Doue. Ar roue glacharet oll pa velas ar c'hrouadur o klenvel, en doa yunet ha pedet gant daelour; en despet da-ze, ar c'hrouadurik a varvas.

Eun nebeud bloaveziou divezatoc'h. Absalom, mab dinatur, en em zavas eneb he dad. Gounezet en doa kalonou kalz tud dre he gomzou touellus, hag e oue gueleet eur maread o trei ganthan. Pa glevas David ar c'helou glac'harus-se, e tec'has buhan, gant aon da veza paket gant he vab digaloun. Eun toullad euz ar brezelourien vella a heuilas ho roue karet.

David a dreuzas dour Sedron hag a zavas oc'h torgen ar menez Olived; lenva a rea dourêg, rak sonjal a rea: « Kastizet oun gant Doue abalamour d'am fec'hejou. » Eun den fall, euz a lignez Saül, Semeï he hano, a daolas mein outhan, en eur youc'hal: « Kea kuit, den a c'hoad, kastizet out abalamour m'ec'h eus laeret kurunen Saül. » Unan euz ofiserien

David a lavaras d'ezhan: « Mont a ran da zibenna ar c'hi maro-ze! — Nan, nan, eme ar roue, n'her grit ket, Doue eo en deus gourc'hemennet d'ezhan taoler he valloz varnoun. Marteze, eme c'hoaz ar roue, marteze en dezo Doue truez ouzin, abalamour d'ar malloziou a goues varnoun breman. » Setu ne oue great drouk ebed da Zemeï.

David a dec'has pell, betek koat bras Ephraïm. Eno, e reas d'he zoudarded diskuiza, ha pa dosteas Absalom gant he dud a vrezel, ar roue a renkas he armee evit an emgann. Ofiserien David, boaz d'en em ganna var an dachen, a ouie ren ho brezelourien.

Soudarded Absalom a oue trec'het ha diskaret en emgann vras-se, rak ugent mill anezho a oue lazet gant ar c'hleze, pe a yeas da goll er c'hoajou goude ar stourmad, hag a varvas gant an naon. Absalom, savet var gein eur mull, a dec'he araok tud David, pa zigouezas dindan eur vezen zêro, skourrou tourpok d'ezhi.

Ar mab fallakr a oue guasket he benn e skalf eur skour izel, hag a joumas eno a istribill, staget dre he benn hag he vleo hir, epad ma tec'he atao he loen. Joab a ziredas, hag a lazas an enebour gant tri hir lem ha skoet eün. Evelse eo e varvas ar mab digalon en doa klasket laeres kurunen he dad, hag hen beo c'hoaz ha krenv.

David a zougas kanv d'he vab, rak lazet e oa bet en despet d'ezhan. Lavaret en doa d'he ofiserien: « Na rit drouk ebed d'am mab Absalom. »

Absalom a zo eur skeuden euz ar vugale dizuj. Ober a reont poan d'ho zud, met n'int ket eürus ho-unan, hag alies e kavont eur maro truezus. Doue a ro eun nebeud galloud d'an dud kriz-se, evit ma c'hounezo ar re vad kaeroc'h kurunen er baradoz.

David, pa dec'has dirak he vab, a zavas, en eur lenva,

var ar Menez Olived, a zo eur skeuden euz Hor Zalver, a dlie lenva eno ive. David a lenve var fallagriez he vab, Jesus a lenve var fallagriez he vugale garet, ar Juzevien, hag an oll bec'herien.

**KENTEL 56. — Pec'hed a ourgouill ar roue santel
Kastizet eo ive**

Pa oue achu gant David he vrezeliou bras, pa velas ar peoc'h o ren en e rouantelez, ar roue a roas eun tamik he galon d'an ourgouill, hag a reas niveri an oll dud a oa dindan he c'halloud, gwest da zougen an armou. Kavet e oue pemp kant mill den e lignez Juda, hag eiz kant mill den euz al ligneziou all.

A veac'h e oa niveret an Isralited, ma savas keuz gant David: « Pec'het em eus, emezhan, dirak Doue. » Antronoz vintin, ar Prophet Gad a deuas aberz Doue da gaout ar roue: « Setu ama, emezhan, komzou an Oll C'halloudek: « Pehini eo ar guella ganez: kaout kernez epad seiz vloaz, pe dec'het dirak da enebourien epad tri miz, pe guelel ar vosen o ren epad tri dervez? »

O velet peger herr e oa ar voalen ziveza, tri dervez bosen, David a fizias ne defe ket great eun drouk bras d'an dud, hag a c'houlennas beza skoet gant ar vosen. Dorn Doue a bouezas kalet var ar bobl: dek mil den ha tri ugent a oue taget gant ar c'hlenved, hag a varvas.

Hogen ar roue a lenve, hag a lavare da Zoue, dre he zaelou: « Me eo em eus pec'hed, ar re-man, derved dinoaz n'ho deus great drouk ebed. Va skoit, Aotrou Doue, me ha tud va zi. »

Ar prophet Gad a deuas neuze, a nevez, da gaout David: « Sav eun aoter evit kinnig eur zakrifis d'an Oll C'halloudek e leur Areüna. » David a zentas, ha kerkent, ar c'hlenved a ehanas.

Bez' ez eus tud hag a zo o klem heb ehan en hon amzer: « Perak ousp-ni kastizet kement gant an Aotrou Doue? » Ar respount a zo eas da rei: « Ar Frans a zo kastizet, abalamour Doue a zo ofanset gant ar re a zo e penn ar vro. M'en deus Doue skoet dek mil den ha tri ugent, abalamour da bec'hed unan hebken: ar roue David, penaoz ne skofe ket ar Fransizien, pa 'z eo guir hi eo o deus dibabet ar renerien dizoue a zo en ho fenn. Nak a bed Breizad a ves o koves hag o kominunia, hag a roio ho mouez hag ho galloud, da zeiz ar votadeg, da dud difeiz hag a nac'ho Doue, hag a raio brezel d'ar relijion, kement ha ma c'hellint.

KENTEL 57. — David, ar skrivaniere santel

David a oue eur roue bras, rak treac'h e oue d'ar boblou paian a oa er Judee, hag ober a reas d'ezho plega d'he c'halloud, met bez' ez eo ive unan euz ar re vella, etouez an dud santel, evit meuli an Oll C'halloudek.

Moysez en deus skrivet al Leoriou Sakr a zisklerie d'eomp krouidigez ar bed, gant buez ar batriarched: David en deus savet Leor santel ar Psalmou. Kana a ra, el Leor-ze, peger bras eo an Aotrou Doue, diskleria a ra he vadelez, he oll c'halloud, he brovidans hag he oll berfekcionou. Abalamour m'en deus David ofanset an Aotrou Doue ouspenn eur vech, e ra kaoz alies euz trugarez heb muzul an Oll C'halloudek. Komzou ar roue David eo a ves var muzellou ar veleien hag ar gristenien, dre ar bed oll, evit goulenn pardoun digant Doue hag he ventli.

David a ves great anezhan avechou ar Prophet, abalamour m'en deus diskleriet er Psalmou eur maread traou divar benn buez ha Pasion ar Zalver a dlie dont, ar C'hrist, ar Messias. Unan euz ar Psal-

mou-ze: Deus, Deus meus, respice in me, a ra hano euz Hor Zalver, en eun doare ker sklear, ma ves lennet gant ar beleg er zizun zantel, epad ma ves o tiviska an aoteriou en iliz.

Pa oue eat koz ar roue santel, ar pevare euz he vugale, Adonias, a heuillas skouer Absalom, hag a glaskas laeres ar gurunen a roue. David a reas neuze d'ar beleg bras, Sadok, ha d'ar prophet Nathan konsakri he vab Salomon roue Israel: ar bobl oll a c'houlenas digant Doue rei buez hir d'ar roue yaouank.

David, santel bras d'ar mare-ze, a roas d'he vab aliou leun a furnez: « Heuill a ri atao, emezhan, lezen an Oll C'halloudek, rak promettet en deus d'in e reni neuze, te ha da vugale var da lerc'h, var pobl Israel. Sevel a ri eun ti kaer ha pinvidig d'an Aotrou Doue. Dastumet em eus aour hag arc'hant er guel euz al labour-ze, mes te eo her graio. Bes-stard, ha den a zever. »

Goude m'en devoue David renet var Israel epad daou ugent vloaz, Doue her galvas davethan. He gorf a oue lakeat er bes kleuzet evithan var menez Sion, e kear Jerusalem. Ar bobl oll hen lenvas, rak David a zo bet, en despet d'he vankou, eur roue santel dreist ha madelezes e kenver he zujidi.

Ar roue David a zo unan euz kaera skeudennou Hor Zalver. Kouezet eo en eur pec'hed benag, guir eo, met rapari en deus great, dre eur guir gontrision. He zantelez a zo bet ker bras, ma ves great anezhan alies: ar roue santel David. He vuez a zo bet leun a drupuillou, rak kalz enebourien o deus klasket he ziskar; Hor Zalver benniget a zo bet great brezel d'ezhan ive gant ar Pharisianed hag ar pennou bras, doug an tri bloaz m'en deus prezeget he Aviel. David en deus kenteliet ar Juzevien da genta, ar gristenien da c'houde, dre ar Psalmou kaer en deus skrivet: Jesus a zo sklerijen ar bed, gant he Aviel.

KENTEL 58. — Ar Roue Salomon (973-932 araok J. C.)

Salomon a oa seitek vloaz pa varvas he dad; kenta a reas a oue kinnig mil hosti e sakrifis da Zoue. En noz varlerc'h, an Oll C'halloudek en em ziskouezas d'ezhan dre he gousk: « Petra a c'hoantes kaout diganen? — Aotrou Doue, a respountas ar roue, c'houi a zo bet mad evit va zad e peb amzer, roit d'in, mar plij, ar furnez, rak yaouank oun c'hoaz, hag eur bobl vras am eus da ren, — Pa 'z eo guir, eme Doue neuze, n'e peus goulennet nak aour, na danvez, met ar furnez evit barn da dud evel ma tlee ober eur roue, me a ro d'id eur galon leun a furnez hag a spered, en hevelep doare ma n'eus bet nikun en da raok ha na vezo nikun var da lerc'h hag a ve henvel ouzit. Bes' e pezo, ouspenn, danvez hag henoriou. »

Salomon a verkas he furnez vras heb dale pell. Dont a reas, eun dervez, diou vam dirazhan: « Roue, eme unan, ni a zo diou o choum er memez ti. Bep a grouadur hon eus bet, ha n'eus nemet tri dervez etrezho. En noz, eben e deus mouget he c'hrouadur epad he c'houk, hag e deus hen lakeat maro e leac'h va hini d'in-me a oa choumet yac'h. — N'eo ket guir, Roue, eme ar vaouez all, va hini d'in-me eo a zo beo, hag he hini d'ezhi, maro. » Ho diou e savent ho mouez evit en em zislavaret an eil eben.

Salomon a lavaras da unan euz he c'hoardou: « Kemer ar c'hrouadur beo, ha trouc'h anezhan etre daou, ro da c'houde eun hanter da bep hini euz an diou-ze. — Mad eo evelse, eme unan euz ar mamou. — Nan, roue, eme eben, arabat eo laza ar c'hrouadur, roit hen kentoc'h d'ar vaouez all-ze. » Ar roue a zisklerias kerkent: « Ar guir vam eo an

hini na fell ket d'ezhi e ve great diou loden euz he c'hrouadur: roit hen d'ezhi. » An oll a veulas an Oll C'halloudek pa glevjont ar roue ; e guirionez, resevet en doa digant an Aotrou Doue eur furnez dispar.

Peger fur e oa goulén Salomon ! Ar furnez ! Doue a ginnige rei d'ezhan ar pezh a gawe guella, ha ne ra fors diouz madou, danvez, henorion, ne glask nemed ar furnez.

Hor Zalver Jesus-Christ, p'eo deut var an douar, en deus diskouezet d'eomp parfetoc'h c'hoaz eget ar roue Salomon, e tleomp ober fae var an danvez pa 'z eo guir eo ganet en eur c'hraou, en deus gounezet he vara divar boan he zivrec'h, hag eo maro e noaz, var groaz Menez Kalvar. Biskoaz, en he vuez, n'en deus klasket na beza pinvidig, na kaout kalz brud, ha goulskoude, e oa Mab Doue.

KENTEL 59. — Salomon a zav Templ Jerusalem

Roue leun a furnez, Salomon a vevas e peoc'h gant he zujidi hag ar rouaned, he amezeien. En em glevet a reas gant Hiram, roue Tyr, var ribl ar mor Meditteranee, evit kaout koat kaer, mengleuziou pinvidig, pilkerien vein, mansounerien ha kilvizien da zikour micherourien bro Israel da zével ti an Aotrou Doue.

Ar vein a oue labouret e kichen ar mengleuziou, ar c'hoatach a veze dic'hrozet ha kempennet el leac'h ma veze diskaret, hag en doare-ze, al labourerien a oue sioul var dro an Templ, na glevet trouz ebet gantho.

Al labour a badas seiz vloaz. Bugale Israel a zire-das euz a bep leac'h evit henori Doue en he di, ha gullet konsakri an Templ. Arc'h an Allians a oue digaset en Templ, ha savet gant henor ha doujans el Leac'h santela, eno e oue lakeat ive diou daolem

al Lezen, gant eur muzul euz ar mann a oa kouezet en dezert, ha guialen Aaron, an hini e doa douget bleun ha frouez, en eun nosvez.

Kerkent ha ma oue lakeat an Arc'h hag an traou presius all el Leac'h santela, eur c'hoabren a leunias an Templ, hag a viras na rafe ar veleien ho labour. Ar roue a gouezas neuze d'an daoulin, hag a bedas an Aotrou Doue da skuill he vennoz var ar re oll a deufe d'an Templ evit goulén he c'hrasou. « Aotrou Doue, emezhan, pardounit d'ezho, plijet ganeoc'h ho zelaou ! »

Salomon a ginnigas da Zoue, e sakrifiks, en derveziou-ze, daou vil ejen var 'n ugent ha c'houec'h ugent mil danvad, hag a reas d'an Israelited distrei d'ar gear da c'houde. An oll a veule Doue gant levenez, rak an Templ a oa eul labour dispar, ker kaer e oa bet great, ha ker pinvidig e oa guisket.

Goude an oll sakrifiks-ze, Doue en em ziskouezas adarre d'ar roue, evit nevezi ar bromesaou en doa great pell a oa d'he dad, ar roue santel David.

An Templ a zo eur skeuden euz ilizou ar gristenien. N'eus fors peger pinvidig e oa an Templ, n'euz fors peger paour e vezo eun iliz, ha pa ve toet e soul, e broiou ar missonou pell, iliz ar gristenien a blijio atao muioch da elez ar baradoz. Penaoz n'her grafe ket ? En hon ilizou d'eomp-ni ema atao Jesus, Mab Doue, Mab an Oll C'halloudek, ha Jesus a dal hiroc'h eget oll denzorion ar bed-man.

KENTEL 60. — Salomon He vuez hag he varo

Ar roue Salomon a renas pobl Israel epad daou-ugent vloaz, evel he dad, hag er bloaveziou kenta, bugale Israel a oue eürus dreist. David en doa ranket stourm hed he vuez, koulz lavaret ; met an treac'h en doa bet, ha prinsed ar boblou all a blegas da Zalomon.

Ober a reas sevel e Jerusalem eul lez kaer ha pinvidig, evithan hag evit he offiserien, bez en doa soudarded dispoint, offiserien guizieg, ha dre-ze an enebourien na gredjont ket klask trabas outhan : er c'hountrol eo, paea a reant d'ezhan taillou bep bloaz, evit beva e peoc'h ganthan.

Gant ar furnez dispar en doa resevet digant Doue, Salomon a skrivas levriou-kaer hag a zo eur sklerijen evit an Iliz, bez' emaint er Skritur Zakr. M'en doa amzer ar roue da skriva levriou, an oll Israeli-ted a oa ken eürus hag hen, ar Skritur Zantel a lavar euz an amzer-ze : « Pep hini euz bugale Israel a veve eürus e skeud he vezen fiez hag he vinjen. »

Ouspenn al lez kaer savet evithan e Jerusalem, ar roue bras a reas sevel, en he gichen, eul lez pinvidig evit he bried, gant eur maner euz ar re goanta, evit ar miziou hany, e kichen Bethleem, var ar meaz. Kaout a reas eno eul leac'h goudor, gant glasvez tro var dro, e guasked ar menezioù, he gaerât a reas en henvelep doare ma oa eun dudi beva ennan. Labourerien ar roue bras o doa dastumet eno ar bokedou freska ha koanta, gant ar frouez guella da zebri.

Ar vrud euz galloud, pinvidigeziou ha furnez ar roue Salomon a oue skignet dre ar bed oll, betek ma teuas an dud desketa hag ar brinsed huel euz ar broiou pell da c'houlen aliou diganthen. Eur brinsez pinvidig, rouanez Saba, a deuas euz ar Zav Heol da velet ha da zelaou roue Israel, ha ken eürus e oa bet da reseo he aliou, ma roas d'ezhan e prof meur a villion a arc'hant pur, gant eur maread ezans ha traou presius.

Siouaz ! ar roue bras-se, bras gant he zeskadurez dispar, bras gant he zanvez, a oue kollet gant he ourgouill. Roet en doa he garantez da verc'hed

estren, da verc'hed ha ne anavezent ket ar guir Doue, setu ma teuas da ankounac'hat Doue Israel, ha da adori doueou faoz ar broiou paian. Ia, Salomon, ar roue kaer en deus meulet Doue en eun doare dispar pa oa e kreiz he vrud, a droas kein d'ezhan gant ar bloaveziou, sevel a reas templou d'an doueou faoz, kinnig a reas ezans d'an doueou-ze.

Doue a zisklerias d'ezhan, eun dervez : « Abalamour m'out eat eneb va gourc'hemennou, da rouantelez a vezo rannet. Unan euz da dud a gemero dek loden, ha ne joumo gant da lignez nemet diou loden hebken. Ar freuz-se na zigouezo ket en da amzer, rak da dad, David, a zo bet eur zervicher mad, met en amzer da vab did-te. »

Leac'h hon eus da grena pa zonzomp da vad, a zevri, en histor ar roue bras Salomon : savet mad e oa bet, resevet en doa digant Doue eur furnez dispar, grasou talvoudus dreist, hag en despet d'an oll meritou en doa dastumet en he yaouankiz, hag e barr he vrud, Salomon a dec'has divar an hent eun. Diouallomp rak ar pec'hed !

Ar Judee : Rann kenta : Rouantelez Israel

KENTEL 61. — Jeroboam

Goude maro Salomon, ar bobl a c'houlennas digant he vab Roboam soupiât an taillou a boueze varnho en amzer ziveza he dad. An dud fur a oa kuzulierien ar roue yaouank hen alias da zelaou goulen ar bobl, met ar baotred yaouank a oa bet savet gant ar roue nevez, her pedas da voaska an dud muioc'h c'hoaz eget he dad. « Evelse, emezho, e verkoc'h d'an oll ez oc'h ar mestr. » Roboam a heuilias ali ar re yaouank-se.

Pa glevas bugale Israel komzou kalet ar roue nevez : « Va zad en deus ho renet a daoliou baz, met me ho reno a daoliou orz, » dek ligned, (*tribu*), var an daouzek a oa, a zisklerias ne jounfent ket dindan galloud Roboam. Juda ha Benjamin hebken a blegas d'ezhan.

An dek tribu dispartiet dioc'h Juda a oue great anezho rouantelez Israel, lakât a rejont da roue Jeroboam, unan euz offiserien Salomon. Eur prophet en doa sakret Jeroboam, en amzer ar roue Salomon, en eur lavaret d'ezhan, a berz Doue : « Ren a ri var dek euz ligned bugale Jakob, ha da rouantelez a vezo padus, ma sentes ouz lezen Doue, met da rouantelez na bado ket atao, abalamour d'ar bromesa am eus great d'am zervicher bras David, ha d'he ligned. »

Abalamour d'an disparti krenn a oue, divar neuze, etre Israel ha Juda, epad kalz bloaveziou, e vezo diskleriet ama, da genta, histor rouantelez Israel, a oa kalz muioc'h a dud ennhi eget e rouantelez Juda.

E leac'h senti ouz Doue, Jeroboam a droas kein d'an Oll C'halloudek, a reas ober skeudennou doneou faoz, hag ho adoras gant he dud. Ar prophet Ahias a zisklerias d'ezhan a berz Doue : « Great e peus fae varnoun, eun dervez, me a raio, d'am zro, fae var da ligned, » met Jeroboam a gendalc'has da ren eur vuez dizoue.

An disparti etre bugale Israel e daou rumm, Israel ha Juda, a zo eur skeuden euz an hereziou a dlle, eun dervez da zont, ranna bugale an Iliz e daou rumm. Hor Zalver en deus savet he Iliz, he diazezet en deus var zant Per, gant an Iliz-se ema ar virionez penn da benn, met epad ar c'hanvejou e veler rummou heretiked, an Arianed, ar Brotestanted, o tistaga diouz an Iliz. Ar virionez n'ema ket gant an heretiked-se, abalamour ho iliz d'ezho n'eo ket diazezet var roc'h sant Per.

KENTEL 62. — Ar Bropheted

Daoust mac'h adore Jeroboam an idolou, meur a hini euz he zujidi a zalc'he mad d'ar guir Doue, setu perak Doue a gentelie, bep er mare, bugale Israel dre he bropheted, evel bugale Juda.

Eur prophet a oa eun den santel karget da ziskleria d'an dud komzou an Aotrou Doue, ha d'ho sklerijenna, avechou memez, var an amzer da zont. Doue en deus sklerijennet he bobl e peb amzer, setu ma kaver bropheted e peb amzer. Noe, Abraham, Moysez, Samuel, Nathan, Gad, Eli, Elisee, Jonas ha meur a hini all a zo bet sklerijennet gant Doue meur a vech.

Bez' ez eus, er Skritur Zakr, levriou Bropheted ; ar re-man a zo seitek anezho ; pevar vras, Isai, Jeremi, Ezekiel, Daniel, ha Baruk da bemped gantho. Bez' ez eus daouzek vian : Amos, Michee, Malachi hag ar re all. Ar bropheted vras a ves hanvet en doare-ze, abalamour m'o deus skrivet kalz traou a berz an Aotrou Doue ; an daouzek all a ves great bian anezho, abalamour m'eo berr ho skridou.

Meur a hini euz ar bropheted o deus great skol d'ar vugale a veze digaset d'ezho gant ho zud ; ar vugale-ze a zeske pedi ha kana meuleudiou an Aotrou Doue. Hiniennou anezho a veze bropheted d'ho zro, varlerc'h ho mistri. Ar re all a zeske lezen Doue d'ar bobl.

Abaoe amzer Hor Zalver Jesus-Christ, n'eus mui a bropheted, evel ma oa dindan al Lezen Goz, Doue en deus roet evelato, sklerijen var meur a dra da hiniennou euz he zent. O veza m'en deus karget an Tad santel ar Pab da ren an Iliz, Doue a ro eur sklerijen gaer d'ezhan, evit he gouarn evel m'eo dleet.

KENTEL 63. — **Ar Prophet Eli**

Jeroboam a droas kein d'an Aotrou Doue, met unan euz he vugale, Akaz, a oue falloc'h c'hoaz, abalamour he bried, Jezabel, a oa eur baianez aheurtet. Ar prophet Eli, euz Thesbe, a deuas a berz Doue da ziskleria da Akaz : « Abalamour m'e peus savet templou d'an doueou faoz, ha m'e peus great d'az sujidi tec'het divar an hent eün, an douar a vezo dizec'het epad tri bloaz, hag a joumo heb eur berad glao. »

Epad ar zec'hor padus-se, Eli a oue maget da genta gant brini hag a zigase d'ezhan bemdez he vara en eul leac'h gouez, ha da c'houde, gant intanvez Sarepta. An intanvez-man, paour aoualc'h, n'e doa nemet eur vozad bleud hag eun nebeudik eol, kreski a rejont bemdez dre vuzud en henvelepdoare ma c'hellas maga eaz, epad ar zec'hor, he mabig hag ar prophet bras. Eal ar maro a skoas eun dervez krouadur an intanvez, met ar prophet a reas d'ezhan sevel euz a varo da veo.

Pa oue an tri bloaz sec'hor var an achu, ar gernez a rene er vro oll, hag Eli a yeas da gaout ar roue Akaz : « Bodit, emezhan, var menez Karmel ar bobl gant oll veleien ar falz Doue Baal, me a vezo eno ive. » Dont a rejont oll, pevar c'hant hanter kant a oa euz beleien Baal.

Ar prophet a lavaras neuze : « Beleien Baal a gemero eun ejenn, ha goude m'o dezo he lazet, hel lakaint var geuneud an aoter, heb c'houeza tan dindannan, hag e pedint ho doue Baal ; me a gemero an ejenn all, pa 'z eo guir n'eus nemedon ama euz propheted ar guir Doue, m'hen lazo ha m'hen lakaio var geuneud eun eil aoter. An Doue a raio da dan an nenv devi ar c'heuneud hag an hosti, hennez eo ar guir Doue. » Ar bobl a lavaras en eur vouez : « Mad eo evelse. »

Beleien Baal a lazaz ho ejenn, hag a bedas ho doue, azalek ar mintin betek kresdeiz, met kaer o devoue youc'hal, ho doue n'ho selaoue ket. Eli, goapaüs, a lavare d'ezho : « Youc'hit krenvoc'h, rak kousket eo marteze ! » Kaer o doa ar veleien pedi, Baal, an doue faoz, an doue heb buez, na rea van.

Neuze Eli a ginnigas he ejenn da Zoue, da c'houde, hel lazaz. Lakât a reas an tammou anezhan var eur bern keuneud, hag e taolas dour a benn teir gnech var ar c'hig ha var ar c'heuneud, ken a oue leuniet ar voazen en doa digoret en dro d'an aoter. P'en devoue achu he labour, ar prophet a gouezas d'an daoulin dirak ar bobl oll, hag a bedas c'houek ar guir Doue. Kerkent, tan an nenv a zegas ar c'heuneud, an hosti, hag a evas dour ar voazen. Ar bobl, estlammet o velet ar burzud, a adoras Doue Abraham, hag a lakeas d'ar maro, var urz Eli, beleien Baal.

Pegen nerzus e oue komzou Eli ! Dindan al Lezen nevez, komzou ar beleg, pa ro ar zakramanchou, a zo nerzusoc'h c'hoaz.

KENTEL 64. — **Ar bara burzudus****Guinien Naboth. Eli douget d'an nenv**

Goude ma oue lakeat ar falz beleien d'ar maro, Eli a zavas aon ganthan rak ar rouanez Jezabel, hag a dec'has en dezert. Lavaret a reas d'an Aotrou Doue : « Bevet em eus pell aoualc'h, koulz eo d'in lavaret kenavezo d'ar vuez. » Met eal Doue a ziskennas betek ar prophet, kousket e skeud eur vezennik, hag a lakeas dirazhan eun dorzik vara hag eur picherad dour, en eur lavaret : « Debr, hag ev. » Ar prophet a zentas, met kouskat a reas dioc'htu a nevez, ker feaz e oa. An eal hen dihunus

« eun eil tro, en eur lavaret adarre : « Debr, hag ev, rak eur pennad mad a hent e peus da ober c'hoaz. » En taol-man, goude beza debret euz ar bara burzudus roet d'ezhan adarre gant an eal, Eli a gerzas epad daou ugent dervez leun, heb debri eur c'hrinsen nak eva eur berad dour, betek menez Horeb, menez Doue.

Naboth en doa eur park, guiniennou ennan, e kichen lez Akab. Ar roue a lavaras d'ezhan : Guers d'in da bark, evit ma kreskin va douarou. — Nan, eme Naboth, lezen Doue a zifen guerza al leve. » Ar rouanez Jezabel, var lavarou falz testou, a reas neuze barn Naboth d'ar maro, evit laerez ar park da c'houde. Eli a deuas a berz Doue dirak ar roue, evit diskleria d'ezhan krak ha berr : « Ar chass a lipo goad Akab el leac'h m'o deus lipet goad Naboth, ha debri a raint ar rouanez Jezabel. »

Goude beza choumet kalz bloaveziou var an deuar, o tiskleria bolontez an Aotrou Doue d'an dud, Eli a oue savet divar an douar en eur c'harr tan, dirak Elisee he ziskibl : heman a oue prophet bras an Oll C'halloudek etouez bugale Israel, goude he vestr.

Bara burzudus Eli a roas d'ezhan nerz da vent betek penn an hent, mes ni hon eus, e sakramant an Aoter, eur bara kalz burzudusoc'h c'hoaz.

Ar falz testeni douget eneb Naboth a verk d'eomp an drouk bras a c'hell ober an testeni faoz.

Hervez kreden ar gristenien, Eli hag Enok a deuio, var an douar, en derveziou diveza euz ar bed, evit enebi ouz an Antekrist.

KENTEL 65. — Naaman, an den lor pareet

Naaman, mestr bras oll zoudarded ar Syrie, a oue taget gant klenved an dud lor. Dont a reas da gaout Elisee evit goulenn ar pare. Ar prophet a reas res-



Eli o sevel d'an nenv

pount d'ezhan : « Disken seiz guech e ster ar Jourden d'en em voalc'hi, hag ez pezo ar yec'hed en dro. » Naaman a c'hrosmolas pa glevas ar respount-se : « Mont d'en em voalc'hi en eur ster ! Daoust

hag er Syrie n'eus ket a steriou ken neat ha re-ar vro-man ? » Met, pa oa o vont kuit, he zervicherien a zisklerias d'ezhan : « M'en defe Elisee goulennet diganeoc'h eun dra zies benag, c'houi pefe sentet outhan, perak n'her grafac'h ket breman, pa c'houlenn eun dra eaz ? »

Ar mestr bras a zentas var ger he dud, mont a reas betek ar Jourden, disken a reas seiz guezh er ster, ha kerkent e oue pareet.

Laouen oll, Naaman a ginnigas profou kaer d'ar prophet, met Elisee a respountas d'ezhan : « Na gemerin netra diganez. » He vevel, Jiezi, drouk enghan o velet he vestr o choum heb kemeret netra, a redas e kuz varlerc'h Naaman pa oa o tistrei d'he vro, hag a c'houlennas diganthan diou viskamant pinvidig ha pemp mill lur en arc'hant. Ar mestr bras a roas d'ezhan dioc'htu an diou viskamant gant an hanter muioc'h a arc'hant eget na c'houlenne.

Pa zistroas Jiesi d'ar gear, Elisee a c'houlennas diganthan : « E pe leac'h out bet ? — E neb leac'h, » a respountas ar zervicher. — Abalamour m'e peus klasket pinvidikât dre laer, ha m'e peus lavaret eur gaou, eme ar prophet, klenved Naaman a stago-ouzit hag ouz da lignez. » Kerkent, Jiezi a gouezas lor, hag a joumas lor da c'houde.

Dour ar Jourden, o nettât Naaman ouz al lorgnez, a zo eur skeuden gaer euz dour ar vadiziant a netta an ene diouz lorgnez ar pec'hed.

KENTEL 66. — Bloaveziou diveza rouantelez Israel

Ar Syrianed a reas brezel da bobl Israel hag a gelc'has Samari, kear benn ar vro. Ar gernez a oue ker spountus er gear, ma teuas eur vam da

zebri he c'hrouadur. Dougen a reas klem dirak ar roue : « Roue, emezhi, rentit d'in justis. Diou vam oump, gant bep a grouadur. M'en eus lazet ha poazet va ibini, evit kaout eun dra benag da zebri, ha roet an hanter d'am amezgez. Hi, breman na fell ket d'ezhi laza he c'hrouadur, setu ma varvin gant an naon. » Pa glevas ar roue ar c'homzou heuzus-se, e oue spountet oll, hag e tec'has. Roga a reas he zillad, ha guiska a reas eur porpant reun, evit ober pinijen. Gant truez ouz an dud keiz, Doue a reas neuze d'eur spount bras koueza var an enebourien e kreiz an noz, setu ma tec'hjont heb freuz na reuz.

Akaz a oa bet lazet eun dervez emgann, hag ar chass o doa lipet ar goad en doa ruziet skinou he rod karr, met he vugale, kenteliet gant ho mam Jezabel, a oue ker fall hag hen. Doue a reas neuze d'he brophet sakra Jehu, roue Israel, ha kenta a reas, a oue laza Joram, mab Akaz, gant he vam Jezabel. Ar chass a zebras he c'horf, evel m'en doa diskleriet ar prophet.

Elisee a oue diouallet gant Doue. Eun dervez ma oa eun toullad bugale oc'h ober moal anezhan abalamour ma oa disto he benn, daou ourz a zail-las varnho diouz eur c'hoat, hag a dagas daou ha daou ugent anezho. Goude he varo, he eskern a reas c'hoaz eur burzud.

Eun dervez ma oa tud o kas eur c'horf maro d'ar bez, e ouent spountet o velet laeroun o tont varnho, hag e taoljont, dre ho strafill, ar c'horf maro e bez Elisee. Kerkent ha ma touchas korf an den maro eskern ar prophet, e teuas buez enghan en dro.

Ar burzudou-ze na rejont ket da vugale Israel beza furoc'h, rak Jehu, goude beza great lavarou an Aotrou Doue epad eur pennad, a roas kabestr

d'he zujidi da adori an idolou. Skuiz gantho, an Aotrou Doue ho c'hastizas dre zorn an Assyrianed. Ar re-man a gemeras kear Samari dre nerz, hag a reas d'eur c'halz euz bugale Israel dont da veva en Assyrie, dindan ho galloud, 721 bloaz araok ginnivelez Hor Zalver e Bethleem.

Buez burzudus Elisee a zo eur skeuden euz buez sent al Lezen nevez. Guechall koulz hag hirio, guir zerviche-rien an Aotrou Doue o deus bet diganthan eur galloud souezus, rak Hen a zo mestr var bep tra.

KENTEL 67. — Tobias divroet, e Niniv

Etouez an Isralited kaset en eur vro estren, en Assyrie, e oa eun den santel, Tobias he hanô, euz tribu Nephtali. Choumet e oa atao pur ha diskla-bes dirak Doue, ha mont a rea, bep bloaz, da adori an Oll C'halloudek da dempl Jerusalem. Ker fur ha ker parfet e oa en he vuez, m'en devoue konje digant ar roue da zont ha da vont el leac'h ma kar-je, etouez he genvroiz harluet ganthan.

Eur pennad goude ma ouê digouezet an Israeli-ted e bro Niniv, ar roue ho heskinas, hag a reas laza meur a hini anezho. Difen a reas zoken sebelia ho c'horfou. Tenereat he galon pa vele, var an deiz, ar c'horfou maro-ze, Tobias a deue, en noz, d'ho c'herc'hat evit ho c'has d'ar bez. Diskuillet e oue, hag he oll vadou a oue tennet diganthan.

Doue, evit amprou guelloc'h c'hoaz he zervicher, a reas d'ezhan koll ar guele. He c'hreg, dibarfe-toc'h egethan, a skandalas neuze an den santel, met Tobias na laoskas ket eur glemmaden. Lavaret a reas d'an Aotrou Doue, adreuz he zaelou : « Aotrou Doue, va skoet e peus abalamour d'am fec'hejou, mes breman o pet truez ouzin. N'hon eus

ket miret ho kourc'hemennou, ha setu perak o peus lesket an enebourien d'hor bresa, ha d'ober ho mistri vannoump. »

O sonjal neuze e oa tost ar maro evithan, e roas d'he vab, en doa hanvet Tobias evel dhan, aliou leun a furnez :

« P'en dezo Doue digemeret va ene, laka va c'horf en douar. Rent henor d'az vam bep dervez euz da vuez, rak sonj a dlees kaout euz an oll boaniou e deus kemeret ganef. Ra vezo atao an Aotrou Doue dirak da zaoulagad, va mab, diouall rak ar pec'hed, diouall da derri gourc'hemennou an Oll C'halloudek. Grea aluzen diouz ar pezh e peus, ha Doue a raio varnout eur zell a drugarez. Mar ec'h eus kalz, ro kalz ; mar ec'h eus nebeud, ro a greis kaloun, euz ar pezh ec'h eus. An aluzen a ziliam an den kouezet er pec'hed, ha ne laosk ket an ene da zisken en denvalijen. Goulên atao ali digant eun den fur. Meul Doue e peb amzer. »

Evit achui, an dall zantel a lavaras c'hoaz : « Pa oas krouadur, em eus prestet eur guchen vraz a arc'hant da C'habelus, eun den hag a zo o choum e Rajes, e bro ar Medie ; kas d'ezhan ar paper en deus sinet d'in, evit kaout an arc'hant-se en dro. »

An den yaouank, savet mad, a respountas dioc'htu : « Va zad, ober a rin kement o peus gourc'hemennet d'in. Dies eo d'in evelato, rak ne anavezan na Gabelus, na Rajes, nak an hent a gas di. » He dad a lavaras d'ezhan : Klask a ri eun den d'az hench. »

An nep piou benag en deus eur guir devosion a zervicho Doue, evel an den santel Tobias, e peb amzer euz he vuez, er boan hag er baourentez, koulz hag en eürusdet hag er binvidigez.

KENTEL 68. — Tobias hag an arc'heal Raphael

Pa oa an den yaouank Tobias nec'het o klask eur rener, e velas dirazhan an arc'heal Raphael dindan furm eur beachour yaouank hag a ziskle-rias d'ezhan ec'h anaveze Rajes ha Gabelus. Tobias koz a lavaras d'an daou zen yaouank : « Beach vad d'eoc'h ! Ra vezo Doue var ho c'hent, hag he eal ganeoc'h ! »


Er pardaez euz an dervez kenta, Tobias a yeas da voalc'hi he dreid e dour an Tigr, met eur meil pesk a glaskas sailla varnhan. An eal a lavaras : « Krog en he skouarnou, ha chach anezhan davi-dot. » Tobias a zentas, hag ar pesk a varvas buan pa oue var ar zeac'h ; neuze, var urz an eal, an den yaouank a viras ar galon, ar vestil hag an avu, mad da ober louzou. An memorant euz ar pesk a oue miret evit ar bevans hed an hent.

An daou veachour a zigouezas en Ecbatane, kear benn ar Medie. An arc'heal a lavaras eno da Dobias : « Raguel, euz tribu Nephtali evel-dot, a zo o choum ama, goulén digantan, evit pried, he verc'h pennheres : Sara he hano. Roet e vezo d'ic' »

Raguel a reas eun digemer euz ar re gaera d'an den yaouank hag a roas d'ezhan he c'houlén. An arc'heal a yeas he-unan da gaout Gabelus e Rajes, hag a deuas en dro gant an arc'hant en doa goulennet ha resevet.

A benn eun nebeud derveziou, Anna, pried Tobias yaouank, hen heuilas varzu Ninive, goude beza lavaret kenavezo d'he zud gant kalz daelou. He zad en doa roet d'ezhi, en argoulou, an hanter euz he beadra e chatal, kameled, arc'hant ha servicherien.

Pa zigouezas ar veachourien a vel d'ar gear, ar vam, skuis o c'hedal, rak pell a oa ez ea bemdez



Tobias a rekour ar guelel

e penn an hent, ar vam 'ta a redas buan da gas ar c'helou mad d'ar c'heaz dall. Ar c'hi a redas var he zeulioù, en eur ficha he lost ; heuillet en doa he vestr yaouank hed he veach. Goude beza poket gant karantez d'he dud, hen hag he bried, Tobias yaouank a bareas daoulagad he dad gant ar vestil

euz ar pesk en doa miret, var urz an arc'heal. Neuze, an oll a gouezas d'an daoulin evit trugarekât an Aotrou Doue euz an oll grasou en doa roet d'ezho.

Leun a anaoudegez vad evit an den yaouank en doa renet Tobias epad eur véach ken hir, an tad hag ar mab a ginnigas d'ezhan an hanter euz an arc'hant a oa deut gantho. Hen a zisklerias neuze d'ezho :

« Setu ama ar virionez penn da benn. Pa bedac'h, c'houi, Tobias koz, ha pa zebeliac'h ar re varo ; pa zilezac'h ho pred evit kuzat ar c'horfour maro en ho ti evit gellout ho zebelia epad an noz, me a ginnige ho pedennou d'an Aotrou Doue. Plijout a reac'h da Zoue, hag abalamour da Zoue, ar boan a zo deut d'hoc'h amprou. Breman, Doue en deus va digaset d'ho para. Me a zo an eal Raphael, unan euz ar seiz a zo en ho zav dirak Doue. »

Pa glevjont ar c'homzou-ze, an daou Dobias en em strinkas d'an douar. Met an arc'heal a lavaras d'ezho : « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ! N'ho pezet aon ebet ! Doue eo en deus va digaset d'eoc'h, trugarekait anezhan, ha kanit he veuleudiou. » Hag hen kuit, heb na oue gueleit mui.

An daou Dobias a joumas teir heur leun da drugarekât Doue euz ar grasou dispar en doa roet d'ezho. Beva a rejont koz-koz ho daou, ha Tobias yaouank, koulz hag he dad, a zavas he vugale e doujans Doue.

Ar zoursi en devoue an arc'heal Raphael gant Tobias a zo eur skouer kaer euz, ar zoursi a gemer hon eal mad gant peb hini ac'hanomp. N'her guelomp ket, guir eo, met ar feiz a lavar d'eomp ema atao oc'h hon diouall : ne ouezimp, nemet deiz ar varn, gant pebez aked e taoe evez ouzimp.

Ar Judee : Eil Rann : Rouantelez Juda

KENTEL 69. — Josaphat ha Joas

Roue Juda n'en doa nemet daou rumm-dud, Juda ha Benjamin dindan he c'haloud. Meur a hini euz rouaned Juda a oue guelloc'h eget rouaned Israel : tri anezho dreist oll, a blijas da Zoue : Josaphat, Ezekias ha Josias.

Josaphat a oue eur roue mad, distruja a reas eur c'halz euz an idolou, hag ober a reas d'he bobl studia lezen an Aotrou Doue hag he miret. Digollet e oue gant Doue, er bed-man zoken, rak ar peoc'h a renas ganthan er vro keit ha ma oue beo. Josaphat ne oue ket goulskoude ker parfet hag ar roue David, goude he bec'hed : meur a dra a zisplijas da Zoue en he vuez.

Joran, mab Josaphat, a oue eur roue fall, rak adori a reas an idolou. Athali, he bried, a renas var he lerc'h, hag a oue falloc'h egethan c'hoaz, kas a reas d'ar maro he bugale vian, evit gellout ren dizoursioc'h. Ar beleg bras a lakeas e savete Joas, ar yaouanka euz ar vugale, hag a reas he vage e kuz. D'he seiz vloaz, ar roue yaouank a oue savet var dron he dad, hag ar rouanez kriz, Athali, a oue lakeat d'ar maro. Lazet e doa, lazet e oue.

Joas a oue mad, keit ha ma vevas Joiada, ar beleg bras en doa he zavet, da c'houde e troas gant ar re a adore an idolou.

KENTEL 70. — Ar Prophet Jonas e Niniv

Epad ma rene Amadias, mab Joas, var Juda, Doue a lavaras d'ar prophet Jonas : « Sav, kea da Niniv, ar gear vras, ha prezeg eneb d'ezhi, rak mouez fallagriez he zud a zo savet betek ennon. »

Ar gefridi-ze a oa dies d'ober; ar prophet, kroget aon ennhan, a bignas en eur vag, evit tec'het pell dre vor. Klask a rea tec'het diouz Doue: pebez huvre!

Pa oue ar vag var ar mor doun, eur guall amzer spountus a zirollas, hag ar vartoloded, spountet oll, a dennas d'ar blouzen verr evit guelel pïou a rea d'ar mor beza ken diroll. Jonas a zigouezas ar blouzen, verr ganthan, hag a zisklerias d'ar re all: « Me a ador ar guir Doue, krouer ha mestr peb tra, dizentet em eus outhan, hag abalamour da-ze, al lestr a zo varnez mont d'ar goueled. Taolit ac'ha-noun er mor, hag an avel a gouezo. » Ar vartolodet a zentas, ha kerkent, ar peoc'h a renas var ar mor, sioul bras adarre.

Pa gouezas ar prophet er mor, e oue lounket dioc'htu gant eur pesk bras: tri dervez divezatoc'h, ar pesk-se hen dislounkas beo buezeg var an aod. En dro-man, Jonas na oue ket lent, mont a reas var eün da gear Niniv, a c'holoe neuze peder guech hanter muioc'h a vro eget kear Baris hirio. Ar prophet a youc'has dre ma 'z ea, er ruiou: « Daou-ugent dervez c'hoaz, ha Niniv a vezo distrujet! »

Pa glevas Doue Niniv ar c'helou a lakea ar spount da ren e kear a bez, e tiskennas divar he drôn, e reas pinijen, hag e tougas eun urz seac'h: « An oll a yuno, e kear, ar chatal koulz hag an dud. An dud a youc'ho varzu Doue da c'houlenn truez, hag a haouezo da ren eur vuez fall, setu ma torro marteze kounnar Doue, ha ne vezimp ket distrujet. » Ar bobl a zentas ouz ar roue, hag ar gear ne oue ket kastizet, abalamour m'o doa an oll great pinijen.

Ar prophet Jonas o choum tri dervez en eur pesk bras a zo eur skeuden gaer euz Hor Zalver Jesus-Christ a zo choumet he gorf tri dervez er bez. Histor Niniv a verk d'eomp pegen nerzus eo ar binijen hag ar beden var galoun Doue.

Jonas a yeas drouk ennhan, pe velas ne skoe ket an Aotrou Doue pobl Niniv. Klem a reas, en eur lavaret: « Gouzout a rean oc'h eun Doue mad, pasiant, leun a drugarez, prest atao da bardouni d'ar bec'herien. Deuit eta breman, Aotrou Doue, da zis-partia va ene dioc'h va c'horf, rak guell eo ganen mervel eget beva. »

Doue a skandalas ar prophet: « Penaoz em befe me skoet tud ar gear vras-se, hag a ra pinijen? Bez' ez eus ennhï ouspenn c'houec'h ugent mil den ha ne ouzont ket anaout c'hoaz ho dorn deou dioc'h ho dorn kleiz, ker yaouank int! »

Doue a verke d'an oll ne oa ket tad ar Juevien heben, merka a rea e oa e guirionez tad an oll.

KENTEL 71. — Ezekias (721-693 ar. J. .!) ha Manasses

Ezekias a oue eur roue santel, leal ha sentus e kenver Doue, ha mad evit he zujidi. Sennacherib, roue an Assyrianed, a zisklerias brezel d'ezhan, hag a deuas dirak mogerioù Jerusalem gant eun arme vras. Skriva a reas d'ar roue devot eul lizer ourgouillus, leun a vlasphemou eneb an Aotrou Doue.

Ezekias a bignas d'an Templ, displega a reas dirak an aoter lizer ar roue paian, hag ober a reas da Zoue he beden: « Aotrou Doue, c'houi eo Doue oll doueou ar bed. Aotrou Doue Oll C'halloudek, selauit ha sellit. Rouaned an Assyrie o deus trec'het ar boblou all ha strinket ho doueou en tan, rak an doueou-ze a oa traou dinerz, labour an dud: koat ha mean, puluc'het int bet. Deuit, c'houi an Oll C'halloudek, d'hon tenna euz a dre zaouarn Sennacherib, evit ma ouezo oll boblou an douar ez oc'h ar guir Doue. »

Ar prophet Isai a deuas, a berz Doue, da lavaret da Ezekias: « Selaouet em euz da beden, hag ar roue ourgouillis-se na yelo ket e Jerusalem, diouall a rin kear abalamour d'am zervicher David. »

En noz varlerc'h, eal Doue a ziskennas etouez an Assyrianed, hag a lazaz pemp ha nao-ugent mill anezho. Da c'houlou deiz, pa velas Sennacherib an oll gorfou maro-ze, e tistroas buan varzu he gear, Niniv.

Divezatoc'h, Ezekias a gouezas klanv, hag ar prophet Isai a zisklerias d'ezhan, a berz Doue: « Laka urz en da di, rak mervel a ri dizale. » Ar roue santel a bedas dioc'htu an Oll C'halloudek: « Aotrou Doue, emezhan, bezit sonj em eus baleet atao dirazoc'h er virionez, gant eur galon barfet, » hag ar roue a skuille, er memez amzer, eur mor daelou.

Var urz Doue, ar prophet Isai a yeas var he giz, ne oa ket c'hoaz eat er meaz euz ti ar roue santel: « Doue a lavar d'id dre va zeod, emezhan, en deus selaouet da beden, ha gullet da zaelou: na varvi ket c'hoaz. Beva a ri pemzek vloaz all. Ha setu ama merk Doue, eme ar prophet; anaout a res an heur, epad an deiz, diouz ar skeud a ro an nadoz e peus aze dirak da zaoulagad, dindan an heol. Pehini a gaves guella, gullet ar skeud o vont dek rizen hueloc'h, pe dek rizen izeloc'h? — Mont var araok n'e ve ket guall zouezus, eme ar roue, mont var adrenv a ve eur merk sklearoc'h. » Kerkent, skeud an heol a yeas dek rizen var he giz. Ar roue santel a vevaz pemzek vloaz c'hoaz, evel m'en doa diskleriet ar Prophet.

Peger madelezus eo an Aotrou Doue! Nak a draou kaer, en deus great evit Ezekias! Nak a c'hrasou bras a resefemp diganthan m'on defe muioc'h a fizians en-nhan!

KENTEL 72. — Judith, an intanvez kalonek Trouc'ha a ra penn Holophernes

Nabuchodonosor, roue bras an Assyrianed, en doa kaset Holophernes, gant eun arme galloudus, da gemeret dre nerz kear Bethuli, e bro Juda.

Kear a oue kelc'het stris, an enebourien a drouc'has ar c'horzennou a gase dour da gearis, setu ma teuas ar Juzevien da goll kalon. Na c'heller ket beva pell heb dour. Ar pennou bras a gasas eta kan-naded da Holophernes, evit diskleria d'ezhan: « Ma na vezomp ket sikouret, kear a zigoro he dorjoù dirazoc'h a benn pemp dervez ama. »

Eun intanvez santel, Judith, a reas rebechou d'ar pennou-bras: « Piou oc'h-hu, emezhi, evit klask ple-ga an Aotrou Doue d'ho polontez? Grit pinijen euz an ofans-se o peus great d'an Oll C'halloudek, ha goulenomp ar pandoun dre hon daelou. Gortomp sikour Doue gant fizians: diskar a raio ar boblou o deus c'hoant hor bresa, hag hor zevel a raio, ni, he bobl. »

Goude ar rebechou hag an aliou-ze, an intanvez devot a c'houlennas digant ar pennou bras kounje da vont en noz varlerc'h etouez tellou an Assyrianed. Ar pennou bras, leun a fizians e Judith, abalamour m'e doa brud da veza fur ha devot, a lavaras d'ezhi: « It e peoc'h, ha ra vezo Doue ga-neoc'h evit trec'hi hon enebourien. » An intanvez a yeas eta, evel m'e doa diskleriet.

An enebourien a reas eun digemer mad d'an intanvez, rak bez' e doa eur gened dispar. Kaset e oue dirak Holophernes, hag heman a roas urz d'he ofiserien da rei peb galloud d'ar Juzevez da vont ha da zont, evel ma plijfe ganthi.

D'ar pevare dervez ma oa Judith, gant he flac'h pe vatez, etouez an Assyrianed, ar jeneral a roas

eur goan vras d'he ofiserien, hag a yeas goude d'he vele; abafet mad. Judith a reas da Zoue eur beden kalonek; a grogas e kleze Holophernes kousket mik, hag a droc'has he benn en eun taol. Ar plac'h a lakeas ar penn en eur zac'h, hag an diou vaouez a zistroas, sioul ha didrouz, en noz, da gear Bethuli.

Ar Juzevien a dridas ho c'halon gant al levenez pa veljont penn ho enebour bras, ha da c'houlou deiz, ez ejont er meaz euz mogerion kear evit sailla var an Assyrianed. Eun ofiser a redas buan da c'houlou urziou ar mestr bras, met pa gavas ar c'horf dibennet ha beuzet en eur poullad goad, ec'h embannas ar c'helou, spountet oll. An enebourien a dec'has neuze heb urz na reiz, hag eur c'halz anezho a oue lazec'h.

Ar beleg bras Joasim, ar pennou bras en dro d'ezhan, a yeas buan da zigemeret Judith en he zi, gant ar brasa henor. Ar bobl oll a gane ar c'hantiko kaer a gave d'he meuli, hag ar beleg bras a lavaras d'ezhi ar c'homzou a zo bet kanet ken alies abaoue en ilizou, en henor d'ar Verc'hez gloriou Vari: « Tu gloria Jerusalem: C'houi a zo gloar Jerusalem; tu laetitia Israel; c'houi a zo levenez Israel; tu honorificentia populi nostri: c'houi a zo henor hor bobl. »

Judith e doa saveteat pobl Israel; ar Verc'hez e deus saveteat ar bed oll, dre he Mab Jesus, Salver ar bed.

Mar deo kaer Judith, ma 'z eo bet meulet abalamour d'he nerz kalon, na pegement eo kaeroc'h hor zantez Jeann d'Arc e deus trec'het ar Zaozon heb ruzia bek he c'hleze gant an distera berad goad !

KENTEL 73. — Josias, ar roue santel

Josias a boanias d'ober d'ar bobl hale gant hent gourc'hemennou Doue. Nevezi a reas templ Jerusalem, ha miret a reas ne deufe he zujidi da adori an doueou faoz.

Leor lezen Doue a oa bet kollet, met kavet e oue neuze, ha lennet penn da benn. Ar roue santel hag ar beleg bras Helsias a nevezas adarre an unani a oa bet great etre Doue hag ar bobl, en amzer Moyséz.

Goude maro Josias, he vugale a oue fall hag a adoras an doueou faoz, setu ma kouezas ar bobl en dizursiou brasa. Ar prophet Isai a oa bet merzeriet var urz ar roue Manasses: ar roue-ze, bet devot er penn kenta euz he vuez, a oue fall dreist da c'houde, hag a reas heskenna, var a leverer, ar prophet bras ez-veo etre daou blaken.

Er penn diveza euz he vuez, Manasses a zavas keuz ganthan, hag a boanias da zervicha an Aotrou Doue ervad.

E leac'h Isai, eur prophet all a zavas, Jeremi, sklerijennet hen ive, gant an Aotrou Doue; rebech a reas d'ar Juzevien ho fec'hejou hag ho dizursiou. « Abalamour n'o peus ket selaouet va c'homzou, eme an Aotrou Doue dreizhan, ar vro-man a vezo karzet an dud diouthi, hag ar bobl a vezo dindan galloud roue Babylon epad dek vloaz ha triugent. »

E leac'h selaou ar gourdrouzou-ze, hag ober pinijen, ar roue ar voallgasas ar prophet, taoler a reas he lizer en tan, ha selaou a reas falz propheted an doueou faoz. Neuze Doue a baouezas da zioall rouantelez Juda. Nabuchodonosor, roue Babylon, a gemeras dre nerz kear Jerusalem, a laeras tenzorion an Templ, hag a gasas da gear vras Babylon, a oa neuze eun drederen brasoc'h eget Niniv, 3.000 den euz tiegeziou pinvidig Juda. Etouez an tri mil-ze e oa Daniel, Ananias, Misael hag Azarias.

En desped da oll c'hourdrouzou an Aotrou Doue, a zisklerie he volontez d'ar bobl dre ar bropheted.

ar Juzevien a gendalc'has da derri lezen an Oll C'halloudek. Nabuchodonosor a zistroas eta dirak mogeniou Jerusalem, a gemeras kear goude eur zeziz a drivac'h miz, hag a zistrujas kear hag he zud, koulz hag an Templ, dre an tan hag ar c'hleze. Ar roue Sedesias a oue dallet rak he zaoulagad a oue krenvet d'ezhan, hag eur c'halz tud vras a oue harluet e kear Babylon. Rouantelez Juda a oue kaset da netra: ne joume enghi nemet enn nebeudik tud dister, hag a laboure an douarou var ar meaz.

Setu azé eur rouantelez hag e deus bet digant an Aotrou Doue merkou dispar a garantez met en despet daze, e deus great fae var gomzou Doue. Kaset eo bet da netra. Ni, kristenien, a zo hirio mignoured bras an Oll C'halloudek, mes ma reomp fae var he c'hrasou, ez aimp da goll evel ar Juzevien. Taolomp evez!

PEMPED PENNAD

Euz ar Bropheted e Babylen betek amzer Her Zalver

KENTEL 74. — Pobl Doue e bro Babylon Ezekiel

Ar Juzevien kaset diouz ho bro gant an Assyrianed a oue koundaonet da joum e kear Babylon pe en e c'hichen. O veza m'oant mad da ober kemverz, meur a hini anezho a zavas pinvidig, hag a oue henoret.

Pa 'z eo guir e oant etouez paianed hag a adore an idolou, e oant e riskl bras d'en em goll gant an dud-se, met ar gual heuriou o doa bet da c'houlzanv hag a oa bet diskleriet d'ezho gant ar bropheted, a reas d'ezho digeri ho daoulagad. Keus o devoue d'ho buez tremenet, ha goulenn a rejont gant humilite, digant an Aotrou Doue, kaout truez outho.

Propheted an Aotrou Doue a sklerijenne ar bobl: kalz a dud santel a zo bet galvet gant Doue, el Lezen Goz, evit beza he gannadet, ha diskleria d'ho c'henvroiz an amzer da zont.

Ezekiel a zavas varlerc'h Isai evit merka d'an dud bolontez an Aotrou Doue. Bez' e oa euz a touenn ar veleien, ha galvet e oue gant an Oll C'halloudek da veza he brophet pemp bloas goude ma oa bet kaset en harlu, da Vabylon. Doue a felle d'ezhan en defe douget he genvroiz d'ar binijen evit kaout ar pardoun euz ho fec'hejou. Evit merka d'ar Juzevien e tlient sevel adarre da veza eur bobl nerzus, e tisklerias d'ezho ar pezh en doa gullet. « Doue, emezhan, am lakeas var eun dachen vras goloet a eskern, hag a lavaras d'in: Komz var an eskern-ze, ha lavar d'ezho: « Eskern seac'h, selaouit mouez Doue. Setu ama ar pezh a lavar Doue d'eoc'h: Digas a rin eur spered ennoc'h, hag e vevoc'h, hag e ouezoc'h eo me an Oll C'halloudek. »

« Senti a rejon ouz Doue, eme ar prophet, ha setu kerkent eun trouz bras: an eskern a dosteas an cil ouz egile, ha var an eskern-ze e savas pourraskl, kig ha kroc'hen, met ne oa ket a vuez enno. Doue a lavaras d'in neuze: Sav da vouez, ha lavar d'ar spered: Deus diouz ar pevar avel, spered, ha c'hoez var an dud lazet-se, hag e vevint a nevez. Senti a ris, hag ar spered a deus enno, hag e resev jont buez hag e savjont var ho zreid evel eun arme vras. »

An Oll C'halloudek a lavaras d'in c'hoaz: « An eskern-ze eo bugale Israel. Lavaret a reont: Hon eskern a zo dizec'het, hon esperans a zo maro. Rak-se 'ta, sav da vouez evit diskleria d'ezho: Setu komzou an Aotrou Doue: Digeri a rin ar bezion m'emaoc'h enno, hag e rin d'eoc'h distrei e bro Is-

rael. Lakât a rin va spered ennoc'h, hag e vevoc'h e peoc'h var ho touar, hag e ouezoc'h eo me ho Toue, a lavar hag a ra. »

Ar c'homzou-ze a roe kalon d'ar Juzevien a veve en harlu: Distrei a raimp eun dervez d'hor guir vro, pa 'z eo guir Doue hel lavar.

Ha ni, kristenien, harluet var an douar, o tostât bemdez ouz ar maro, dalc'homp sonj mad e savimp, eun deiz, euz a varo da veo.

KENTEL 75. — Daniel, an den yaouank fur
(605 araok J.-C.)

Ar roue Nabuchodonosor, evit plega easoc'h d'he lezennou ar boblou en doa trec'het dre he armou, a reas sevel, en he lez, bugale yaouank a renk huel euz bro Juda. Evel m'eo bet diskleriet hueloc'h. Daniel, Ananias, Misael hag Azarias a oue dibabet evelse euz a douez bugale Israel evit beza savet mad ha beza guest, divezatoc'h, da zikour ar roue da c'houarn he zujidi.

An dud yaouank-se a zebre ar memez boued gant ar roue, met ar boued-se a oa difennet gant lezen Moysez. Ar pevar den yaouank a c'houlennas eta digant ho mestr rei d'ezho eur boued all: « Hon Doue, emezho, a zifen ouzimp debri euz ar boued-se. E leac'h guin ha kig, emezho, roit d'eomp, mar plij, dour ha legumach. » Ar mestr a respountas: « Ne c'hellan ket, rak mar beziit livet fall, me zo e riskl da veza torret euz va c'harg. »

E leac'h koll kalon, Daniel a c'houlennas digant ar mestr ober eun amprou ganthan hag he dri vignoun, epad dek dervez hebken. Ar mestr a asantas, ha benn an dekved dervez, pevar bugel Israel a oa krenvoc'h ha kaeroc'h da velet, eget ar baotred yaouank a zebre euz boued ar roue. Mestr

an oll baotred yaouank a lavaras neuze: « Pa 'z eo guir, o veva divar dour ha legumach, oc'h krenvoc'h da velet eget ar baotred a zebr kig hag a ev guin, na virin ket ouzoc'h da ren ar vuez-se. » Doue neuze, eme ar Skritur Zakr, a foas furnez ha skiant d'ar baotred-se, a oa ker mad da viret he lezen, rak pa 'z ejont dirak ar roue Nabuchodonosor, e respountjont d'ezhan gant dek guech muioc'h a skiant eget ar baotred yaouank all.

Diouallit rak ar gourmandiz, ha Doue ho tigollo, er bed-man zoken.

KENTEL 76. — Suzanna ar c'hreg divlam

Bugale Israel, epad ma rankent beva en harlu, a hanve daou zen fur evit ho barn. En doare-ze, pa veze savet eun tam kaoz etrezho, ne rankent ket mont dirak barnerien roue Babylon.

Eur bloavez, an daou varner a oa daou zen koz, dous mel da velet, gant eur galon c'houero evel ar vestl. Bez' e oa, etouez ar Juzevien divroet, eur vanc'h fur ha koant, he hano Suzanna, dimezet da Joakim eun den pinvidig. Ar bobl a en em vode alies e ti Joakim hag ar varnerien a zaremprede an ti-ze.

Eun dervez ma oa eat Suzanna d'al liorz a oa e penn he zi, goude beza prennet mad an or, abalamour m'e doa c'hoant en em voalc'hi, an daou varner, brein ho c'halon gant an ioulou fall, a deuas er meaz euz eun toull kuz evit klask he dougen d'ar pec'hed. « Ma ne asantit ket, emezho, ni a zisklerio hon eus ho paket gant eun den yaouank. »

Glac'haret oll, Suzanna a lavaras d'ezho: « Kollet oun, n'eus fors pe seurt a rin. Mac'h asantan ganeoc'h, e kollan va ene; ma lavaran nan d'eoc'h, c'houi am barno d'ar maro. Met guell eo ganen

mervel disklabez eget ne deo pec'hi dirak Doue. » Hag hi, kerkent, ha youc'hal evit goulén sikour, met an daou zen fall a youc'has ive.

Ar plac'hed a ziredas, ha kalz tud gantho : dirak an oll an daou varner a zougas testeni eneb Suzanna. An dud a joumas mantret, rak pried Joachim a oa eur vaouez a vrud vad.

Barnet e oue antronoz. En despet d'he daelou, ha da zaelou he c'herent, daoust ma kemere an Oll C'halloudek da dest e oa tamallet e gaou, an daou zen koz fallakr he barnas d'ar maro. Epad ma 'z ea an oll er meaz euz kear, evit labeza ar vaouez yaouank, Daniel, sklerijennet gant Doue, a zavas he vouez : « Evidon-me a zo direbech dioc'h goad ar vaouez-se. An testeni douget eneb ar verc'h-se a zo eun testeni faoz. »

An oll a zistroas prim var ho c'hiz evit dougen eun eil varnedigez, ha Daniel, yaouank flamm c'hoaz, a c'hourc'hemennas dichek : « Dispartiit an daou dest. » Neuze, e c'houlennas digant ar barnier kenta : « Dindan pe seurt guezén o peus paket ar verc'h-se o pec'hi ? — Dindan eur vezen graon, » emezhan. Goulén a reas, da c'houde, digant egile : « Dindan pe seurt guezén e oa ? — Dindan eur vezen brun, » emezhan. « Testou gaouiad ! » eme an den yaouank. An daou fallakr a oue barnet d'ar maro gant ar bobl oll, ha seul diesoc'h e kave an dud mont varlenc'h Suzanna, en dro genta, seul laouennoc'h e oant breman o vont da gastiza an daou zen fall.

Divar neuze, an oll a anavezaz ervad e oa Doue o sklerijenna Daniel, he brophet yaouank.

Peger-stard eo bet Suzanna en he dever a c'hreg ! Kaout a rea d'ezhi e rankje gouzanv ar maro, ha goulskoude ec'h en em vir disklabez. Saveteat eo bet gant Doue, dre vuzud. Leveromp evelldhi : Ar maro kentoc'h eget sklabez ar pec'hed !

KENTEL 77. — Daniel a ro sklerijen d'ar roue var he huvreou

Nabuchodonosor en devoue, eun nosvez, eun huvre hag a roas kalz a nec'hamant d'ezhan, heb gelout, evelato, pa zihunas, kaout sonj mad anezan. Gervel a reas an divinerien brudeta euz he rouantelez, evit diskleria d'ezho : « Livirit d'in an huvre am eus great, hag ar pezh a verk. » An divinerien a respountas : « Diskleriit d'eomp ho c'huvre, ha ni a lavaro d'eoc'h ar pezh a verk. » Nabuchodonosor na c'helle ket diskleria he huvre d'an divinerien, setu ma oa varnez ho c'has d'ar maro, pe lavaras unan euz he ofiserien d'ezhan : « Daniel, o Roue, a zinec'ho ho spered. »

Daniel a oue galvet kerkent, hag a ziskleriaz da Nabuchodonosor :

« Eun Doue a zo en nenv hag a vel en denvalijen, rak ennhan eman ar sklerijen. Setu ama, o Roue, ho c'huvre. Eur skeuden vras ha spountus da velet a oa dirazoc'h. Ar skeuden e doa eur penn aour, eur beultrin ha divrec'h arc'hant, eur c'hof ha morzedou kouevr ha stean, divesker houarn, treid hanter-houarn hag hanter pri-prad. Eur mean a loc'has heb sikour den, skei a reas an treid, hag ho brevi a reas. Neuze an houarn, ar pri prad, ar c'houevr hag an aour a oue ker skanv hag ar pell a nij var al leur en hanv, mont a rejont gant an avel, hag ar mean en doa skoet ar skeuden a greskas betek ma oue eur menez bras hag a c'holoe an douar. »

Ar prophet a zisklerias da c'houde petra verke ar penn aour, ar beultrin arc'hant, hag an traou all : merka a reant ar rouanteleziou a dlie ren var eul loden vras euz ar bed, an eil goude eben. Nabuchodonosor a henoras Daniel, a zavas ar pro-

phet dreist an oll ofiserien ha gouarnerien a rene ar vro dindannhan, lakât a reas he dri vâgnoun, Ananias, Misael hag Azarias da ren kear Babylon, hag e lavaras:

« Ho Toue, Daniel, a zo e guirionez doue an doueou, ha mestr ar rouaned. »

Ar penn aour a verke rouantelez Nabuchodonoser, roue an Assyrianed; ar beultrin hag an divrec'h arc'hant a verke rouantelez ar Medii hag ar Pers, a dlîe trec'hi an Assyrianed; ar c'horf kouevr a oa rouantelez Alexandr, roue ar Macedoine hag ar Grèce; an divesker houarn a verke Rom, rouanez ar bed. Ar mean a zistagas anezhan he unan heb sikour an den, a zo an Iliz katolik, trec'h d'an oll rouanteleziou paian, hag e deus bugale dre ar bed oll.

Ar mean a bilas ar skeuden ne oa ket deut euz dorn eun den, ar mean-ze a zo bet furmet gant Doue he-unan, hag en deus resevet diganthan an oll nerz en deus. An Iliz e deus trec'het ar relijionou paian, oc'h ober kristenien euz an dud a heuille ar relijionou faoz-se.

KENTEL 78. — An tri zen yaouank e kreiz an tan Klerved souezus Nabuchodonosor

Anaoudegez vad ar roue na badas ket atao, rak sevel a reas he batrom, eur skeuden aour, er meaziou bras a oa e kichen Babylon, hag e tougas urz d'an oll d'he adori. An neb piou benag a joumfe heb senti, a dlîe beza strinket en eur founn c'horet.

Ananias, Misael hag Azarias a lavaras nan da ofiserien ar roue. Neuze Nabuchodonosor, kounnar ennhan, a roas urz d'ho strinka er founn.

An tri zen yaouank a oue liammet stris, epad ma c'horet ar founn seiz guech muioc'h eget en derveziou all, hag ar mevelien ho zaolas ennhan. An

tan a oa ker fuloret ma oue devet ha mouget ar mevelien-ze, mes an tri zen yaouank n'o devoe ket an distera drouk. An tan ne zevas nemet ho liammou, eun eal a ziskennas en ho c'hichen hag a reas d'eun ezen fresk ren e kreiz an tan, hag an tri zen a yea hag a deue dre greiz, en eur gana ar c'hantik kaer a zoug ho hano: « Benedicite omnia opera Domini Domino: Bennigit an Oll C'halloudek, c'houi, oll oberou Doue! »

Estlammet o velet eur burzud ker souezus, Nabuchodonosor a zisklerias: « Nikun euz an doueou all n'eo ker galloudus hag ho c'hini da zavetei he zervicherien, » setu ma tifennas grons blasphemî hano Doue ar Juzevien, dindan boan a varo.

Na peger madelezus eo an Aotrou Doue evit he vir zervicherien!

Pa oue diazezet mad he c'halloud var an Assyrianed hag ar broiou tro var dro, Nabuchodonosor, ar roue bras, a deuas he galon da c'houeza gant an ourgouill. Nak a boblou a blege d'he lezen! Na kaer ha pinvidig e oa Babylon, he gear benn, seiz guech muioc'h a vro dindannhi eget na zo dindan Paris hirio, difennet gant mogeriou krenv hag o doa tri c'hant troatad a huedler.

Doue a skoas ar roue galloudus. Guelet a reas, dre he gousk, eur vezen vras mantrüs, hag e klevas eur vouez o rei urz da drouc'ha ar vezen, ha da lezel evelato en douar kef ha griziu. Ar vouez a lavaras ouspenn: « Ra zebro geot evel ar chatal, ra vezo tennet diganthan he galon den evit rei d'ezhan eur galon loen, ra zeuio seiz vloaz da dremen varnhan en doare-ze, evit ma ouezo an dud eo an Oll C'halloudek mestr var rouaned an douar, hag e ro ar gurunen a roue d'an neb a gar. »

Nabuchodonosor a c'halvas Daniel evit diskleria d'ezhan petra verke ar zonz-se, hag ar prophet a respountas: « Ar zonz-se, o roue bras, a zo divar ho penn, merka a ra ez eot epad eun amzer dioc'h a douez an dud savet mad, evit debri geot evel al loened. Grit pinijen euz ho pec'hejou, o Roue, ha Doue, marteze, ho fandouno d'eoc'h. »


Ar roue bras na zelaouas ket aliou ar prophet, setu ma oue skoet, eun dervez, gant eur c'hlenved souezus. Beva a reas o tebri geot evel al loened, ha ren a reas ar vuez-se epad seiz vloaz. Goude an amzer-ze, e teuas he skiant vad d'ezhan en dro, neuze ar re o doa renet ar vro epad he glenved a deuas d'he zaludi, ha da ziskleria d'ezhan e oa roue evel araok he glenved. Ren a reas e guirionez, met eur bloaz benag da c'houde, e varvas.

Pebez kentel evit an dud ourgouillus! Pegen izel eo bet koezet ar roue-ze, unan euz ar brasa ha galloudusa rouaned a zo bet var an douar! Debri geot evel al loened mud! An den galloudusa n'eo e guirionez netra dirak an Aotrou Doue.

KENTEL 79. — Koan vras Balthazar

Da c'houde maro Nabuchodonosor, rouantelez Babylon a yeas var ziskar a nebeudou. Rouantelez ar Medii hag ar Pers a 'z eas er c'hontrol var grenvât, hag ar roue Cyrus, goude beza trec'het Nabonid, roue Babylon, a gela'has ar gear vras-man, difennet gant Balthazar, mab ar roue.

Eur pardaez, Balthazar a roas eur goan gaer d'he ofiserien vrasa, hag a reas d'he dud eva el listri sakr aour hag arc'hant a oa bet laeret gant Nabuchodonosor diouz templ Jerusalem. « Eva a reas, eme ar Skritur Zantel, heñ hag ar pennou bras euz



Koan vras Balthazar

ar rouantelez gant ho gragez, ha dre mac'h event, e roent menleudi d'ho doueou aour hag arc'hant, koevr hag houarn, koat ha mean. »

A greiz ma oa an oll laouen bras, setu ma oue gueleit, padal, bizied o skriva var moger ar gampr

vras ma oant ennhi, hag ar roue strafillet, a jenchas liou. Gervel a reas kerkent divinerien ha sorserien, met hini anezho na c'hellas lenn ar skritur na diskleria ar pezh a verke. Ar roue a oue spountet neuze muioc'h mui, hag he dud ganthan.

Ar rouanez a zisklerias d'ezhan: « Bez' ez eus eun den, Daniel, hag a zo treac'h d'an oll divinerien, grît d'ezhan dont ama, hag e sklerijenno ac'hanoc'h. » Daniel a lavaras d'ar roue: « En em zavet oc'h eneb an Oll C'halloudek. Great o peus digas dirazoc'h al listri sakr a oa e ti ar guir Doue, e Jerusalem, evet o peus guin enno, c'houi, ho tud hag ho gragez. N'o peuz ket rentet gloar d'ar guir Doue. Ha breman an dorn-ze a zo deut euz he berz, ha setu ama ar c'homzou e deus skrivet: Mane, Thecel, Phares. Mane: Doue en deus kountet an dervezioù ho poa da ren: achu int. Thecel: pouezet oc'h bet, hag oc'h bet kavet re skanv. Phares: ho rouantelez a vezo rannet, ha roet d'ar Meded ha d'ar Persed. »

En nosvez-se, Cyrus, roue ar Meded, a gemeras kear dre finessa; ar roue Balthazar a oue lazec. Cyrus a lakeas Darius, mestr ar Persed, da ren kear Babylon, rak ar vro a oue rannet etre ar vistri, evel m'en doa diskleriet ar Prophet Daniel.

Pebz maro spontus !

KENTEL 80. — Daniel e fos al leoned

Darius a lakeas he fizians e Daniel, abalamour ma oa eun den fur, gwest da rei aliou mad. Ofiserien ar Pers o devoue avi ha kasouni outhan, abalamour ma vezo selaouet gant ar roue.

Dre gassouni ouz ar prophet, an ofiserien a reas d'ar roue dougen eul lezen a varo eneb kement den a bedfe eun doue benag, dishenvel diouz ar roue. An ali-ze a blijas da Zarius, pa 'z-eo-guir he ofiserien a zave anezhan dreist an doueou huela.

Ar prophet ne zoubilas ket d'al lezen fall-ze. Boas e oa bet, e peb amzer, da ober he bedennou d'ar guir Doue, n'eo ket e kuz eo, met a vel d'an holl, ha troet varzu kear Jerusalem: kenderc'hel a reas. Guelet e oue eas gant an dud avius her spie, o pedi teir guech en deiz, setu ma oue buan diskuillet d'ar roue, tamallet ha kaset dirazhan.

Pandaez noz e oa. Daniel ne nac'has ket en doa pedet he Zoue, en despet d'an difen, barnet e oue dioc'htu, ha taolet e fos al leoned gouez. Ar roue, melkoniet oll, na zebras netra d'he goan, ha na glozas ket eul lagad hed an noz. Sevel a reas gant an deiz, ha redet a reas buan e kichen ar fos, evit goulenn gant eur vouez glac'harus: « Daniel, servi-cher an Doue beo, daoust ha da Zoue en deus gallet da ziuall diouz al leoned? — Roue, a respountas ar prophet, va Doue en deus digaset he eal ha kloset ginou al leoned. » Darius, laouen oll, a reas kerkent tenna Daniel euz ar fos, hag a reas teurel ennhi he damallerien. Ar re-man n'ez ejont ket da voueled ar fos, lounket e ouent en eun metraik a amzer, gant al leoned.

Darius a skrivas neuze da oll boblou he rouantelez: « Douja a reot Doue Daniel en eur grenn, rak hen 'eo an Doue beo, hag he c'halloud a vezo heb fin. »

Nak a dud, en hon amzer, o deus mez o tiskoues int kristenien, int bugale Doue ! Nak a dud a joum heb he bedi ! Daniel n'en doa nak aon, na mez o pedi Doue dirak an oll, renta a rea da Zoue an honor a zo dleet d'ezhan, hag abalamour da-ze, Doue en deus hen digallet euz ar boan a gemere.

KENTEL 81. — Daniel ha beleien Bel

Cyrus a deuas da joum e Babylon, hag a adoras Bel, doue bras kear, evit plijout d'he zujidi. Pedit a rea, bep en amzer, ar prophet Daniel da vont da breja ganthan, rak anaout a rea he furnez dispar. Goulén a reas diganthan, eun dervez: « Perak, Daniel, ne adores ket Bel? Eun doue ker gallowdus! » Daniel a respountas d'ar roue: « Ne adoran nemet an Doue beo. — Daoust ha Bel n'eo ket beo? eme ar roue, gueleit a res nak a voued a rank kaout bep noz! — Bel, a respountas ar prophet, n'en deus morse debret eur c'hrinsen. »

Ar roue a joumas balc'h, pa glevas ar respount-se. Kinniget e veze, bep pardaez, d'an doue bras Bel, daouzek muzul bleud tamouezet fin, daou-ugent danvad ha c'houec'h muzul guin: antronoz, ne gavet mui netra var an aoter. « Sklear e oa, eme an dud, ez ea an oll voued-se gant Bel epad an noz. » Ar roue a grede ive kement-se.

Daniel a reas, er pardaez-se, ridella ludu var leur an templ, hag a ziellas da c'houde an or gant gualen ar roue. Antronoz, Cyrus hag ar prophet a deuas, kerkent ha goulou deiz, da dempl an doue Bel. « Gueleit a res, Daniel, eme ar roue, na joum netra euz an oll bevans a oa aze deac'h. — Gueleit a rit, a respountas ar prophet, roudou an treid a zo aze var al ludu. Bez' ez eus, en ho zouez, re vras, merc'hed ha bugale. Aze, dindan an aoter, ez eus eun toull kuz gant teleziou; beleien Bel a c'hell dont dre eno var leur an templ ha kas ar boued gantho da zebri. »

Ar roue, kounnaret, a reas kas d'ar maro beleien Bel. Gant he aotre, Daniel a reas bruzuna skeuden ar falz doue, ha diskar an templ.

Tud Babylon a henore evel doue eun dragon heuzus. Cyrus a lavaras d'ar prophet: « Hennez, da viana, a zebr hag a ev, na liviri ket n'eo ket beo. » Daniel a respountas: « Eul loen beo eo, met 'doue n'eo ket. Me a deuas aben anezhan eaz, heb baz na kleze. — Grea, ma velin, » eme ar roue.

Daniel a gemeras boulou gres druz, hag a guzas pek ha reun er boulou-ze. Ho zeurel a reas da c'houde d'an dragon, hag hemant ho lounkas hag a varvas buan. « Gueleit breman, eme ar prophet d'ar roue, gueleit piou a adorac'h. »

Nak a finesaou fall en deus an diaoul evit deseo an dud! Trechet eo bet goulkoude gant ar prophet Daniel. Ni, m'hon eus sonj da bedi Doue, a vezo ive treac'h d'an drouk-spered.

KENTEL 82. — Daniel e fos al leoned eun eil guech

Babylonis a yeas drouk bras enno pa veljont en doa Daniel bruzunet skéuden Bel ha lazet an dragon. Mont a rejont en ho c'hounnar, da gaout ar roue, da c'houlen ma vije taolet ar prophet e fos al leoned. Ar roue, gant aoun razho, a roas d'ezho ho goulén, ha Daniel a oue taolet eun eil guech d'al leoned gouez, met al leoned na rejont drouk ebet d'ezhan.

Lezet e ouent heb tam epad c'houec'h dervez, met na gredjont ket fouch ouz servicher bras an Oll C'halloudek, ha goulskoude, bez e oa eno seiz leon.

Ar prophet Halbacuc a veve, d'ar mare-ze, er Judee. Eun dervez, pa oa o paoues trempa eur podad souben d'an eosterien a laboure en he bark, e teuas eal Doue dirazhan: « Kas, emezhan, ar podad souben-ze d'an den devot Daniel, a zo e fos al leoned, e Babylon — Aotrou, a respountas Halbacuc, me n'oum bet biskoaz e Babylon, ha n'ouzon ket e pe leac'h ema ar fos-se. »

E leac'h choum da gaozeal, an eal a grogas en Habacuc dre he benn, hag hen dougas; souben hag all, divar bouez he vleo, azioc'h fos al leoned e Babylon. « Daniel, servicher Doue, eme neuze Habacuc, resev ar pred a zigas Doue d'id. — Aotrou Doue, eme ar prophet, c'houi o peus sonj euz ar re ho kar. » Sevel a reas kerkent evit debri.

Eal Doue a gasas Habacuc en dro, ker buan ha ma oa deut, hag hel lakeas brao bras adarre en he di.

D'ar zeisved dervez, ar roue a deuas da lenva e kichen fos al leoned, rak en despet d'ezhan eo en doa great teurel Daniel er fos-se, met kaout a reas ar prophet leun a vuez, azezet e kreiz al leoned. Youc'hal a reas kerkent: « Bras oc'h, o Doue Daniel! » hag e reas teurel er fos ar re o doa diskuillet ar prophet d'ezhan: debret e ouent dioc'htu.

Setu aze eur roue bras, Cyrus, hag a ra drouk, en despet d'ezhan, o varn eun den divlam, Daniel, da veza taolet d'al leoned da zebri. Plega a ra d'ar re fall. Ped ha ped all a ra evel dhan, a zent ouz ar re fall abalamour m'int mad da youc'hal. Greomp hon dever penn da benn, pa anavezimp anezhan.

KENTEL 83. — Ar Messias a benn 70 sizun

Ar prophet Daniel en deus resevet sklerijen var galz traou digant an Aotrou Doue, ha setu perak en deus ho diskleriet da vugale Israel. Unan euz he lavarou talvoudusa a zo he-man: « Eun dervez ma peden a greiz kalon, Doue a reas d'an eal Gabriel dont d'am c'haout. « Dek sizun ha tri-ugent, emezhan, a zo merket gant Doue a benn ma teuo var an douar an Oll Zantel. »

« Urz a vezo roet da zevel a nevez kear Jerusalem; azalek an urz-se betek amzer ar roue Messias, e

tremeno da genta seiz sizun hag a vezo implijet o sevel ar mojeriou hag an tiez. Dont a raio, da c'houde, diou zizun ha tri-ugent, ha var lerc'h, ar C'hrist a vezo lakeat d'ar maro. Ar bobl a dle hen nac'h, na vezo mui he bobl. Er zizun ziveza, ar C'hrist a startaio he unani gant ar boblou paian. E kreiz ar zizun-ze, ar sakrifikou a vezo taolet a gostez, ha templ Jerusalem a vezo sklabezet ha dilezet. »

Ar zizunio-ze a oa sizunio-ze a vloavezio-ze. An urz a zo hano anezhan er penn kenta eo an urz a roas ar roue Artaxersès er bloaz 456 araok ginivelez Hor Zalver. Dek sizun ha tri-ugent divezatoc'h, da lavaret eo 490 vloaz da c'houde, ar Messias, da lavaret eo Jesus-Christ, a skuille he c'hoad var Menez Kalvar evit silvidigez an oll dud.

Divar neuze, sakrifikou al lezen goz a oue dalvez.

Nak a zoursi en deus kemeret an Aotrou Doue da zigas da zonj alies da vugale Israel e tlie genel d'ezho eur Zalver, ar Messias. Doue a felle d'ezhan rei kalon d'ar Juzevien evit m'o defe kendalc'het d'he zervicha.

Ni, n'emaomp ket var c'hed euz eur Zalver da zont, pa 'z eo guir eo deut, met var c'hed emamp euz ar baradoz hon eus da c'hounit. Doue a sklerijenne pobl Israel dre ar bropheted, hag ar zakrifikou a ginnigent d'ezhan a dalveze d'ezho grasou kaer. Ni hon eus an Aviel d'hor sklerijenna, hag ar zakramanchou en deus savet Hor Zalver d'hor c'hennnerza, leac'h hon eus da drugarekat an Aotrou Doue kant guech ha mil guech muioc'h eget ar Juzevien guech all. Bezomp mad da dostât ouz ar zakramanchou-ze, rak oll zakrifikou al Lezen Goz ne oant nemet eur skeuden euz an oferen.

KENTEL 84. — Pobl ar Juzevien goude an harlu

Er bloaz 538 araok ginivelez Jesus-Christ, Cyrus a roas aotre d'ar Juzevien da zistrei en ho bro,

renta a reas d'ezho zoken al listri sakr aour hag arc'hant en doa laeret Nabuchodonosor dioc'h templ Jerusalem. Var dro 50.000 den euz Juda hag Israel a zistroas d'ho bro, renet gant Zorobabel ha gant ar beleg bras Josue. Seiz miz da c'houde, an oll en em vodas e Jerusalem: aoter ar sakrifisou a oue savet a nevez, setu ma oue gellet henori Doue evel ma oa dleet. Neuze ar Juzevien a stagas gant eul labour all: sevel an Templ en dro. Ar Samaritaned a c'houennas rei ho zikour evit ober al labour, met ar Juzevien o doa difiziâs anezho, hag a lavaras nam.

E leac'h sikour, ar Samaritaned a glaskas neuze freuza al labour, met ar Juzevien a yeas var araok. Evelato, a benn eur pennad, roue Babylon a viras na vije labourer ken vardro an Templ.

Seitek vloaz divezatoc'h, er bloaz 521, ar Juzevien a boanias adarre da beurzevel an Templ, ha pennou bras Babylon a oue a du gantho en dro-man. Aggee ha Zakarias, propheted ar guir Doue, a gernerzas al labourerien dre ho c'homzou. Meur a hini euz ar re goz etouez ar Juzevien a skuille daelou o velet paourentez an templ nevez, e leac'h ma oa ker pinvidig an hini kenta, met Aggee a zisklerias, a berz Doue: « An ti-man a vezo treac'h d'an hini kenta, rak ama e roin ar peoc'h. »

Evit guir, an templ nevez a dlle gullet Jesus, ar Messias, ar roue a beoc'h. Pa oue achu an templ, e oue lakeat eun urz kaer etre al levited hag ar veleien, hag ar Juzevien a c'hellas kinnig sakrifisou d'ar guir Doue, evel guechall.

N'eo ket aoualc'h da eun den beza pinvidig evit plijout da Zoue, ma ne vir ket ar vertuziou kristen, he ene a zo paour. Vad a ra d'eun iliz beza kaer ha pinvidig, rak ar gristenien a bedo devotoc'h en iliz-se; met n'eus fors peger paour e vezo eun iliz, ma 'z eus guir

gristenien o pedi ennh, Doue a raio eur zell karantezus varnhi ha varnho.

KENTEL 85. — Esther, pried Assuerus (478 ar. J. C.)

Kalz euz ar Juzevien a oa distroet d'ho bro, meur a hini, evelato, a oa choumet etouez tud Babylon. Uran anezho, Esther, a oa koant evel an deiz, hag a oue kemeret da bried gant ar roue Assuerus. Eontr Esther, Mardochee he hano, a veze alies var dro lez ar roue evit beilla var he nizez: savetei a reaz buez Assuerus o tiskuil d'ezhan daou euz he ofiserien hag a oa en em glevet evit he laza.

Aman, ministr bras ar roue, lorc'h ennhan abalamour d'he renk, a felle d'ezhan ober d'an oll plega ho glin dirazhan, evel dirak Doue. Mardochee hebken a joume dizent: « Ne adoran nemet Doue, » emezhan. Drouk ennhan ouz an den-ze, Aman a reas he zonz da goll Mardochee, hag an oll Juzevien, he genyroiz, ganthan.

Dua a reas kement bugale Israel dirak ar roue, ma lavaras heman d'ezhan: « Grea ar pez a giri euz ar bobl-se, he arc'hant a vezo d'id, evit ar boan a gemeres. » Nak ar roue, nak Aman na ouient e oa Esther merc'h ar Juzevien.

Aman a zougas eta an urz kriz-man da oll gouarnerien bro Babylon: « Ober a reot laza, en deiz man deiz, ar Juzevien a zo dindan ho kalloud. » Mistri vras ar vro en em lakeas e tro da zenti.

Kerkent ha ma klevas hano euz ar zetans kris-se, Mardochee a gomzas d'he nizez: « Red eo d'eoc'h pedi ar roue, hag ober d'ezhan terri an urz-se, douget en he hano. — Den ebet, eme ar rouanez, nemet galvet e ve gant ar roue he-unan, na c'hell mont dirazhan, dindan boan a varo. — Kollet e viot koulz

hag ar re-all, ma na rit netra evit difen ho pobl, eme Vardochee. Savet oc'h bet gant Doue er renk a rouanez, marteze evit ma vezo easoc'h d'eoc'h savetei tud ho ouenn. — Mont a rin dirak Assuerus, eme neuze Esther, e riskl va buez, met grit da Juzevien Babylon yun ha pedi epad tri dervez. Me a yuno, dioc'h va zu, gant va flac'hed, ha da c'houde ez in, e riskl va buez: mar tlean mervel, e varvin. »

Peger fur eo ar rouanez-se! Mont a raio, evit klask savetei he fobl, met goulenn a ra yun ha pedennou, hag e leac'h poania da blijout d'ar roue, e klask plijout d'an Aotrou Doue da genta. Eno ema ar guir furnez.

KENTEL 86. — Esther hag Aman

En trede dervez, Esther, skuizet gant ar yun, a 'z eaz dirak ar roue Assuerus. Ar roue, pa velas Esther, a zavas divar he drôn aour, hag a gennerzas anezhi. « Petra fell d'eoc'h? emezhan. Ha pa c'houlenc'fac'h diganen an hanter euz va rouantelez, m'he roio d'eoc'h. — Deuit da leina ganen varc'hoaz, eme ar rouanez, c'houi hag Aman, ha neuze e komzin. » Assuerus a lavaras ia, hag Aman a zistroas d'ar gear lorc'h ennan: pedet e oa da leina gant ar roue hag ar rouanez.

Pa 'z eas Aman dre or vras al lez, e velas eno Mardochee, met heman na blegas ket he c'hlin dirak ar ministr galloudus. Setu ma lavaras Aman d'he dud, pa oue distroet en he gear: « Grit sevel eur groug huel dirak an ti, a vel d'an oll, rak ober a rin staga Mardochee ouz ar groug-se, varc'hoaz. »

En nosvez-se, ar roue Assuerus na c'hellas ket kouskat. Evit dizinoui en he vele, e reas lenn dirazhan eur pennad euz histor he vuez. Pa zigouezas al lenner gant ar pezh en doa great Mardochee evit savetei ar roue, heman a c'houlennas: « Pe seurt

digoll en deus bet an den-ze goude m'en deus saveteat huez he roue? — Digoll ebet, eme ar zervicherien. — Piou, a c'houlennas neuze ar roue, a glevan aze o vale en tu all d'an or? — Aman eo, eme an ofiserien. — Grit d'ezhan dont dirazon, » eme Assuerus.

Ar ministr bras a oa deut abred kaer, da c'houlenn digant ar roue maro Mardochee. Assuerus a lavaras d'ezhan: « Pe s'urt a dleer d'ober evit eun den hag a fell d'he roue he henori? » Lorc'h bras ennan o klevet ar goulenn, rak Aman a zanje e vije an enor-ze evithan, ar ministr a respontas: « An den a fell d'ar roue he henori, a vezo roet d'ezhan guiskamant ar roue, sevel a raio var unan euz kezek ar roue, hag eun ofiser a renk huel, var droad ha krog e penn al loen, a youc'ho dre ma kerzo en he gichen dre ruiou kear: « Setu aze ar pezh a reer evit an hini ma fell d'ar roue henori. — Kea, eme neuze Assuerus, ha gra kement-se evit Mardochee. »

Aman, goloet a vez, a heuillas penn da benn urz ar roue. Mont a reas da c'houde, da leina gant ar rouanez. Pa c'houlennas, en dro-man, Assuerus diganthi: « Pe seurt a fell d'eoc'h, Esther? » hi a respontas: « Roit d'in va buez, Roue, d'in ha d'am fobl a bez. Rak ni a zo taolet da vresa dindan an treid, evit beza lazet. Goasa zo, hon enebour a ra kement-se gant asant ar roue. — Ha piou an den a zo ker galloudus-se? eme Assuerus: — An enebour fallakr-ze eo Aman a velit dirazoc'h. » Pa glevas komzou ar rouanez, ar ministr bras a jenchas liou.

Prest goude, Aman a oue staget ouz ar groug en doa great sevel evit Mardochee, hag ar roue a zifennas grons ober an distera drouk d'ar Juzevien.

Esther a zo eur skeuden euz ar Verc'hez gloriüs Vari. Esther e deus saveteat pobl ar Juzevien, ar Verc'hez e deus saveteat ar bed dre c'hoad he Mab Jesus. Hirio

c'hoaz, an Itroun Varia na bouez da c'houlén trugarez evit an dud, pa vel an Aotrou Doue prest da skei ar re a vev er stad a bec'hed.

KENTEL 87. — Esdras (398 ar. J. C.) ha Nehemias

Ar beleg Esdras a oue aotreet gant ar roue Artaxerxes, da zistrei da Jerusalem. Vardro 2.000 a Juzevien hen heuillas. Esdras a reas d'ar Juzevien kas en dro, da di ho zud, ar merc'hed euz a ouenn ar baianed, o doa kemeret evit priedoù, en desped da lezen Doue, hag a reas skriva gant evez lezen Doue.

Tri bloaz divezatoc'h, eur beleg all, santel hen ive, Nehemias, a c'houlennas aotre digant roue Babylon da zevel a nevez mogeriou Jerusalem. Nehemias a oa deut mad d'ar roue, kounje en devoue.

Ar bobl oll a boanias a zevri da ober buan al labour bras-se. Peb rum labourerien en devoue he dachen labour, eur rum paotred yaouank a veze atao var zav, prest da ziarbenn an enebourien o doa c'hoant miret na vije kaset al labour-ze da benn. Al labourerien zoken a zouge eur c'hleze ouz ho c'hostez, evit gellout en em ganna ho unan, ma vije savet re a veac'h var ho difennourien.

Ouspenn ma kendalc'has d'ober d'an dud kinnig sakrifisou, Nehemias a reas miret gant evez dervez an Aotrou Doue, rak en dervez-se e veze lennet lezen Doue hag e veze displeget d'ar bobl. Pa oue achu mogeriou kear, ar beleg santel a reas d'ar bobl oll nevezi he unani gant an Oll C'halloudek.

Nehemias a oue sikouret gant Malachi, an diveza euz Propheted al lezen Goz. Malachi a gomze en hano Doue, evit digas da zoni d'an oll euz ho deveriou e kenver ho C'hrouer. Hen eo en deus gullet, pell araok, sakrifis santel an oferen, hag en deus hen diskleriet d'an dud. « Euz ar Zav Heol d'ar C'huz Heol, va hano a zo bras etouez ar boblou, eme

an Aotrou Doue. E peb leac'h, e kinniger d'am hano eun hosti pur. »

Na peger kaer eo sakrifis santel an oferen! Kinniget e ves euz an eil penn d'egile euz ar bed, rak an oferen na baoues morse var an douar. Dre ma ra an heol tro ar bed, e vel atao beleien o sevel ouz an aoter e tu pe du, hag en doare-ze, ar zakrifis kaer, sakrifis Hor Zalver he-unan, na ehan morse.

KENTEL 88. — Heliodor kastizet

Ar Juzevien a vevas epad kalz bloaveziou dindan galloud ar boblou all. Daou c'hant vloaz benag araok ginivelez Hor Zalver, ar Judee a oue renet gant Antiokus, roue ar Syri.

Eur Juzeo, Simon, a zisklerias d'ar roue Seleukus, mab Antiokus, e oa tenzoriou bras kuzet e templ Jerusalem. Ar roue a gasas Heliodor, unan euz he ofiserien, d'ho c'herc'hat, hag heman a yeas laouen en hent.

Pa zigouezas e Jerusalem, an ofiser a c'houlennas digant ar beleg bras, Onias, ha kalz arc'hant a oa, e guirionez, en templ. Onias a respontas : « Bez' hon eus ama, guir eo, eur guenneg benag, met an arc'hant-se a zo tra ar vinored, an intanvezed, ar beorien. Na c'hellit ket, emezhan, laeres eun tenzor lakeat en eun templ hag en deus brud da veza santel dre ar bed oll. »

Heliodor a lavaras neuze : « Ar roue en deus roet he urziou d'in, ho miret a rini. » Antronoz eta, an ofiser a deuas d'an templ, epad ma oa mantret an oll, o velet al laeroni sakrilach en doa c'hoant ober. Met Doue a verkas he Oll C'halloud en dervez-se. Soudarded Heliodor a oue diskaret en eun taol pa dosteant ouz an templ, hag a velas eur marc'hek kaer ha spountus, gant armou hag o doa doare da

veza armou aour, o tont varzu ho mestr Ar marc'h a bilas an ofiser gant he zaou droad araok, neuze daou zen yaouank skedus, guisket pinvidig, leun a dan hag a nerz, a roas eur zaead taoliou fouet da Heliodor, a oa eno etrezho ho daou.

Savet e oue erfin divar an douar, ha douget er meaz eu an templ, toc'hor bras da velet. He vignouned a bedas ar beleg bras evithan, neuze Onias, gant aon na vije bet guall gaset divezatoc'h ar bobl gant roue ar Syri, a ginnigas eur zakrifis evit an ofiser dizoue. An daou zen yaouank a oue gulet neuze a nevez, hag a lavaras da Heliodor : « Lavar bennoz Doue d'ar beleg bras Onias, rak abalamour d'ezhan eo en deus Doue miret da vuez. Kea breman, te, gant da hent, ha lavar d'an oll nerz burzudus an Oll C'halloudek. » Hag an dud yaouank-se, daou eal mechans, ne ouent mui gulet.

An avaristed a zo fall dreist : an neb piou benag en deus an tech-se na raio van dioc'h sakr na dizakr. En amzer Hor Zalver, marc'hadourien angravet ho c'halon gant ar c'hoant gounit arc'hant, o doa savet ho staliou en templ. Hor Zalver ho c'hasas kuit abenn diou vech. Diouallit rak an tech-se, ma na vezit ket kastizet er bed-man, Doue ho kavo er bed all.

**KENTEL 89. — Antiokus, ar roue dizakr.
Merzerenti Eleazar**

Antiokus Epiphan, kerkent ha ma oue roue, a glaskas dougen ar bobl da drei kein d'ar guir Doue, evit adori an idolou. Guerza a reas karg ar beleg bras d'eun den ken dizakr hag hen, Jason he nao, ha kas a reas ar beleg santel Onias d'an harlu.

Goude beza bet e brezel oc'h an Ejiptianed, ar roue fallakr a reas d'he zoudarded laza an dud, ha laeres an traou a briz e kear Jerusalem. Daou ugent

mil den a oue lazet, kement all a dud a oue guerzet evel sklaved, hag an oll Juzevien o devoue urz da adori an doueou faoz. Skeuden falz doue bras ar Romened, Jupiter, a oue savet var aoter ar guir Doue, e templ santel Jerusalem. « Adori an doueou faoz pe vervel, » setu ger mevelien ha barnerien Antiokus. Kalz tud a oue merzeriet.

Eleazar a oa eur beleg santel, o ren he zek vloaz ha pevar ugent. Kinniget e oue d'ezhan eun tam kig moc'h da zebri, met diskleria a reas dioc'htu : « Lezen Moysez a zifen grons debri euz ar c'hig-se, ha n'ez in ket eneb lezen Doue. »

Tud fur, var ho meno da viana, dre eur garantez fall evit an den koz, a lavaras d'ezhan : « E leac'h kig moc'h, ni a roio d'eoc'h kig all, kig ha n'eo ket difennet gant lezen Doue, grit an neuz da zenti, hag e saveteot ho puez. — Divalo e ve d'in, eme an den santel, rei skouer fall d'an dud er giz-se. Ar re yaouank a c'helfe kredi en deus Eleazar, d'an oad a zek vloaz ha pevar-ugent, renet buez ar baianed, evit astenn he vuez eun nebeudik amzer. Ha pa c'hellen tec'het dioc'h etre daouarn an dud, na c'hellin ket tec'het dioc'h etre daouarn Doue. Abalamour daze'ta, eo guell ganen mervel evit lezen Doue. »

Kaset e oue d'ar maro, ha lavaret a reas a greiz gouzanv he verzerenti : « Aotrou Doue, kris eo ar poaniou a zivoaskan, met va ene a zo eürus, rak evit ho lezen zantel eo e c'houzanvan. »

Pebez skouer kaer, evit he genvroiz neuze, evidomp-ni breman !

**KENTEL 90. — Merzerenti ar seiz breur
Makabée hag ho mam**

Eur maread Juzevien a oue merzeriet var urz ar roue kris ha dinatur : mes ar Skritur Zantel a veul ispisial ar seiz breur Makabee hag ho mam.

Goulennet e oue digantho debri euz ar c'hig difennet gant lezen Doue, met int-hi a respountas nan, evel Eleazar. Neuze, e ouent oll skourjezet, en eun doare didruez. « Mervel a raimp, eme ar c'hosa anezho, kentoc'h eget nac'h lezennou Doue hag hor bro. »

Ar roue a reas tomma kaoteriou kovevr, da c'houde reas diskroc'henna penn an den yaouank, trouc'ha d'ezhan he deod, he dreid hag he zaouarn, hag he deurel er gaoter bero da zevi.


An eil kosa a c'houzanvas, d'he dro, tourmanchou he vreur, met diskleria a reas da Antiokus, araok mervel : « Lemel a res diganeomp, Roue, buez ar bed-man, met hon Doue he rento d'eomp. »

Digant an trede, ar vourrevien a c'houlennas he deod. He ginnig a reas kerkent d'ezho, epad mac'h astenne he zaouarn da drouc'ha, en eur lavaret : « Doue eo en deus roet d'in an izili-ze, hen a ouezo ho renta d'in eun deiz. »

Ar pevare a zisklerias d'ar roue, epad m'he verzeriet : « Ni a zavo euz ar maro evit beva euz ar guir vuez, te a zavo ive euz a varo eun deiz, met na vev ket euz ar guir vuez, te ! »

Ar pemped hag ar c'houec'hved a zisklerias d'ar roue : « Kastizet oump abalamour d'hor pec'hejou er bed-man, te a vezo kastizet er bed all. »

Antiokus a lavarás d'ar yaouanka : « Pleg d'am urz, ha me roio d'id madou hag henoriou, » met an den yaouank a joumas stard evel he vreudeur. Ar roue a lavarias neuze d'ar vam : « Gra d'ezhan plega. » E leac'h senti ouz Antiokus, ar vam galonek a gomzas d'he c'hrouadur e yez an Hebreed, evit miret na vije ententet gant ar roue digernezh hag he dud : « Mabik, emezhi, sell ouz an nenv, krouet eo bet gant Doue, da vreudeur, goude ho foaniou a vev eno e frugarez an Oll C'halloudek. »



An den yaouank a youc'has : « Petra c'hortozit ? Na zentan ket oc'h ar roue, senti a ran oc'h Doue. » Merzeriet e oue guasoc'h c'hoaz eget he vreudeur.

Ar vam a oue merzeriet da ziveza, setu e c'heller diskleria e oue eiz guech merzerez.

Peger kaer eo kurunen ar verzerien-ze er baradoz ! Ar

Ar Seiz merzer Makabee hag ho mam.

poaniou o deus divoasket a zo bet spountus, hag ous-penn-ze, gouzanvet o deus araok Hor Zalver. Merzerien al Lezen nevez, sant Stephan, sant Laurans hag ar re all a c'helle sonjal ha lavaret: « Mab Doue en deus divoasket poaniou guasoc'h eget va re, nerz a roio d'in » met ar Makabeed a zo bet merzeriet araok al Lezen Nevez. Kaeroc'h a-ze eo ho c'hurunen.

KENTEL 91. — Mathathias en em zifenn

Antioкус en doa kaset ofiserien dre ar Judee evit ober d'an dud adori doueou ar baianed. E kear Modin, eur beleg, Mathathias, a zisklerias a vouez huel: « Ha pa deufe an oll boblou da zenti ouz ar roue Antioкус, va breudeur, va bugale ha me a zalc'ho mad da greden hon tud koz. »

Epad ma komze en doare-ze, eur Juzeo a deuas da ginnig eur zakrifis d'an idolou. Mathathias a lazaz an den-ze, hag a lazaz, da c'houde, ofiser Antioкус a oa var al leac'h. Neuze, e c'halvas var he dro ar re a c'hoantea miret lezen Doue, hag e tec'has er menezioù, gantho ha gant he vugale.

Eur c'halz tud a heuilas ar beleg dispount e kreiz ar menezioù gouez, met soudardet Antioкус a zispennas ho roudou, hag a zailhas varnho d'ar zadorn, deiz an ehan evit an Israelited. Ar geiz na gredjont ket en em zifenn deiz santel-ze, ha var dro eur mil amezho a oue lazet.

Mathathias a zisklerias neuze: « Doue na c'houlle ket diganeomp lezel peb kabestr gant ar re fall, var zigarez m'eo ar zadorn. Ni en em zifenna hivi-ziken, en dervez-se koulz hag en dervezioù all. » Sevel a reas eta eun armee, hag e pilas, gant sikour he vugale, aoteriou an doueou faoz. Pa oue varnez mervel, e lavaras d'he dud: « Lakit Juda, an trede euz va mibien, e penn hoc'h armee: krenv eo. » Juda a oue hanvet Makabee, da lavaret eo Morzol, rak bez' e oue morzol an enebourien.

KENTEL 92. — Juda Makabee hag Antioкус (166-161 ar. J. C.)

Juda a oue eun den a vrezel dispar: trec'hi a reas armeou ar roue Antioкус, ha pignat a reas da Jerusalem. Kempen a reas an templ, adsevel a reas aoter ar sakrifisou, difen a reas menez Sion gant mogerioù ha tourioù huel.

Antioкус a oa bet o stourm ouz ar Persed, met kollet en doa gantho. Neuze, en he gounnar, e touas var he le: « Dstruja a rin Jerusalem. » Skoet e oue gant justis Doue pa oa en hent: koueza a reas guall glanv. He gorf oll a oa brein, evel poaz, hag a daole eur c'hoez fall spountus. Neuze e savas keuz gantho, hag e promettas beza leal e kenver ar Juzevien, « met he geuz ne oa ket guirion, » eme ar Skritur Zakr. Mervel a reas e kreiz poanioù euz ar re voasa.

Prestik goude, en eun emgann vras, Doue a roas skoazell d'he vir zervicherien. Guelet e oue, pa oa tomm a stourmad, pemp marc'heg skedus, savet var gezek pinvidig, hag a strinkas luc'hed ha birou oc'h an enebourien: ar re-man spountet oll, a dec'has prim.

Eun dervez ma oa emgann vras etre ar Juzevien hag ar baianed, Eleazar, breur Juda, a velas etouez an daou ha tregont oliphant a vrezel o doa an enebourien, unan hag a oa guisket kalz pinvidikoc'h eget ar re all. Eleazar a zonjas: « Ar roue a dle beza var an oliphant-se. » Mont a c'hellaz betek al loen bras, ha neuze e plegas dindannhan evit he doulgova gant eun taol lans. An oliphant a gouezas maro en eur laza Eleazar ha meur a hini euz ar Syrianed, met ar roue n'en devoe drouk ebet, ne oa ket eno.

En eun emgann vras all, meur a hini euz ar

Juzevien a oue lazet. Pa ouent divisket evit beza sebeliet, e oue kavet varnho traou a briz hag a oa difen d'ho c'hemeret, hervez lezen Doue. An armee oll a bedas da c'houlenn pardoun evit ar zoudarded-se, ha Juda a reas eur gest evitho, hag a gasas an arc'hant da velleien Jerusalem. « Eun dra vad ha talvoudus eo pedi ar re varo, » eme ar Skritur Zakr var gement-se.

Ar zoudardet-se a stourme evit difen Doue hag ho bro, setu ma reant eun dra gaer, ha Juda en doa fizians e teufe Doue da bardouni d'ezho ho fec'hed, gant sikour pedennou an dud santel. Sikour a c'hellomp an anaoun dre hor pedennou.

KENTEL 93. — Maro Juda Makabee Var c'hed euz ar Messias

Hano Juda Makabee a oue brudet bras e broiou ar Zao Heol, rak eur mestr e oa var dachen an emgann.

Eun nosvez, pa oa varnez ober eur stourmad kalet oc'h Nikanor, jeneral bras ar Syrianed, e velas dre he gousk ar beleg santel Onias, o rei he vennoz da vugale Israel. Guelet a reas, er memez amzer, ar prophet bras Jeremi hag a roas d'ezhan eur c'hleze aour, en eur lavaret : « Kemer ar c'hleze-ze, Doue eo hen ro d'id ; ganthan, te a ziskaro enebour pobl Israel. » An tri mil soudard a heuille Juda a yeas dispount d'an emgann, goude beza klevet hano euz an traou burzudus-se : sur e oant euz sikour Doue. Ar stourmad a oue kalet eur pennad, met ar Syrianed a oue puluc'het. Pemp mil ha tregont anezho a joumas maro var an dachen, ha Nikanor en ho zouez. Bugale Israel a drugarekas Doue, hag a veulas Juda.

Nebeut amzer goude, ar brezellour bras a zinas

eun emgleo gant ar Romened, a deue da veza gal-loudusoc'h bemdez. Tud an diou vro a dlle en em zikour, pa vije ezom.

Dizale, ar Syrianed a zailhas a nevez var douar ar Juzevien gant eun armee vras. Soudarded Juda a oa eat d'ar gear en dro, na joume ganthan nemed eiz kant den. Lavaret a reas d'he dud : « Mar deo deuit an heur merket gant Doue, marvomp evit hor bro, » hag e sailhas gant nerz var he enebourien. He zorn a oa ker kalet, he daoliou ha taoliou he zoudarded ker pounner, ma rankas ar Syrianed a oa dirazhan, plega ha tec'het en he raok.

Eul loden euz an enebourien a gela has evelato Juda hag he dud dioc'h an adrenv, ha ken niverus e cant, ma oue trec'het gant hir amzer, pa oue feaz o skei. Mervel a reas en doare-ze, hag ar peb brasa euz he zoudarded ganthan. Israel a zougas kanv d'ezhan epad eiz dez.

Na kaer eo maro eun den hag a ro he vuez evit Doue hag he vro !


Breudeur Juda a renas ar bobl var he lerc'h. Pa varvas Simon, an diveza anezho, he vugale o devoe ar galloud, an eil goude egile, hag he vugale vian da c'houde.

Tri bloaz ha tri-ugent araok ginivelez Jesus-Christ, soudarded Rom, renet gant Pompee, a zailhas var ar Judee, hag a gemeras ar vro dre nerz.

Vardro ar bloaz 40 araok Hor Zalver, Herodes, euz an Idumee, a lazas an diveza euz a ouenn ar Makabeed, hag a gemeras ar gurunen a roue. Ar Juzevien a glaskas kaeat outhan, met soudarded Rom a zikouras Herodes da gaout an treac'h. Ar Makabeed a oa euz gouenn Juda, ar pevare euz bugale Jakob, e leac'h Antiokus a oa euz an estren.

Divar neuze, e oue sklear d'ar guir Juzevien e oa tost amzer ar Messias, rak Jakob en doa lavaret: « Ar galloud a joumo e lignez Juda, betek ma teuo an Hini a vezo digaset, hag a vezo esperans ar boblou. »


Komzou an Oll-C'halloudek a deu atao da vir.



AN TESTAMANT NEVEZ

Buez Hor Zalver Jesus-Christ :

Mab Doue en em c'hreat den



Eur ger araok komz euz an Testamant Nevez

Bro Hor Zalver

Hano mad bro Hor Zalver eo ar Palestin: kaout a reer ennhî ar Judee, ar Galilee hag ar Samarie.

Ar Judee, diazezet etre ar ster Jourden hag ar mor Mediterranee, a zo treuzet dre he c'hreiz gant torgennou huel, kalz hueloc'h eget menez Are. Ar gear benn a oa Jerusalem, ar gear santel, gant templ kaer ar guir Doue ennhî.

Ar Galilee, en Hanter-noz euz ar Judee, a oa eur maread paianed ennhî, bez' e oa var ribl lenn Jenesareth, eul lenn » gaer hag a oa goloet gant bagou ar besketaerien. Jesus a oa ganet ha savet er Judee, mes eur c'halz euz he ebestel a oa euz ar Galilee. Tud ar Judee a rea fae var dud ar Galilee.

Ar Samarie a veze great an hano-ze anezhi dioc'h hano he c'hear benn, Samarie. He zud a oa hironed, bugale Juzevien hag Assirianed. Juzevien ha Galileaned n'o doa nemet disprijans evitho, rak ar Samaritaned n'ez eant morse da Jerusalem da ginnig sakrifiou d'ar guir Doue, savet o doa eun templ evitho ho-unan var ar menez Garizim, tostik da Zamarie.

An tri derrouer-ze asambles, da lavaret eo, ar Palestin pe ar Judee oll, a zo, var nebeud a dra, ker bras ha pemp eskopti Breiz Izel. Ar vro a zo kalz tomoc'h eget Breiz: kaout a reer ennhî, olivez, amandez, oranjez ha kalz frouez all, frouez ha ne vezont kavet er Frans, nemet er C'hresdeiz.

Renerien ar vro

Evel m'eo bet lavaret er gentel ziveza euz an Testamant koz, Herodes, gant sikour ar Romened, a reas he vestr d'ar Palestin a bez. Pa varvas Herodes, prest goude ginivelez ar Mabik Jesus ha merzerenti an Innosanted santel, ar Palestin a oue rannet etre he dri vab, Arkelaüs, Antipas ha Philipp, mes hini anezho na resevas an hano a roue digant **mestr bras Rom.**

Heman a dorras dizale Arkelaüs diouz he garg, **hag a roas ar galloud bras** er Judee d'eun den euz he zorn, d'eur Romen, gant an hano a c'houarner. En amzer Hor Zalver, Pons Pilat eo a c'houarne, choum a reas dek vloaz e karg, barn a reas Mab Doue d'ar maro. Herodes Antipas, **mestr ar Galilee**, a veze great roue anezhan, daoust n'en doa neb guir d'an hano-ze ; ober a reas dibenna sant Ian Vadezour, ha goapât a reas Jesus, gant oll dud he lez, deiz guener ar Groaz.

Ar Juzevien o doa guir d'en em varn etrezho, eünoc'h e oa eur varnedigez douget gant tud euz ar vro, hag a anaveze lezennou ar Juzevien, kalz guelloc'h eget an estren. Al lez-varn huela, hanvet gant ho ar sanhedrin, a oa daouzek kuzulier ha tri ugent ennhan : oll e oant Juzevien. N'o doa mui ar galloud da varn den d'ar maro.

Ar relijion er Judee

Ar Juzevien, koulz lavaret oll, a adore ar guir Doue, evelato, rannet e oant e daou rum : ar Pharisianed hag ar Sadduseaned. Ar Pharisianed a oa lorc'hus hag ourgonillus : deski a reant lezen Doue, hag he miret a reant, var ho meno da viana, parfetoc'h eget an dud all. Bez' e oant var c'hed euz ar Messias, mes kaout a rea d'ezho e vije eur roue

krenv ha galloudus, hag a rafe d'ar Juzevien beza treac'h d'an oll boblou all, er brezel hag en emgan-nou. Kement a respet o doa evit lezen an ehan da zadorn, m'o deus bet drouk ouz Hor Zalver ben-niget, evel m'her guelimp e kenteliou an Aviel, abalamour ma roe ar pare d'an dud en dervez-se.

Ar Sadduseaned a grede eul loden hebken euz guirioneziou ar Skritur Zakr ; lavaret a reant : n'eus ket a elez, ne resussito ket ar c'horfou, rak an eneou, emezho, a varv koulz hag ar c'horfou.

Ar Samaritaned a zouge respet d'ar pemp leor kenta euz ar Skritur Zakr, mes ne anavezent nikun euz an oll Leoriou santel all. Abalamour da-ze, ar guir Juzevien a zisklerie ne oant ket e niver bugale Doue. Kinnig a reant ho zakrifisou, n'eo ket e templ Jerusalem e oa, mes var ar menez Garizim.

Ar beden hag ar zakrifisou

Ar Juzevien a ginnige ho sakrifisou da Zoue e templ Jerusalem, dre zourn ar veleien a oa euz a ouenn Aaron. Evel m'eo bet diskleriet er gentel 37 euz an Testamant Koz, labour an Aotrou Doue a veze great en templ gant ar beleg bras, mab bian Aaron. Sikouret e veze gant ar veleien, a oa euz a lignez Aaron, hi ive, hag a gane meuleudi da Zoue, a ginnige ar sakrifisou hag an ezans.

Ar veleien a oa sikouret gant eur rum all hag a oa bugale Levi, abalamour da-ze, e veze great Levi-ted anezho.

Ar baianed a c'helle pedi e porched an templ, da lavaret eo, en eur porz bras goudoret mad, mes ne c'hellent ket, dindan boan a varo, teurel ho zreid en templ, gant bugale Israel.

Pobl Israel a lide pevar gouel bras : Pask, evit derc'hel sonj euz an dervez ma oa tec'het diouz an Ejipt ; ar Pantekost, en envor euz Lezen Doue

embannet var menez Sinai; gouel an Teltou, evit derc'hel sonj euz an 40 vloaz m'en doa bevet Israel en desert; ha gouel Dedi an Templ. D'ar goueliou-ze, e veze atao eur maread tud e Jerusaleu, evit ober ho fedennou ha kinnig sakrifisou.

Er meaz euz ar goueliou-ze, d'ar zadorniou all euz ar bloaz, ar Juzevien en em vode en eun ti a beden hanvet Synagog; eno an oll a bede, renet gant unan pe unan euz ar veleien. Ar bobl a veze lennet d'ezhan pennad pe bennad euz ar Skritur Zakr, hag a zelaoue ar c'henteliou a roe eun doktor benag var ar pezh a veze bet lennet.

Er c'heariou e veze meur a zynagog, pa 'z eo guir e oa 400 e Jerusaleu; er bourkou bras e veze meur a hini, hag er c'heriadennou biana, e veza unan d'an nebeuta: eas e oa eta d'an oll ober ho fedennou d'an deiz ehan.



Leoriou santel an Testamant Nevez: an Aviel

Leor kenta an Testamant Nevez a zo an Aviel, eur ger hag a verk *kelou mad*, abalamour m'eo bet skrivet evit diskleria d'ar bed kelou mad ar Zalver en deus dichadennet an dud a oa betek neuze dindan galloud an diaoul, heb guir da gaout baradoz. An Aviel a zispleg dirak hon daoulagad Buez Hor Zalver Jesus-Christ penn da benn, gant ar peb kaera euz he oberou hag euz he lavarou. Bez' ez eo santela leor a oufet kaout, pa 'z eo guir eo Leor Mab Doue.

N'ez eus nemet eun Aviel hag a ro d'comp oberou ha lavarou Hor Zalver; evelato, an Aviel a zo bet skrivet gant pevar den santel hag e leor peb hini anezho e kavomp meur a virionez ha n'emaint ket e leoriou an Avielerien all.

Kenta Aviel a zo bet skrivet eo hini sant Vaze. Epad ma prezege Hor Zalver he Aviel, nikun euz an ebestel na skrivas he gelennadurez santel, ha pa oue pignet Jesus en nenv, den na zonjas skriva dioc'htu he gelennadurez d'an dud. An ebestel, en ho frezegennou, en ho c'henteliou, a sklerijenne ar gristenien genta a deue d'ho selaou.

Gant an amzer, ar gristenien a c'houlenas ma vijé skrivet buez Hor Zalver evit ho zikour da gaout sonj, guelloc'h ha parfetoc'h, euz oberou ha kenteliou Jesus. Sant Vaze, an hini a oa eat euz a resevoir an taillou da abostol, galvet gant Hor Zalver, a skrivas an Aviel-ze, e yez ar Juzevien.

Perak en deus skrivet he Aviel er yez-se? Abalamour m'en doa c'hoant sklerijenna he genvroiz, ar Juzevien; evit startat ar re a grede eo Jesus Mab Doue, hag ho zikour da zisplega ar virionez dirak ar pennou kalet ne felle ket d'ezho kredi.

Diskleria a ra eta buez Hor Zalver gant ar peb

brasa euz he oberou ha miraklou, evit merka eo ar Messias, mab David, a oa bet promettet d'an dud dre ar bropheted. Leor sant Vaze, skrivet ganthan er Judee, a oue buan troet e gregach, evit brasa mad ar gristenien ne ententent ket yez ar Juzevien.

Aviel sant Mark hag hini sant Lukaz

Sant Mark n'en devoue ket an heurvad, evel sant Vaz, da glevet kelennadurez dudius Hor Zalver, mes beva a reas e kounpagnunez sant Paol da genta, ha sant Per da c'houde. Epad ma oa sant Per e Rom, Mark a veze aketus da joum en he gichen, ha da zelaou he genteliou. Ar gristenien genta a c'houlennas diganthan skriva d'ezho an Aviel, evit m'o defe sonj easoc'h euz kenteliou sant Per, ar Pab kenta. Skriva a reas he Aviel e gregach.

Ar zant a ro e berr gomzou buez Hor Zalver, rak he Aviel m'eo ket tost ken hir hag hini Sant Vaze, diskoues a ra eo Jesus Mab Doue dre ar miraklou bras a reas en he vuez.

Sant Lukas, medisin, a oa euz a ouenn ar baianed, hag a oue gounezet d'ar feiz abred kaer. Heuill a reas dreist oll an abostol Sant Paol, rak mont a reas ganthan d'ar Masedoan, da Jerusalem ha diou vech da Rom.

Ar zant a skrivas an Aviel, e gregach, evit ar baianed a oa bet gounezet d'ar feiz kristen. Mad eo da verka, en he Aviel, an amzer ma prezegas Hor Zalver, ar zoursi en doa gant silvidigez an oll dud, hag an amzer a roe d'ar beden. Abalamour m'en deus ar zant-man diskleriet kalz guirioneziou divar benn Jesus krouadur, meur a hini a gred en deus goulennet sklerijen digant ar Verc'hez Vari he unan, araok skriva he Aviel.



Oberou an Ebestel hag ho Liziri

O veza ma ranke an Ebestel mont euz an eil kear d'eben evit prezeg an Aviel, ha kas sklerijen gaer ar feiz d'ar broiou all, an Ebestel o deus skrivet meur a Lizer evit startat er feiz an dud o doa kuiteat goude m'oant bet sklerijennet gantho. Sant Paol en deus skrivet 14, sant Iam 3, sant Per 2, sant Jakez ha sant Iud bep a hini. An Iliz a zoug respet d'al Liziri-ze evel d'an oll Leoriou all euz ar Skritur Zakr.

Etretant, sant Lukas a skrive eul leor all hag a zo bet lakeative gant an Iliz e renk leoriou ar Skritur Zakr : great e ves anezhan. Leor *Oberou an Ebestel*, ha diskleria a ra kalz traou divar benn ho buez azalek ma pignas Hor Zalver en nenv, da c'houel ar Yaou-Bask, betek an eil bloavez euz sant Paol, pa oue prizouniet e Rom evit an dro genta.

Al Leor-ze a ziskoues d'eomp Oberou an ebestel, e Jerusalem da genta, er Judee ha tro var dro d'ar Judee da c'houde, gant ar beachou a reas hinien-nou euz an Ebestel. Pevar euz ar zakramanchou a zo hano anezho el Leor-ze.

Aviel sant Ian hag an Apokalips

Sant Ian, an abostol ar muia karet gant Hor Zalver, a joumas pell var an douar goude an ebestel all, setu ma c'houlennas ar gristenien genta digan-than skriva an Aviel. Heuillet en doa Jesus-Christ atao abaoe an dervez kenta ma prezegas d'an dud, bez' e oa unan euz an tri abostol a zo bet test euz he oll viraklou. Skriva a reas eta he Aviel, evit startât ar gristenien genta er feiz, e gregach evel sant Mark ha sant Lukas.

Sant Ian en deus diskouezet, sklearoc'h c'hoaz eget an Avielerien all, eo Jesus Mab Doue, ha Doue evel he Dad euz an nenv. Bez' ez eus eta pevar Avieler hag o deus diskleriet d'eomp ar virionez divar benn Hor Zalver benniget, divar benn he vuez, he viraklou, he lavarou. Daou anezho, sant Vaze ha sant Ian, o deus anavezet mad Jesus, an den Doue, a zo he Ebestel; daou all o deus he anavezet dre lavarou ar re a zo bet gant ar re dosta d'ezhan.

Hag henvel eo ho lavarou penn da benn? N'int ket : nikun anezho ne lavar eur ger eneb ar virionez, mes peb hini anezho, evit meur a dra, a lavar an traou en eun doare dishenvel dioc'h ar re all. Evelse em a dud. Kasit da bardouna daou vreur gevell, grit d'ezho choum dorn ha dorn epad an oll amzer, ha goulennit digantho, d'an distro, diskleria d'eoc'h ar pez a oa brava da velet. Ho lavarou na vezint ket henvel penn da benn, dreist oll



ma c'houlennit digantho renta kount d'eoc'h, bloaz pe zaou da c'houde.

Evelse o deus great an Avielerien. Sklerijennet, sikouret int bet gant an Aotrou Doue, guir eo, mes peb hini anezho a gomz d'eomp euz eun nebeudik traou dishenvel dioc'h lavarou ar re all, setu mac'h en em zikouront, ho fevar, d'ober d'eomp anaout guelloc'h buez burzudus Mab an Oll C'halloudek etouez an dud.

Goude an Aviel, sant Ian en deus skrivet eul Leor all, an Apokalyps, hag a zo ive e renk al leoriou santel euz ar Skritur Zakr. Merka a ra, el leor-ze, an oll draou a oue diskleriet d'ezhan gant Doue, hag a zo histor an Iliz betek an derveziou diveza euz ar bed. An oll draou-ze a oue diskleriet evel var daolennou hag a zo dies bras da entent.

An Apokalyps a zo an diveza euz al Leoriou Sakr.

Setu, e berr gomzou, eur sklerijen benag var ar pevar Avieler ha var Liziri an Ebestel. Eur guir gristen n'en dezo biken re a respet evit leor santel an Aviel. Pa vezo

kanet an oferen gant tri beleg, pe mar kavit guelloc'h gant Avieler hag Abostoler, ha gullet o peus an Avieler oc'h ezansi al leor oferen, dioc'htu goude an Aviel? Renta a ra henor d'al leor-ze, abalamour m'ema komzou an Aviel ennhan.

Daoust ha gullet o peus thrôni eun aotrou Persoun nevez? He velet o peus neuze, o toui var al leor oferen, dirak ar Chaloni a zo eno e leac'h an Aotrou 'n Eskob, e talc'ho mad d'ar feiz kristen, hag he reno he barresioniz var hent ar baradoz. Toui a ra var al leor-ze, abalamour m'ema ennhan komzou an Aviel.

An aotrou 'n Eskob, en dervez ma ves thrônet, an Tad santel ar Pab, pa gemer, dioc'h dorn an Aotrou Doue, ar garg da ren an Iliz, a dou ive var an Aviel, e raint santelamant ho labour.

Daoust ha respet o peus evit an Aviel? Daoust hag he lenn a rit, gant doujans ha karantez, en iliz hag er gear?

E peb tiegez kristen e ves lennet, d'ar zul, leor an Aviel.

PENNAD KENTA

Buez kuzet Her Zalver

KENTEL 1. — Pobl Israel var c'hed eus ar Messias

An dud santel, etouez ar Juzevien, a huanade pell a oa, o c'houlen digant an Oll C'halloudek digas an Hini a dlle dont. Sklerijennet e oant bet, hed ar c'hanvejou, gant Doue he-unan, pe gant he bropheted, rak ar re-man o doa diskleriet a berz Doue, eur maread traou divar benn an Hini a oa esperans ar boblou.

Doue en doa lavaret da Adam hag Eva, dioc'htu goude ho fec'hed e baradoz an douar : « Unan euz ho lignez a flastro he benn d'ar zarpant. »

D'ar batriarched santel Abraham, Isaak ha Jakob, an Oll C'halloudek a bromettas e vije benniget an oll boblou en Hini a dlle genel euz ho lignez.

Hed ar c'hanvejou, ar bropheted a zisklerias : « Eur verc'hez eo a lakaio ar Messias er bed, euz a ouenn ar roue David e vezo, genel a raio e Bethleem, henoret e vezo gant rouaned euz ar broiou pell, prophet ha beleg e vezo, hag ober a raio burzudou bras. »

Ar bropheted o doa lavaret c'hoaz : « Mont a raio evel eur roue, savet var eun azenez, e kear Jerusalem, guerzet e vezo gant unan euz he dud, evit tregont pezh arc'hant. »

Diskleriet o doa, divarbenn he Basion : « Bez' e vezo goupeat, skoet ha dispennet gant an taoliou, roet e vezo d'ezhan guinegr evit terri he zec'hed, toulet e vezo he dreid hag he zaouarn, mervel a raio evit pec'hejou an dud, he gorf maro ne ana-vezo ket breinadurez ar bez, met sevel a raio leun a c'hloar d'an trede dervez, evit pignat en nenv. »

Amzer he c'hinivelez a oa bet diskleriet freas : « Pa vezo eat ar galloud diouz daouarn Juda, dek sizun ha tri-ugent (a vloaveziou) goude an urz da zével a nevez mogeriou Jerusalem. »

Eur prophet a zisklerie c'hoaz e c'hanje d'ar mare ma renfe ar peoc'h var ar bed.

C'houi, lenner devot, daoust ha studiet ho peus gant evez an Testamant koz ?

KENTEL 2. — An Inkarnasion

Pa rene August, impalaer Rom, var ar bed e peoc'h, Herodes, roue ganet e bro an Idumee, a c'houarné ar Juzevien : deut e oa eta amzer ar Messias.

Bez' e oa neuze, en eur gearik euz ar Judee, hanvet Nazareth, eur verc'hez hag a oa he hano Mari, merc'h Joachim hag Anna. Dimezet e oa d'eun artisan, paour, hanvet Joseph, euz lignez ar roue David evelidi.

Hogen, an eal Gabriel a oue kaset eun dervez gant Doue d'ar Verc'hez, hag a lavaras d'ezhi : « Me ho salud, o c'houi a zo leun a c'hras, an Aotrou Doue a zo ganeoc'h ; benniget oc'h dreist an oll gragez. » Ar Verc'hez a' oue nec'het o klevet ar c'homzou, hag a glasse gouzout petra oa ar zalud-se. Mes an eal a lavaras d'ezhi : « N'ho pezet aon ebet, Mari, rak kavet oc'h eus gras dirak Doue, konseo a reot, ha lakât a reot er bed eur mab hag a hanvot Jesus. Bras e vezo, hanvet e vezo Mab an Hini a zo dreist peb tra ; Doue a roio d'ezhan trôn David, he dad ; ren a raio da virviken var lignez Jakob. » Mari a c'houlennas neuze : « Penaoz eo'h en em gavo kement-se, rak va fried ha me a vev hon daou evel breur ha c'hoar ? » An eal a respountas : « Ar Spered Santel a ziskenno ennoc'h, ha galloud an Hini a zo dreist peb tra ho koloio euz he skeud ; setu perak ar frouez santel a lakeot er bed, a vezo great Mab Doue anezhan. Elisabeth ho kiniterv, daoust m'eo koz hag hanvet dizher, a dle lakât eur mab er bed a benn tri miz ama, rak n'eus netra en tu all da c'halloud Doue. » Mari a respountas neuze : « Setu servicherez an Aotrou Doue, ra vezq great d'in hervez ho ker. »

Kerkent ha ma oue lavaret ar gomz-se, Mab Doue en em c'hreas den, e korf chast ha pur ar Verc'hez : « Korf Jezus a zo korf Mari, » eme zant Augustin. En eun taol kount, Doue a furmas, dre he oll c'halloud, euz goad pur ar Verc'hez benniget, korf eun den gant he oll izili. Er memez amzer, heb dale ebet, Doue a reas ar pura, ar zantela euz an oll eneou krouet, hag he unanas gant ar c'horf-se. Er memez amzer c'hoaz, Mab eternal Doue a gemeras ar c'horf hag an ene-ze, hag a deuas da veza den heb paouez da veza Doue.

An Iliz a ra eur gouel kaer, d'ar 25 a viz Meurs bep



bloaz, evit digas da zonz d'ar gristenien euz dervez Inkarnasion Mab Doue.

Peger mad eo an Oll-C'halloudek evit an dud ! Digas a ra he Vab muia kare, Doue evel dhan, d'ho zavetei. Doue na c'hell ket kaout an distera poan, evel Doue, setu neuze Mab Doue a deu da veza den evel dhan, evit gellout gouzanv ha mervel evit hor zilvidigez. Mil bennoz d'ezhan da viken !

KENTEL 3. — Ar Verc'hez Vari ha santez Elisabeth

Eun nebeut miziou araok m'oa deut da zaludi ar Verc'hez, an eal Gabriel a oa bet kaset da gaout ar beleg Zakarias, d'ar mare ma kinnige ezans da Zoue, e templ Jerusalem.

Zakarias a oue spountet o velet an eal, met Gabriel a lavaras d'ezhan : « N'ho pezet aon ebet, Zakarias, rak ho peden a zo bet selaouet gant Doue ; Elisabeth, ho pried, a roio d'eoc'h eur mab hag a hanvot Ian, bras e vezo dirak Doue, ha karget e vezo gant grasou ar Spered Santel araok ma velo sklerijen an deiz.

Zakarias na gredas ket dioc'htu, setu ma lavaras an eal d'ezhan: « Abalamour m'oc'h choumet diskredik, c'houi a gouezo mut, ken a vezo deuet da vir kement am eus diskleriet d'eoc'h a berz Doue. »

A veac'h e doa ar Verchez Vari, deiz an Inkarnasion, klevet hano euz ar c'hras kaer a rea Doue d'he c'hiniterv Elisabeth, ma 'z eas prim d'he guele. Kerkent ha ma klevas Elisabeth mouez ar Verchez oc'h he zaludi en he zi, e lavaras a vouez huel: (ar Spered Santel eo he lakea da gomz evelse): « Benniget oc'h dreist an oll gragez, ha benniget eo ar frouez a zouguit. Euz a be leac'h e teu d'in-me an enor hag an heur-vad-man, ma plij gant mam va Doue dont d'am guele? Na c'houi zo eüruz da veza kredet e teuo da vir ar pezh a zo bet diskleriet d'eoc'h a berz Doue! »

Neuze Mari a lavaraz d'he zro: (ar pezh a zo amañ varlerc'h eo ar *Magnificat* e brezhoneg): « Va ene a ro gloar ha meuleudi da Zoue, ha va c'haloun a drid gant ar joa o sonjal er pezh en deus great em c'henver va Doue ha va Zalver. Rak, pegen dister benag ma 'z oun, eo plijet ganthan sellet ouz he zervicherez, ha setu hiviziken oll boblou an douar am galvo eüruz. Ia, an Hini a zo oll c'halloudek hag oll zantel en deus great traou burzudus em c'henver. Evelse en deus roet a bep amzer merkon euz he drugarez d'ar re a veve en he zoujans. Meur a vech en deus diskouezet nerz he zivrac'h, ha kaset da netra sonjou an dud ourgonillus. Diskaret en deus divar ho zrôn ar re a oa bras ho galloud, hag ar re n'o doa doare a netra en deus savet huel. Karget en deus a vadou ar re a oa o tua gant an naon, hag ar re o doa kalz danvez en deus lakeat var an noaz. Kemeret en deus erfin, truez ouz Israel, he zervicher, hervez ar bromesa drugarezus en doa great

guez all da Abraham ha d'he vugale, a rum da rum. »

Mari a joumas var dro tri miz e ti Santez Elisabeth, ha goudeze, e tistroas d'he c'hear, da Nazareth.

Peger santel eo komzou an diou giniterv! Nak a c'hra-sou a resevas sant Ian Vadezour, neteat en devez-se diouz ar peched orijinel! Nak a c'hrasou a resevas Elisabeth, he vam! Nak a c'hloar a resevas an Aotrou Doue, rak ar Magnificat a zo kaera kantik a zo bet savet gant eun den evit henori Doue: kanet e vezo epad an amzer hag an eternite. Peger karantezus eo ar Verchez evit he c'hiniterv!

KENTEL 4. — Ginivelez sant Ian Vadezour

Pa c'hanas mab Zakarias, ar gerent hag an amezeien a deuas gant hast da ziskleria ho levezon da Elisabeth. Eiz dez divezatoc'h, e oant eno adarre evit sirkonsizion ar c'hrouadur; c'hoant o doa rei d'ezhan hano he dad. Ar vam a enebas hag a lavaras he henvel Ian. « Nan, emezo, rak n'eus den euz an hano-ze er familh. »

Goulen e oue great neuze digant Zakarias pe hano e felle d'ezhan rei d'ar bugel. O veza kemeret eun daolen, e skrivas varnhi: « Ian eo he hano. » An oll a oue souezet.

Kerkent ar gomz a deuas en dro d'an tad, hag e savas kerkent ar c'hanik kaer Benedictus: komz a rea ker freas ha peb unan en eur veuli Doue. « Ra vezo benniget, emezhan, an Aotrou, Doue Israel, abalamour m'en deus bizitet ha dasprenet he bobl... Evidot-te, krouadur, emezhan d'he vab, te a vezo great ac'hanout prophet an Hini a zo dreist peb tra, rak te a gerzo dirak an Aotrou evit kounpeza an henchou, rei d'he dud skiant ar zilverigez hag evit ma vezo gualc'het ho fec'hejou. »

Ar c'homzou-ze, tennet euz ar c'hanik: Bene-

dictus Dominus Deus Israel, a reas d'an dud beza souezet maro, setu ma c'houlennent, da c'houde, etrezho : « Petra zonz d'eoc'h e vezo ar c'hrouadur-ze ? Rak dorn an Aotrou Doue a zo ganthan. » Hag an traour-ze a oue brudet en oll menezioù euz ar Judee.

Hogen, ar bugel a greskas hag a grenfeas hervez Spered Doue, hag a yeas da joum el leac'hioù goues, betek an deiz ma tie en em ziskoues da bobl Israel.

Peger kaer eo buez sant Ian Vadezour ! Tec'het a ra diouz etouez an dud, evit beva dirak Doue, er beden hag er binijen. Peger kaer eo he dad hag he vam, a ro ho mab da Zoue ! Ha c'houi, mar deo galvet ho merc'h da vont d'ar gouent, pe ho mab da vont da Frer pe da veleg, hag ho rei a rit-hu d'an Aotrou Doue ?

KENTEL 5. — GINIVEZES JESUS-CHRIST

En amzer ar roue Herodes, impalaer Rom, August he hano, a lakeas en he zonz klask pegement a dud a oa en he rouantelez, hag a embannas da bep hini mont da verka he hano er gear-benn euz he lignez. Sant Joseph ha Mari, dre ma oant ho daou euz a lignez David, a oa red d'ezho dont da lakât ho hano da gear ar roue David, da Vethleem. Pa zigouesjont, an hostalerioù hag an tiez a oa leun a dud ; an daou bried ne gavjont leac'h ebet da dremen an noz, nemet eur c'hraou, er meaz euz a gear.

Er c'hraou-ze, var dro hanter-noz, eo deut Hor Zalver Jesus-Christ er bed. Ar Verc'hez Vari, he vam, her mailluras hag hen astennas eno, var eun dornad kolo, dre ma n'e doa evithan na guele, na kavel ebet.

Pastored a ziuaille ho loened var ar meaz tro var dro, ha setu eun eal o tisken en ho c'hichen, e kreiz an noz, hag eur sklerijen gaer o para en dro d'ezho. Hag hi ha kemeret aon ken ha grenent. Met

Jesus a respountas : « Mac'h anavesfac'h donezon Doue, hag an hini a lavar d'eoc'h : Roit d'in da eva, c'houi eo o pefe goulennet dour diganthan, hag hen en defe roet dour beo d'eoc'h. — Aotrou ; emezhi kerkent, n'o peus netra evit tenna dour, hag ar puns a zo doun. »

« An neb piou benag, eme Jesus neuze, a evo euz dour ar puns-man, en dezo sec'het c'hoaz, met an neb a evo euz an dour a roin d'ezhan, n'en dezo sec'hed biken. — Aotrou, emezhi, adarre, roit d'in neuze euz an dour-ze, evit n'em bezo mui a zec'hed. — It, eme Jesus, galvit ho pried, ha deut ama en dro. — N'em eus pried ebet, eme ar Zamaritanez. — Guir eo, eme Hor Zalver, pemp pried o peus bet, hag an hini a zo breman en ho ti n'eo ket d'eoc'h eo, guir a livirit. »

« Aotrou, eme ar vaouez, guele a ran oc'h eur prophet. Hon tud koz a adore var ar menez a zo aze, e leac'h c'houi, Juzevien, a lavar e ranker mont da Jerusalem. — Dont a ra an heur, ha deut eo, a respountas Jesus, hag an dud a vir relijion a adoro Doue an Tad e spered hag e guirionez. — Gouzout a ran, eme ar Zamaritanez, ema tost amzer ar Mesias. — Me eo, eme Jesus, me, an hini a gomz ouzoc'h. »

An diskibien a zigouezas neuze ; bet e oant e kear o klask peadra da zebri. Souezet e oant o velet ho mestr o komz gant eur vaouez, met houman a redas buan e kear da ziskleria d'an dud : « Deut da gaout eun den hag en deus lavaret d'in kement am eus great. Daoust ha n'eo ket hen ar C'hrist ? »

An dud a ziredas, ha goude ma oue choumet Jesus daou zervez en ho zouez, meur a hini a gredas ennhan.

Peger mad eo Jesus ! Sklerijenna a ra ar vaouez-se,

disprijet goulskoude gant an dud. Komz a ra d'ezhi euz eun dour hag a dorr ar zec'hed evit atao, an dour-ze eo an eürusdet eternal. Hi a ziskoues bolontez vad, goul-len a ra sklerijen var ar relijion, mont a ra gant humilite hag hast da c'hervel an dud var dro Hor Zalver. Kredi a reas e oa Jesus ar Messias, ha meur a hini a gredas ganthi, n'eo ket var he ger d'ezhi e oa, mes abalamour m'eo doa o-unan klevet he genteliou.

An ebestel a oue souezet o velet Jesus o komz gant ar Zamaritanez, rak biskoaz den a renk na brijas, etouez ar Juzevien, choum da gaozeal gant eur vaouez er meaz euz an ti, dirak an oll. Ar merc'hed a oa disprijet.

KENTEL 16. — Jesus e Nazareth

P'en devoue Hor Zalver prezeget e meur a leac'h, ez eas da Nazareth, he vro. Pa deuas ar zadorn, deiz bras ar beden hag an ehan evit ar Juzevien, Jesus a 'z eas gant he genvroiz da bedi er Synagog. Sevel a reas er gador evit diskleria ar Skritur Zakr, digoueront a reaz var gentel leor ar prophet Isaie : « Spered an Aotrou Doue a zo varnoun, setu perak en deus va c'haset da embann ar c'helou mad d'ar re baour, da brezeg an delivrans d'ar sklaved. » Jesus a-lavaras d'he genvroiz : « Komzou ar Skritur-ze a zo deut da vir hirio. »

E guirionez, Hor Zalver a oa diskennet euz an neniv da brezeg an Aviel, ha da derri chadennoù ar bec'herien, sklaved an drouk-spered. Met tud Nazareth ne gredjont ket e vije Jesus, mab Mari, ar Messias, promettet el Lezen, ar Jesus-se o doa gullet o labourat evel an distera euz an artizaned en ho zouez. Pa reas Hor Zalver rebechou d'ezho abalamour ne gredent ket ennhan, ez ejont e kounnar, hag e klaskjont he laza, oc'h he deurel divar gern eur menez soun. Jesus a rankas tec'het.

Pa oa Hor Zalver o vont varzu Kapharnaüm, e

kavas eun ofiser var he hent, o c'houlen digarthan parea he vab, hag a oa toc'hor neuze. Jesus a lavaras d'ezhan : « C'houi, na gredit ket, nemet gullet a rafac'h burzudou ha miraklou. — Aotrou, eme an ofiser, deuit araok ma vezo tremenet va mab. — It, a respontas Jesus, ho mab a zo leun a vuez. »

E guirionez, he vab a oa bet pareet, d'ar mare ma lavare Jesus he gomz, setu ma kredas e Jesus, hen ha tud he di.

Tud Nazareth ne gredjont ket e Jesus, ha setu perak, eme an doktored, ne reas mirakl ebet evitho. Ho spered a oa dallet.

Petra eo eur Synagog ? Eur Synagog a zo eun orator savet gant Juzevien evit gellout pedi Doue asambles, deiz sadorn, lenn ha displega kenteliou ar Skritur Zantel. E kear Jerusalem e oa ouspenn pevar c'hant synagog, er c'heariou disteroc'h e oa eur maread anezho, er bourkou biana e veze unan d'an nebeuta, evel m'eo bet lavaret.

Nak a bed ne fell ket d'ezho anzac galloud ar beleg, var zigarez ma oa henvel ouz ar re yaouank all, epad he skolach, var zigarez m'eo henvel ouz an dud all evit meur a dra, goude m'eo bet beleget. Henvel int ouz tud Nazareth. Mar deo henvel ouz an dud all evit meur a dra, ez eo dishenvel bras, e kement ha ma ra labour Doue en eneoù, rak bez' en deus neuze eur galloud burzudus, hueloc'h eget galloud ar rouaned. Pa lakit ho fizians er beleg, e c'hell ober miraklou bras, renta ar vuez d'oc'h ene, lazet gant ar pec'hed.

Pegen dishenvel eo an-ofiser a oa klanv he vab, dioc'h tud Nazareth ! Distrei a ra dioc'htu d'ar gear, var ger Hor Zalver, ha pa lavar he zervicherien d'ezhan : « Ho mab a zo pareet d'ar mare ma komzac'h gant Jesus a Nazareth », e kred ennhan kerkent. He feiz n'eo ket eur feiz maro, ober a ra da oll dud he di kredi ganthan.

Tadou ha mammou, magit mad ar feiz en ho spered hoc'h unan, koulz hag e spered hag e kalon ho tud.

KENTEL 17. — Jesus var lenn Jenesareth

An dud a rede varlerc'h Jesus, abalamour d'ar miraklou a rea. Sevel a reas, eun dervez ma oa var ribl lenn Jenesareth, e bag Simon, hag ac'hano e kelennas ar bobl. Lavaret a reas, da c'houde, da Zimon : « It larkoc'h var al lenn, ha taolit ho rouejou da besketa. — Labouret hon eus, hed an noz, heb kemeret netra, eme Zimon, evelato, var ho ker, e taolin ar roued. »

Simon, hanvet ive Per, hag he vreur Andre, a daolas eta ho roued el lenn pe vor, hag e pakjont kement a besked, ma venne ar roued terri. Ober a rejont neuze sin da c'houlen sikour digant ho mignouned euz ar vag all. Dont a rejont hag an diou vag a oue ker karget a besked, m'o doa beac'h o chom var an dour.

Simon-Per, o velet ar burzud-se, en em daolas d'an daoulin dirak Jesus, en eur lavaret : « Pellait diouzin, rak ne doun nemet eur pec'her. » Souezet e oant, o velet pegement a besked a oa bet paket. Ha Jesus a lavaras da Zimon da genta, ha d'an tri all, Andre, Jakez ha Ian, da c'houde : « Deuit d'am heul, me a raio ac'hanoc'h pesketourien tud. » Kerkent, ar pevar besketaer a zilezas ho bag, ho rouejou hag ho zud, evit heuill Jesus.

Lenn Jenesareth, hanvet c'hoaz mor Tiberiad, a zo eul lenn vras : pemp leo a hilder e deus var deir a le-dander. Vardro 500 bag a rede varnhi en amzer Hor Zalver, rak kalz pesked a oa el lenn.

Peger buan e sent ar pevar a zo da genta etouez diskibien Hor Zalver ! N'int ket pinvidig, guir eo, met gounit a c'hellont ho bara gant ar besketêrez, hag ez eont varlerc'h Jesus, heb gouzout dare hag ho maga a c'hel-lo. Mont a reont dioc'htu goulskoude, heb distrei en ho zi da lavaret kenavezo.



Daoust ha senti a reomp, ker buan-ze, pa vezomp galvet gant Doue ?

KENTEL 18. — Eun nebeud pareansou burzudus

E Kapharnaüm, da zeiz Sadorn, Jesus a 'z ea atao d'ar Synagog, evit prezeg. Eur zadornvez, e kavas eno eun den hag a oa eat an diaoul en he gorf. Hogen, an diaoul a youc'has, dre c'hinou an den : « Petra fell d'eoc'h, Jesus a Nazareth ? Me a oar piou oc'h, c'houi eo Sant Doue ! » Jesus a zavas he vouez da c'hourdrouz : « Sav, ha kea diouz an den-ze. » An drouk-spered a zentas kerkent.

Pa oue achu ar pedennou er Synagog, Hor Zalver a yeas da di Simon-Per : he vam-gaer a grene an darsien var he guele. Jesus he fareas, hag hi eo a zervichas an diskibien ouz taol, evit ar pred.

Pa oue klevet hano euz an daou vuzrud nevez-se, e Kapharnaüm, keariz a zigaças da Jesus, dioc'h

ar pardaez, eur maread re glanv ha tud diaoulek, da lavaret eo, tud hag a oa an diaoul oc'h ober he vestr var ho c'horf : ho farea a reas oll. Pa lavare an drouk-spered, en eur vont kuit : « C'houi eo Mab Doue, » Jesus her gourdrrouze, hag a rea d'ezhan tevel.

Eun dervez, eun den lor a stouas dirak Jesus en eur lavaret : « Aotrou, mar kirit, c'houi a c'hell va farea. — Bez pare, a respontas Hor Zalver, m'her fell d'in. » Hag an den a oue pareet.

Eun dervez all, pevar goaz a zongas eun den seizet he oll izili da gaout Jesus. An ti ma oa Hor Zalver ennhan a oa leun-chek, setu ne c'helle ket an dougerien mont ebarz dre an or. Petra rejont neuze ? Pignat var an doen a oa plat hag eun toull enni hervez giz ar vro, ha disken an hini klanv guele hag all e kreiz an ti, dre an toull-ze. O velet feiz an dud-se, Jesus a lavaras raktal d'an den seizet : « Va mab, da bec'hejou a zo pardounet d'id. » Neuze an doktored hag ar pharizianed a zongas enno ho-unan : « An den-ze a gomz enep Doue. Piou a c'hell pardouni ar pec'hejou, nemet Doue hebken ? » Met Jesus, o c'houzout petra dremene en ho spered, a lavaras : « Perak e lezitu ar zonzou-ze da rodella dre ho spered ? Petra zo easa da lavaret, euz an daou zra-ma : Ho pec'hejou a zo pardounet d'eoc'h ; pe : Savit en ho sav, ha kerzit ? Hogen, evit diskoues d'eoc'h en deus Mab an den var an douar ar c'halloud da bardouni ar pec'hejou, me a lavar d'id : *en eur zellet ouz an den seizet* : « Sav, kas da vele ganez, ha distro d'ar gear. » Kerkent, an hini klanv a zavas, hag, en eur zongen he vele dirak an oll, ez eas d'ar gear en eur veuli Doue.

Nak a vuzudou a reas Hor Zalver benniget evit gounit kalonou a Juzevien, evit kaout ho c'harantez ! En

despet d'ar boan a gemere gantho, ar pennou bras a vage kasouni ouz Jesus a Nazareth, abalamour ma oa deut mad d'ar bobl. Anat e oa d'ezho goulskoude en doa Jesus galloud Doue, pa rea miraklou ker bras.

KENTEL 19. — Galvedigez sant Vaze. An den seizet pareet e Jerusalem

Evit diskoues sklear a oa deut da zavetei an oll dud, ar bec'herien koulz hag an dud santel, Jesus a c'halvas eun dervez Maze, resevour an taillou « Deuit d'am heul, » emezhan. Maze a zentas dioc'htu.

Pa deu Doue da c'hervel eun den, e ro d'ezhan atao grasou kreñv aoualc'h evit ma vezo eas d'an den senti.

Prest goude, Jesus a bignas da Jerusalem, hag a yeas eno da gichen lennik Bethsaida. El lennik-se, pemp porched en dro d'ezhi, e veze gualc'het an denved a veze kinniget e sakrifi en Templ. En dro d'al lennik e veze atao eur maread tud klanv, rak eal Doue a ziskenne bep er mare betek enni, a finve an dour, ha kenta hini a ziskenne en dour dioc'htu da c'houde, a veze pareet, n'eus fors gant pe glenved e veze dalc'het.

Hogen, bez' e oa eno eun den, seizet he izili eiz vloaz ha tregont a oa, o c'hortoz beza pareet. Hor Zalver a c'houlennas diganthan : « Daoust ha c'hoant o peus da veza pare ? — N'em eus den, eme ar c'hlanvour, d'am zeurel el lennik kerkent ha ma vës finvet an dour, hag epad ma 'z an, eun all a vës atao diskennet em raok. » Jesus a lavaras neuze : « Sav, samm da vele, ha kerz. » An den a zentas kerkent, samma a reas he vele, hag e kerzas.

Kement-se a zigouezas d'ar zadorn, an deiz ehan evit ar Juzevien, evel m'eo ar zul evit ar gristenien.

Pennou bras ar Juzevien, pa veljont an den o vont dindan he zamm, a lavaras d'ezhan : « Ar zadorn a zo, na c'hellit ket dougen ho kuele. » An den a respountas : « An hini en deus va fareet en deus lavaret d'in : « Samm da vele, ha kerz. » Int-hi a c'houlennas neuze : « Piou eo an den-ze ? » met an hini a oa bet pareet ne anaveze ket Jesus, hag heman a oa eat kuit.

Divezatoc'h, Hor Zalver a gavas an den pareet en Templ, hag a lavaras d'ezhan : « Setu te pare; na bec'h mui hiviziken, gant aon na c'hoarvesfe guasoc'h ganez. »

Peger mad eo bet Jesus evit sant Vaze ! Resevourien an taillou a oa disprijet gant ar Juzevien, lakeat e oant oll e renk ar bec'herien vras, ha Jesus a c'halv unan anezho da vont d'he heul, hag a zav anezhan divezatoc'h e renk he ebestel. Pebez madelez !

Jesus a zo ker mad all evit ar c'heaz den a oa o c'he-dal ar pare. Klav eiz vloaz ha tregont a oa ! Pebez merzerenti hir ! Ar pennou bras euz ar Juzevien a 'z a drouk enno pa velont an den o tougen he vele var he chouk, met ne rea nemet senti ouz Jesus, setu ma ken-dalc'has da vale betek he di.

Jesus a lavaras d'ezhan, p'her guelas a nevez, en Templ : « Diouall hiviziken rak ar pec'hed, gant aon n'en em gavfe guasoc'h ganez ! » Ar poaniou a stag ouz an den er bed-man a zo da veza rannet e diou loden : lod a zo digaset evit ampron an dud santel, evel meo bet Job, hag ho renta santeloc'h, kreski ho meritou evit ar baradoz ; lod all a zo frouez ar pec'hed, da lavaret eo, deut d'an den varlec'h ar pec'hed. Dont a reont dre providans Doue, evit kastiza ar pec'her, evit ober d'ezhan digeri he zaoulagad ha chench buez.

KENTEL 20. — Jesus kaseat abalamour da lezen ar Zadorn

Ar Juzevien, da lavaret eo, ar pennou bras, ar

Pharisianed, o doa kasouni ouz Jesus a Nazareth, « abalamour ma torre, emezho, lezen ar Zadorn. » Rei a rejont urz d'ho diskibien da deurel evez var he oll oberou, dreist oll da Zadorn.

Prest goude, eun dervez ma treuze Jesus hag he ziskibien eur parkad ed dare, ar re-man a zizillas en ho daouarn eun nebeud pennou ed, evit debri ar greun. Deiz Sadorn e oa, hag ar Pharisianed a c'hrosmolos : « Ho tiskibien, emezho da Jesus, a 'z a enep lezen ar Zadorn. » Jesus a respountas d'ezho : « Daoust ha n'e ves ket laz et oaned d'ar zadorn kouz hag en dervezioù all, evit ho c'hinnig e sakrifis da Zoue ? Ma n'eus pec'hed ebet e kement-se, perak e ve pec'hed o tizilla eur penn ed benag ? » Ar pharisianed ne gavjont respount mad ebet da rei.

Eiz dez divezatoc'h, pa oa Jesus er Synagog, e teuas di eun den hag a oa dizec'het he zorn deou. Ar pharisianed, pa veljont an den-ze, a c'houlennas digant Jesus : « Mestr, daoust ha guir a zo da barea tud d'ar zadorn ? »

E leac'h respount d'ar goulenn, Har Zalver a lavaras d'an den : « Sav en da zav. » An den-ze a zentas. « M'her goulenn diganeoc'h, eme neuze Jesus d'an dud avius-se, daoust ha guir a zo da zavetei he vuez da enn den deiz sadorn, pe daoust ha red eo e lezel da vervel ? » Ar Pharisianed na respountjont grik. Jesus a zavas neuze he vouez adarre : « Piou ac'hanoc'h, ma koues he zanvad en dour, deiz sadorn, na boanio ket d'he savetei dioc'htu ? Daoust hag eun den ne dalv ket hiroc'h eget eun danvad ? »

Neuze, e sellas ouz an den : « Astenn da zorn ! » emezhan. An den-ze a zentas kerkent ; he zorn a oa neat ha yac'h.

Er gentel-man e velomp peger paour e veve Hor Zal-

ver gant he ziskibien, pa zizillont pennou ed evit terri ho naoun.

Gualet a reomp ive peger berr eo spered an den dirak Doue. Ar Pharisianed a gave d'ezho o dije lakeat Jesus nec'het o c'houlén diganthan ha pare a c'heller da zadorn. Met respount Jesus a ra d'ezho beza nec'het bras : « Daoust ha savetei a c'heller eun den d'ar zadorn ? » M'o defe ar Pharisianed respountet nan, o defe lakeat drouk en dud a oa eno ; m'o defe lavaret ia, e vefent eat a du gant Jesus. Ne respountjont eta netra. An trede gourc'hemén a Zoue a rea da bobl Israel paoues da labourat d'ar zadorn, met ar Pharisianed ha Doktored Lezen Moysez, kalz re striz an urz gantho, o doa c'hoant miret na barefe Hor Zalver re glanv en dervez-se.

KENTEL 21. — An daouzek Abostol

Goude beza prezeget he Aviel epad eur bloavez, ha gréat miraklou bras, Jesus a reas he zont da zibaba eun nebeudik tud d'he zikour, ha da genderc'hel he labour var he lerc'h. An dud, abalamour ma oant var c'hed euz eur Messias hag a vije bet roué, ne gredent ket stard e Jesus, en despet d'ar miraklou a rea.

Evit deski d'he ziskibien ha d'an oll eo red d'an den pedi, p'en deus eul labour bras d'ober, Hor Zalver a yeas he-unan var eur menez, evit pedi he Dad. Choum a reas eno, epad an noz penn da benn.

Kerkent ha ma c'houlouas an deiz, Jesus a ziskennas divar ar menez betek he ziskibien, hag a zibabas euz ho zouez daouzek hag a vije he ebestel, da lavaret eo, he gannadet.

Da genta : Simon, hanvet Per, hag he vreur Andre, pesketerien ho daou. Jakez, mab Zebedee, ha Ian, he vreur, an Avieler, pesketerien ive.

Philipp a oa euz Bethesda, evel ar pevar genta, Nathanael hanvet c'hoaz Bertheleme, a yeas var-

ger Philipp da heul ar Zalver. Ar zeizved a oue Maze, resevoir an taillou, an eizved, Thomas, a oa eun den a galon, leun a garantez evit Hor Zalver.

An naved hag an deked a oue mibien Mari Kleophas, Jakes ha Jud, hanvet ive Thadee. An unnekved a oue Simon, euz Kana.

Ar re-ze a oa oll euz ar Galilee.

An daouzekved a oa euz ar Judee, Judas, an traitour.

Daouzek e oant, evit digas da zont euz daouzek tribu Israel. Dizesk e oant, rak kalz a oa pesketourien, n'kun anezho ne oa doktor var al lezen, ha goulskoude, diskleria a dlient lezen Jesus, al Lezen nevez d'ar bed. Seul disteroc'h eo an dud a ra labourou bras an Aotrou Doue, seul sklearoc'h eo great al labour gant an Oll C'halloudek. Pa zelaouit eur brezege, mar doc'h eur guir gristen, e sonjit nebeut er prezege, ha kalz en Aotrou Doue a ra d'eoc'h ar brezege dre c'hinou he zervicher.

KENTEL 22. — An Testament Nevez. An eiz Eürusdet

Goude beza dibabet he ebestel, Jesus a embennas al lezen a dlie beza miret gant he ziskibien, ha gant ar re oll o defe c'hoant gounit ar baradoz var ho lerc'h. Moysez en doa embannet an Testament koz var menez Sinaï, e kreiz al luc'hed hag ar gurun, Jesus a bignas ive var eun dorgen evit nevez Lezen Moysez.

Lavaret a reas neuze d'he ebestel, ha d'ar mor tud a oa dirazhan : « Eürus ar re a zo paour a spered, rak rouantelez an nenv a zo d'ezho. »

An dud paour a spered a zo an dud dister, ar re a oar eryad n'o deus ket a vir da zével ho mouez. Ne aviont ket an dud galloudus. Humbl int, rak gouzout a reont n'eo netra an den dirak an Aotrou Doue.

« Eürus, eme Jesus, ar re a zo dous, rak gounit a raint ar bed-man. »

Eun den dous a joum heb maga na kasouni nak our-gouil, choum a ra atao humbl ha pasiant, e kreiz poaniou ha trubuillou ar vuez-man.

« Eürus, eme c'hoaz Hor Zalver, ar re a skuill daelou, rak konsolet e vezint. »

An neb piou benag a ouel d'he bec'hejou ha da bec'hejou ar re all, a vezo konsolet er bed-man hag er bed all, a lavar d'eomp sant Ian Krysostom.

« Eürus, eme Jesus, ar re o deus sec'hed euz ar pezh a zo eün ha leal, rak ho gualc'h o dezo. »

Spered an den a glask sklerijen ar virionez, bolontez an den a c'houlen beva a unan gant bolontez an Aotrou Doue, el lealded : en daou zra-ze ema ar guir beoc'h.

« Eürus ar re a zo trugarezus, rak trugarez a resevint. »

Digant piou ? Digant Doue. Pa ziskouezit trugarez d'ar paour, d'an ezomek, d'an neb en deus mankou, e tennit varnoc'h sell trugarezus an Aotrou Doue.

« Eürus ar re o deus eur galon glan, abalamour ma velint Doue. »

Doue a zo pur, ha ne c'hell ket beza gullet gant ar re a vag en ho ene, ar zontj euz eur pec'hed benag, n'eus fors pe seurt drouk eo.

« Eürus an dud a beoc'h, rak galvet e vezint bugale Doue. »

Epad he vuez, Jesus en deus roet ar peoc'h d'ar pe-c'her dre ar pardon euz he bec'hejou, ar peoc'h d'an dud klanv dre ar pare, ar peoc'h d'ar sperejou dre ar sklerijen a roe d'ezho, hag abaoue, e kinnig atao ar peoc'h d'an oll.

« Eürus ar re a zo guasket evit ar justis, abalamour rouantelez an nenv a zo d'ezho. »

Tri zra, eme sant Fransez Borgia, a ra nerz ar guir Iliz : ar beden, an unani etre ar gristenien, hag ar poaniou o deus da c'houzanv evit an Aotrou Doue. »



Epad ma roe Hor Zalver kentel an eiz eürusdet, an dud a zelaoue, eme ar zent, met souezet e oant. Ar Pharisianed, ar pennou bras a vage kasouni ouz Jezus, a gave tenn klevet he gomzou. Ober a reant fae var he lavarou.

Setu ma tisklerias Hor Zalver : « Guallheur d'eoc'h, tud pinvidig, rak bez' o peus ho c'hoant er bed-man. Guallheur d'eoc'h-hu a zo o c'hoarzin breman, rak gouela a reot. »

Ar gourdrouzou-ze ne dizent ket hebken ar re a oa o selaou, douget e oant evit an oll, betek fin ar bed.

Hag abalamour ma oa ive an ebstel o selaou, Jesus a lavaras c'hoaz : « C'houi eo c'hoalen an douar. Mar teu an hoalen da goll he vlaz, gant

petra e vezo sallet ? C'houi eo sklerijen ar bed, hag ar sklerijen-ze ne dle ket beza kuzet, met para a dle dirak an dud. »

Ar peb brasa euz ar re a zelaoue Hor Zalver, n'e emtentent ket nemeur he gomzou, dioc'h ma lavar ar zent; re c'hros ha re-zibarfet e oant. An ebestel a ententas, divezetoc'h, pa ouent sklerijennet gant ar Spered Santel, da zeiz bras ar Pantekost. Kenteliou Hor Zalver o deus great dudi ar zent, dudi ar guir gristenien e peb amzer, hag e tleomp goulen ar c'hras d'ho entent mad. Seulvui eo troet eun den gant ar bed hag he falz kenteliou, seul nebetoc'h ec'h entento komzou Hor Zalver benniget.

KENTEL 23. — Al lezen Goz n'eo ket torret, met nevezet

Ar zent a veve er penn kenta euz an Iliz a lavar d'eomp: « Epad ma prezege Jesus he aviel, doktored al Lezen, ar Skribed, ar Pharisianed a c'hros-mole en he enep etouez an dud: « Jesus a Nazareth, emezho, a dorr Lezen Moysez. » Hogen, Hor Zalver, evit merka sklear e oa deut evit startat al Lezen Goz, abalamour ma 'z ea doktored ar Juzevien enep d'ezhi evit meur a dra, a zisklerias freas, goude beza roet an eiz eürusdet:

« Arabat eo d'eoc'h kredi, oun deut da derri al Lezen hag ar bropheted; deut oun d'ho renta parfetc'h, ha da zigas da vir kement o deus diskleriet. »

« Ma n'eo ket brasoc'h ho santellez eget hini ar Skribed hag ar Pharisianed, n'ez eot ket e rouantelezh an nenv. Klevet oc'h eus eo bet lavaret d'ar re goz: Ne lazot ket; an nep a lazo, a vezo barnet. »

« M'emaoc'h eta o kas eur prof tost d'an aoter, hag e teu da zonz d'eoc'h ez eus savet eun tam kaoz etre ho preur ha c'houi, laoskit ho prof dirak an aoter, hag it, da genta, d'ober ar peoc'h gant ho

preur, dont a reot da c'houde da ginnig ho prof. »

« Lavaret eus bet d'hon tud koz, hag her gouzout a rit: Na doui ket heb guir, met miret a ri kement le e pezo great, ha me lavar d'eoc'h: Na douit e doare ebet, livirit: An dra-ze a zo, an dra-ze n'eo ket. Kement ger muioch a ves lavaret, a deu digant an drouk-spered.

Gouzout a rit ez eus bet lavaret: Lagad evit lagad, ha dant evit dant. Met lavaret a ran d'eoc'h: Mar teu eun den d'ho skei var ho poc'h deou, kinnigi d'ezhan ar boc'h all; ha mar fell d'uman benag ho kas dirak ar barnier evit tenna diganeoc'h ho sae, roit d'ezhan ouspenn ho mantel. »

« Klevet o peus ez eus bet lavaret d'ho tud koz: Na reoc'h ket a avoultriach. Ha me lavar d'eoc'h: An neb piou benag a zell ouz greg he nesa gant daoulagad a voall-youl, en deus great dija ar pechad en he gallon. Mar deo ho lagad deou eun abeg a bec'hed evidoc'h, diframmit-hen ha taolit-hen pell diouzoc'h, rak guelloc'h eo koll unan euz an izili eget ne deo mont gantho oll d'an ifern. »

Er gentel-man, Hor Zalver a verk d'an dud a veve neuze, koulz ha d'ar gristenien euz a bep amzer, e tleer diouall rak ar pec'hejou a ves great dre zonz. Nak a dud dibarfet na daolont ket nemeur a evez var ho zonzonou ! Eur zonz fall hebken a zo goulskoude pec'hed marvel, pa ro an den he asant d'ezhi.

KENTEL 24. — Lezen ar Garantez

Hor Zalver a zisklerias c'hoaz:

« Klevet o peus ez eus bet lavaret: Karet a ri da nesa, ha kasat a ri da enebour. Me lavar d'eoc'h: Karit hoc'h enebourien, grit vad d'ar re o deus drouk ouzoc'h, pedit evit ar re a voall gas ac'hanoch hag ho tamall e gaou. Evelse e viot bugale ho Tad euz an nenv, a ra d'he heol sklerijenna ar

re vad hag ar re fall, ha d'ar glao glebia ar bec'herien koulz hag an dud santel. »

« Ma ne garit nemet ar re ho kar, pe seurt digoll a c'hounezit? Daoust hag ar baianed na reont ket kement all? Bezit parfet evel m'eo parfet ho Tad euz an nenv. »

« Na rit ket hoc'h oberou mad evit beza gullet gant an dud, ha netra ken, rak neuze n'o peus digoll ebet da gaout digant ho Tad euz an nenv. Evidoc'h-hu, pa reot aluzen, ho torn kleiz na dle ket gouzout ar pez a ra ho torn deou; neuze, hoc'h aluzen a vezo kuzet, hag ho Tad, hag a vel peb tra kuzet, ho tigollo. »

« Pa bedit, arabat eo d'eoc'h ober evel an dud hypokrit, a gar chom da bedi en ho zav, dirak an oll, er synagog koulz hag e korn ar ru; e guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h: resevet o deus an digoll a glaskent, Evidoc'h-hu, pa bedot, it en ho kampr, prennit an or, ha pedit ho Tad e kuz, hag ho Tad, a vel kement a zo kuzet ho tigollo. »

« Pardounit d'an dud ho ofansou, hag ho Tad a bardouno d'eoc'h ho re. Met ma ne bardounit ket d'an dud, ho Tad ne bardouno ket d'eoc'h ho re ken nebeud. »

« Pa yunit, arabad e vefe tenval ho penn, evel ma ra an hypokrited, a ra d'ho bizach beza distrounk evit ma velo an dud o deus yunet. E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, bet o deus ho digoll. »

Evidoc'h-hu, pa yunit, balzamit ho penn ha gualc'hit ho pizach, en doare-ze, an dud ne ouezint ket o peus yunet, met ho Tad, hag a vel peb tra kuzet, ho paeo. »

Lezen ar garantez a renas ker kaer etouez ar gristenien genta, ma lavare anezho ar baianed : « Gullet 'ta pegement a garantez o deus an eil evit egile. » Hirio, siouaz ! ar garantez n'eo mui ker bras, rak nerz ar feiz

eo a ra nerz ar garantez, hag ar feiz a 'z a var zemplât. Ni, poaniomp da gaout feiz ha karantez krenv.

KENTEL 25. — Bezomp fizians e Doue

Hor Zalver a lavaras ouspenn : « Na zastumit ket tenzorieu var an douar, rak eno, ar mergl hag ar prenved a zebr an danvez, al laeroun a doull ar mogerieu hag a gemer an arc'hant. Met dastumit tenzorieu en nenv, eno ar mergl hag ar prenved a zo heb galloud, al laeroun ma c'hellont na toulla na kemeret. El leac'h m'ema ho tenzor, eno ema ho kalon. »

« Den na c'hell servicha daou vestr, rak m'en deus karantez evit unan, en dezo kasouni ouz egile : ma pleg da unan, e tisprijo egile. Na c'hellit ket servicha Doue hag an arc'hant asambles. »

« Rak-se e lavaran : Bezit dinec'h evit ar boued a viro d'eoc'h ar vuez, hag evit ar viskamant a c'holoio ho korf. Daoust hag ar vuez ne dal ket hiroc'h eget ar boued, hag ar c'horf muioc'h eget an dillad ? »

« Sellit ouz laboused an nenv : ne hadont, ne eostont ket, ne zastumont ket er grignolieu, ha goulskoude ho Tad euz an nenv a vag anezho. Daoust ha ne dalvezit ket kalz hiroc'h egetho ? Pehini ac'hanoc'h a zo guest, gant he oll spered, da greski he vent euz eun troatad hebken ? Ha perak beza nec'het gant ho kuiskamant ? »

« Sellit ouz lili ar parkeier o kreski : ne labouront ha ne nezont. Salomon goulskoude, e kreis he c'hloar skedusa, ne oa ket fichet ker kaer hag unan anezho. Ha mar teu Doue da viska ker koant eur goeten euz ar park, glas hirio, hag a vezo taolet varc'hoaz en tan, pegement muioc'h a zoursi a gemero ac'hanoc'h-hu, tud a nebeud a feiz ? Arabat eo d'eoc'h eta kemeret re a nec'hamant, o lavaret :

Petra zebrimp, petra evimp, ha gant petra en em viskimp? Ar baianed o deus soursi gant an oll draou-ze, met ho Tad euz an nenv a oar ervad o peus ezom anezho. Klaskit da genta rouantelez Doue hag he justis, hag an oll draou all ho pezo var ar marc'had. »

Komzou Jesus-Christ a dlle beza souezus evit ar re her zelaoue, met entetet mad int bet abaoue gant eur maread kristenien. Piou a zo guest da ziskleria ped million a venec'h a 'zo eat da zervicha Doue er baouren-
tez, goude beza roet ho danvez hag ho arc'hant d'ar paour? Sant Jerom, doktor, en deus diskleriet e oa, en he amzer, en eur gear euz an Ejipt, dek mil manac'h hag ugent mil leanez. En eur gear hebken !

« Bezit dimec'h var an dervez varc'hoaz: aoualc'h eo he boan da bep dervez. »

KENTEL 26. — Diskouezit ho karantez dre hoc'h oberou

Na varnit ket, ha ne viot ket barnet. Na goundaonit ket, ha ne viot ket koundaonet; pardounit, hag e vezo pardounet d'eoc'h. Roit, hag e vezo roet d'eoc'h, hag o pezo eur muzul bar.

« Daoust hag eun den dall a c'hell ren eun dall all? Daoust ha ne gouezint ket ho daou er faoz? An diskibl n'eo ket dreist ar mestr. »

« Perak e velit-hu eur goleen e lagad ho preur, ha ne velit-hu ket eun treust en ho c'hini? Penaoz e kredit-hu lavaret d'ho preur: « Breur, va lez da denna ar goleen-ze diouz da lagad, » pa ne velit ket an treust a zo en ho c'hini? Hypokrit ma 'z oc'h, tennit da genta an treust diouz ho lagad, hag e tennot, da c'houde, ar goleen a zo e lagad ho preur. »

Eur c'halz tud, fall da anaout ho fec'hejou ho-unan, ha pa vent bras, a zo mad dreist da anaout mankou ar re all, ha pa vent dister.

« Na roit ket an traou santel d'ar chas, na daolit ket ar perlez dirak ar moc'h. »

Da lavaret eo eme ar zent, na roit ket madou presius an ene d'ar re n'int ket din d'ho reseou.

« Grit d'ar re all kement a garfac'h a ve great d'eoc'h hoc'h unan: aze ema al Lezen hag ar Bropheted. »

« Diouallit diouz ar falz propheted, a deu d'ho kaout guisket evel denved, hag a zo goulskoude bleizi laer ha kris: ho anaout a reot diouz ho frouez. Daoust ha kutuill a reer rezin var ar spern, pe fiez var an drez? Eur vezen vad a zoug frouez mad, eur vezen fall a ro frouez fall. Kement guezen ne zougo ket frouez mad, a vezo tronc'het ha stlapet en tan. Dioc'h ho frouez ec'h anavezot anezho. »

« Kement hini a lavar d'in: Aotrou, aotrou, na yelo ket e rouantelez an nenv, met an hini a raio bolontez va Zad euz an nenv, hennez a yelo en he rouantelez. »

« It dre an or stris, rak an or a gas an dud da goll a zo digor bras, hag an hent a zo frank: kaiz tud a ya dreizho. Stris eo, er c'hountrol, dor hag hent ar vuez, ha rouez eo an dud a 'z a dreizho. »

Jesus a lavaras evit achui: « Kement hini a zelaou va lavarou, hag a ren he vuez dioutho, a zo henvel ouz eun den fur hag a ziazes he di var ar roc'h. Ar glaoeier a zo kouezet, an avel foll en deus c'houezet, met an ti a zo choumet ploum en he zav. »

« Kement hini a glev va c'homzou heb reiza he vuez varnho, a zo henvel ouz eun den hag a zav he di var an treaz. Pa deu ar glaoeier da goueza hag an avel da c'houeza krenv, an ti a goues en he boull. »

Epad ma prezege Hor Zalver, an dud her zelaoue gant evez, rak komz a rea evel enn den hag en deus galloud a berz Doue. Ar Pharisianed ha Doktored al Lezen na gomzent ket gant ar galloud-se.

Peger kaer eo kelennadurez Hor Zalver benniget ! Aboue m'eo bet embannet an Aviel, an dud o deus he lennet, he studiet, hag ar c'homzou-ze a zo eur sklerijen hag eun nerz evit an oll. Ar pharisianed a zelaoue Jesus o prezeg a oa drouk enno, rak int-hi ne felle d'ezho karet nemet ho breudeur, ar Juzevien.

KENTEL 27. — An den lor. Ar c'hantener

Pa oue achu he gelennadurez, Jesus a ziskennas divar ar menez, hag eur c'halz tud hen heuilhas. Eun den lor a deuas neuze da stour dirak Hor Zalver, o lavaret: « Aotrou, mar kirit, c'houi a c'hell va farea. » Ha Jesus a astennas he zorn, hag hen touchas ouz an den en eur lavaret: « M'her fell din, bez pare. » Ha kerkent e teuas da veza yac'h. Jesus a lavaras neuze d'ezhan: « Na lavar netra da zen, met kea da gaout ar veleien evit senti ouz lezen Moysez, ha ro ar prof a zo gourc'hemennet. »

Pa oa Jesus o vont da gear Kapharnaüm, eur c'hantener (*da lavaret eo, eun ofiser hag en doa kant soudard dindan he c'halloud*), a deuas da gaout Hor Zalver, ha d'he bedi en eur lavaret:

« Aotrou, va mevel a zo em zi, zeizet ha goall « veac'hiet ». Jesus a respontas: « Me a yelo hag her pareo. » Met ar c'hantener a lavaras: « Aotrou, « n'oun ket din e teufac'h dindan va zoen, met « livirit eur ger hebken ha va zervicher a vezo « pareet. Rag, *daoust* m'em euz re all hueloc'h evi- « don, em euz *ive* soudardet dindanon, hag e lava- « ran da unan: « Kea, hag e za; d'eun all: Deus « hag e teu; d'am mevel: Grea an dra-ze, hag her « gra ». O klevet kement-se, Jesus a oue souezet,

hag ha lavaras d'ar re a heulie anezhan: « E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, n'em eus ket kavet eur feiz ker bras etouez tud Israël. Hen dis- kleria a ran d'eoc'h: eleiz a deuto euz ar Zav-heol hag euz ar C'huz-heol, hag a azezo gant Abraham, Isaak ha Jakob e rouantelez an nenv; bugale an ti, er c'hountrol, a vezo taolet er meaz, en denvalijen: eno e vezo lenv ha skrign-dent ». Hag e lavaras d'ar c'hantener « Kea, ha ra vezo great d'id hervez m'e peus kredet. » Hag ar zervicher a oue pareet d'ar mare-ze memez.

An dud yac'h o doa difen da douch ouz eun den lor, gant aon da baka ar c'hlenved, met Hor Zalver a felle d'ezhan diskoues e oa mestr ar yec'hed hag ar c'hlenved. Feiz ar c'hantener a zo hano anezhan en Aviel a zo bras dreist. Ker kaer eo komzou an den-ze, savet goul- koude gant eur paian, ma 'z int bet lakeat gant an Iliz var muzellou-ar beleg a zo o vont da rei ar gommunion zantel. Peb kristen a dle lavaret neuze, en he galon: « Domine, non sum dignus ». Aotrou Doue, n'oun ket din e teufac'h em zi, n'oun ket din e tiskenfach ennoun dre ar gommunion zantel, deuit evelato, Aotrou Doue, pa 'z eo guir e fell d'eoc'h, ha rentit ar yec'hed d'am ene. »

KENTEL 28. — Mab intanvez Nain

Epad ma 'z ea Hor Zalver dre ar vro, o prezeg lezen Doue he Dad, ez ea he ziskibien ha kalz tud var he lerc'h. Eun dervez e tigouezas ganthan, e kichen eur gear hanvet Nain, dougerien hag a gase d'ar bez korf eur penñher, mab eun intanvez. Eur maread tud a yea da heul ar c'horf.

Jesus a oue tenerreat he galon, o velet glac'har ar vamm hag a lavaras d'ezhi: « Na ouelit ket. » Tostât a reas da c'houde ouz an arched, hag e touchas outhan, setu ma choumas an dougerien a zav.

Lavaret a reas neuze: « Den yaouank, sav, me eo her gourc'hemien d'id. » An hini a oa bet maro a zavas var he c'hoazez, hag a gomzas, ha Jezus her rentas d'he vam.

Ar re oll a oa eno a oa sebezet, hag a veulas Doue en eur lavaret: Eur prophet bras a zo savet euz hon touez, ha Doue a zo deuet da velet he bobl. »

E broiou ar Zav-heol ar c'horfou maro a ves kaset d'ar bez en ho arched dizolo; en doare-ze, e oue eas d'an den yaouank sevel, var urz Hor Zalver. « Den yaouank Nain a zo eur skeuden euz ar pec'her », eme ar zent. Pa ves lazet ene ar c'hristen dre ar pec'hed, e tle mont da ziskleria stad he goustians d'ar beleg, ha m'en deus guir geuz d'he bec'hed, absolver ar beleg a rento ar vuez d'an ene maro. Ar beleg en deus, er zakramant, galloud Hor Zalver, rak rei a ra an absolver, n'eo ket en he hano he-unan eo, met en hano tri Persoun an Drindet: Tad, Mab ha Spered-Santel.

Mar tigoues d'hon ene, siouaz! beza lazet, redomp buan da c'houlén a nevez ar vuez digant Jezus, dre ar beleg.

KENTEL 29. — Testeni sant Ian-Vadezour

Goude beza diskleriet d'ar Juzevien e oa Jezus a Nazareth « Oan Doue, an hini a lam pec'hejou ar bed, » Ian Vadezour a gendalc'has da brezeg ar binijen var ribl ar Jourden. An dud a yea d'he zelaou, hag a veze badezet ganthan.

Pa glevas ar zant hano ouz ar skouer fall roet gant ar roue Herodes, a veve gant he c'hoar-gaer Herodiadez, ez eas dioc'htu d'he gaout en he lez, evit diskleria d'ezhan, a bers Doue: « Non licet ». An dra-ze a zo difennet. » Drouk'ennhan, ar roue a reas teurel ar Badezour er prizoun. Dre ma teue Jezus da veza anavezet muioc'h mui dre he viraklou, Ian he veule d'he ziskibien, rak hiniennou euz ar re-man a yea da velet ho mestr er prizoun, met ne

heuilhent ket Jezus: denc'hel a reant d'ho Mestr kenta, ar Badezour.

Evit ho zikour muioc'h c'hoaz da gredi e oa Jezus ar Zalver, Ian a gasas eun dervez daou euz he ziskibien da gomz outhan: « C'houi eo an hini a die dont; pe gortos a dieomp-ni unan all? »



Jesus a bareas dirazho kalz tud, hag a respountas: « It da lavaret da Ian ar pez o peus gullet ha klevet; an dud dall a vel, ar re gam a vale, ar re lor a zo pareet, ar re vouzar a glev, ar re varo a zistro e buez, an Aviel a zo prezeget d'ar re babour, hag eürus an neb ne gavo ket ennon eun abek a bec'hed. »

Epad ma tistroe ar gannadet varzu ho mestr, Jezus a gomzas d'ar bobl evit meuli Ian: « Petra oc'h-hu eat da velet pell diouz an dud? Eur gorzennik ejel gant an avel? Eun den guisket flour? An dud-se a zo e palez ar rouaned. Da velet petra oc'h-hu eta eat, pelloc'h? Da velet eur prophet? Ia, m'het lavar d'eoc'h, gullet oc'h eus brasoc'h eget eur prophet. Hen eo a zo bet skrivet divar he benn: « Setu ma kasan va eal dirazoc'h, hen a gompazo an hent. »

Ar prophet Isai en doa diskleriet, seiz pe eiz kant vloaz, arabik ginivelez Hor Zalver : « Eman prest da zont, an Doue a dle ho savetei. Neuze daoulagad an dud dall a zigoro d'ar sklerijen, dioukouarn ar re vouzar a glevo ar vouez, ar c'ham a lamo evel eur c'haro. » Pa velas ar c'hannaded ar miraklou a rea Jesus a Nazareth dirazho, e teuas da zont d'ezho euz komzon ar prophet, hag e kredjont e oa hen ar Messias. Pa glevit hano euz miraklou an Aviel, daoust hag ober a rit eun akt a feiz, en eur lavaret : kredi a ran eo guirion ar miraklou-ze.

KENTEL 30. — Jesus hag ar bec'herez Mari-Madalen

D'ar mare-ze, Hor Zalver, evit merka en doa peb galloud var an eneoù koulz ha var ar c'horfou, a roas ar pare da ene eur bec'herez vras.

Eur pharisian, Simon he hano, en doa pedet Jesus da leina en he di, hag Hor Zalver a yeas ganthan ouz taol. Ha setu eur plac'h brudet fall euz kear, o c'houzout emedo Jesus e ti Simon, a deuas di gant eur podad louzou a c'houez vad. Stouet e kichen Hor Zalver, eun tamik adrenv, e voalc'has he dreid gant he daelou, hag ho zec'has gant he bleo; pokat a reas d'ezho da c'houde, en eur skuill varnho louzou a c'houez vad.

O velet kement-se, ar pharisian en doa pedet Jesus, a zonje : « Ma-vije bet an den-man eur prophet, en defe gouezet piou eo hounnez, ar bec'herez-se, a zo o touch outhan. » Jesus, o lenn e spered an den, a zisklerias : « Simon, m'em eus eun dra da lavaret d'id. — Livirit, Mestr, eme Zimon.

« Daou zen, eme Jesus, a oa dileourien d'eun den all; unan a dlie d'ezhan pemp kant diner, hag egile hanter kant. Evel n'o doa ket a beadra da baea, heman a bardounas d'ezho ho dle. Pehini anezho ho daou her c'haro ar muia ? — An hini, mechans, a zo pardounet ar muia d'ezhan, eme ar pharisian.

— Ho respount a zo eun, eme Jesus.

Hor Zalver a droas neuze varzu ar vaouez, hag a lavaras : « Ha gullet a res houman ? Deut oun en da di, ha n'e peus ket roet d'in eur banne dour da voalc'hi va zreid, e leac'h hi e deus ho gualc'het gant he daelou, hag ho zec'het gant he bleo. N'e peus ket poket d'in, e leac'h hi, abaoue m'eo digouezet, n'eo ket paouzet da bokat d'am zreid ; n'e peus skuillet louzou a c'houez vad ebet var va fenn, e leac'h hi e deus skuillet euz al louzou-ze var va zreid. Rak-se eta e tisklerian d'id : kalz pec'hejou a zo bet pardounet d'ezhi, abalamour m'eo bras he c'harantez. An neb a zo bet pardounet nebeutoc'h d'ezhan, en deus nebeutoc'h a garantez. »

Neuze, Hor Zalver a zisklerias d'ar vaouez : « Ho pec'hejou a zo pardounet d'eoc'h. »

Ar re a oa ouz taol ganthan, a lavaras outho ho unan : « Piou eo heman hag a c'hell memez pardouni ar pec'hejou ? » Met hen a lavaras d'ezhi : « Ho feiz e deus ho saveteat, it e peoc'h. »

Ar bec'herez vras-se a zo Mari-Madalen, dioc'h ma lavar eur c'halz euz doktored an Iliz. Hor Zalver a reas mez da Zimon, abalamour n'en doa ket he zigemeret en he di gant an oll henor a oa dleet d'eun den hag a roe eur gelennadurez ker kaer, d'eun den hag a rea miraklou ker bras. Diskoues a reas Hor Zalver, dre ar rebechou-ze, e plije kalz d'ezhan glac'har hag humilite ar bec'herez. Hi a zo pardounet, n'eus fors peger bras e oa he fec'hejou.

Ha ni, n'eus fors peger bras e ve hon re, ni a vezo pardounet ive, mar hon eus guir geuz d'ezho. Seul vui e vezo bras hor c'hontrision, seul kaeroc'h e vezo ar grasou a resevimp dre zakramant ar binijen.

KENTEL 31. — Kasouni ar pennou bras. Beelsebub

Seull vui e tiskoueze Hor Zalver he c'halloud hag

he garantez, seul vui e oa deut mad d'ar bobl, met seul vui ive e kreske kasouni ar pennou bras.

Eun deryez m'en doa Jesus kaset an diaoul diouz korf eun den eat mut, heman a gomzas, rak an diaoul eo a rea d'ezhan beza mut. An oll a oue estlammet. Meur a hini euz ar Juzevien a lavaraz neuze: « Dre c'halloud Beelzebub, mestr an diaoulou, eo e kas Jesus a Nazareth an diaoulou. »

Hor Zalver, pa 'z eo guir ec'h anaveze peb tra, a zisklerias d'ezho: « Eur rouantelez ha n'eus ket emgleo ennhi a vezo diskaet, eun ti heb unani a gouezo en he boull. M'ema an diaoulou e brezel etrezho, penaoz n'ez aio ket ho galloud da netra? C'houi a lavar e kasan an diaoulou kuit dre c'halloud Beelzebub. Ma ran al labour-ze dre c'halloud Beelzebub, dre c'halloud piou ho pugale d'ec'h-hu a gas kuit an drouk-sperejou? Rak-se, int-hi eo ho parno. Met mar deo dre c'halloud Doue eo e kasan kuit an drouk-spered, sklear eo e deut rouantelez Doue betek ennoc'h. »

« Pa ves eun den krenv, armou mad d'ezhan, o tiousall he zor, n'eus riskl ebet evit he beadra. Mar teu evelato unan krenvoc'h egethan d'he drec'hi, e kollo an oll armou a rea he nerz; hag he beadra, laeret diganthan, a vezo roet d'an estren. An neb n'ema ket ganen, a zo eneb d'in, hag an neb ne zastum ket ganen, a zo o fuilla. »

« Pa ves eat ar spered lous diouz eun den, ez a dre leac'hiau goues, o klask ar peoc'h, hag evel n'her c'hav ket, e lavar: « Distrei a rin en ti am eus kuiteat. » Pa zistro, e kav an ti neteat ha kae-reat. Neuze ez a, hag e kemer seiz diaoul all falloc'h egethan, hag ez eont da jom en ti, ha stad diveza an den-ze a zo guasoc'h eget ar c'henta. »

Beelzebub, doue ar c'hellien, a oa doue bras ar Philistined, hag abalamour ma veze atao pobl Israel e bre-

zel gant ar bobl-se, ar Juzevien o doa kasouni oc'h an doue-ze. Hor Zalver, en he respount d'ar Juzevien, a ra kaoz euz ho bugale hag a gase kuit an drouk-sperejou: kement-se en em gave avechou, en amzer Hor Zalver.

Komzou Hor Zalver divar benn eun den krenv, a ves displeget gant an doktored pa gomzont euz galloud an drouk spered var ar pec'her.

Lennit ar Skritur Zakr gant evez, hag e kavot e peb kentel magadurez evit hoc'h ene. Guelit an dud techet d'ar vesventi, pe d'ar pec'hejou vil; karout a rafent terri ho chadenou, ha n'her greont ket, dinerz int. Mar gellont, goude eur retred, eur mission, chench buez, ez eus riskl bras evitho c'hoaz, rak meur a hini anezho, goude beza bet fur eur pennad, a goues en dro. Evel m'hel lennit en Aveli, ar re a goues a nevez a zisken dounoc'h e lagen ar pec'hed, evel pa vijent renet gant seiz diaoul e leac'h unan.

Diouallomp da goueza e lasou an drouk-spered dre ar pec'hed marvel, bez' e vemp neuze he sklavourien.

KENTEL 32. — Ar guir eürus ded. Eur burzud en nenv

Epad ma oa Jesus o kentelia an dud, mouez eur vaouez a zavas euz ho zouez: « Eürus, emezhi, ar vam e deus ganet ha maget ac'hanoc'h!

— Eürus kentoc'h, eme Hor Zalver, ar re a zelaou komzou Doue, hag a vir anezho! »

Ar Pharisianed hag ar Skribed (ar Skribed a skrive lezen Moysez) a lavaraz neuze: « Mestr, diskouezit d'eomp eur burzud en nenv. » Jesus a respountas: « Ar ouen fallakr-man a c'houlenn eur burzud, ha ne vezo roet d'ezhi ken burzud nemet hini ar prophet Jonas. Rak, evel ma choumas Jonas tri dervez ha teir nosvez e korf eur pesk, evelse Mab an den a joumo tri dervez ha teir nosvez e kalon an douar. »

« Tud Niniv a zavo deiz ar varn gant ar ouenn-

man hag he c'houndaono, rak hi o deus great pinijen da vouez Jonas, hag ez eus ama brasoc'h eget Jonas. Rouanez ar C'hresdeiz a zavo deiz ar varn eneb ar ouenn-man, hag he c'houndaono, rak deuf eo euz ar penn pella euz ar bed da anaout furnez Salomon, hag ez eus ama furoc'h egetan. »

Kaer eo meuleudi ar Verc'hez Vari e ginou ar vaouez a zo hanu anezhi er penn kenta euz ar gentel-man. Kaer eo ive ger Hor Zalver, pa lavar hon dezo perz en eürsdet ar Verc'hez, ma viromp gourc'hemennou Doue.

Pa c'houlenas ar Juzevien eur burzud en nenv, Jesus ne roas ket d'ezho ho goulenn. Ober eur burzud en nenv a vije bet eur mirakl koant ha kurius, met Mab Doue a oa diskennet var an douar evit ober burzudou a vadelez, n'eo ket evit ober plijadur d'an dud kurius e oa. Jesus a gemer alies en Aviel an hanu a zo er gentel-man: « Mab'an den », evit merka splann eo e guirionez mab bian Adam evel an dud all, daoust m'eo ive Mab Doue er memez amzer. Ober a'ra rebechou da veur a hini euz ar Juzevien, abalamour n'her zelaouent ket gant eur galon humbl.

Ni, daoust ha selaou a reomp kenteliou an Aviel ?

KENTEL 33. — Parabolennou Hor Zalver. An hader

Evit sklerijenna an dud en eun doare hag a blijed d'he genvroiz, Hor Zalver a zisklerias meur a vech ar virionez e parabolennou.

« An hader, emezhan eun dervez, a yeas da hada he c'hreun. Epad ma c'hade, lod euz ar greun a gouezas var an hent, a oue breset gant an dud, ha debret gant al laboused. Darn all a gouezas var eun douar meinek; diouan a reas, ha dizec'ha dioc'htu, rak an douar n'en doa ket a zounder. Darn all c'hoaz a gouezas etouez ar spenn, met a veac'h e pot tuered ar tued tagnou tigno em tagnou tigno erfin a gouezas var an douar mad, hag a zougas kant evit unan. »

An ebestel a c'houlenas digant ho Mestr: « Petra verk ar barabolen-ze? » Ha Jesus a respountas d'ezho: « Deoc'h-hu e vezo roet sklerijen, met ar re all a zelaouo ha ne ententint ket. »



« An had eo komz Doue: taolet e ves ganthan e kalon an den. Ar greun a goues var an hent a verk ar gomz pe ar zonj vad e spered eun den ha ne boanio ket da entent: an diaoull a gas kuit ar gomz-se, evit miret na zeufe an den d'en em zavetei. Ar greun a goues var eun douar meinek a verk an dud a reseo gant plijadur komzou Doue, met ker-kent ha m'o deus eun dra benag da c'houzanv, e troont kein d'ar virionez. Ar greun a goues etouez ar spenn a verk an dud a zigemer ervad komzou Doue, met an drez, da lavaret eo, plijadureziou ha madou ar bed-man, a deu da vouga ar zonjezonou mad. »

« Ar greun a goues var an douar mad a verk an dud o deus kalon vad o selaou komzou Doue, a joum da bleustri ar c'homzou-ze en ho spered, hag a ren ho buez dioutho er basianted. »

An ebestel a ententas neuze perak e oa kement a dud o selaou Jesus eur pennad, ha pegen nebeud o kenderc'hel d'he heul atao.

KENTEL 34. — Parabolen an Draok

Hor Zalver a lavaras c'hoaz: « Rouantelez an nenv a zo henvel ouz eun den hag a daolas had mad en he bark. Mes epad ma oa kousket an dud, he enebour a deuas, hada a reas draok etouez ar greun mad, hag e tec'has kuit. Pa zavas an ed, pa zigoras ar pennou, e oue anavezet an draok. Ar zervicherien a yeas neuze da gaout an tad a famil: « Mestr, emezho, daoust ha n'o peus ket hadet greun mad en ho park? Perak eo leun a zraok? » Hen a respontas d'ezho: « Va enebour eo en deus great kement-se. » Ar mevelien a lavaras kerkent: « List ac'hanomp, ni a denno an draok.

— Nan, emezhan, gant aon na dennfac'h an ed gant an draok. Laoskit anezho da greski ha da zarevi betek an eost, neuze e livirin d'an eosterien: dastumit da genta an draok, endramit, hordennit anezhan, ma vezo taolet en tan da zevi; mes dastumit da c'houde an ed mad, gorronet e vezo em grignol. »

Pa c'houlennas an ebestel petra verk an ed hag an draok, Jesus a respontas d'ezho: « An hader eo Mab an den, ar park a zo ar bed, hag ar greun mad eo bugale ar rouantelez. An draok eo bugale ar fallagriez, hadet eo bet gant an diaoul, hag a zo an enebour, an eost a zo fin ar bed, hag an eosterien eo an elez. En dervez-se, ar re vad a lugerno evel an heol, ar re fall a vezo stlapet en tan: eno e vezo lenv ha skrign-dent: Ra glevo an neb en deus diousskouarn da glevet. »

Dre ar barabolen-ze, Hor Zalver a zisklerie d'an ebes-

tel ha d'an oll var ho lerc'h: tud santel ha pec'herien a vevo-atao mesk ha mesk er bed-man; en doare-ze e vezo amproutet vertuz ar re vad, ha Doue a roio amzer d'ar re fall da jench buez. En diou barabolen, neb piou benag en deus diousskouarn da glevet, ha spered da eñtent, a anaves ervad e ro Doue grasou a zilvidigez d'an oll, hag e kemer amzer araok skei ar re fall.

« Rouantelez an nenv, eme c'hoaz Jesus, a zo henvel ouz eur c'hreunen zezo gounezet gant eun den en he bark. Ar c'hreunen-ze a zo ar viana euz an oll hajou, sevel a ra goulskoude dreist an oll geotennou, hag e teu da veza guezet: laboused an nenv a zeu da joun var he skourrou. »

Ar c'hreunen-ze, eme ar zent, a zo eur skeuden euz an Iliz. Pegen dister e oa er penn kenta, pa ziskennas ar Spered Santel var an ebestel, da zeiz ar Pantekost! Pegen nebeud e oant dirak ar mor paianed a c'holoe neuze ar bed! Penaoz int eat ker buan var gresk? Hor Zalver hel lavar.

KENTEL 35. — Parabolennou all. Guall amzer torret.

« Rouantelez an nenv, emezhan adarre, a zo henvel ouz eun tam goell a gemer eur vaouez. Lakeat eo ganthi e tri muzul bleud, hag e ra d'an toaz oll goi. »

Nerz ar goell-ze a verk d'eomp nerz gras Doue o sikour labour ar gristenien genta. Evel kollet e oant etouez ar baianed, mes ar re-man a zo bet troet ganthi a nebeudou, hag an Iliz e deus bet, e berr amzer, bugale en oll broiou euz ar bed. Evit merka, eur vech muioc'h, e tle ar re vad beva etouez ar re fall, Hor Zalver a lavaras ouspenn:

« Rouantelez an nenv a zo henvel c'hoaz ouz euronet hag a daoler er mor, hag a zastum bep seurt pesked. Pa ves leun, e ves tennet var an aod,

neuze ar pesked mad a ves lakeat e panerou, hag ar re fall a ves taolet kuit. Evelse, eme Jesus, e tigouezo da fin ar bed. An elez a zispartio ar re fall euz a douez ar re vad hag ho zaolo en tan: eno e vezo lenv ha skrign dent. »

Dre ar c'henteliou-ze, Jesus a sklerijenn he ziskibien, koulz hag ar gristenien var ho lerc'h. An Iliz a dlie kreski, met he bugale a rankfe stourm evit enebi ouz ar re fall. Eur zonz a dle atao kennerza bugale an Iliz: ar re fall a vezo taolet en tan da fin ar bed.

Goude m'en devoue sklerijennet he ziskibien dre ar parabolennoù a zo bet diskleriet ama, ha diou pe deir all c'hoaz, Hor Zalver a lavaras d'he ebestel: « Deomp en tu all da lenn Jenezareth. » Sevel a reas neuze en eur vag, hag he dud ganthan.

Padal, setu ar gwall amzer o tiroll spountus, hag ar vagik goloet gant an tarsiou-mor: etretant Jesus a oa kousket. An diskibien a yeas d'he gaout, hag heñ dihunus, en eur lavaret: « Mestr, hor zaveteit, emaoomp o vont da goll! » Hag Hor Zalver a respountas d'ezho: « Perak kaout aon, tud a nebeud a feiz » Sevel a reaz neuze, ha gourc'hemen d'ar mor ha d'an avel; kerkent, ar mor a davas. Hogen, an dud, souezet, a lavare: « Piou eo heman, en c'hus galloud var an avel hag ar mor? »

Pa vezomp e riskl hor buez, pa ves hon tud varnez mont da goll, daoust ha sonj hon eus eo Jesus mestr an oll draou krouet? Daoust hag he bedi a reomp, gant eur guir fizians en he c'halloud? Ar zent o deus gullet er vag a zouge Hor Zalver eur skeuden euz an Iliz, hag er mor kounnaret eur skeuden euz ar bed. En despet d'ar brezel a ra d'ezhi ar re fall, bagik an Iliz n'ez aio biken d'ar goueled: Jesus a zo ganthi.

KENTEL 36. — Daou zen diaoulek Jerasa

Pa zouaras Jesus, e kavas e Jerasa daou ziaou-

lek, da lavaret eo, daou zen hag a oa eat an diaoul enno: unan anezho n'en doa na ti, nak oz, na dilad, mont a rea da guzat er beziou. Chadennet e oa bet gant he dud, mes torret en doa Bevech he chadennoù. Pa oue Hor Zalver a vel d'ezhan, an diaoulek a stouas dioc'htu dirazhan: « En han' Doue, emezhan, na rit drouk ebet d'in. » Jesus a c'hourc'hemennas: « Kers diouz an den-ze, spered hudur. Pe hano e peus? eme c'hoaz Hor Zalver.

— Strollad eo va hano, eme an drouk-spered dre c'hinou an den, rak eur maread oump ama. » Hag e pedent Hor Zalver, o c'houlenn diganthen mont er perc'hel a oa eur vanden vras anezho e kichen. Jesus a respountas d'ezho: « It, » ha kerkent ar perc'hel a yeas var ho fenn er mor, hag a oue beuzet.

An diaoulek, eat an drouk sperejou diouz he gorf, en em viskas dioc'htu, hag a azezas seder, leun a respet hag a anaoudegéz vad, ehars treid he Zalver. Tud ar vro-ze, drouk enno abalamour d'ar c'holl o doa great, a bedas Jesus da vont pell dioutho: ne brijent ket sonjal er madou bras a roe Hor Zalver da ene ha da gorf an dud a oa er boan.

Pegen humbl e ped an diaoul! En han' Doue! emezhan. Evit an drouk-sperejou n'eus eürusdet ebet: pa dec'hont diouz an ifern, ho foaniou bras a 'z a d'ho heul. Evelato, bez' o deus evel plijadur pa c'hellont ober drouk d'an den, pa c'hellont he lakât da goueza er pec'hed, ha setu perak e c'houlennent na vefent ket strinket en ifern. Gouzout a reant mad, o velet burzudou Hor Zalver, o klevet he gelennadurez, e oa Jesus Mab an Oll-C'halloudek.

KENTEL 37. — Merc'h Jaïr ressussitet

Goude m'en devoue Hor Zalver treuzet lenn Jenezareth en dro, eun den, Jaïr, mestr eur synagog e

Kapharnaüm, a deuas da stoui dirak Jesus, en eur lavaret: « Aotrou, va merc'h a ze o paoues mervel, mes deuit, astennit ho tourn varnhi, hag e vevo. » Ar verc'h-se a oa daouzek vloaz.

Jesus a zavas dioc'htu, hag a heuillas Jair. Epad ma kerze Hor Zalver, eur vaouez, klanv gant ar c'holl goad daouzek vloaz a oa, a douchas gant feiz beven he viskamant, hag a oue pareet kerkent.

Pa zigouezas Hor Zalver dirak ti Jair, e velas eus maread tud o lenva d'ar maro, hag e kemeras ganthan Per, Jakez h lan hebken, en eur lavaret d'al lenverien: « It kuit, rak ar verc'h-se n'eo ket maro, met kousket hebken. » Hag int-hi a c'hoarze goap, rak gouzout a reant e oa maro mik.

Jesus a yeas neuze en ti, hag a grogas e dorn ar verc'h: houman a zavas kerkent. Hor Zalver a lavaras neuze d'he zud: « Grit d'ezhi debri breman. »

Mestr ar synagog hag ar vaouez pareet o doa feiz ho daou, ha Jesus, leun a vadelez, a reas daou virakl kaer evitho. « Ar brud euz ar burzudou-ze a redas dre ar vro oll », eme an Aviel. Ni, daoust ha fizians hon eus e galioud Hor Zalver? Daoust hag he bedi a reomp a greiz kalon? Guir eo, ne ro ket nemeur brema, ar pare dre vurzud, evel ma roas d'an daou-ze, mes p'hon eus galvet ar medisin, hag implijet al louzou en deus roet, daoust ha sonj mad hon eus da bedi Doue da rei vertuz d'al louzou-ze?

KENTEL 38. — An Ebestel kannadet Hor Zalver. He gliennadurez d'ezho.

Jesus a 'z ea dre ar vro, o kelen an dud,, o parea ar re glanv, setu ma teue pobladoù d'he zelaou. Hor Zalver madelezus en doa truez outho, henvel e oant ouz eur vanden zenved heb pastor. Lavaret a reas d'he ziskibien: « An eost a zo bras, mes niyer an eosterien a zo biau. Pedit mestr an eost da zigas labourerien all d'he obert. »

Gervel a reas neuze an daouzek abostol, hag e roas galloud d'ezho da barea ar c'hienvejou, an dud mac'hagnet, ha da gas an drouk spered kuit. Neuze, e kasas anezho, daou ha daou, da brezeg an Aviel, goude beza ho c'henteliet.

« Arabat eo d'eoc'h, emezhan, mont etouez ar baianed, nak e tiez ar Samaritaned, met it d'an derved kollet euz bugale Israel. Pareit ho zud klanv, ha roit evit metra ar pezh o peus bet evit netra. Na zougit ganeoc'h nak aour, nak arc'hant; n'ho pezet na diou viskamant, na baz, rak all labourer en deus guir d'he voued. »

« Pa 'z eot en eun ti, livirit: « Ar peoc'h en timan: » Mar deo din tud an ti, ar peoc'h a vezo d'ezho; a hent all, ho peoc'h a zistroio d'eoc'h. »

« An diskibl n'eo ket hueloc'h eget ar mestr, nak ar mevel dreist he aotrou. Pa 'z eo guir o deus great Beelzebub dioc'h an tad a famill, nak a draou guasoc'h a livirint dioc'h tud he di! Ho kas a ran evel derved e kreiz ar bleizi, bezit eta var evez evel an aered ha didroidel evel ar c'houlmed. Diouallit rak an dud, rak tamallet ha skourjezet e viot gantho: N'ho pezet ket aon rak ar re a laz ar c'horf heb kaout galloud var an ene, met diouallit kentoc'h rak an neb a c'hell koll ar c'horf hag an ene. »

« Pa 'z eot dirak ar varnerien, arabat eo d'eoc'h kaout nec'hamant, araok, gant ar responchou, ho pezo d'ober, rak Spered Doue a roio d'eoc'h ar responchou-ze.

« An neb piou benag am anzavo dirak an dud, m'hen amzavo ive dirak va Zad euz an nenv. An neb a gar he dad hag he vam muioc'h egedon n'eo ket din ac'hanon; an neb ne gemer ket he groaz evit dont d'am hent n'eo ket din ac'hanoun ken nebeut. »

« An neb ho resevo, am resevo; hag an neb am reseo, a reseo an Hini en deus va digaset. An neb piou benag a roio eur verennad dour yen, ha pa ne ve ken, abalamour d'in, da unan euz ar re vian a zo ama, hen diskleria a ran d'eoc'h, paet e vezo. »

An ebestel a zentas ouz he mestr benniget, hag a yeas en hent.

Setu, e berr gomzou, lod euz an aliou kaer a roas Hor Zalver d'he ebestel. Ho c'has a rea etouez ar Juzevien, evit he zikour en he labour, hag aliou ho mestr karet a dlie rei fizians d'ezho. Epad ma roe Hor Zalver an aliou-ze, he lagad a vele, dre ma oa Doue, preze-gerien ar feiz dislavaret gant hiniennou, goapeat ha skourjezet gant an dud fall dre ar bed, beteg fin an amzer, setu ma rea kaoz anezho oll, daoust na vele nemet an ebestel hebken dirazhan.

Daoust ha reseo a rit, gant respet, kannadet an Aotrou Doue, beleien, leaned ha leanezed pa deuont en ho ti. Daoust ha selaou a rit gant doujans komzou an Aotrou 'n Eskop hag ar veleien? « An neb ho selaou, am zelaou », eme Hor Zalver d'ezho. Daoust ha pasianted o peus e poaniou ar vuez?

KENTEL 39. — Merzerenti sant Ian Vadezour.

Evel m'eo bet diskleriet dija, ar roue Herodes en doa great chadenna Ian Vadezour en eur prizoun. Herodiades, ar c'hreg a skouer fall, a vage kasouni ar maro ouz ar prophet, met na c'helle ober drouk ebet d'ezhan, rak Herodes en doa doujans evithan, hag a zelaoue he aliou.

Eun dervez, ar c'hreg digalon a deuas a benn euz he mennoz. Deiz ar bloaz he c'hiniwelez, Herodes a reas eul lein vras evit tud he lez, an ofiserien hag ar pennoù bras euz ar vro. Merc'h Herodiades a deuas, en desped d'he renk huel, d'ober eun dro zans dirak an dud, hag a blijas kement

d'ar pennoù bras ha da Herodes he unan, ma touas heman d'ezhi: « Goulen diganen ar pezh a gari, ha m'hen roio d'id, ha pa ve an hanter euz va rouantelezh e vefe. » Houman a redas da gaout he mam: « Petra c'houlenenn? » Hag hi ha respount raktal: « Penn Ian Vadezour. »

Ar verc'h a zistroas d'ar red dirak ar roue: « Roit d'in dioc'htu, var ar plad-mañ, penn Ian Vadezour. » Herodes a oue melkoniet: evelato, abalamour d'al le en doa great, ha d'ar pennoù bras o doa klevet he gomzou, e roas he goulen d'ar verc'h divezet. Eur goard a ziskennas er prizoun, a zibennas ar zant, hag a roas ar penn d'ar verc'h: houman, her roas d'he mam.

Diskibien Ian, pa 'z eas ar c'helou betek enno, e deuas da glask ar c'horf santel evit he zebelia.

Herodes a bec'has o toui heb eun digarez vad. En desped d'al le en doa great, ar roue a bec'has c'hoaz o rei he goulen d'an danserez fallakr, abalamour ma rea d'ezhan ober eun torfed heuzus. Peger fallakr eo an dud en em ro d'ar blijadur, ha pegen touellus eo an dans! Diouallit rak an dansou, dreist oll rak an dansou noz.

Na pegen kaer eo buez, ha maro sant Ian Vadezour!

KENTEL 40. — Distro an Ebestel. Bara kresket.

Pa oue distroet an Ebestel, e tisklerjont d'ho mestr ar pezh o doa great ha desket d'an dud. O veza ma oa kalz tud en dro d'ezhan, Jesus a lavaras d'an daouzek: « Klaskomp eul leac'h distro da ziskuiza. » Pignat a reas eta gantho en eur vag, hag e treuzas mor Jenesareth.

Pa zouaras ar vag, eur maread tud a ziredas d'he gaout, setu ma savas var eun dorgen evit ho c'helen. Dre ma komze, kalz re all a deue heb ehan d'he

zelaou, hogen an denvalijen a dostea, hag an dud-se na c'hellont ket kaout bara el leac'h goues ma oant. Jesus a c'houlennas eta digant Philipp, unan euz an daouzek abostol: « E pe leac'h e prenimpni bara, da reñ d'an dud-se? »

Philipp a respountas: « Gant daou c'hant diner arc'hant ne vezo ket aoualc'h evit rei eun tamik da bep hini. »

Eun all, Andre, breur Simon Per, a lavaras: « Bez' ez eus ama eur c'hrouadur hag en deus pemp bara heiz, ha daou besk, met petra eo an dra-ze etre kement all a dud? » Jesus a respountas: « Grit d'an dud azeza. » Geot stank a oa eno: ar goazed a azezas, tost da bemp mil a oa anezho, heb ar merc'hed hag ar vugale. Jesus a gemeras ar bara, a drugarekeas he Dad, hag a rannas ar bara etre an dud, dre zorn an ebestel; rei a reas ive d'ezho ho gualc'h a besked. Pa oue achu gant an dud debri, an ebestel a zastumas an tamou a jومه euz ho dilerc'h, hag e kavjont daouzek panerad.

Hag an dud a lavare, o velet ar burzud-se: « Heman eo ar prophet a dle dont. » Met pa velas Jesus, a lenne c'halonou, o doa c'hoant an dud he lakât da roue, e reas d'he ebestel mont kuit dre vor, hag e tec'has he unan var eur menez.

Guelet a reomp, er gentel-ze, karantez Hor Zalver evit an dud: na c'hellont ket kaout boued el leac'h distro ma oant ennan, setu ma ra d'ar bara kreski dre vurzud, evit maga an oll. Penaoz e reas kement-se? Dre he Oll-C'halloud. Doue eo o ro d'an ed, pa ves hadet, nerz da ziouan ha da greski, dre ar bed, daoust ha diesoc'h eo d'ezhan ober d'ar bara kreski etre daouarn he ziskibien?

Fizians an ebestel a zo bras. Ho mestr na lavar ket d'ezho: « Me gresko ar bara » lavaret a ra d'ezho heb-

ken: « Grit d'an dud azeza », ha kerkent e sentont out-han. Daoust ha fizians hon eus, ni, e komzou an Aotrou Doue?

KENTEL 41. — Simon Per a vale var an dour.

An ebestel a oa savet e bag evit treuzi, var urz Jesus, mes bag Per ne gerze nemeur, kaer o doa an ebestel roenvat, rak an avel a oa krenv hag a c'houeze a benn d'ezho. Setu ma veljont Jesus o vale var ar mor, hag e leverjont: « Eun teuz eo, » Youc'hal a rejont dre ho spount. Met Jesus a zisklerias d'ezho: « Bezit fizians, me eo, n'o pezet aon ebet. » Per a respountas kerkent: « Aotrou, mar deo c'houi eo, gourc'hemennit d'in mont davedoc'h var an dour — Deus, » eme Jesus.

An abostol a ziskennas neuze var an dour, hag a valeas eno brao bras, met pa velas nerz an avel, e savas aon ganhan, ha kerkent he dreid a ziskennas en dour. Krial a reas dioc'htu: « Aotrou, va zaveteit! » Hor Zalver a astennas neuze he zorn, hag a zavas Per, en eur lavaret: « Den a nebeut a feiz, perak kemeret aon! » An avel a davas kerkent, hag an ebestel a stouas dirak Jesus, en eur lavaret: « C'houi zo e guirionez Mab Doue. »

Peger beo eo feiz sant Per! Guelet a ra Jesus o kerket dre vurzud, hag e c'houlenn dioc'htu ar galloud da gerzet evelnan, daoust peger souezus e oa. Hor Zalver a ro d'ezhan he c'houlenn.

Feiz ar zant, ker krenv da genta, a deu da zemplât o velet tarziou ar mor fuloret, ha neuze, n'en deus mui nerz da jom var an dour, disken a ra er mor. An abostol a ra neuze ar pez a dle ober peb kristen pa 'z eus riskl evithan, pa ves tentet, goulenn a ra sikour Doue, hag he beden a zo selaouet. Pa vezomp tentet, e riskl da goueza er pec'hed, daoust ha pedi a reomp Doue?

TREDE PENNAD

An Aviel Prezeget

KENTEL 42. — Jesus, ar bara a vuez.

An dud a oa bet maget gant Jesus dre vuzud her c'havas prest goude e Kapharnaüm, setu ma tisklerias d'ezho: « Va c'hlask a rit, abalamour m'em eus roet d'eoc'h da zebri ha m'oc'h eus bet ho kualc'h. Labourit, n'eo ket evit eur boued hag a 'z a da netra eo, met evit ar boued ho mago evit ar vuez eternal. Va Zad a roio d'eoc'h ar bara diskennet diouz an nenv, me eo ar bara-ze. »

Meur a hini a c'hrosmolao o klevet ar c'homzouze: « Daoust ha Jesus n'eo ket mab Joseph? Anaout a reomp he dad hag he vam, hag e lavar d'eomp eo diskennet euz an nenv! »

Hor Zalver a bouezas neuze m'oc'h c'hoaz var ar gentel-ze: « E-guirionez, m'hel lavar d'eoc'h; ma na zebrit ket korf Mab an den, ha ma na evit ket he c'hoad, n'ho pezo ket ar vuez ennoc'h. An neb piou benag a zebro va c'horf hag a evo va goad, en dezo ar vuez a bado da viken, ha m'her savo euz a varo da veo da fin ar bed. Va c'horf a zo eur vagadurez, ha va goad, eun evach. »

Kalz Juzevien, tud gros ha dientent, a lavaras neuze: « Setu aze komzou kalet da glevet, piou a c'hell ho c'hredi? » Hag e trojont kein da Jesus.

Hor Zalver a zellas neuze ouz an ebestel: « Ha c'houi, emezhan, daoust ha va dilezel a reot ive? » Peñ a respountas kerkent: « Da gaout piou ez afemp? C'houi a zo ganeoc'h komzou ar vuez eternal, ha kredi a reomp oc'h ar C'hrist, Mab Doue. »

Sakramant an Aoter a zo eur myster souezus euz oll c'halloud ha karantez an Aotrou Doue, setu perak Hor Zalver en deus hen diskleriet d'he ziskibien pell araoñ hen rei d'ezho. Kalz Juzevien na fell ket d'ezho entent ez eus e Jesus diou natur: natur Doue ha natur an den. E kement ha m'eo Doue, Jesus a zo diskennet euz an nenv, rak bez' ez eo Mab unik an Tad eternal, diskoues a ra he c'hloar en nenv, daoust m'ema e peb leac'h. E kement ha m'eo den, Jesus a zo Mab ar Verc'hez glorius Vari, breur an oll dud, pa 'z eo guir eo mab bian Adam evelde, ha setu perak Hor Zalver a rea alies Mab an den anezhan he-unan.

Ar Juzevien, tud gros ha dibarfet, ne ouient ket e pe zoare en dije Hor Zalver roet d'ezho he gorf da zebri hag he c'hoad da eva, setu ma 'z ejont kuit, en desped d'ar burzudou bras a rea Jesus. An ebestel ne entent ket ken nebeud, rak spered an den a zo re zibarfet evit entent myster ar zakramant-se var an douar, met ho feiz a rea d'ezho kredi. Ger sant Per da Jesus a zo eun akt a feiz kaer dreist: « C'houi eo ar C'hrist, Mab Doue. » Entent a rejont, da goan ar yaou Gambliid, pa zavas Hor Zalver sakramant an Aoter, e c'hell Doue, en he c'halloud hag he furnez, rei d'eomp he gorf da zebri, heb an distera donjer evidomp.

KENTEL 43. — Merc'h-ar Gananeanez.

Gant aon rak ar Juzevien a glaske he varn d'ar maro, Hor Zalver, pa 'z eo guir ne oa ket deut c'hoaz mare he Basion, a dec'has evit eur pennad e bro ar baianed, er Phenisiï. Eur vaouez euz bro Kanaan, hag a oa eat eun diaoul hudur e korf he merc'h, a stouas dirazhan, eun dervez, en eur lavarret: « Aotrou, mab David, o pet truez ouzin, va merc'h a zo gualt gaset gant an drouk-spered. » Hor Zalver ne respountas ger, met he ziskibien a lavaras d'ezhan: « Selaout he goulenn, rak krial a ra var hor lerc'h. »

Jesus a lavaras neuze : « N'oun digaset nemet evit an denved dianket euz a bobl Israel. » Ar vaouez hen adoras adarre : « Aotrou, emezhi, va zilkourit. — N'eo ket mad, eme Hor Zalver, kemeret bara ar vugale, evit he deurel d'ar chas. — Guir eo, emezhi, met ar chas bian a zebr, diwar an douar, ar bruzunennou a goues diwar daol ar vistri. — Maouez, eme Hor Zalver, ho feiz a zo bras. Kit en dro, an drouk-spered a zo eat diouz ho merc'h. » Kerkent, ar verc'h a oue pareet.

Pegen tener ha peger stard eo karantez eur vam ! Ar vaouez-se, eur baianez, a zo evel pa lavarfet unan gant he merc'h : « O pet truez ouzin ! » emezhi. Ha kaer en deus Hor Zalver beza diseblant, beza rust evithi, ar Gananeanez a gendalc'h : choum a ra atao humbl ha leun a fizians. Doue a zelaou atao ar pedennou-ze.

Pa c'houlennit digant Doue eur c'hras kaer benag, daoust hag humbl ha nerzus eo ho peden, evel hini ar Gananeanez, daoust ha kenderc'hel a rit evel d'hi ?

KENTEL 44. — Pare eun den bouzar ar mut.

Digaset e oue d'Hor Zalver, eun dervez, eun den bouzar ha mut, ha renerien an den paour-ze a c'houlenn digant Jesus lakât he zaouarn varnhan, evit he barea. Hor Zalver a henchas ar mut diouz a douez an dud, neuze, e lakeas he vizied en he ziouskouarn hag eun nebeud kranch var he deod. Da c'houde, e sayas he zaoullagad varzu an nenv, en eur lavaret : « Ephpheta » da lavaret eo : « digorit ». Kerkent, diouskouarn ar bouzar a zigoras, teod ar mut a lampreas, hag e koinzas heb diezaman.

Jesus a zifennas ouz an testou ober kaoz euz ar buazud-se, met seul vui e tifenne, seul vui an dud a oa mad da embann ar burzudou a rea.

An dud a oa gant ar mut-se a oa tano ho feiz, rak

sonjal a ra d'ezho ne c'helle Jesus para nemet o touch ouz an den gant he zaouarn. Jesus, leun a vadelez, a rent ar pare d'ar mut en doare ma c'houlennont.

Evit merka he humilite, Jesus a c'houlenn digant an testou rei peoc'h var ar burzudou a rea, met int-hi n'her selaouont ket.

Pa ves roet ar vadiziant, ar beleg a ra evel Hor Zalver pa bareas an den mut. Lakât a ra eun nebeudik euz he granch oc'h diouskouarn an den evit merka e tile eur guir gristen selaou komzou Doue gant evez ha respet. Hag hen ober a rit-hu, c'houi, tud badezet ?

KENTEL 45. — Ar bara kresket eun eil guech.

Epad ma tistroe Hor Zalver varzu Kapharnaüm, e rentas ar pare d'eur maread re glanv, setu ma



'z ea eur bobl tud d'he heul. Bez ' en devoue, eun dervez, kement a dud o vont var he lerc'h, ma lavaras d'he ziskibien : « Truez am eus ouz ar bobl-ze. Tri dervez zo e teuont d'am heul heb kaout da zebri, ha mar ho c'hasan var yun d'ar gear, e choumint en hent, rak meur a hini anezho a zo deut a bell. » An diskibien a respountas : « Euz

a be leac'h e c'helfe den maga an dud-se, eo plas, distro-man? » Hen a c'houlennas neuze diganθο : « Ped bara o peus? — Seiz, » emezho.

Jesus a reas d'ar bobl azeza var an douar. Kemeret a reas, da c'houde, ar seiz bara, en eur drugarekât he Dad, hag e reas ranna ar bara-ze d'an dud. Ranna a rejont ive eun nebeud pesked bian o doa.

An oll a zebras ho gualc'h, ha gant ar pezh, a joumas a zilerc'h ar bobl e oue karget seiz paner. Eur pevar mil den benag a oa eno, ha Jesus a reas d'ezho oll distrei d'ar gear, goude ma oant bet maget.

Hervez lavarou ar zent, ar buzdud-se a zo eur skeuden euz sakramant menlet ra vezo an Aoter. Er sakramant, Jesus a vag an oll dud a deu d'he reseo. Ar Juezvien, kennerzet gant ar bara o doa resevet, a c'hellas mont betek penn ho beach; ar gristenien, mar bezont mad da dostât ouz ar gommunion, a 'z aio betek penn ho beach hag a zo ar baradoz.

Ha ni, daoust ha mad oump da vont da reseo ar bara a vuez, er gommunion zantel?

KENTEL 46. — Pare eun den dall. Testeni kaer sant Per

Pa oa Hor Zalver tost da vor Jenesareth, e oue digaset d'ezhan eun den hag a oa eat dall. Mont a reas ganthan euz a douez an dud, hag e touchas outhan, en eur c'houlouen : « Daoust ha gullet a res? — Ia, eme an den, gullet a ran tud o vale hag a zo henvel ouz guez. »

Jesus a douchas outhan c'hoaz, hag an den a velas guelloc'h; da c'houde, e velas koulz ha pebunan.

Petra eo bet d'Hor Zalver para an den-ze a nebeudou? C'hoant en doa, mechans, ober d'ezhan kreski he

feiz ha pedi gant muioc'h a galon. Nak a fizians a dlis kaout an den-ze en he Zalver, oc'h entent e vellea ken alies guez ha ma touche Jesus outhan.

Pa resevit digant an Aotrou Doue sklerijen var euz virionez benag euz al lezen gristen, daoust ha pedi a rit stard evit trugarekât Doue ha goulouen grasou nevez!

Pa oa Jesus e kichen kear Cesaree gant he ebestel, e c'houlennas diganθο : « Piou oun-me, hervez lavarou an dud? » An ebestel a respontas :

« Lod a lavar oc'h Ian Vadezour, lod oll a lavar oc'h Elias, Jeremi, pe eur prophet all benag. — Ha c'houi, eme Jesus neuze, piou a zonz d'eoc'h ez oun? — C'houi, eme Ber, a zo ar C'hrist, Mab an Doue beo. »

Jesus a zisklerias neuze : « Eürus out, Simon, mab Ian, rak n'eo ket ar c'hig hag ar goad eo o deus desket kement-se d'id, mes va Zad euz an nenv. Ha me lavar d'id : Te a zo Per, da lavaret eo mean, var ar mean-ze me a zavo va Iliz, hag oll galoud an ffern na vezo biken treac'h d'ezhi. Rei a rin d'id alc'houeziou rouantelez an nenv : kement e pezo liamet var an douar, a vezo liamet en nenv, ha kement e pezo diliamet var an douar, a vezo diliamet en nenv. »

Na kaera testeni a ro sant Per d'Hor Zalver ! Na kaera promesa a ra Hor Zalver d'he Abostol ! Evel pe lavarfe d'ezhan : « Te eo a reno va diskibien em leac'h, pa vezin eat diouz ar bed-man. Va galloud az pezo evren an eneou var hent ar baradoz. »

KENTEL 47. — Jesus a ra kaoz euz he Basion.

Goude beza promettel alc'houeziou an nenv da Ber, Jesus a zisklerias d'he ebestel e tie mont da Jerusalem. Mab an den en dije eno kalz da c'houzanv, a bers ar pennou bras, lakeat e vije d'ar

maro, mes sevel a rafe euz a varo da veô en trede dervez.

Per a ieas neuze gant-Jesus euz a douez an ebessel all, hag a lavaras d'ezhan : « Doue ra viro e tigouesfe eur seurt tra ! » Mes Jesus, o trei varzu Per hag an diskibien, a lavaras d'an abostol : « Adrenv, spered fall ! Te a zo eur guall skouer evidon, rak ne gaves saour ebet gant traou Doue, ne gares nemet traou an dud. »

Hor Zalver a zisklerias da c'houde d'an oll : « An neb piou benag a c'hoantaio va heuill, a ranko renons d'ezhan he unan, ha dougen he groaz bemdez. An hini a fell d'ezhan savetei he vuez, he c'hollo, hag an hini a gollo he vuez abalamour d'in ha d'an Aviel, he zaveteio. Petra daly d'an den gounit ar bed oll, mar teu da goil he ene ? »

Gant aon ne vije deut an diskibien da goll kalon epad he Basion, Jesus a ra kaoz anezhi bloaz araok, evit merka d'ezho e roje e vuez a galon vad, pa blijfe ganthan, da lavaret eo, pa blijfe gant Doue an Tad. P'en deus c'hoant Per diarbenn he Vestr karet, Jesus a ra d'ezhan entent e tle ober, penn da benn, bolontez he Dad euz an nenv. An abostol bras hag an diskibien all n'o doa nemet eun dra en ho zonzj : gullet Jesus o sevel he rouantelez var an douar evit ober d'ar Juzevien beza treac'h d'ar rouanteleziou all ; mes Mab Doue ne oa ket deut er bed-man evit ren soudardet hag ofiserien var dachen an emgann. Setu perak respount Hos Zalver d'he abostol a zo seac'h aoualc'h.

Jesus a verk neuze d'an oll lezen ar mirit : Red ee gouzant evit ma vezo kaer an ene, red eo gouzant eun boan benag bemdez, da lavaret eo, dougen ar groaz, evit gounit ar baradoz. An neb a fell d'ezhan savetei he vuez, o veva eaz, er blijadur, o tec'het diouz ar boan hag an dever, hennez a gollo ar guir vuez ma oa galvet da gaout en eternite ; er c'hountrol, ar merzer a gollo buez ar bed-man abalamour d'Hor Zalver, a c'hou-

nezo ar guir vuez eternal. Oll blijadureziou ar vuez man n'int netra mac'h en em goller evit atao.

KENTEL 48. — Hor Zalver var Menez Thabor.

C'houec'h dervez divezatoc'h, Jesus a reas da Ber, Jakez da Ian he vreur, mont ganthan var eur menez huel, hag eno e oue chenchet en eun doare burzudus. He vizach a deuas da veza skedus evel an heol, hag he viskamant, guen evel an erc'h. An ebessel a velas neuze Moysez hag Elias o komz gant Jesus. Setu ma lavaras Per d'Hor Zalver : « Mestr, mad eo d'eomp beza ama ; mar kirit, e savimp ama tri del, unan evidoc'h, eun all evit Moysez hag eun all evit Elias. » Araok m'en doa achu he gomzou, eur goabren lugernus ho goloas oll. Eur vouez a oue klevet o tont euz ar goumoulen, hag a lavare : « Heman eo va Mab muia karet, va oll garantez a zo ennhan, selaouit-hen. »

An tri abostol, spountet oll, a gouezas d'an douar. Jesus a deuas d'ho c'haout : « Savit, emezhan, n'ho pezet aon ebet. » Digori a rejont kerkent ho daoulagad, ha ne veljont mui den nemet Jesus. Epad ma tiskennent divar ar menez, e lavaras d'ezho : « Arabat eo d'eoc'h diskleria netra euz ar pezh oc'h eus gullet, nemet goude ma vezo savet Mab an den euz a douez ar re varo. »

Peger mad eo Hor Zalver ! Evit kennaerza he dri abostol muia karet, e tiskouez d'ezho eun nebeut euz he c'hloar, var menez Thabor. Moysez hag Elias a rent testeni eo Jesus ar Messias a dlle dont da zavetei an dud.

Na pegen eürus e oant ! Ken eürus m'en doa sant Per evel c'hoant koll he benn o sevel teltoù var eur menez. Ha Doue an Tad, evit sikour ho sklerijenna ervad, e gomzas diouz ar goabren : « Heman eo va Mab muia karet, selaouit hen. »

Daoust ha selaou a reomp lavarou Doue pa gomz d'eomp dre c'hinou ar veleien pe e goueled hor c'hous-tians ?

KENTEL 49. — Ar paotr pareet diouz an diaoul mut.

Pa ziskennas Hor Zalver da gaout he ziskibien, e teuas eun den glac'haret da stoui dirazhan : « Mestr, emezhan, digas a ran d'eoc'h va mab, a zo dindan galloud eun diaoul mut, bezit truez outhan. Guech e koues en dour, ha guech en tan. An drouk spered a ra d'ezhan en em ruill var an douar, eonenna skrignat he zent. Ho tiskibien n'o deus ket gellet he barea. — Abaoue pegeit eo guall gaset en doare-ze ? a c'houlennas Jesus. — Abaoue he vuga-leach, eme an tad. Mari plij, Aotrou, hor zikourit, m'oc'h eus eur galloud benag ? — Mar gellit kaout feiz, eme Hor Zalver, peb tra a zo e galloud an neb a gred. — Kredi a ran, Aotrou, eme an tad-se gant daelou, mes kreskit va nebeut a feiz. »

Jesus a zavas neuze he vouez : « Spered bouzar ha mut, me eo her gourc'hemenn d'id, kers kuit diouz ar c'hrouadur-ze, ha ne deus mui ennhan. » Var an urz-se, an diaoul a dec'has kuit, goude beza hejet kalz ar paotr : heman a joumas evel maro. Hor Zalver a reas d'ezhan sevel, hag her rentas pare mad d'he dad. Ar re a oa eno a oa souezet o velet ar merk-se euz galloud Doue.

Pa ouent ho unan gant Jesus, an ebestel a c'houlennas : « Perak n'hon eus ket gellet parea ar paotr-ze ? — Abalamour n'eo ket krenv aoulc'h ho feiz, eme Hor Zalver. M'o pefe feiz evel eur c'hreuner vezo, e lavarfec'h d'ar menez a velit dirazoc'h : « Kea alese » hag e señfe ouzoc'h ; na vefe netra dreist ho kalloud. »

Jesus a c'houlenn digant tad ar c'hrouadur a oa eat an diaoul ennhan : « Abaoue peur ema er stad-ze ? » Hor Zalver a ouie mad kement-se, pa 'z eo guir eo Doue, met goulenn a rea abalamour d'an dud. Gervel a ra an diaoul eur spered bouzar ha mut, n'eo ket ma vefe an diaoul-ze na bouzar na mut, met abalamour ma lakea ar c'hrouadur er stad-ze.

En despet d'an oll burzudou en doa great Hor Zalver dirazho, an ebestel ne oa ket c'hoaz krenv ho feiz, ha dre-ze, ne c'hellent ket kaout an treac'h var eun diaoul galloudus. An tad en doa nebeutoc'h c'hoaz, rak lavaret a ra d'Hor Zalver : « M'o peus eur galloud benag ! » Pebez ger e ginou eun den hag a gomz d'an Oll C'halloudek ! Humbl e oa evelato, pa 'z eo guir e c'houlennas digant Hor Zalver kreski he feiz.

Ni, kristenien, greomp alies peden an den-ze : « Aotrou Doue, prijet ganec'h kreski hor feiz ! »

KENTEL 50. — Jesus o tiskleria eo Doue.

Jesus a bignas da Jerusalem evit gouel an Teltou. hag a roas he genteliou en Templ. Meur a hini a lavare, souezet bras : « Euz a be leac'h en deus kement a sklerijen var ar Skritur Zakr, pa 'z eo guir n'eo ket bet er skol o teski ? Ar pennou bras a gasas goardou da gregi en Hor Zalver, met ar re-man ne gredjont ket touch outhan : « Biskoas den, emezho, na gomzas evel an den-ze. »

Epad ma oa Jesus o kelen an dud en Templ, ar Pharisianed a zigasas dirazhan eur c'hreg avouttrez, pe eur c'hreg paket o rei skouer fall. « Moysez, emezho, a lavar el Lezen eo dleet labeza an nep piou benag a ro skouer fall : c'houi, petra livirit ? » E leac'h respount, Hor Zalver a blegas evit skriva gant he viz var an douar.

O velet ne respounte ket, ar Pharisianed a c'houlennas a nevez : « C'houi, petra livirit ? — Ra

zeurio, eme Hor Zalver, an hini ac'hanoc'h a zo dibec'h da deurel ar mean kenta outi. » Hag e plegas adarre da skriva.

Ar re a damalle ar vaouez a yeas kuit, an eil goude egille, eme an Aviel. Neuze, Jesus a lavaras d'ar c'hreg-se : « N'eus choumet den d'az tamall, eme Jesus, setu ne goundaonin ket ac'hanoc'h ken nebeut ; it, ha ne bec'hit mui. »

Ar pennou bras a zonje : « Jesus a Nazareth a vezo nec'het : mar teu da goundaoni ar c'hreg-se, en dezo brud da veza eur barner kris ; mar teu d'he fardouni, ez aio eneb Lezen Moysez ». Hogen Jesus a bardounas, heb mont eneb al Lezen.

« Me eo sklerijen ar bed, eme Hor Zalver, an neb a deuio d'am heul ne gerizo ket en denvalijen, mes he vuez a vezo sklerijennet. »

O velet dirazhan Juzevien hag o doa c'hoant kaout abeg ennan, e c'houlennas digantho, huel he benn : « Piou ac'hanoc'h a amproio eur pec'hed ennon ? » Nikun euz ar pennou bras na gredas sevel he vouez da respount.

Divezatoc'h, e tamaljont Jesus da veza dindan galloud an drouk-spered. Jesus a respountas : « Renta a ran henor d'am Zad, e leac'h c'houi a glask va dua. An neb piou benag a viro va c'homzou, ne vezo ket skoet gant ar maro. » Ar Juzevien fallakr a zavas kerkent ho mouez ; « Anat eo ema an diaoul ennoc'h. Hon tad Abraham a zo maro, hag ar bropheted ive, ha c'houi lavar : « An neb a viro va c'homzou, ne varvo ket. Daoust ha brasoc'h oc'h eget Abraham ? Piou a fell d'eoc'h beza ? — Va gloar, eme Jesus, n'eo netra, va Zad eo a ro gloar d'in, ha lavaret a rit eo hen ho Toue. Hen anaout a ran, ha denc'hel a ran he gomz. Abraham, ho tad, en deus tridet gant ar c'hoant guelel va deiz, he

velet en deus, hag eo bet karget a levenez. — Penaoz ? eme ar Juzevien, n'ho peus ket hanter kant vloaz c'hoaz, hag o peus guelel Abraham ! — E guirionez, eme Jesus, araok ma oa euz Abraham, me a zo. » O klevet ar c'homzou-ze, ar Juzevien a glaskas mein evit labeza Hor Zalver, met hen a yeas kuit euz an Templ, dre guz.

Peger fallakr e oa pennou bras ar Juzevien ! Jesus a verk eo sklerijennet gant Doue, ar miraklou a ra a ziskoues en deus galloud Doue, mes ar Juzevien o deus c'hoant nac'h dorn Doue : « An diaoul eo a zo a du ganthan », emezho.

Pa lavar Jesus d'ezho eur gomz ha ne c'hell beza lavaret nemet gant eun Doue, nikun na gred he zislavaret en he zaoulagad, met kerkent ha ma tisklerias freas : « Me a oa araok Abraham », da lavaret eo : « Me a zo ac'hanoun a oll viskoaz, abalamour m'oun Doue » e klaskont he labeza, he laza a daoliou mein. Oberou burzudus Hor Zalver a verke e oa guir he gomzou, mes int-hi, dallet gant ar voarizi, ar gasouni, ne glaskent ket ar virionez. Jesus a dec'has euz a dre ho daouarn, rak ne oa ket deut c'hoaz an heur merket, evit he Basion, gant he Dad euz an nenv.

KENTEL 51. — Pare eun den ganet dall.

En eur zisken euz an Templ, eur zadornvez, Jesus a gavas var he hent eur den ganet dall. Kranchat a reas neuze var an douar, ober a reas pri gant he c'hlaour, hag e lakeas euz ar pri-ze var daoulagad an den, en eur lavaret : « Kea d'en em voalc'hi da lenn Siloe » An dall a zentas dioc'htu, hag a zistroas pare.

An amezeien a oue souezet p'her gueljont : « Daoust ha n'eo ket hennez an dall a c'houlenne an aluzen betek vreman ? » emezho. Lod a lavare : « Hen eo, » mes lod all a nac'he. An den a zisklerias he-unan : « Me eo. — Penaoz, eme an dud, eo bet digoret da

zaoulagad ? » Hen a respountas : « An den a ves hanvet Jesus en deus great pri, en deus lakeat ar pri-ze var va daoulagad, ha lavaret d'in : « Kea d'en em voalc'hi da lenn Siloe. Eat oun, en em voalc'het oun, ha setu me pare ».

Abalamour ma oa ar zadorn, deiz ehan evit ar Juzevien, an den pareet a oue kaset dirak ar Pharisianned, ar pennou bras. Hi a c'houlennas : « Penaoz e peus bet ar guele ? » Hen a respountas : « An den-ze en deus lakeat pri-var va daoulagad, en em voalc'het oun, ha guele a ran. » Setu ma savas kaoz etre ar pennou bras, darn a lavare : « An den-ze ne deu ket a berz Doue, pa 'z eo guir ne vir ket lezen ehan ar zadorn, » darn all a respounte : « Daoust hag eur pec'her a c'helfe ober burzudou ker bras ? » Setu n'en em glevant ket. Goulen a rejont eta digant an dall pareet : « Pe seurt a leveres euz an den an deus da bareet ? » — Eur prophet eo, » emezhan.

Galvet e oue neuze tad ha mam an den pareet, evit goulen digantho : « Daoust hag an den-man a zo ho mab ? — Ia, emezho.

— Daoust ha dall eo ganet ? — Ia, emezho adarre.

— Livirit d'eomp penaoz eo deut ar guele d'ezhan. — An dra-ze, emezho, na ouzomp ket, goulennit diganthan, guest eo da respount. »

Ar pennou bras a c'halvas adarre an den pareet, hag a lavaras d'ezhan : « Rent gloar da Zoue, ni a oar eo an den-ze eur pec'her — Pec'her eo, pe ne deo, n'ouzon dare, emezan ; mes eur dra a ouzon, dall e oan, ha breman e velan.

— Penaoz, emezho, en deus great evit renta d'id ar guele ? — Hel lavaret em eus deoc'h dija, eme an den, daoust ha c'hoant o peus beza he ziskibien ? — Ni a zo diskibien Moysez, emezho, rak gouzout a reomp en deus Doue komzet ouz Moysez, met heman, d'ouzomp ket euz a be leac'h eo ? — Souezus eo, eme

an den pareet, ne oufac'h ket euz a be leac'h eo Gouzout a reomp ne ves ket selaouet ar bec'herien gant Doue, hogen n'eus bet klevet biskoaz en defe eun den roet ar pare d'an neb a zo ganet dall. Ma ne vije ket deut hennez a berz Doue, n'en defe gellet ober netra. »

Ar Juzevien a respountas neuze : « Te a zo ganet penn da benn er pec'hejou, hag a ro kentelioù d'eomp-ni ! » Setu ma taoljont an den er meaz euz ar Synagog.

Prest goude, Jesus a gavas an den-ze var he hent, hag a c'houlennas : « Daoust ha kredi a res e Mab Doue ? — Piou eo, Aotrou, eme an den, evit ma kredin ennhan. — An hini a gomz ouzit, hennez eo. eme Jesus. — Aotrou, kredi a ran, » eme an den dioc'htu, en eur stoui da adori Hor Zalver.

An dud difeiz a lavar : « Ar miraklou douget en Aviel n'int ket guirion, ne oa den, en amzer-ze, da deurel evez var gomzou hag oberou Jesus. Lennit histor ar pare roet d'an den dall, hag e velot gant pebez evez eo bet studiet ar pare-ze. Hervez ar Pharisianned, ne dllet ket renta ar pare d'eun den deiz sadorn, rak an dra-ze a oa labourat, hogen lezen Dous a zifenne ouz ar Juzevien peb labour d'ar zadorn. Jesus a respounte : « Parea tud, n'eo ket labourat eo. »

Pa glevas eta ar Pharisianned, doktored al lezen, en doa Jesus a Nazareth pareet eun den dall d'ar zadorn, e leverjont : « N'eo ket guir, na c'hell ket beza guir. » Goulen a rejont eta digant an den he unan, hag hen a respountas : « Guir eo. » He dud a zisklerias ar me-mez tra var he lerc'h. Gant aon rak ar Juzevien, an tad hag ar vam ne gredjont ket diskleria penaoz e oa bet pareet ho mab, met heman ne oue ket nec'het : « Pareet oun bet. » Renta a ra testeni da Jesus heb aon. « Eur prophet eo, da lavaret eo, eun den Doue », emezhan. Ar bec'herien a ves selaouet gant Doue pa c'houlennont pardon euz ho fec'hejou a vir galon diganthan, mes ne ra bet a vuzudou bras dreizho. Doue a ra ar

burzudou kaera dre zorn an dud santel. » En despet d'ar boan a gemer ar pennou bras, ne c'hellont ket dislavaret an den a oa bet dall, rak hen a joume dispount, ha ne deo souez : eun dra ker kaer eo kaout ar gullet, dreist oll pa or bet ganet dall !

Diskleriomp eta a vouez huel : Ar miraklou douget en Aviel a zo guir viraklou.

KENTEL 52. — Ar Pastor mad.

Araok mont dioc'h Jerusalem, Jesus a lavaras : « Me eo ar pastor mad. Eur pastor mad a gas he zenved var ar peuri, bale a ra en ho raok, hag hi a ya d'he heul, dre ma anavezont he vouez. Ne anavezont ket mouez an estren. Ar pastor mad a ro he vuez evit he zenved, mes an hini a zo dioc'h pae, hag an hini n'eo ket pastor, an hini n'eo ket an denved d'ezhan, a vel ar bleiz o tont hag a dec'h, heb soursi euz an denved. Ar bleiz a laer neuze an denved, hag a ra d'ezho tec'het ama hag abont. Tec'het a ra, abalamour ne deo nemet eun den dioc'h pae, ha n'eo ket an denved d'ezhan. »

« Me a zo ar pastor mad; anaout a ran va denved, hag anavezet oun gantho, evel m'oun anavezet gant va Zad, ha mac'h anavezan anezhan. Me a ro va buez evit va denved. Bez' em eus denved all ha u'emañ ket gant ar re-man, red eo d'in ho digas ma ive, rak selaou a raint va mouez : na vezo neuze nemet eur vanden zenved, hag eur pastor. »

Hor Zalver a roas ar gentel-ze d'he ziskibien, evit merka ar c'hem a oa etre hen ha falz doktored ar Juzevien. Ar re-man ne oant ket guir bastored : ne glas-kent nemet arc'hant hag henoriou, e leac'h Hor Zalver a glaske mad an dud, hag a dlïe rei he vuez evit ho zilvidigez.

En eskopti Kemper koulz hag er Frans a bez, ar pastor a 'z a varlere'h he zenved ; er Judee, n'eo ket

henvel ; eno ar pastor a ya araok, hag an denved a 'z a var he lerc'h, euz ar c'hraou d'ar park.

Hor Zalver a zo guelloc'h pastor eget oll bastored ar bed. Ar re-man a ziuall ho denved, evit gounit arc'hant dioutho : ho guerza pe ho laza a reont, pa ves deut ar mare. Jesus, er c'hountrol, e leac'h rei ar maro d'he zenved, a c'houzanvas ar maro evitho. Poania a reas, hed he vuez, evit boda en dro d'ezhan an oll Juzevien, met ar pennou bras na felle ket d'ezho selaou mouez ho pastor. Ouspenn ar Juzevien, Jesus en doa denved all, ar baianed, hag a dlïe, gant an amzer, beza he vugale, rei a dlïe he vuez evitho oll. Hen diskleria a ra freaz, hen, an Oll C'halloudek, a ro he vuez, evit ober bolontez he Dad.

KENTEL 53. — Bezit henvel ouz ar vugale.

Pa zistroe Jesus da Gapharnaüm, e oue goulennet diganthan paea ar guir, evel an oll Juzevien devot. da zikour kaerât an Templ. Hor Zalver a lavaras neuze da Ber : « Ar guir-ze ne dlïe ket beza goulennet digant mab an ti, met digant an estren hebken ; evelato, evit miret na rofemp skouer fall, kea var ribl ar mor ha taol da igen. Kemer neuze ar pezh arc'hant a gavi e ginou ar pesk kenta a baki, ar pezh-se a baeo ar guir evidot hag evidoun. » Per a zentas, a bakas eur pesk, hag a gavas arc'hant ar guir en he c'hinou.

An ebistel ne oant ket parfet c'hoaz, pell dioc'h eno, setu ma savas kaoz etrezho divarbenn an hini a vije da genta, da huella, e rouantelez Hor Zalver. Ober a rejont ar goulenn da Jesus he unan : « Piou a vezo ar brasa e rouantelez an nenv ? » Hen a respountas d'ezho : « Mar fell da unan benag beza da genta, ra vezo an diveza, ha-servicher an oll. »

Kemeret a reas neuze eur c'hrouadur bian, pokat

a reas d'ezhan oc'h hen lakât e kreiz an oll, hag e tisklerias : « E guirionez, ma na jenchit ket, ha ma na vezit ket henvel ouz bugale vian, n'ez eot ket da rouantelez an nenv. An neb piou benag en em izelaio evel ar c'hrouadur-man, a vezo ar brasa en nenv. Digemeret unan euz ar vugale vian-man em hano, a zo va digemeret. »

« Guall heur d'an neb a roio skouer fall da unan euz ar re vian-ze hag a gred ennon, guell e ve d'ezhan e ve staget eur mean milin oc'h he c'houzoug, hag e ve bannet er mor bras. Guall heur d'ar bed abalamour d'ar skoueriou fall ! »

Eun dervez all, mamou a ginnige ho bugaligou da vennoz Hor Zalver. An diskibien a glaske ho diaben, met Jesus a lavaras d'ezho : « Lezit ar vugale-ze da zont betek ennon, rak rouantelez an nenv a zo d'ar re a zo henvel outho. » Hor Zalver ho bennigas, goude beza poket d'ezho.

Jesus, Mab Doue, ne oa ket dleet d'ezhan paea eur guir evit herzel ouz ar mizou a oa gant Templ Jerusalem, mes paea a ra evit rei skouer vad. An arc'hant a oue kavet eaz gant sant Per, pesketaer, rak an Oll C'halloudek n'eo ket dies d'ezhan kaout arc'hant e peb leac'h.

An ebestel, c'hoant d'ezho kaout galloud hag henoriou, a reâ kaoz etrezho divar benn ar renk kenta, met Jesus a ro d'ezho eur gentel gaer var an humilite. « Bezit henvel ouz eur c'hrouadurik. »

« Eur c'hrouadurik, eme zant Augustin, n'ema ket e poan gant an henoriou : pa velo he vam etqueze eun toullad merc'hed, ez aio atao d'he c'haout var eün, n'eus fors peger paour e vezo guisket hi. » Mes an ebestel a oa c'hoaz dibarfet, selaou a reant kenteliou ho mestr, poania a reant d'he entent, mes ne ves ket chenchet eun den en eun dervez pe zaou. Var vellât ez eant evelato, e kompagnunez Jesus.

KENTEL 54. — An daouzek diskibl ha tri ugent.

Pa oa Hor Zalver varnez distrei da Jerusalem evit gouel Dedi an Templ, e kasas daouzek diskibl ha tri ugent en he raok, er bourkou hag el leac'hioù ma tlie mont he unan. Nevezi a reas evitho ar c'hente liou en doa roet dija d'an ebestel, met gourdrouz a reas ar c'heariou ha ne zelaoufent ket he gelennadurez : « Hen diskleria a ran d'eoc'h, emezhan, Sodom a vezo kastizet nebeutoc'h eget ar c'heariou-ze, deiz ar varn. »

« Guall heur d'id, Korozain, guall heur d'id, Bethsaïda, rak m'o defe tud Tyr ha Sidon gullet ar burzudou a zo bet great en ho kreiz, an dud-se o defe guisket eur porpant reun, hag a vije azezet var al ludu, da ober pinijen. »

« Ha te, Kapharnaüm, a zo bet savet betek an nenv. diskennet e vezi betek an ifern. An neb ho selaou, va zelaou, an neb ho tisprij, va disprij. An neb piou benag am disprij, a zisprij ive an Hini en deus va digaset. »

An diskibien a iegas en hent, hag a zistroas laouen : « Aotrou, emezho da Jesus, an drouk sperejou a zente ouzimp. » Jesus a respountas : « Arabat e ve foug ennoc'h abalamour ma plege an drouk sperejou d'eoc'h, mes bezit el levezeg abalamour m'eo skrivet ho c'hanoioù en nenv. »

Lavaret a rea c'hoaz : « Deuit davedon, c'houi a zo skuiz ha beac'hiet, ha me ho tiveac'hio. Deuit d'ar skol-ganen, rak me zo dous hag humbl a galoun. »

Eürus an daoulagad a vel ar pezh a velit, rak kalz propheted ha rouaned o deus bet c'hoant da velet an traou-ze, heb kaout ho c'hoant. »

Abalamour ma oa berr an amzer en doa Hor Zal-

ver evit prezeg an Aviel, e reas d'eun toulladik euz he ziskibien he zikour.

Gourdrous a ra eun nebeud keariou hag a oa diazezet var ribl lenn Jeneſareth, rak tud ar c'heariou-ze a oa eaz ral d'ezho heuill. Hor Zalver ha selaou he gelennadurez. Abalamour 'm'o deus resevet muioc'h a sklerijen ha muioc'h a c'hrasou digant Doue, o deus eur gount kalz strisoc'h da renta d'ezhan.

Ha ni, kristenien, nak a c'hrasou hon eus bet ! N'kun ac'hanomp n'eo gwest da anaout an oll graso en deus bet : an niver anezho a vezo diskleriet da zeiz bras ar varn. Nak a leac'h hon eus da grena !

Mar deo kalet Hor Zalver evit ar re a ra fae var he c'hrasou, he galon a zo leun a deneredigez, a garantez, evit an dud a zelaou he gelennadurez.

KENTEL 55. — Ar Samaritan madeleuz.

Eun doktor, evit tenti Jesus, a c'houennas digan-
than : « Mestr, petra am eus d'ober evit gounit ar
vuez eternal ? » Hor Zalver a respountas : « Petra zo
skrivet el Lezen ? » An doktor a respountas : « Karet
a reot an Aotrou, ho Toue, euz a greiz ho kalon, euz
hoc'h oll ene, euz hoc'h oll nerz hag euz hoc'h oll
spered ; karet a reot ouspenn ho nesa evel doc'h hoc'h
unan. » Jesus a lavaras : « Respountet e peus mad,
grea kement-se, hag e vevi. » An doktor a c'houen-
nas neuze : « Piou eo va nesa ? » Hor Zalver a res-
pountas : « Eun den a ziskenne euz Jerusalem var-
zu Jeriko, mes laeroun a zailas varnhan, her gou-
lias, a laeras kement en doa, hag a dec'has, pa oe
hanter lazet gantho. Eun den euz a ouenn Aaron
a dremenat dre an hent-se, hag a ias ebion, goude
beza taolet eur zell varnhan. Eun den euz a dribu
Lévi a dremenat dre eno da c'houde, hag a reas ar
memez tra. Mes eur Samaritan, o tremen dre eno,
a velas ar c' heaz den, hag a oue tenerreat he galon,

Louzaoui a reas he c'houliou gant eol ha guin, he
zevel a reas var he loam evit he gas d'an hostaleri,
eno e kemeras soursi anezhan.

Antronoz, e tennas daou ziner arc'hant euz he
c'hodel, hag e lavaras d'an hostiz : « Entetit mad
euz an den-man, ha me, pa zistroin ama, ho tigollo
euz ar pezo o pezo, dispignet en tu all d'an dra-man. »
Pehini euz an tri zen-ze a zo bet nesa an den gou-
liet ? » An doktor a respountas : « An hini en deus
bet truez outhan. » Jesus a lavaras neuze : « It, ha
griit evel dhan. »



An doktor a reas goulennoù d'Hor Zalver en doa
c'hoant he baka e gaou. Ar Skritur Zakr a lavar : « Ka-
ret a reot ho nesa », met ar Juzevien a zisklerie : « Ka-
ret a raimp tud hor bro hebken. » Sonjal a rea d'ezho
n'o doa ezom ebet da gaout karantez evit an dud all.
Jesus, evit sklerijenna an doktor-ze, a zavas parabolen
ar Samaritan madeleuz. Ar Samaritaned a oa tud
estreñ, o choum etouez bugale Israel, mes disprijet
gantho.

Al laeron a oa stank d'ar mare-ze, eaz e oa entent
lavarou Hor Zalver. Ar Juzeo kenta a dremenat var

an hent a oa eur beleg, euz a' ouenn Aaron, an eil a oa euz a ouenn Levi, eun den karget d'zikour ar veleien en ho labour. Da hioù eo sikour eun den goullet, hanter varo, ma n'eo ket d'ar beleg eo? Eun dever striz e oa evit an daou Juzeo-ze sikour ho c'henvroad, n'her rejont ket goulskoude. Ar Samaritan er c'hontrol, an den estren, a zikouras euz he oll c'halloud ar paour keaz den goullet. Hen eo a zo bet guir nesa ar Juzeo. Hor Zalver a roas da entent, dre he barabolen, e rea fall ar Juzevien, o chom heb karet an estren, hag an doktor ne c'helle ket he zislavaret.

Ni, kristenien, a zo eürus. Ar c'hatekiz a lavar d'eomp, freas: « Hon nesa eo kement den zo, memez hon enebourien. » Daoust ha senti a reomp a vir galon ouz gourc'hemen Doue, daoust ha karet a reomp an oll dud?

KENTEL 56. Ar Beden.

Eun dervez ma oa Hor Zalver o pedi, unan euz he ziskibien a c'houlennas diganthan deski d'ezho eur beden, evel m'en doa great Ian Vadezour d'he ziskibien. Jesus a zeskas d'ezhan ar Bater: « Hon Tad, pehini zo en nenv, ho c'hano bezet santifiet, roit d'eomp ho rouantelez, ho polontez bezet great var an douar evel en nenv. Roit d'eomp hirio hor bara pemdeziek, pardounit d'eomp hon ofansou, evel ma pardounomp d'ar re o deus hon ofanset, ha ne bermetit ket e kouesfemp en tentasion, mes hon dilivrit diouz an drouk. »

« Mar teu eun amezeg d'ho kaout, en noz, da c'houlenn tri vara evit gellout digemeret ervad eur mignoun deut d'he velet, c'houi a respounto, da genta: « Em guele emeon, ha n'eo ket eas d'in sevel. » Met ma kendalc'h an amezeg da skei var an or, c'houi a zavocvit rei d'ezhan he c'houlenn, ha kaout peoc'h diouthan. Goulennit eta, hag e vezo roet d'eoc'h; klaskit hag e kavot; skoit hag e vezo digoret. Ma

c'houlenn ho krouadur bara diganeoc'h, daoust ha rei a roet d'ezhan eur mean? Ha ma c'houlenn eur pesk, daoust ha reseo a raio diganeoc'h eun aer? Mar gouzoc'h eta, ha c'houi fall goulskoude, rei trac'h mad d'ho pugale, pegement muioc'h ho Tad euz an nenv a roio ar spered mad d'ar re her goulenn diganthan?

« Mac'h en em glev daou ac'hamoc'h, var an douar, va Zad euz an env a roio d'ezho ho goulenn, n'eus fors petra a c'houlennit. E kement leac'h ma 'z eus daou pe dri bodet em hano, me a zo en ho c'hreiz. »

Kaer eo ar gentel-ze roet gant Hor Zalver var ar beden. Pegen eürus eo ar c'hristen a lavar « Hon Tad pehini zo en nenv », pa zonz e lavar ar beden desket d'eomp gant Jesus he unan, ar beden a ves lavaret gant an oll gristenien euz ar bed.

Hor Zalver a zesk d'eomp ouspenn kenderc'hel da bedi, pa ne vezomp ket selaouet dioc'htu. Bez' ez eus tud hag a zonz d'ezho eo dleet d'an Aotrou Doue rei d'ezho ho c'hoant, kerkent ha m'o deus great eur goulenn d'ezhan. Jesus a lavar d'eomp: « Kendalc'hit, hag e pezo ho koulenn. »

Hor Zalver a zesk d'eomp eur virionez all: « Ma c'houlennomp digant Doue eun dra hag a zo fall evit an ene, evel eur c'hrouadur hag a c'houlennfe eun aer digant he dud, Doue a roio d'eomp eun dra all, guelloc'h evidomp eget ar pez a c'houlennomp. Erfin, Hor Zalver a lavar d'eomp pegen petrus eo ar beden pa ves great gant meur a hini asambles. Pegen talvoudeg eo ar Bater vras, great dioc'h ar pardaez, pa ves bodet asambles oll dud an ti!

Mar bes lavaret bemdez ar Bater vras en ho ti, kendalc'hit; ma n'eo ket bet great betekhen, en em voazit d'he lavaret. Nak a c'hrasou a dennoc'h varnoc'h ha var ho tud!

KENTEL 57. — Pardoun an offansou.

Jesus a zisklerie d'he ziskibien : « Pardouni a reot he vankou d'ho nesa, ken alies guec'h ha ma c'houlenno pardoun. » Per a deuas neuze dirak Hor Zalver : « Mestr, emezhan, ped guec'h e rankin pardouni d'ezhan? Seiz guec'h? — N'eo ket seiz guec'h hebken em Hor Zalver, mes seiz ugent guec'h seiz. »

Evit merka sklear d'he ebistel ha d'an oll dud pement a leac'h en deus an den da bardouni d'he nesa, Jesus a reas d'ezho ar barabolen-man : « Rouantelez an nenv a zo henvel ouz eur roue hag a falvezas d'ezhan renka he gonchou gant he zervicherien. Digaset e oue d'ezhan, gant ar re genta, unan hag a dlle dek mil pezh aour. O veza n'en doa ket a beadra da baea he, zle, ar roue a roas urz d'he verza, hen, he c'hreg, he vugale hag he zanvez, evit beza dic'haouet. Ar zervicher a stouas eharz treid he vestr, en eur lavaret : « Gortozit ganen, hag e restaolin d'eoc'h va oll dle. » Ar mestr, gant truez ouz ar zervicher-ze, a lavaras d'ezhan : « Kea kuit, da zle a zo pardounet. »

Ar mevel-ze, a veac'h er meaz, a gavas eur zervicher all hag a dlle d'ezhan kant diner hebken. Lemmel a reas d'he c'houzoug, en eur lavaret : « Restaol da zle. » Egile, stouet d'an douar dirazhan, a bede : « Gortos ganen, hag e restaolin d'id va oll dle. » Ar zervicher-ze ne zelaouas het peden he vreur, mes rei a reas urz d'he deurel er prizoun. Ar zervicherien all, glac'haret oll, a zisklerias d'ho mestr kement a oa c'hoarvezet. Ar mestr a c'halvas kerkent he zervicher, evit lavaret d'ezhan : « Servicher fallakr, pardounet em eus d'id da zle var da beden. Daoust ha ne dlies ket kaout truez ouz da vreur, evel m'em eus bef truez ouzit? »

Ar roue, kounnaret, a reas he deurel etre daouarn

ar vourrevien, ken n'en dije paet he oll zle. Va Zad euz an nenv a raio evelse d'eoc'h, eme Hor Zalver, ma na deu peb hini ac'hanoc'h da bardouni a greiz kalon d'he vreur. »

En amzer Hor Zalver, eun den ha ne c'helle ket paea he zle, a veze taolet er prizoun gant he dud, ha bourrevet hep truez. Al lezennou a zo bet soupleat kalz, p'eo bet renet ar broiou gant an Aviel.

An den en doa dastumet eur bern dle a zek mil pezh aour, a verk d'eomp peb hini ac'hanomp dirak justis Doue. An den santel, eme ar Skritur Zakr, a bec'h seiz guec'h bemdez, da lavaret eo, meur a vech. Peb guec'h bemdez e tle koueza ar pec'her? Doue hebken her goar. Hogen an Aotrou Doue, en he vadelez heb muzul, a zo prest atao da bardouni d'ar pec'her, n'eus fors pegen niverus, n'eus fors peger grevus eo he vankou, gant m'en dezo keuz. Ar mab prodig, sant Vaze, santez Mari-Madalen, ha meur a bec'her all hag a zo menek anezho en Aviel, a zo eun testeni kaer euz ar virionez-se.

Penaoz eta, e kred ar pec'her chom heb pardouni he vreur, p'en deus hen ofanset? Pegen dister eo an ofans a ra eun den d'eun-all, peger grevus eo an ofans a ra an den d'he Groñer ha d'he Zalver !

**KENTEL 58. — Dor striz ar baradoz.
Martha ha Mari.**

Epad ma prezege Hor Zalver he Aviel dre ma 'z ea, eun den a c'houennas diganthan eun dervez : « Mestr, daoust ha kalz tud o dezo baradoz? » Jesus a respountas d'ezhan : « Poaniit da vont ebarz dre an or striz, rak eur c'halz a ranko choum er meaz. »

An den-ze a glask gouzout niver an dud a dle ober ho zilvidigez, met Jesus ne oa ket deut var an douar evit respount da c'houennou an dud dibreder ha kurius, ha setu perak e tigofias an den.

Eur vech, Hor Zalver a zigouezas en eur geraden, hag eur vaouez, he hano Martha, hen digemeras en he zi. Bez' e doa eur c'hoar hanvet Mari, mes hounman a jounie azezet ehars treid Jesus da zelaou he gomzou. Martha goulskoude a boanie d'ober kalz traou difre, setu ma choumas a zav dirak Hor Zalver evit lavaret d'ezhan: « Mestr, ha na velit-hu ket un lezet gant va c'hoar da labourat va unan? Grit eta d'ezhi dont d'am zikour. » Jesus a respontas: « Martha, Martha, kalz a dregas hag a boan spered a gemerit gant eur maread traou; eun dra hebken a zo red. Mari e deus choazet al loden vella, ha ne veza ket lamet diganthi. »

Meur a hini euz an doktored, pa ziskleriont ar gentel-ze euz an Aviel, a lavar d'eomp: Mari, c'hoar Martha, a oa Mari-Madalen. Gueñl e kave chom da zelaou Hor Zalver eget na oa labourat gant he c'hoar, rak divalo e oa d'an diou verc'h entent ouz ar gegin, heb na vije choumet nikun anezho var dro ar mestr brudet a rea d'ezho an honor da zisken en ho zi.

Komzou Hor Zalver da Vartha a dle beza poezet mad gant peb kristen: eun dever eo gounit ar bara dre al labour, met arabat eo dilezel an ene. Abalamour da-ze, eur guir gristen a ginnigo he labour da Zoue, bemdez, dre ar beden, hag a roio ar zul penn da benn da henori he Grouer. Eun dra hebken a zo red: savetei an ene.

Komzou Hor Zalver a dle beza pleustret dreist oll er c'houentchou. Al leaned, al leanezed galvet gant Doue da veza ho unan etrezho, er meaz euz trouz ar bed, a dle rei eur c'halz euz ho amzer da Zoue dre an orezoun hag ar beden, pa 'z eo guir Jesus a lavar d'ezho eo hounnez al loden vella. Pedennou ar re a zo konsakret da Zoue a zo eun nerz evitho ho-unan, sklear eo, mes eun nerz int memez evit ar re a zo er bed. Mar deus hiniennou euz ho tud galvet gant Doue da veza d'ezhan, list anezho da vont: choazet o deus al loden vella.

KENTEL 59. — Diskleria a ra Jesus a nevez eo Doue.

Pa oa Jesus e Jerusalem evit gouel Dedi an Templ, ez eas da adori he Dad. Epad ma oa er porched kaer a oa bet savet gant ar roue Salomon, Pharisianed ha Doktored, leun a gasouni ouz Hor Zalver, a deuas en dro d'ezhan, evit goulen: « Betek peur e reot d'eomp chom var var? Mar doc'h ar C'hrist, livirit-hen d'eomp freas. »



Jesus a respontas: « Komz a ran ouzoc'h, ha n'am c'hredit ket. An oberou a ran, en hano va Zad a rent testiñ ac'hanoun, mes c'houli na greñt ket, abalamour n'emaoc'h ket e niver va denved. Va denved a zelaou va mouez, ho anaout a ran, ha d'am heul e teuont. Rei a ran d'ezho ar vuez eternal, n'ez aint biken da goll, ha den n'ho diframma diouz va dorn. Va Zad en deus ho roet d'in, ha va Zad a zo brasoc'h eget an oll, ha nikun n'eo gwest da denna eun dra diganthan. Va Zad ha me a zo ar memez natur. »

Ar Juzevien avius a grogas kerkent er vein a gav-jont eno evit labeza Hor Zalver. Met Jesus a c'hou-lennas digantho: « Diskouezet em eus d'eoc'h kalz oberou mad great en hano va Zad: evit pehini anezho, e klaskit ya labeza? — N'eo ket abalamour da unan euz hoc'h oberou mad e labezomp ac'hanoc'h, met abalamour d'ho plasphem. rak ne doc'h nemet den, hag ec'h en em lakit Doue. »

Hor Zalver a respountas: « Ma ne ran ket oberou va Zad, choumit heb kredi va lavarou. Mes mar ho gran, kredit d'ezho, hag e ouezoc'h ema an Tad ennoun, hag emoun ennan. »

Ar Juzevien a glaskas he baka, met tec'het a reas diouz etre ho daouarn.

Pa lavare Jesus d'ar Juzevien: « Dont a ran a berz Doue, e tlie beza kredet var he c'her, pa 'z eo guir e rea burzudou, miraklou hag a verke d'an oll e oa Doue a du ganthan. Doue, ar virionez memez, na c'hell ket ober miraklou evit eun den hag a lavarfe gevier.

Ar pennou bras, an doktored gouiziege var lezen Moysez na felle ket d'ezho plega da lavarou Jesus a Nazareth, n'o doa ket a humilite. Jesus ho c'hav meur a vech var he hent, n'eo ket evit beza he ziskibien eo, met evit kaout abeg en he gomzou.

Pa glaskas ar Juzevien laza Hor Zalver a daoliou mein, hen a dec'has, rak ne oa ket c'hoas deut an heur merket gant Doue evit he varo: ar Juzevien ne c'helljont mui he velet, eme ar zent, kaer o doa digeri ho daoulagad, ha sellet en dro d'ezho.

Goulennomp digant Hor Zalver ma vezimp atao etouez he zenved sentus.

KIENTEL 60. — Eur pare d'ar zadorn Bezit humbl.

Jesus a yeas neuze pell diouz Jerusalem. Eun der-vez e oue pedet da leina e ti unan euz ar pennou bras, eur Pharizian, hag eno e oa tud avius hag a

studie piz oberou Hor Zalver. Bez' e oa, etouez an dud, eun den klanv gant ar c'hoenv doue, setu ma c'houleninas Jesus digant ar pennou bras: « Daoust ha paraa a c'heller tud da zadorn, deiz ehan? » Int-hi ne leverjont grik. Jesus a grogas neuze en den klanv, her paraas, hag her c'hasas kuit. Hor Zalver a zisklerias da c'houde: « Mar koues er puns azen pe ejen unan ac'hanoc'h, daoust ha m'hen tennot ket er meaz, ha pa vefe da zadorn e vefe? » Ar pennou bras ne c'helljont respount ger ebet.

Int-hi a lavare: « Ne dleer ket paraa tud d'ar zadorn, rak kement-se a zo mont eneb lezen Doue. » Mes ar bobl, pa vele oberou burzudus Jesus a Nazareth, a zave ganthan, setu e choume sioul ar Pharizianed fallakr.

Pa velas Hor Zalver, el lein-ze, an dud o poania da gemeret ar plasou kenta, e lavaret d'ezho ar barabolen-man: « Pa viot pedet d'eul lein eured, n'ez it ket da azeza d'ar plas kenta, gant aon na ve bet pedet unan benag all henoraploc'h egetoc'h, ha na deufe mestr an ti da lavaret d'eoc'h: « Roit ho plas d'egile, » ha neuze o pezo mez o vont er renk izela. Met pa viot pedet, it er plaz izela, neuze an neb en deus ho pedet a lavaro d'eoc'h: « Savit hueloc'h. » Henoret e viot er giz-se dirak an oll; rak kement hini en em huela, a vezo izeleat, ha kement hini en em izela, a vezo hueleat. »

Ar barabolen-ze a zo sklear, freas hag eas ral da entent. Ar pennou bras, ar Pharizianed a zelaouas kentel Hor Zalver en eur c'hrosmolat, rak sonjal a reant e oa dleet rei d'ezho ar plasou kenta. N'o doa ket an distera humilite.

Ar gristenien, pa zonjont eo ganet Hor Zalver paour, en eur c'hraou, pa zonjont en deus bevet, epad tre-gont vloaz, dianavezet gant an dud, en deus da c'hou-

de great he vignouned euz tud dizesk ha dister, a zant eun nebeud humilite o sevel en ho c'halon. Gou-lennomp digant Hor Zalver ober d'ezhi kreski ennomp Pebez vertuz kaer !

KENTEL 61. — Ar Goan vras. An digareziou.

Epad ar pred e ti ar pharisian, unan a lavaras : « Eürus an neb a brejo e rouantelez an nenv ! » Jesus a respountas d'ezhan :

« Eun den a reas eur goan vras, hag a bedas kalz tud. Da vare ar pred, e kasas he vevel da c'hervel ar re en doa pedet, met ar re-man a glaskas digareziou.

« Me, eme ar c'henta, em eus prenet eun ti var ar meaz; red eo d'in mont d'he velet.

— Me, eme eun all, a zo o paoues prena pemp koublad ejenned, ho amprou a rankan.

— Me, eme an trede, a zo nevez dimezet, ha n'oun ket evit mont d'ar goan. »

An tad a famill, drouk ennhan, a zisklerias neuze d'he vevel : « Kea dre ruiou ha frankizennou kear, ha digas ama ar re baour, ar re gam, an dud macc'hagnet, ar re zall. » Ar mevel a zentas, hag a deuas en dro : « Mestr, emezhan, choum a ra c'hoaz plasou goullou ouz taol. — Kea neuze dre an henchou hag hed ar c'haecu var ar meaz, ha digas d'in ar re a gavi, rak m'hel lavar, nikun euz ar re am cus pedet ne danvaio boued va c'hoan. »

Ar zent a zesk d'eomp en deus Hor Zalver merket dre ar barabolen-ze stad ar Juzevien. Jesus en deus prezeget d'ezho he Aviel, met hi o deus great fae var he lavarou, ar peb brasa anezho n'o deus ket heuillet Hor Zalver. Choumet int en denvalijen, dre ho faot.

Jesus en deus, neuze, great d'he ebestel mont da brezeg an Aviel d'ar boblou paian, hag eur c'halz euz

ar re-man o deus selaouet mouez an ebestel, ha divezatoc'h, mouez ar visionerien. En doare-ze, ar baradoz ne joumo ket hanter c'houllo.

Meur a hini euz ar zent a lavar : « Ar barabolen-ze a c'hell beza entetet ouspenn, euz ar gristenien a zo kinniget d'ezho korf ha goad Hor Zalver er communion zantel, ha ne fell ket d'ezho en em zieza d'he reseo. Klask a reont digareziou : re a zoursi, a dregas o deus gant traou ar bed-man, setu n'o deus ket a anzer da zont d'an iliz.

Ni, bezomp mad da dostât alies ouz ar zakramanchou !

KENTEL 62. — An Danvad dianket. Ar pezh arc'hant.

Kalz publikaned, da lavaret eo, tud hag a oa lakeat e renk ar bec'herien gant ar Pharisianed, a yea da zelaou Hor Zalver. Doktored al lezen a



c'hrosmole etrezho : « Jesus a Nazareth a ro digemer d'ar bec'herien, hag a zebr gantho. »

Hor Zalver a lavaras d'ezho « Piou ac'hanoc'h,

m'en defe kant danvad, ha ma kolfe unan anezho, ma zillesfe an naontek ha pevar ugent all evit klask an hini a zo dianket? P'en deus he gavet, e samm anezhan, laouen bras, var he ziouskoaz, hag eur vech m'eo distro d'ar gear, e c'halv mignouned hag amezeien evit ober d'ezho kemeret perz en he levenez. »

« Evelse, eme Hor Zalver, n'hel lavar d'eoc'h, muioc'h a joa a vezo en nenv evit eur pec'her a rapinijen, eget evit naontek ha pevar ugent den santel hag a gendalc'h var an hent mad. »

« Pe hini eo ar vaouez, eme c'hoaz Hor Zalver, ha m'e defe dek pez arc'hant, ha ma kolfe unan anezho, ne sklerijente ha ne skubfe ket he zibetek m'e dezo kavet ar pez arc'hant-se? Goude m'e dezo he gavet, e c'halvo an amezeien da gemeret perz en he eürusdet. »

Perak e tostea ar bec'herien ouz Jesus? Abalamour ma oa leun a zouder evitho. Ar Juzevien a rea fae var ar publikaned.

Ar mestr a red varlerc'h an danvad dianket, a zo an Aotrou Doue. Doue a ro grasou kaer d'ar pec'her, evit ober d'ezhan dont var he giz, en em lakât adarre etouez ar guir gristenien, etouez ar re a veve e stad a c'hras. E leac'h skei gant an danvad p'en deus he gavet, ar pastor mad her zav var he ziouskoaz evit ober d'ezhan distrei easoc'h ha suroc'h d'ar gear.

Evit sikour ar pec'her da zistrei, Doue en deus lakeat en he gichen eur breur karantezus, ar beleg, prest atao da zigemeret ar pec'her.

« En nenv, eme Hor Zalver, e vezo muioc'h a levenez evit eur pec'her hebken distroet da Zoue, eget evit eur maread tud santel hag a gendalc'h. » Pa 'z eus eur zoudard o tistrei d'ar gear, eur zoudard hag a zo bet eat pell pell diouz ar vro, daoust hag he dud ne ziskouezont ket d'ezhan eur garantez tomoc'h eget an hini a zougont d'ho bugale all a zo choumet atao asambles gantho ?

KENTEL 63. — Ar Mab Prodig.

Evit lakât dounoc'h e spered an dud ar zonz euz an drugarez a zoug an Aotrou Doue d'ar pec'her, Jesus a lavaras c'hoaz :

« Eun den en doa daou vab. Ar yaouanka a c'houlennas eun dervez « Tad, roit d'in va loden euz an danvez am eus guir d'ezho. » An tad a roas d'ezhan he c'houlenn.

« Prestik goude, ar mab yaouanka, goude beza dastumet kement tra en doa, a yeas d'eur vro bell; eno e renas eur yuez direol. Ar gernez a gouezas var ar vro-ze, ha dizale ar mab prodig en devoue naon. Mont a reas neuze da zervicha eur mestr euz ar vro-ze, hag heman her c'hasas da ziouall ar perc'hel. C'hoant en dije bet debri boued dizaour an anevaled-se, met den n'her roe d'ezhan. »

« Eun dervez, an den yaouank a ziskennas e goueled he galon, hag a zonzas: « Nak a bed a zo dioc'h an deiz e ti va zad, hag o deus eno boued leiz kof, ha me a zo ama o tua gant an naon. Sevel a rin, mont a rin da gaout va zad, evit lavaret d'ezhan: « Tad, pec'het am eus eneb Doue hag eneb d'eoc'h. Hiviziken n'oun mui din da veza e renk ho pugale, va lakit e renk ho mevelien. »

« Sevel a reas eta, bale a reas, treud ha goloet a druillou, varzu ar gear. Pell e oa c'hoaz, pa oue gullet gant he dad: heman tenerreat kerkent, a redas buan d'her starda var boull he galon, hag her briatas gant karantez. Hag ar mab prodig a lavaras: « Va zad, pec'het am eus eneb Doue hag eneb d'eoc'h, » mes mouez an tad a zavas dioc'htu: « Digasit prim he zae pinvidika, emezhan d'he zervicherien, guiskit-hi d'ezhan. Roit d'ezhan he vizou, digasit he voutou-ler brao. Lazit al leue lard,

ha bezit laouen, rak va mab a oa marvet, ha setu hen beo; kollet e oa, ha setu hen kavet. »

Ar mab kosa a gavas dies gullet trugarez he dad, hag a glemmas: « Ped bloaz a zo emañ oc'h ho servicha, ha biskoaz n'o peus roet d'in eur c'havrik d'ober fest gant va mignoned, e leac'h ma rit henor da hennez, en deus kollet peb brud vad ! » An tad a respontas: « Va mab, te a zo atao gannen, ha kement a zo d'in a zo d'id. Mes red e oa ober eur pred kaer, rak da vreur a oa kollet, ha setu hen kavet; maro e oa, ha setu hen, beo. »

Pebez kentel gaer var drugarez heb muzul an Oll-C'halloudek ! Ar pec'her a dro kein d'an Aotrou Doue, a red var hent ar pec'hed, a joum da goza ennhan, ha gras Doue na baoues da zont d'he glask, eur vech en amzer da viana. Ar pec'her kaledet a glevo aliez mouez he goustians o rebech d'ezhan he zizursiou, hag ar vouez-se a zo mouez eun tad leun a vadelez, o kin-nig d'he vab dianket grasou a bardoun hag a garantez.

Daoust ha selaou a reot pelloc'h, pec'her, mouez ho Tad-madelezes ?

KENTEL 64. — Ar resevoir disleal.

Jesus a lavaras eun dervez d'he ziskibien:

« Eun den pinvidig en doa eur resevoir, hag a oue tamallet da veza foranet madou he vestr. He-man her galvas eta, hag a lavaras d'ezhan: « Petra glevan divar da benn ? Rent kount d'in: pe seurt implij e peus great euz ar madou am oa fiziet ennout? Hiviziken, na reni mui va feadra. »

Ar resevoir a joumas neuze d'en em zonjal: « Petra rin-me pa ne vezin mui resevoir? N'oun ket guest da labourat an douar, ha mez am befe o vont da glask an aluzen. Ah! emezhan, gouzout a

ian pe seurt a rin evit beza digemeret gant an dud, goude ma vezin bet torret euz va c'harg. »

Gervel a reas eta oll dleourien he vestr, hag e c'houlennas digant ar c'henta: « Pegement a dlees d'am Aotrou? — Kant muzul eol, emezhan. — Kemer da baper, eme ar resevoir, azes aze, ha skriv dioc'htu hanter kant.

— Ha te, emezhan d'eun all, pegement a dlees? — Kant boezellad viniz, emezhan. — Kemer da baper, eme ar resevoir, ha skriv pevar-ugent. » Hogen, Hor Zalver a veulas ar resevoir fallakr, abalamour ma oa bet fur eno, rak bugale ar bed a zo furoc'h eget bugale ar sklerijen, var draou an douar. »

« Ha me lavar d'eoc'h, eme Jesus, gounezit mignoned gant an arc'hant fallakr, neuze, pa varvot, e raint ho tigemered e palez ar baradoz. »

Bugale ar bed a zo an dud digristen, ar re o deus soursi gant traou ar bed-man hebken, gant traou an douar, bugale ar sklerijen a zo an dud devot, ar re o deus eur guir garantez evit Doue.

Goude ar vuez-man, peb den a ranko renta kount da Zoue, da zeiz ar varn. Perak? Abalamour m'hon eus oll resevet diganthan madou ar vuez, spered, danvez, muioc'h pe nebeutoc'h evit pep hini. Mar doup bet mad d'ober aluzen epad hor buez, Doue en dezo truez ouzimp.

Jesus a lavar: Ar re fall a zo eveziantoc'h eget ar re vad, var meur a dra. Nak a boan a gemer avechou ar re fall evit sevel lezennou kountrol d'ar relijion ha d'ar feiz! Nak a boan a gemero ar re fall evit difen ho zud, da zeis eur votadek, d'ar mare ma ves alies hanter gousket ar re vad! Deomp d'ar skol gantho ha poaniomp, evit Doue, kement ha ma reont evit an diaoul !

KENTEL 65. — Ar falz pinvidig hag ar paour.

Jesus a roas eur barabolen all d'he ziskibien:

« Bez e oa eun den pinvidig, hag a veze guisket gant mezer mouk ha lien flour, hag a rea bemdez leinou kaer. Bez' e oa ive eur paour keaz den, hanvet Lazar, gourvezet dirak he zor, ha goloet a c'houliou. C'hoanteat en defe terri he naon gant ar bruzunachou a goueze divar daol ar pinvidig, met den n'ho roe d'ezhan. Ar chas a lipe he c'houliou. »

« Eun dervez, ar paour keaz a varvas, hag a oue douget gant an elez e kerc'hen Abraham. Ar pinvidig a varvas ive, hag a oue sebeliet en ifern. Sevel a reas he zaoulagad euz a greiz an tan, hag e velas a bell Abraham, ha Lazar ganthan, setu ma youc'has: « Tud Abraham, o pet truez ouzin. Kasit Lazar da zouba beg he viz en dour, evit' distana va zeod, rak devi a ran spountus en tan-man. »

Abraham a respontas: « Va mab, resevet o peus kalz madou en ho puez, epad ma veve Lazar er baourentez; breman, hen a zo en eürusted, ha c'houi, er boan. Etre c'houi ha ni, ez eus breman eun islounk bras; evit atao. Ne c'heller mui mont ac'han betek ennoc'h, na dont ac'halese betek ama. »

Ar falz pinvidig a lavaras neuze: « M'ho ped, tad, kasit Lazar d'am c'hear, rak pemp breur am eus, evit na gouezint ket d'ho zro, el leac'h-man a boaniou. »

Abraham a respontas: « Bez' o deus Moysez hag ar bropheted, ra zelaouint anezho. — Nan, tad Abraham, eme ar pinvidig, met ma 'z a unan maro betek enno, e raint pinijen. — Ma ne zelaquant na Moysez nak ar bropheted, ne gredint ket ken nebeud, ha pa 'z afe unan maro betek enno. »

Ar Pharisianed ha doktored al Lezen Goz o doa ne-

bent a druez ouz ar paour, setu perak Hor Zalver a glaskas ho sklerijenna dre ar gentel-man. Ar pinvidig a zo dleet d'ezhan ober eun implij vad euz he zanvez, rak seulvui a vadou en deus, seul strisoc'h e vezo ar gount en dezo da renta da Zoue, seul krisoc'h e vezo he boan, ma ra implij fall anezho.

Peger spountus eo an ifern! An dud daonet, kastizet gant justis an Aotrou Doue, a glask kaout eun di-dorr benag, ha biken ne vezo soupleat ar poaniou a ziyoaskont.

Birviken!

Tud a lavar: « Ne ran fors ha pa gouesfen en ifern! » Tud keiz! Ha sonjal a rit er pezh a livirit?

KENTEL 66. — Lazar savet euz a varo da veo.

Lazar, breur Mari Madalen ha Martha, a oa klanv, setu ma kasjont eun den da lavaret da Jesus: « Mestr, klanv eo an hini a garit. »

Hor Zalver na yeas ket dioc'htu en hent, a benn tri dervez hebken: « Hor mignoun Lazar a zo kousket, emezhan, deomp d'he zihuna. » An ebstel a respontas: « Mar deo kousket, e pareo. » Jesus a lavaras neuze freas: « Lazar a zo maro. Eürus oun abalamour ne oan ket eno, rak breman, c'houi a gredo. Deomp di ».

Lazar a oa sebeliet er bez aboue pevar dervez pa zigouezas Hor Zalver e Bethani: kalz Juzevien a oa eno o frealzi an diou c'hoar.

Martha a zigemeras Jesus: « Aotrou, emezhi, ma vijec'h bet ama, va breur ne vije ket marvet; mes, her gouzout a ran, Doue a roio d'eoc'h, breman zoken, kement a c'houlennoc'h diganthan. — Ho preur a zavo euz a varo da veo, eme Jesus. — Her gouzout a ran, eme Vartha, deiz ar varn ziveza. »

Jesus a respontas d'ezhi: « Me eo ar resurreksion hag ar vuez, an neb a gred ennon, ha pa vije

maro, a vevo, ha piou benag a vevo hag a gredo ennon, na varvo ket. Hag her c'hredi a rit ? — Ia, Aotrou, emezhi, kredi a ra oc'h ar C'hrist. Mab an Doue beo, hag ez oc'h deut er bed-man. »

Mari Madalen a deuas d'he zro betek Hor Zalver, hen a c'houlennas neuze : « E pe leac'h o peus hen lakeat ? » Respountet e oue d'ezhan : « Deuit ha sellit. » Neuze Jesus a skuillas d'ezhan : « Guekit pegement e kare Lazar ! » eme ar Juzevien a oa eno.

Pa oue dirak ar bez, Hor Zalver a c'hourc'hemennas : « Savit ar mean a zo o stanka ar bez ! » Martha a lavars : « C'houez fall a zo gant han, rak setu ar pevare dervez abaoue m'eman aze. — Hen diskleriet em eus d'oc'h, eme Jesus, ma kredit, c'houi a velo gloar Doue. » Tennet e oue eta ar mean, neuze Hor Zalver a zavas he zaoulagad varzu an nenv : « Va Zad, emezhan, ho trugarekât a ran, abalamour ma selaouit ac'hanoun. Lavaret a ran kement-se, evit ma teuio ar re a zo ama da gredi cun deut euz ho perz. »

Neuze, Jesus a lavaras, gant eur vouez krenv : « Lazar, deus er meaz ! » An hini maro a zentas dioc'htu ; he dreid hag he zaouarn a oa amarret, hag he benn goloet gant eul linser ven. Hag Hor Zalver a lavaras : « Diliamit-hen ha lezit hen da vont. »

Jesus na gerzas ket dioc'htu da barea Lazar : kae-roc'h burzud a reas oc'h ober d'ezhan sevel euz a varo da veo eget n'en defe great oc'h he barea diouz he glenved.

Peger kaer eo komzou Hor Zalver ! « Me eo ar resurreksion hag ar vuez ! » Pa varv unan pe unan euz hon tud, bezomp fizians en Hor Zalver, ar re a zo bet kristenien vad en ho buez, a gavimp eürus ganeomp en eternite. Peger krenv eo feiz Martha ! « C'houi eo ar C'hrist, Mab an Doue beo ! » Sant Per en deus roet ive d'Hor Zalver ar respount kaer-ze, hag abalamour

da-ze, eo bet lakeat e penn an c'hestel ; abalamour da-ze, an Iliz a zo diazezet varnhan.

« Piou benag a vevo hag a gredo ennon, ne varvo ket », eme Jesus. Da lavaret eo, eme ar zent, guir zervicherien an Aotrou Doue a ranko gouzanv ar maro, koulz hag ar bec'herien, mes evit eun amzer hebken. Resussita a raint oll, deiz ar varn ziveza : ar re vad a yelo neuze gant Doue, en he varadoz, da ren evit atao buez an eürusted parfet ; e leac'h ar bec'herien a vezo strinket evit atao e poaniou an ifern, kalz guasoc'h eget eur maro eternal.

KENTEL 67. — Ar pennou bras eneb Jesus. An dek den lor.

Ar vrud euz Lazar savet euz a varo da veo a nijas buan e kaer Jerusalem ha dre ar Judee. Ar pennou bras en em vodas, hag a zisklerias ho zonj :



« An den-ze a ra eur maread burzudou ; ma ne gaeomp ket outhan, an oll a gredo ennhan, hag ar Romened a zistrujo ar gear hag ar bobl. » Mes unan anezho, Kaiphas, a lavaras : « Mad eo e varvfe unan evit an oll. »

« N'eo ket anezhan he unan e tisklerie Kaiphas ar virionez-se, eme ar Skritur Zakr, mes sklerijen-net e oue gant Doue, e kement-se, abalamour ma oa beleg bras er bloavez-se. An toktored hag ar Pharisianed a reas eta ho zonzj da lakât Jesus d'ar maro, met Hor Zalver a dec'has gant he ziskibien pell dioc'h Jérusalem.

Peurliesañ, Doue en deus diskleriet ar virionez dre c'hinou tud santel; avechou evelato, en deus he diskleriet dre c'hinou tud fallakr, evel ma oa Kaiphas.

Pa oa Jesus o vont gant he hent, e velas, eun dervez, dek den lor o tont varzu ennhan. Choum a rejont pell, mes ho mouez a zavās, da lavaret : « Jesus, hor mestr, o pet truez ouzimp ». Hor Zalver a zellas outho, ha kerkent : « It, emezhan, d'en em ziskoues d'ar veleien ».

Senti a rejont, mes pareet e ouent en hent. Unan anezho, eur Samaritan, pa velas e oa pare, a zistroas var he giz da drugarekât Jesus. Hag Hor Zalver a zisklerias neuze : « Daout ha n'int ket pareet ho dek. E pe leac'h eta ema an nao all ? N'eus nemet heman, eun den estren, hag a ve deut en dro ». Setu ma lavaras d'ezhan : « Kea, da feiz e deus da zaveteat ».

An dud lor o doa difen da vont tost d'an dud all, rak ho c'hlenved a zo spegus : choum a reant eta d'ober ho goulenn da Jesus, dioc'h a bell.

« It d'en em ziskoues d'ar veleien ! » eme Hor Zalver. Lezen Moysez a roe urz da gement den lor a vije bet pareet, mont da gaout ar veleien da genta ; p'en dezo diskleriet ar beleg e oa pare an hini a oa bet lor, en doa guir da vont e mesk an dud ya'h. Feiz an dek den lor a oa bras, rak senti a rejont ouz Hor Zalver araok ma oant bet pareet. Nao anezho, nao Juzeo, a reas goude ar pez a ra kalz tud : choum a rejont heb' trugarekât ho madoberour. Nak a heb' kristen, mad da c'houlenn grasou Doue, a zo fall d'he drugarekât da c'honde !

Ar Samaritaned a oa dispriet gant ar Juzevien, ha lakeat gantho e renk ar baianed, rak ne virent nemet eul lodennik euz lezen Doue, evel m'eo bet diskleriet er penn kenta euz an Testamant Nevez.

Trugarekaomp Doue, p'hon dezo bet grasou digan-than, dreist oll goude ar gommunion zantel.

KENTEL 68. — Ar Pharisian hag ar Publikan.

Evit rei eur gentel da hiniennou a oa leun a fizians ennhio ho unan, abalamour ma oant tud santel var ho meno, hag a zisprije ar re all, Jesus a lavaras, eun dervez, ar barabolen-man : « Daou zen a bignas en Templ da bedi ; unan a oa Pharisian, hag egile Publikan, (da lavaret eo, resevour



an taillou) ». Ar Pharisian, en he zav soun, a bede evelhen, ennhan he unan : « O Doue, m'ho trugareka, abalamour n'oun ket henvel ouz dud all, a zo laeronn. disleal, techet d'ar pec'hed vil, nak henvel ouz ar Publikan-man. Me a yun diou vech er zizun me a ro an deok euz kement tra am eus ». Ar Publikan a joume pell diouz an aoter, ha ne

grede ket zoken sevel he zaoulagad varzu an nenv, met skei a rea var boull he galon, en eur lavaret : « O Doue, o pezet truez ouz ar pec'her ma 'z oun ». M'hel lavar deoc'h, eme Hor Zalver, heman a ziskennas en he di pardounet, mes nan egile : rak an neb en em huella a vezo iveleat, hag an neb en em izela, a vezo hueleat ».

Evel m'eo bet diskleriet dija, ar Pharisianed a oa Juzevien lorc'hus, hag a heuille, var ho meno, lezen Moysez penn da benn. Ar Publikaned a oa disprijet gant ar Juzevien, rak brud o doa da c'houlouen re, pa resevent an taillou. Ar Pharisian ourgouillus na bleg ket evit pedi, ne ra nemet en em fougeal : « ar re all a zo laeroun, me n'oun ket ; tud displeal, me zo eün ; ar re all a zo vil ha lous, me zo pur. Pa 'z eo guir e sonj d'ezhan beza parfet, ne c'houlouen netra digant Doue.

Ar publikan, er c'hontrol, ne gred ket sevel er penn huella euz an Templ, choum a ra er penn izela, anzañ a ra eo pec'her : pardounet eo.

Diouallomp rak an ourgouill, ha goulennomp an humillite.

KENTEL 69. — An den yaouank pinvidig

Eun den yaouank pinvidig a stouas dirak Hor Zalver : « Mestr mad, emezhan, petra rin evit gounit ar vuez eternel ? — M'e peus c'hoant kaout ar vuez, eme Jesus, mir ar gourc'hemennou. — Ho miret am eus abaoe va yaouankiz », eme an den.

Hor Zalver a daolas neuze eur zell karantezus varnhan, hag a lavaras : « Eun dra a vank d'id : kea, guers kement ac'h eus, ro an arc'hant-se d'ar paour, hag ez pezo eun tenzor en nenv ; neuze, deus d'am heul ».

An den yaouank a droas kein, hag a yeas kuit, melkoniet, rak madou bras en devoa. Jesus a lavaras neuze : « Na pegen dies eo d'ar re binvidig

dont e rouantelez Doue ! Easoc'h eo d'eur c'hanval mont dre graouen an madoz eget d'eur pinvidig mont da rouantelez Doue. Evelato, Doue a c'hell ar pezh n'ema ket e galloud an dud ».

Jesus, o sellet gant karantez ouz an den yaouank-se, a verke sklear e oa pur ha glan he ene. Siouaz evitan ! mont a ra var he giz, d'ar mare ma oa galvet gant Doue he-unan d'ar zantelez huella. Nak a bed den yaouank a ra evelldhan pa vezont galvet gant Doue da vont da veleg, da Frer pe da leanez !

Biskoaz kanval n'eo tremenet dre graouen eun madoz, e leac'h ma 'z eus meur a binvidig er baradoz, mes Hor Zalver a felle d'ezhan diskleria freaz : Dies bras eo d'ar pinvidig gounit ar baradoz, kalz diesoc'h eget d'ar paour.

KENTEL 70. — Promesaou Hor Zalver d'he ziskibien.

Per a c'houlennas neuze : « Pa 'z eo gwir hon eus dilezet peb tra abalamour d'eoc'h, pe seurt digoll hon dezo ? — E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, eme Hor Zalver, pa 'z eo guir oc'h eus va heulilet, da zeiz bras gloar Mab an den, c'houi a vezo azezet var daeuzek trôn, evit barn daeuzek tribu Israel ».

« An neb piou benag a zilezo he di, he gerent, he amezeien, he vadou evidon hag evit an Aviel, a resevo kant guech muic'h er bed-man, hag a vezo great brezel d'ezhan gant an dud, da c'hortos m'ep dezo ar vuez eternel, er bed all ».

Pa 'z eo guir an den yaouank a droe kein da Jesus, abalamour ma kave re galet guerza he oll vadou, sant Per a c'houlouen : « Pe seurt digoll hor bezo, ni, pa 'z eo guir oump eat d'ho c'heul, goude beza dilezet hor madou ? » Jesus a respount : « Ho tigoll a rin, rak rei a rin d'eoc'h eur renk huel em c'hichen. »

Diskleria a ra d'ezho evelato : « Gounit a rankot ho kurunen, rak an dud a raio brezel d'eoc'h. »

Arabat eo d'eomp eta beza souezet, pa velomp ar re fall o voall gas ar guir gristenien.

KENTEL 71. — Labourerien ar viniek.

Hor Zalver a lavaras d'he ziskibien : « Rouantelez an neñv a zo henvel ouz eun tad a familh hag a yeas abred kaer da glask labourerien evit he viniek. Goude beza great marc'had gantho euz eun diner evit ho dervez, e kasas anezho d'he bark. Var dro nav heur ez eas adarre, kaout a reas re all dibreder var ar blasen, hag e lavaras d'ezho : « It, c'houi ive, d'am guiniek, rei a rin d'eoc'h ar pezh a zo dleet ». Int-hi a yeas. Ar mestr a reas ar memez tra da gresdeiz ha da deir heur, hag a gasas re all c'hoaz d'he bark. Var dro pemp heur ez eas erfin, hag e kavas tud all var ar blasen; setu ma lavaras d'ezho : « Perak e choumit aze dilabour hed an deiz ? ». Hi a respontas : « N'eus deut den d'hor c'hask. — It, c'houi ive, emezhan, d'am guiniek ».

Pa deuas ar pardaez-noz, mestr ar viniek a lavaras da rener ar mevelien : « Galv al labourerien, ha ro d'ezho arc'hant ho dervez : ar re a zo deut da ziveza a baei da genta ». Ar re ziveza o devoue eta bep a ziner, hag ar re genta n'o devoue ket muoc'h. Met ar re-man, en eur gemeret, a c'hrosmele eneb an tad a familh : « Ar re ziveza, emezho, o deus labourer eun heur hebken, hag a zo paet keit ha ni, hon eus poaniet edoug an deiz, dindan an domder ! » An tad a respontas da unan anezho : « Va mignoun, ne ran gaou ebet ouzit, rak daoust ha n'oump ket en em glevet evit eun diner ? Kemer eta da ziner, ha kea kuit :

daoust ha ne c'hellan ket ober ar pezh a blij d'in ? Perak ec'h eus c'hoant da veza fall, abalamour m'oun mad ? En doare-ze, ar re genta a vezo da ziveza, hag ar re ziveza da genta.

Ober a reer guiniek euz eur park leun a viniennou, evel ma ves great keuneudek, balanek euz eun tiegez hag a zo kalz keuneud pe galz balan ennhan.

Ar barabolenn-ze a zesk d'eomp ar virionez-man : Doue a zo henvel ouz eun tad a familh hag a c'halv an oll dud da labourat evithan; ho faea a ra dioc'h ma plij gantho, goude amzer ar vuez, en he varadoz.

An devezourien a c'houenno ar park, evit tenna al louzeier fall ha renta blod an douar, pa vez sec'h, e rankont doura. Ar gristenien a zisc'hrizienno an techou fall euz ho c'halon, dre ar govesion, a bedo hag a gommunion evit ma tigoro ho ene da c'hrasou kaer ar Spered-Santel. D'an oll labourerien, Doue a ro ar memez gopr, ar memez pae : ar baradoz : evelato, ar c'hurunennou a vezo dishenvel. Deiz ar varn, meur a hini a vezo souezet : tud hag o dezo servichet an Aotrou. Doue hed ho buez, mes hanter gousket, n'o dezo ket kaeroc'h kurunen eget hiniennou ha n'o dezo labourer nemet en amzer ziveza euz ho buez. Perak kement-se ? Abalamour ar re-man, choumet heb anaout Doue er penn kenta euz ho buez, o deus he zervichet kalz parfetoc'h eget ar re all, epad an amzer ziveza-ze.

KENTEL 72. — Hor Zalver a ra kaoz c'hoaz euz he Basion. Pare an dall euz Jeriko.

Eun dervez, Jesus a zisklerias d'an daouzek abostol : « Mont a reomp da Jerusalem, hag e teuo da vir kement tra a zo skrivet gant ar Bropheted divar benn Mab an den. Lakeat e vezo etre daouarn ar baianed, goapeat e vezo, goloet a grançh ha skourjezet; goude-ze e vezo lakeat d'ar maro, hag e savo

beo en trede dervez ». Met an ebestel na ententent ket al lavourou-ze.

Kaer en doa bet Hor Zalver kelen he ebestel, ar reman a zonje atao e savje eun armee Juzevien evit ober he roue, hag e vije treac'h d'an oll boblou all. Hor Zalver, evit ho difazia, a gomz euz he Basion, ha gant truez outho, a lavar d'ezho e savo euz a varo da veg. Ne ententent ket, rak ne gredent ket e tlie Hor Zalver mervel er poaniou.

Pa oa Hor Zalver oc'h ober hent, varzu Jeriko, eun dall, azezet e kichen an hent bras, a c'houlenne an aluzen. Klevet a rea trouz gant kalz tud o tremen, setu ma c'houlennas petra oa. « Jesus a Nazareth a zo o vont ama, » eme an dud. Hen a zavas kerkent he vouez : « Jesus, mab David, o pet truez ouzin ». Diskibien Hor Zalver, ar re a oa er penn araok, a lavaras d'ezhan seac'h : « Ro peoc'h ». Met hen a grie muioc'h : « Mab David, o pet truez ouzin ». Jesus a jounas a zav, hag a reas ren an dall betek ennhan. « Re seurt a c'houlennes diganen ? emezhan. — Aotrou, eme an dall, roit d'in ar gullet ». Ha Jesus a lavaras d'ezhan : « Digor da zaoulagad, da feiz e deus da zaveteat ». An hini dall a velas kerkent, hag a heuillas Jesus, o veuli Doue. Hag ar bobl, test-euz ar burzud, a rente ive gloar da Zoue.

An dall-ze a ro d'eomp eur skouer kaer a feiz : goulenn a ra ar pare digant Jesus. An dud o deus c'hoant ober d'ezhan rei peoc'h, met ne ra van ebet : kenderc'hel a ra, ha pareet eo.

Nak a bed pec'her, dallet gant ho zechou fall, gant an drouk-spered, a glev menek euz eur mission, eur retred, enn Adorasion, ha n'ez eont ket da glask ar pare evit ho ene ! Nak a bed all, e parreziou a zo, na fell ket d'ezho mont da glask ho fask ! Dall Jeriko a zo bet furoc'h.

Kerkent ha ma oue pareet, e trugarekas Doue ; ni,

goude m'hon eus bet eur c'hras benag, greomp evel-dhan.

KENTEL 73. — Jesus e ti Zachee.

Pa oa Hor Zalver o treuzi kear Jeriko, eun den pinvidig, hanvet Zachee, mestr ar publikaned, a glaskas he velet. O veza m'oa bian a vent, ar publikan a zavas en eur vezen *sykomor* hag a oa var hent Jesus. Pa zigouezas eno, Hor Zalver a zavas he zaoulagad, hag o sellet ouz an den, a lavaras d'ezhan : « Zachee, diskennit buan, rak me rank mont du-ze da dremen an noz ». Ar publikan a ziskennas prim, hag a roas digemer d'Hor Zalver. Hogen, an oll Juzevien a c'hromole, en eur c'houlenn : « Penaoz e ra he zisken e ti eur pec'her ? ».

Zachee a lavaras da Jesus : « Rei a ran an hanter euz va danvez d'ar paour, ha m'em eus great gaout ouz unan benag, m'hen digollo peder guech muioc'h ». Hor Zalver a lavaras neuze : « Deut eo hirio ar zilvidigez en ti-man, rak Mab an den a zo deut da glask ha da zavetei ar re a oa kollet ».

Zachee a oa resevoir bras an taillou e Jericho, ha dre-ze eun den a renk : dizoare e oa d'ezhan pignat en eur vezen e kichen an hent bras. Hen ober a reas, kement a c'hoant en doa da velet Jesus a Nazareth. Nak a vall en deus da zisken pa lavar d'ezhan Hor Zalver : « Mont a ran en da di. » Resevourien an taillou a oa lakeat gant ar Juzevien e renk ar bec'herien, rak brud o doa da gemeret muioc'h eget ho guir. Jesus a ra eur c'hras vras da Zachee o tiskenn en he di, hag ar publikan a ra implij mad euz ar c'hras-se, oc'h ober d'Hor Zalver eun digemer kaer. Jesus a ro neuze eun eil c'hras kaer da Zachee, hag hen, leun a volentez vad, a zav euz a bec'her da zant. « Rapari a rin, peder guech, ar gaou am befe great ! » Daoust ha prest oc'h da rapari, p'oc'h eus great gaou ?

KENTEL 74. — Mari Madalen e koan vras Bethani.

Hor Zalver a yeas goude da Vethani, eno e koanias e ti Simon an den lor; Lazar a oa unan euz ar re a oa oc'h taol gant Jesus, ha Martha a zikoure servicha ar pred. Hogen, Mari Madalen a deuas di gant eul louzou a c'houez vad euz ar re bresusia, he skuill a reas var penn ha treid Hor Zalver. Sec'ha a reas da c'houde treid Jesus gant he bleo, hag ar c'houez vad euz al louzou a yeas dre an ti.

Unan euz an daouzek abostol, Judas, an traitour, a lavaras neuze : « Perak koll al louzou-ze, a vije bet guerzet tri c'hant diner, e leac'h he rei d'ar paour ? » — « N'eo ket gant ar beorien en doa soursi Judas, eme eun Aviel, mes karget e oa gant Hor Zalver da viret an arc'hant, ha gouzout a rea laerez ».

Hiniennou euz an diskibien a zavas gant Judas, mes Jesus a lavaras d'ezho : « Perak e tamallit ar vaouez-se ? Ar pezh e deus great evidon a zo eun etra vad. Bez' o pezo atao peorien en ho touez, ha vat a reot d'ezho pa gerot, mes n'ho pezo ket ac'hannoun-me atao ! E guirionez, meulet e vezo evit-se, e kement leac'h ma vezo embannet va Aviel dre ar bed oll ».

Kalz Juzevien a oa eno, n'eo ket abalamour da Jesus hebken, met ive abalamour da Lazar, en doa ressusitet. Pennou bras ar Juzevien, o velet an dud o trei gant Hor Zalver abalamour m'en doa great da Lazar sevel euz a varo da veo, a reas ho zonzj d'ho lakât ho daou d'ar maro.

Peger birvidik eo karantez Mari Madalen ! Pegen humbl eo ar bec'herez vras, breman, goude n'eo bet pardounet !


Hor Zalver a dlire rei dizale he vuez evit an oll, ha kuitât he ziskibien, e leac'h ar re-man a dlire kaout atao peorien en ho zouez.

An Aviel a zo skignet brema dre ar bed oll, hag an dud a ra meuleudi Mari Madalen : eur skulptrer, eul liver hag en deus patrom ar zantez da ober, a laka peurliesia ar podik louzou a c'houez vad en he dorn pe en he c'hichen.

Kasouni ar pennou bras a zo mantrus : c'hoant o doa laza Jesus ha Lazar ganthan. Peger fall eo ar guarizi !

KENTEL 75. — Henor da Jesus, d'ar zul Bleuniou.

Ar prophet Zakarias en doa lavaret : « Bez laouen, merc'h Sion, kan en da levenez, merc'h Jerusalem,



rak da Roue a zo o tont d'id, ar roue leal ha salver. Paour eo, azezet var eun azenez, ha var he azen bian ».

Evit ma teufe da vir komzou ar prophet, pa oa Jesus o vont da Jerusalem, er guel euz gouel Pask, e kasas daou euz he ziskibien en he raok, e kear,

goude m'en devoue lavaret d'ezho : « It d'ar geraden a zo dirazoc'h, kaout a reot eno eun azenez ouz eur stag, hag he azen yaouank ganthi. Distagithi, hag ho digasit d'in. Ma ves goulnennet diganeoc'h : « Perak e tistagit al loened-se ? » respontit : « Ar Mestr en deus ezom anezho ». Neuze, ne vezo lavaret netra d'eoc'h ken ».

An diskibien a zentas ouz Jesus, a zigasas dirazhan an azenez hag he hini bian, hag a ledas ho guiskamant varnho. Hor Zalver a zavas neuze var gein, hag eur maread tud a astennas ho dillad var an hent a rea Jesus, hag a daolas skourrou glas var an douar. Hag an dud a yea araok koulz hag ar re a deue varlerc'h, a youc'he : « Hosanna da Vab David ! Benniget ra vezo an Hini a deu en hano an Aotrou Doue ! Hosanna e barr an nenvou ! »

Ar Pharisianed a lavare etrezho : « Na c'hounezomp netra ; an oll a red var he lerc'h ; » setu ma leverjont da Jesus : « Mestr, grit d'ho tiskibien rei peoc'h ! » Respount a reas d'ezho : « Mar teufent da devel, ar vein ho unan a gomsfe ».

Jesus ne glasse ket an henoriou, mes rei a ra tro, d'an dud eun ha leal, da renta henor d'ezhan : deut e oa ar mare ma tlie diskoues d'an dud e oa hen ar Messias. An dud a vrezel o deus kezek d'ho dougen d'an emgann ; Jesus, ar roue a beoc'h, a deu var gein eun azenez. Merka a ra sklear eo mestr var an oll draou, pa ra d'he ziskibien digas d'ezhan an azenez.

Pobl Jerusalem a reas eun dra gaer en dervez-se, deiz ar zul Bleuniou, o renta an henoriou brasa da Vab Doue, greomp evel ar Juzevien-ze : greomp d'Hor Zalver, ar C'hrist-Roue, ren varnomp.

Ar Pharisianed, dizec'het ho c'halon gant an avi, a gavas dies gullet an dud o renta henor da Jesus, mes Hor Zalver a ziskouezas e oa laouen he galon o reseo eun nebeud henor araok he Basion.

KENTEL 76. — Daelou skuliet var Jerusalem. Jesus en Templ.

Pa oa Jesus tost da Jerusalem, e sellas ouz kear, hag e skuillas daelou varnhi, en eur lavaret : « Ah ! ma oufes, te, hirio c'hoaz, ar pez a rofe d'id ar peoc'h : mes an traoz-ze a zo kuzet ouzid breman. Dont a raio eun amzer varnout, ha da enebourien a zigoro douvesjou en dro d'id, a gelc'ho hag a voasko ac'hanout tu ha tu. Da deurel a raint d'an douar, te ha da vugale, ha ne laoskint ket ennout mean var vean, abalamour n'e peus ket anavezet an amzer m'eo eat Doue d'az kueleit ».

Pegen tener eo kalon Hor Zalver ! Nak a garantez en doa evit he vro ! Evelldhan, eur c'hristen a dle karet atao he vro, hag he difen.

Var dro daou ugent vloaz divezatoc'h, e koezas var Jerusalem ar gualleuriou en doa diskleriet Hor Zalver. Na joumas ket mean var vean. An impalaer Julian, nac'her he feiz, a glaskas lakât Hor Zalver gaouiad, ha sevel a nevez mogeriou an Templ ; he labourerien a oue diarbennet ha spountet gant eun tan burzudus.

Hor Zalver a yeas var eun d'an Templ, hag a rentas ar pare d'eur c'halz tud kam ha dall hag a oa eno. Bugale a youc'has neuze : « Hosanna da vab David ! » Ar Pharisianed a c'houlennas digant Hor Zalver : « Daoust hag ho c'hlevet a rit ? — Ia, eme Jesus, mes daoust ha n'oc'h eus ket lennet er Skritur Zantel : « Tennet oc'h eus eur veuleudi parfet euz ginou ar vugale, hag ar re n'int ket dizounet c'hoaz ». Neuze, e kasas kuit, eun eil tro, ar varc'hadourien a zalc'he stal en Templ.

Hosanna da vab David a zo lavaret : « Henor d'ar Messias, d'ar C'hrist, mab David. » Hor Zalver, nac'het gant eur rumm dud, a zo anzavet gant eur rumm

all : an dud vad, bras ha bian, a oa neuze e Jerusalem.

Anzavet ha meulet eo breman ive, gant bugale gristen ar bed, abaoe m'int bet galvet da gommunia abred. Na mad eo kalon ar vugale, pa ves desket abred ho c'hreansou d'ezho !

Jesus a gasas kuit, eun eil tro, ar varc'hadourien diouz an Templ : « Va zi, emezhan, a zo eun ti a beden, ha c'houi o peus great anezhan eun toull laeron. » Abalamour m'eo Jesus an Oll C'halloudek, den na gredas cnebi outhan.

KENTEL 77. — Ar vezen fiez. Pennou bras fallakr.

Antronoz, par oa Jesus o vont e kichen eur vezen fiez, e klaskas eur frouezen benag enghi, mes ne gavas nikun. « N'edo ket mare ar fiez », eme An Avieler. Hor Zalver a daolas neuze he valloz var an vezen.

En dervez varlerc'h, pa zistroas Jesus el leac'h-se, an diskibien a velas e oa eat seac'h ar vezen. « Mestr, eme zant Per, ar vezen o peus taolet ho malloz varnhi, a zo dizec'het ». Jesus a respountas : « Bezit feiz e Doue. E guirionez, an neb piou benag a lavaro d'ar menez a velit aze : Kea alese, ha lamm er mor ; ma n'en d'eus douetans ebet en he galon, ar menez a ranko senti ».

Ar guez feiz a ro daou eost, er Judee. E mare ar Pask, ne c'heller kaout, var ar guez, nemet eur frouezen benag ama hag ahont, met Hor Zalver na gavas nikun. Jesus a roas he valloz d'ar vezen, ha kerkent, houman a zec'has. Peger mad eo Hor Zalver ! Laza a c'helle ar Pharisianed a glaske noazout d'ezhan, ho laza, pe da viana ober drouk d'ezho, mes ne skoas nemet eur vezen !

Hor Zalver a verk da c'houde, galloud heb muzul ar feiz.

Pa deuas Hor Zalver, antronoz, en Templ, ar penrou bras a c'houlennas diganthan : « Digant piou e peus bet galloud d'ober ar pezh a rit ! ». E leac'h respount var eun, Jesus a c'houlennas d'he dro : « Digant piou en doa bet Ian Vadezour galloud da vadezi. Digant Doue, pe digant an dud ? Respountit d'in. » Ar pennou bras, Pharisianed ha Doktored, a zonzas : « Ma lavaromp en doa bet Ian he c'halloud digant Doue, Jesus a Nazareth a c'houlenno : « Perak 'ta neuze, n'o peus ket he gredet ? Ma lavaromp e teue galloud Ian digant an dud, ar bobl a zav'o en hon enep, rak kredi a-ra e oa eur guir brophet ». Setu ma respountjont da Jesus : « Ne ouzomp ket. » Pa 'z eo guir ne respountit ket d'in, eme Hor Zalver, me ne respountin ket d'eoc'h ken nebeud ».

Peger fallakr e oa ar pennou bras ! Jesus en doa diskouezet kant guech e teue a bers Doue an Tad, pa 'z eo guir e rea kement a draou burzudus, hag hi, an doktored, desket bras var lezen Moysez, na felle ket d'ezho anzae e oa Mab Doue. Sklear eo ne c'helle ket Hor Zalver, a zo ar Furnez he-unan, beza luiet gant tud. An testeni en doa rentet sant Ian Vadezour d'Hor Zalver a oa sklear ha freas : Klevet em eus eur vouez euz an nenv o tiskleria, da zeiz badiziant Jesus : « Heman eo va Mab maia karet. »

Ar bobl a c'hoarzas d'an Doktored, abalamour ma oant eat dilavar.

KENTEL 78. — Parabolen ar pred eured.

Jesus a roas neuze eur parabolen all : « Rotantelezh an nenv a zo henvel ouz eur roue hag a reas eur pred evit eured he vab. Kas a reas servicherien da bedi an dud, met ar re-man ne felle ket d'ezho dont. Kas a reas neuze re all : « Livirit, emezhan, d'an dud am eus pedet : « Al lein a zo great, an

ejenned hag al loened all a zo lazet, peb tra a zo pourchaset, deuit d'ar pred ». An dud a oa pedet a reas skouarn vouzar, hag a yeas, unan d'he di var ar meaz, eun all d'ar marc'had, re all a grogaz e servicherien ar roue, hag ho voallgasas betek ho laza. O klevet kement-se, ar roue a yeas e kounnar, eas a reas soudardet da laza ar vuntrerien-ze, ha da zeui ho c'hear ».

« Lavaret a reas neuze d'he zervicherien : « Ar pred a zo pourchaset, met ar re a oa bet pedet n'int ket din da zont. It eta er c'hroaz-henchou, ha pedet kement den a gavoc'h ». Ar zervicherien a zentas, hag a c'halvas an oll a gavchont, fall ha mad. Ar roue a yeas da velet ar re a oa deut, hag a gavas eun den heb he zae eured. « Va mignoun, eme d'ezhan ar roue, penaoz oc'h deul ama heb ho sae eured ? » An den-ze a joumas mut. Ar roue a lavaras neuze d'he ofiserien : « Liamit dezhan treid ha daouarn, hag hen stlapit en denvalijen, er meaz : eno e vezo lenv ha skrign-dent. Rak kalz a zo galvet : nebeud a zo dilabet ».

Evit entent ar barabolen-ze, eo red gouzout : da genta, e kase atao rouaned ar Zav Heol'eur zae eured d'ar re oll a veze pedet : an den a oa gant he zillad lous a oa eta heb digarez vad. D'an eil, al lein eured a veze great atao d'ar pardaez-nouz : an neb a veze taolet ar meaz, a veze en denvalijen.

An dud a zo pedet d'al lein, ha ne denont ket, a zo ar Juzevien : an Aviel a zo bet prezeget d'ezho da genta, mes eur c'halz anezho o deus great skouarn vouzar. Kalz a zo galvet, da lavaret eo : an oll Juzevien a oa galvet d'ar feiz, mes nebeut anezho o deus digoret ho daoulagad d'ar guir sklerijen, nebeut anezho o deus heuillet kenteliou an Aviel.

KENTEL 79. — Paea an taillou da Zesar.

Epad derveziou ar zizun santel, ar Pharisianed en em glevas gant tud hag a oa a du gant ar roue Herodes, evit klask paka Jesus en he gomzou. Diskleria a rejont eta d'ezhan : « Mestr, gouzout a reomp oc'h leal, hag e teskit d'an dud hent Doue hervez ar virionez, heb kaout neb aon rak den, abalamour ne zellit ket ouz renk an dud. Livirit eta d'eomp petra zonjit euz an dra-man : ha dleet eo d'eomp-ni paea an taillou da Zesar, pe joum heb ober? »

Jesus, gant an anaoudegez en doa euz ho fallagriez, a respontas : « Tud goloet, perak e klaskit-hu va zenti? Diskouezit d'in arc'hant an taillou. » Int-hi a ziskouezas d'ezhan eun diner. Jesus a c'houlennas kerkent digantho : « Piou zo he skeuden hag he hano aze? — Sesar, emezho. — Ma! eme Hor Zalver, roit da Zesar ar pezh a zo d'ezhan ; ha da Zoue, ar pezh a zo da Zoue. »

Ar re fall n'en em glevont nemet evit ober drouk d'ar re vad. An dud a oa a du gant ar roue Herodes a zisklerie e oa red paea an taillou, e leac'h ar Pharisianed a lavare ne dliet paea gueneg taillou ebet. M'en defe eta Hor Zalver diskleriet var eun : « Red eo paea an taillou », ar pharisianed o defe kavet abeg ennan ; m'en defe lavaret : « Red eo choum heb paea », an Herodianed o defe he damallet da vont eneb lezen ar vro. Jesus, ar furnez he unan, a respont : « He vir da Zesar, hag he vir da Zoue. » Sesar a oa en amzer-ze, hano mestr ar bed. Nikun euz enebourien Jesus na gredas klask abeg er respont-se.

En dervez-se ive, ar Saduseaned, da lavaret eo, tud hag a nac'he resurreksion ar re varo, a lavaras da Jesus : « Mestr, Moysez en deus roet d'eomp ar gourec'hemen-man : Pa varvo eun ozac'h benag dizher,

breur an den maro a zimezo gant an intanyez. Seiz breur a oa en eun ti, dimezet int bet ho seiz, an eil goude legile, d'ar memez merc'h, ha marvet int en he raok. Ma teu ar c'horfou da resussita, pehini euz ar seiz a vezo he fried? »

Jesus a respountas d'ezho: « Fazia a rit o sonjal e vevo an dud er baradoz er stad a briedelez evel var an douar, rak er baradoz an dud a vezo henvel ouz an elez. Bez' e vezint bugale Doue, pa 'z eo guir e vezint bugale ar resurreksion. Resussita a raimp oll, Moysez he-unan hel lavar, var lerc'h an Aotrou Doue. »

Eur Pharisien a zisklerias neuze: « Mestr, eur respount eün o peus roet. »

Ar Saduseaned ne leverjont mui grik; petra serviche d'ezho?

KENTEL 80. — Ar Gourc'hemen brasa.

Daoust ma oant bet lakeat mut gant hor Zalver, ar Pharisianed a glaskas c'hoaz, en ho c'hasouni, kaout abek ennhan, hag unan anezho, doktor var lezen Moysez, a c'houlennas diganthan: « Mestr, pehini eo ar brasa gourc'hemen a zo el Lezen? » Jesus a respountas: « Karet a reot an Aotrou Doue euz hoc'h oll galon, euz hoc'h oll ene hag hoc'h oll spered. Hennez eo ar c'henta hag ar brasa gourc'hemen. An eil gourc'hemen a zo henvel ouz ar c'henta: karet a reot ho nesa evel doc'h hoc'h unan. En daou c'hourc'hemen-ze ema al Lezen a bez, hag ar Bropheted. »

Hor Zalver a c'houlennas neuze, d'he dro, digant ar Pharisianed bodet eno: « Petra zonjit euz ar C'hrist? Da biou eo Mab? — Mab David eo, emezho. — Penaoz neuze, eme Jesus, e ra David he Aotrou anezhan, pa lavar, sklerijennet gant ar Spered San-

tel: « An Aotrou en deus diskleriet d'am Aotrou: Azezit en tu deou d'in, ken am bezo lakeat hoc'h enebourien d'ober skabel dindan ho treid. Rak, ma ra David he Aotrou anezhan, penaoz eo he vab? » Den ne c'hellas respount eur ger, an distera; ha di-var neuze, den na gredas mui goulennetra diganthan.

Pehini eo ar brasa gourc'hemen? Ar Pharisianed n'en em glevant ket var gement-se. Hor Zalver a respount dinec'h: « Ar c'henta eo. » Perak? Abalamour an neb piou benag a garo Doue e guirionez, a vezo red d'ezhan miret he oll gourc'hemennou. An eil gourc'hemen a zo henvel ouz ar c'henta, rak ne c'hell den kaout guir garantez evit Doue heb karet he nesa. Kement a c'houlenn Doue digant peb den a zo en daou c'hourc'hemen-ze.

« Petra zonjit euz ar C'hrist? » a c'houlennas neuze Jesus. « Penaoz e c'hell beza asambles Aotrou David hag he vab? » Nikun euz an doktored na respountas. Ar C'hrist, evel den a zo mab David; evel Doue, eo he Aotrou. Ar Pharisianed ne felle ket d'ezho entent ar virionez-se, na goulenn sklerijen digant Hor Zalver, setu ma chomjont dilavar. Guelet a reant eun dra: ho gouiziegez ne oa netra dirak furnez Jesus.

Kement-se a zigouezas daou pe dri dervez araok ar Yaou Gamblid.

KENTEL 81. — An amzer da zont.

Prof an intanvez.

Jesus a lavaras d'ar Pharisianed: « Kas a ran d'eoc'h propheted, tud fur ha doktored, laza a reot darn anezho, ar re all a vezo skourjezet euz ho perz en ho synagogou d'eoc'h-hu. Guall-gas a reot va diskibien euz an eil kear d'eben, en henvelep doare ma kouezo varnoc'h an oll goad pur a zo bet skuillet var an douar, abaoe goad an den santel Abel betek goad Zakarias, mab Barakias, o peus lazet etre an templ hag an aoter. Jerusalem, Jerusalem, la-

za a res ar bropheted, ha labeza a res ar re a ves kaset d'id, ped guech em eus-me c'hoanteat dastum da vugale evel ma tastum ar yar he laboused bian din-dan he diouaskel, ha n'eo ket falvezet ganes! »

Goude ar c'homzou-ze, Jesus a azezas dirak kef ar profou, hag en em roas da zellet. Meur a zen pinvidig a roe kalz. Dont a reas eun intanvez hag a daolas er c'haf daou bez mouniz hag a rea eul liard heben. Diskleria a reas neuze d'he ziskibien: « E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h an intanvez paourze e deus roet muioc'h eget ar re all. Ar re-man o deus diouret eul loden euz ar pezo doa a re, hi e deus roet kement e doa evit beva. »

Hor Zalver, hag a vele an amzer da zont ker sklear hag an amzer neuze, a verk, pell araok, ar brezel a rafe ar Juzevien hag an dud fall d'he ziskibien. Diskleria a ra d'ar Juzevien e vezo kastizet ho fallagriez. Lavaret a ra da c'houde en deus truez ouz Jerusalem, truez ouz he genvrois hag a vijê bet eürus ganthan, ma karjent beza selaouet he genteliou.

Jesus a joumas eur pennad da zellet ouz ar re a roe profou da zikour kempen an Templ. Elez Doue a ra kement-se heb ehan; var evez emaint euz kement aluzen a roomp, evit ma tenuio an Aotrou Doue hon digoll. Met Doue a zalc'h kount euz daou zra: euz an arc'hant a roer, hag euz dienez an neb a ro. Setu perak ar re a ro ar muia n'o deus ket atao ar brasa mirit dirak Doue.

KENTEL 82. — Jerusalema a vezo distrujet.

Goude beza gourdrouzet ar Pharizianed hag an Doktored, ha komzet rust outho, goude beza diskleriet d'ar bobl: « Selaouit ho c'henteliou, met na heuilhit ket ho skoueriu » Jesus a yeas er meaz euz an Templ. He ziskibien a lavaras d'ezhan: « Mestr,

sellit: pebez mein ha pebez mogerioù! ». Hor Zalver a respountas d'ezho: « E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, ne joumo ket ama mean var vean. »

Pa oue azezet, Jesus var menez Olived, he ziskibien a c'houlennas: « Mestr, diskleriit d'eomp pe da vare e tigouezo an traou-ze, peur e vezo ho tonedigez ha fin ar bed. » Jesus a respountas d'ezho: « Diouallit na vefac'h touellet, rak meur a hini a deuio em hano, en eur lavaret: « Me eo ar C'hrist, » hag ar re-ze a douello eur maread tud. Guelet a reot ar boblou oc'h en em zevel an eil eneb egile.

Dont a raio ar vosen, ar gernez, hag ar c'hrendouar e meur a leac'h. Kement-se a vezo ar penn kenta euz ar poaniou.

Kaset e viot dirak ar varnerien hag ar rouaned abalamour d'in, evit renta testeni d'am Hano. Arabat e vezo d'eoc'h neuze beza nec'het gant ar pezo o pezo da lavaret, rak ar Spered Santel eo a lakaio ar respouchou var ho muzellou.

Pa velot el leac'h santel, da lavaret eo, en Templ, ar reuziou mantrus diskleriet gant ar prophet Daniel, tec'hit prim. Ar re a zo er Judee a dec'ho er menezioù, an neb a vezo var an doen na ziskenno ket evit klask en ti traou da gas ganthan, hag an neb a vezo er park na zistroio ket d'ar gear da glask he zillad. An dervezioù-ze a vezo fall, mes berreat e vezint abalamour d'an dud santel. Ma ves diskleriet d'eoc'h neuze: « Ar C'hrist a zo ama pe ahont, » na gredit ket.

Hor Zalver na skoas ket ar Pharisianed en despet d'ho fallagriez, rak deut e oa leun a zouder. Ho gourdrouz a reas evelato, rak eur mestr tost d'he zevel a dle, avechou, komz stard ouz he dud, pa reont ho fenn fall.

Ne joumo ket euz an Templ mean var vean. Evel m'eo bet diskleriet hueloc'h, komzoù Hor Zalver a zo deut da vir, en amzer Titus. Pa deuas Titus, e penn

soudardet Rom, da gelc'ha ha da zistruj Jeruzalem, ar gristenien a dec'has gant hast diouz kear ha divar dro. Meur a doueller a zavas en amzer-ze, hag a lavare : « Me eo ar C'hrist ». met trec'het ha lazet e ouent gant ar Romened.

KENTEL 83. — Mab an den a deuo.

Goude beza diskleriet d'he ziskibien ar pezh a zelle ouz kear Jerusalem, Hor Zalver a respountas d'ho goulenn : « Peur e teuot, ha peur e vezo fin ar bed ? »

« Guelet e vezo, eme Hor Zalver, traou souezus en heol, en oabl hag er stered ; ar boblou a joumo mantret var an douar, o klevet an trouz skrijus a raio ar mor hag an tarziou. An dud a zizec'ho gant ar spount, var c'hed euz ar pezh a zigouezo gant ar bed oll, an nenv he unan a orjello. Neuze e vezo guelet Mab an den o tont var, eur goabren gant ar galloud hag ar gloar ar vrasa. Pa velot an traou-ze oc'h en em gaout, sellit ha savit ho penn, rak ho silvidigez a vezo tost. Pa velit frouez ar fiez pe ar guez all o furmi, e c'houzoc'h ema tost an hanv : evelse ive, pa velfot an oll draou-ze o tigouezout, e quezoc'h e vezo tost rouantelez Doue. E guirionez, m'hel lavar d'eoc'h an oll draou-ze a c'hoarvezo araok ma vezo maro ar rumm dud a zo bremañ. An nenv hag an douar a dremenno, va c'homzou ne dremenint ket. »

Araok an deiz diveza euz ar bed, e vezo traou spountus en oabl ha var an douar. Mab an den, da lavaret eo, Hor Zalver Jesus-Christ, Mab Doue ha mab an den er memez amzer, pa 'z eo guir en deus an diou natur, a ziskenno var eur goabren, he groaz skedus dirazhan, hag eur gurunen elez var he dro. Neuze Jesus a varno an oll dud euz a bep amzer hag euz a bep leac'h. Jesus a gomz ouz he ziskibien, evel ma ve dleet d'ezho guelet ho unan an traou-ze, mes ar zent a lavar d'eomp : An oll draou-ze a vezo guelet gant bugale ar re a ze-

laque Hor Zalver. Eur c'halz euz ar re a oa eno neuze a velas Jerusalem diskaret ha dismantret gant ar Romened ; ho bugale vian, pell pell da c'houde, a velo lervez diveza ar bed.

Komzou Doue na dremenint ket ha ne c'hellont ket tremen, rak Hen a zo ar virionez memez.

KENTEL 84. — Parabolen ar guerc'hez.

« Rouantelez an nenv, eme Hor Zalver, a zo hennvel ouz dek guerc'hez : pemp anezho a oa diskiant, ha pemp, fur. Mont a rejont gant pep a gleuzer da ziambroug an dud nevez. Ar pemp diskiant a yeas en hent heb beza kemeret eol, met ar re fur a gemeras eol gant ho c'hleuzeuriou. An den nevez a zaleas da zont, etretant, ar guerc'hez a voredas hag a gouskas mad. Ha setu ma'oue klevet, e kreiz an noz, eur vouez o krial : « Ema tost an den nevez, deuit d'he zigemeret. » Ar merc'hed yaouank a zavas ker-kent, evit renka ho c'hleuzeuriou, met ar re ziboell a lavaras d'ar re fur : « Roit d'eomp euz hoc'h eol, rak hor c'hleuzeuriou a zo o vont da vervel. » Ar re fur a respountas : « Gant aon ne ve ket aoualc'h evidomp hag evidoc'h, it da di ar varc'hadourien da brena. » Epad ma 'z eant, an dud nevez a zigouezas, ar re a oa eno a yeas gantho e kamp vras al lein eured, hag an or a'oue sarret.

Ar plac'hed diskiant a zigouezas ive, divezatoc'h ; goulenn a rejont : « Aotrou, Aotrou, digorit d'eomp ! » Respount a reas : « E guirionez, m'hel lavar d'eoc'h, n'hoc'h anavezan ket. »

« Beillit eta, eme Hor Zalver, rak ne ouzoc'h nak an deiz, nak an heur. »

En amzer Hor Zalver, ar Juzevien n'o doa ket a c'houlou ; ar merc'hed a zouge eur c'hleuzeur hag a

veve ar sklerijen ennhan, keit ha ma pade an eol. An den nevez a yea, peurliesaz, gant eun nebeud mignou-
ned da glask ar plac'h nevez : houman a veze plac'hed
yaouank ganthi. Ar guerc'hezad fur a verk ar c'hriste-
ten e stad a c'hras, bez' en deus sklerijen ar feiz, hag
eol ar garantez. Ar plac'hed diskiant a verk ar bec'he-
rien. Vertuziou o doa pa 'z eo guir e oant guerc'hezad,
met ne virent ket an oll vertuziou evelato. E stad a
bec'hed e oant.

Ar barabolen a lavar d'ar pec'her : « Arabat eo
d'eoc'h fiziout o pezo amzer da jench buez, rak den
ne anaves an heur ma varvo. »

KENTEL 85. Parabolen ar zervicherien,

« Eun den, eme Hor Zalver, araok mont d'ober eur
veach hir, a c'halvas he zervicherien, hag a fizias
he vadou ennhao. Da unan e roas pemp talant, da eun
all daou, ha d'an trede unan hebken, da c'houde,
ez eas en hent.

Ar servicher en doa resevet pemp talant ho lakeas
da dalvezout, hag a c'hounezas pemp all. An hini en
doa bet daon dalant a reas ar memez tra, hag a
c'hounezas daou all.

« An hini en doa bet eun talant hebken, a reas
eun toull en douar, hag a gusas ennhan he arc'hant.

« Pa deuas en dro, ar mestr a reas d'he zervi-
cherien renta kount d'ezhan. An hini en doa rese-
vet pemp talant a ginnigas d'ezhan pemp all, en eur
lavaret : « Aotrou, roet e poa d'in pemp talant, setu
pemp all am eus gounezet gantho. » He vestr a res-
pountas : « Mad eo, servicher leal hag aketus, pa 'z
eo guir out bet eun en traou dister, me a fizio traou
bras ennout : kemer perz e levez da vestr. » An
hini en doa bet daou dalant a ginnigas ive d'he vestr
an daou dalant all en doa gounezet gantho. D'ezhan

ar mestr a lavaraz, evel d'ar c'henta : « Mad eo, ser-
vicher leal hag aketus, pa 'z eo guir out bet eun en
traou dister, me a fizio traou bras ennout, kemer
perz e levez da vestr. »

An hini n'en doa reserwet nemet eun talant a lava-
raz d'he dro : « Aotrou, gouzout a ran oc'h eur mestr
kris, eosti a rit el leac'h n'o peus ket hadet, ha das-
tum el leac'h n'o peus ket ridellet. Aon am eus bet,
ha dre-ze em eus kuzet ho talant en douar : setu hen
ama. »

Ar mestr a respountas : « Servicher fall ha die-
gus, gouzout a reas oc'h eostan el leac'h n'em eus ket
hadet, hag e tastuman el leac'h n'em eus ket ridel-
let, red eo d'id eta lakât va arc'hant da dalvezout
ha da c'houunit. Breman, emezhan d'ar zerviche-
rien all, tennit he dalant diganthan evit her rei d'an
hini en deus dek.

« Ar servicher didalvez-ze, taolit anezhan er meaz,
en devalijen : eno e vezo lenv ha skrign dent. »

En amzer Hor Zalver, an talant a dale ouspenn
5.000 lur ; pemp talant a dale eiz kant lur var zeiz
mil lur var 'n ugent.

Ar barabolen a zesk d'eomp e ro Doue eur gount a
vadeu hag a skiant da bep den : lod o deus muioc'h,
lod all nebeutoc'h, mes peb hini a dle ober eun implij
vad euz ar pez en deus bet. Ar re o deus resevet muioc'h,
o dezo eur gount strisoc'h da renta. Pa ra eun den im-
plij vad euz ar grasou kenta a reseo, Doue a ro d'ez-
han grasou all ha baradoz da c'houde ; an den lezireg
a vezo stlapet e tenvalijen an ifern : eno ez eus lenv
ha skrign-dent.

KENTEL 86. — Setans ar Varn Ziveza.

« Goude beza lavaret eur ger divar benn ar zer-
vicher fall ha ne oa ket galvet da gemeret perz e

levenez he vestr, Hor Zalver a gomzas sklear var ar Varn ziveza.

« Pa vezo deut Mab an den en he c'halloud, hag an oll elez ganthan, ec'h azezo var drôn he c'hloar. An oll boblou a vezo bodet dirazhan, hag e ranno an dud en daou rum, evel ma tisparti ar pastor an denved diouz ar bouc'hed. Lakat a raio ar re vad en tu deou, hag ar re fall en tu kleiz. »

« Neuze ar roue a lavaro d'ar re a vezo en tu deou: « Deuit, c'houi a zo bet benniget gant va Zad, kemerit perz er rouantelez a zo bet pourchaset evidoc'h abaoe ar penn kenta euz ar bed. Rak naon am eus bet, ha c'houi ho peus roet d'in da zebri; sec'hed em eus bet, hag ho peus roet d'in da eva; divroad oan, ha c'houi ho peus va digemeret; noas edon, hag ho peus va guisket; klanv, hag oc'h deut d'am golo; er prizoun edon, hag oc'h deut d'am c'haout.

Ar re vad a c'houlennno: « **Peur 'ta, Aotrou Doue**, hon eus great kement-se? Ar roue a respounto: E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, ken alies guech m'o peus great vad d'an distera euz va breudeur biana, d'in-me eo ho peus her great. »

« Da c'houde, e lavaro d'ar re a vezo en tu kleiz: « It diouzin, tud daonet, it d'an tan eternal a zo bet c'houezet evit an diaoul hag he elez. Rak naon am eus bet, ha n'ho peus ket roet d'in da zebri; sec'hed am eus bet, ha n'ho peus ket roet d'in da eva; divroad e oan, ha n'ho peus ket va digemeret; en noaz edon, ha n'ho peus ket va guisket; klanv hag er prizoun, ha n'oc'h ket deut d'am gullet. »

Ar re fall a c'houlennno: « **Aotrou, peur hon eus ni** great kement-se? » Hag ar barner a respounto: « E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, ken alies guech ha m'oc'h choumet heb sikour unan euz an dud distera-man, me eo n'ho peus ket sikouret. »

Hag ar re-man a yelo d'an tan eternal, an dud santel d'ar vuez eternal. »

An denved a zo humbl ha reiz; ar bouc'hed, er c'hontrol, a zo dizent ha ter d'en em ganna.

Hor Zalver ne ra kaoz, da zeiz ar varn, nemet euz ar garantez dleet d'an nesa, rak an nep piou benag a viro mad ar vertuz-se, en dezo ganthi an oll vertuziou all.

Bezomp var evez, ni, keit ha m'oump beo, miomp na 'z afemp da greski niver an dud daonet.

PEVARE PENNAD

Passien ha Resurreksien hor Zalver

KENTEL 87. — Oan pask. Treid gualc'het.

Araok ar Basion, Jesus a lavaras, eur vech muioc'h d'he ebistel: « Gouzout a rit e vezo lidet gouel Pask abenn daou zervez ama, ha Mab an den a vezo guerzet evit beza staget ouz ar groaz. »

En amzer-ze, Judas, eat an diaoul ennhan, a gerzas da gaout pennou bras ar Juzevien, hag a c'houlennas digantho: « Petra a baet d'in, ha m'her roio d'eoc'h? » Int-hi a respountas: « Tregont pez arc'hant. » An emgleo a oue great kerkent.

D'an deiz kenta euz goueliou Pask, pa dllet laza an oan hag he zebri, Jezus a c'houc'hmenas da Ber ha da Ian: « It da bourchas d'eomp kement a zo red evit ar Pask. » Int-hi a c'houlennas: « Da be leac'h ez aimp? » Ha Jesus a respountas d'ezho: « En eur vont e kear, e kavoc'h eun den gant eur podad dour, hen heuil a reot en ti ma yelo, hag e lavaroc'h d'ar mestr: « Hon Aotrou a ra d'eomp goulen diganeoc'h: E pe leac'h e tebrin ar Pask gant va diskibien? Ar mestr a ziskouezo d'eoc'h eur

gampr vras, ficht kaer, hanvet ar Senakl, eno e reoc'h ar pezh a ranker. »

An daou abostol a zentas hag a gavas peb tra evel m'en doa diskleriet Jesus. Pa oue deut ar mare, Jesus a 'z eas ouz taol, hag he ebestel ganthan. Diskleria a reas d'ezho: « Mall bras am oa da zebri ar goanman ganeoc'h araok gouzany va Fasion. » Sevel a reas neuze eun tam kaoz etre an ebestel evit gouzout pehini anezho a vije bet kavet ar brasa. Setu ma lavaras d'ezho: « Rouaned ar boblou a ren anezho, met evidoc'h-hu, n'eo ket ar memez tra. Ar brasa ac'hanoc'h a dle beza evel ar biana, hag ar mestr evel an hini a zo o servicha. »

Goude beza debret an oan Pask gant he ebestel, Jesus, evit ho c'hentelia dre he skouer koulz ha dre he gomzou, a voalc'has d'ezho ho zreid. Sevel a reas dioc'h taol, diviska a reas he vantel; ha da c'houde, e viskas eul lien guen var he zillad all. Neuze e kemeras dour en eur vasin, e voalc'has treid he ebestel hini hag hini, hag ho zec'has gant al lien a oa en dro d'ezhan.

P'en em gavas dirak Simon Per, heman a lavaras d'he Vestr: « N'ho laoskin biken da voalc'hi va zreid. — A hent all, eme Jesus, n'ez pezo ket a berz ganen — Neuze, Mestr, goalc'hit n'eo ket va zreid hebken, mes va daouarn ha va fenn. — An neb a zo bet goalc'het a bez, eme Jesus, n'en deus ken ezom nemet d'ober eur peurgalc'h d'he dreid, rak neat eo oll. »

Achu ganthan gualc'hi an treid, Hor Zalver en em visklas a nevez, hag a 'z eas ouz taol en eur lavaret: « Guelet o peus ar pezh am eus great. Ober a rit ac'hanoun Mestr hag Aotrou, ha mad a rit, rak bez' ez oun, mes m'em eus gualc'het deoc'h ho treid, c'houi a dle ober kement all an eil d'egile. E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, ar zervicher n'eo

ket brasoc'h eget he vestr, nak an abostol brasoc'h eget an hini her c'has. »

Hor Zalver en doa diskleriet he Basion meur a vech dija d'he ebestel, kaer en doa diskleria, an ebestel n'her c'hredent ket.



Den na c'hello entent biken peger spountus eo peched Judas, an abostol a verzas he Vestr madelezus, a verzas Mab Doue. Diousallomp rak ar peched. Pa gas Jesus he ebestel da bourchas peb tra evit ar Pask, e verk d'ezho, sklear, n'eus netra kuzet outhan: « Kaout a reot eun den, gant he bodad dour; mont a raio en eun ti, hag ar mestr a roio d'eoc'h eur gampr vras, ficht kaer... peger sklear e verk Jesus an traou d'he ziskibien!

An ebestel, goude m'en doa Hor Zalver kemeret poan d'ober d'ezho beza humbl, a zo o klask en em zvel: pegen techet eo an den d'an ourgouill!

Jesus a voalc'h treid he ebestel: pebez humilite! Hen, Mab Doue a voalc'h treid Judas, a zo evel pa lavaret mevel eur pennad gant an traitour, rak kredi a reer e oa an daouzek abostol er Senakl pa voalc'has Jesus ho zreid. Hag an den, eur prenv douar, eun dra ken distet, a zo atao o klask en em zvel! Sant Per,

evelato, a roas eun testeni a humilite dirak Hor Zalver.

Perak en deus Jesus goalc'het treid he ebestel araok sevel sakramant an Aoter? Evit merka d'eomp, eme ar zent, peger pur, pegen neat e tle beza ar c'hristen pa 'z a da reseo ar zakramant.

KENTEL 88. — Jesus a zav Sakramant an Aoter.

Goude beza debret gant he ebestel an oan Pask, an oan hag a oa eur skeuden euz ar Zalver a dlie mervel evit silvidigez an dud, Jesus a zavas Sakramant he garantez, sakramant burzudus an Aoter.

Kemeret a reas etre he zaouarn euz ar bara a oa var an daol, bara heb goell, hag o veza savet he zaoulagad etrezek an neny, evit ober eur beden d'he Dad Oll C'halloudek, e vennigas ar bara-ze, her rannas hag her roas da zebri d'he ziskibien, en eur lavaret: « *Kemerit ha debrit euz an dra-man oll, rak an dra-man eo va c'horf.* »

Goudeze e kemas kalir ar guin, hag o veza great adarre eur beden da Zoue he Dad, her bennigas hag her roas da eva d'he ziskibien en eur lavaret: « *Kemerit hag evit euz an dra-man oll, rak an dra-man eo va goad, goad an Allians nevez, a vezo skuillet evidoc'h hag evit eleiz a dud, m'o dezo ar pardoun euz ho fec'hejou. Grit kement-man da zerc'hel sonj ac'hanoun.* »

Goude m'o devoue an ebestel resevet ar gommunion zantel, Jesus a lavaras d'ezho gant teneredigez: « Va bugaligou, n'emaoun mui nemet evit eur penadik amzer ganeoc'h. Rei a ran d'eoc'h eur gourc'hemen-nevez: en em garit an eil egile, evel m'emeus ho karet. »

« Arabat eo d'eoc'h kaout nec'hamant. Kredi a rit e Doue, kredit ive ennon. Meur a zemeurans a zo e ti va Zad, mont a ran di, ha c'houi a deuio ive. Gouzout a rit da be leac'h ez an. » An abostol sant Thomas a

lavaras neuze: « Mestr, ne ouzomp ket da be leac'h ez it, penaoz ec'h oufemp an hent? » Jesus a respountas: « Me eo an hent, ar virionez hag ar vuez. Den ma deu d'am Zad nemet dreizon. »

Peger kaer eo sakramant an Aoter? Eur myster a c'halloud hag a garantez eo. Reseo korf ha goad Mab Doue evit maga an ene: pebez burzud! Jesus a lavar: « Evit euz kalir va goad, skuillet evidoc'h hag evit eleiz a dud. » Goad Jesus a zo, e guirionez, skuillet evit an oll dud, paianed ha kristenien; c'hoant en deus savetei an oll, mes meur a hini a ra fae var Goad Hor Zalver; meur a hini en em gollo, dre ho faot, en despet d'he garantez evitho.

Peger karantezus eo komzou Jesus d'he ebestel! « Va bugaligou », emezhan. Ar c'homzou-ze a verk d'eomp karantez Hor Zalver evit ar re o deus nevez kommunit. Lavaret a ra d'ezho: « En em garit. » Betek neuze, an dud n'en em garent nemeur, rak ar baianed a zo bet atao, hag a zo breman c'hoaz digalon ha didruez. Lennit Lizeri Breuriez ar Feiz, hag e velot peger guir eo kement-se. « Kredit ennon, eme Hor Zalver, koulz ha ma kredit em Zad euz an nenv. » Perak? Abalamour Jesus a zo Mab Doue, ha Doue evel he Dad a oll viskoaz. Bez' ez eo an hent a gas an den d'an Tad; ar virionez a zo ganthan, en he Aviel, er relijion gatholik; ar vuez a deu deomp diganthan, buez ar c'horf koulz ha buez an ene, dre he c'hrasou, he zakramanchou.

KENTEL 89. — Digas a rin d'eoc'h ar Spered Santel.

« An neb piou benag am c'haro, eme Hor Zalver, a viro va ger, ha va Zad her c'haro, hag e temimp ennhan da joum. Diskleriet em eus d'eoc'h an traouze epad ma oan o choum ganeoc'h, mes ar Spered Glan, ar Spered a frealzedigez a vezo digaset d'eoc'h gant va Zad em hano, a zesko d'eoc'h peb tra, hag a zigaso da zonj d'eoc'h ouz va oll lavarou. Rei a ran

d'eoc'h va feoc'h, met n'her roan ket evel ma ves roet gant ar bed. »

Me eo ar vinien, ha va Zad a zo al labourer. Evel na c'hell ket eur skour dougen frouez nemet choum a rafe stag ouz ar c'hef, c'houi na c'hellit ober netra, nemet unanet ganen. An neb ne joumo ket a unan ganen, a vezo taolet er meaz, evel eur skour didalvez, sec'ha a raio, hag e vezo stlapet en tan, hag e tevo. Evel m'oun karet gant va Zad, evelse em eus ho karet. Kendalc'hit em c'harantez. Den ebet na c'hell kaout brasoc'h karantez eget an neb a ro he vuez evit he vignouned. »

« Pa vezo deut ar Spered a frealzedigez, e rento testeni ac'hanoun. C'houi ive, a rento testeni, abalamour m'oc'h ganen abaoe ar penn kenta. Lavaret em eus d'eoc'h an traou-se, en aon na vent eun abeg a bec'hed evidoc'h pa zigouezint. Hiskinet e viot abalamour d'in, hag an neb ho lakaio d'ar maro a zonjo d'ezhan plijout da Zoue. Distrei a rañ breman d'an Hini en deus va digaset, hag eur vad eo evidoc'h e tistrofen d'ezhan. Ma n'ez an ket kuit, ar Spered a frealzedigez ne deui ket d'eoc'h; m'hen digaso d'eoc'h, pa vezin eat kuit. Pa vezo deut, e tiskouezo fallagriez ar bed var ar pec'hed, ar justis hag ar varn. Kalz traou am eus da lavaret d'eoc'h ouspenn, mes dientent oc'h c'hoaz. Pa deui ar Spered a virionez, hen ho sklerijenno var bep tra. »

An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel a zo o choum en ene eun den hag a zo e stad a c'hras. Gras Doue a ro d'an den ar guir beoc'h, peoc'h an ene, en despet d'ar poaniou ha d'an trubuillou a c'hell koueza varnhan. Ar skour distaget dioc'h ar vezen na c'hell ket rei frouez, an ene distaget dioc'h Doue dre ar pec'hed marvel na c'hell ober netra a vad evit an eternite. Ar garantez vrasa a zo hini Jesus-Christ en deus roet he vuez evit an oll dud, mignouned hag enebourien. Arabad eo d'an

ebestel beza souezet pa vezo great brezel d'ezho, rak Jesus, ho Mestr, a zo bet lakeat d'ar maro.

Ar Spered Santel a raio rebechou d'ar bed pe a ziskouezo he fallagriez var ar pec'hed, ar justis hag ar varn, a zo eur gomz dies da entent. Ar Spered Santel a damallo ho fec'hed d'an dud n'o deus ket anavezet Hor Zalver evel Doue, dre rebechou ho c'houstians; rebech a raio d'ar Juzevien ho justis fallakr, p'o deus barnet d'ar maro Jesus, ar zantelez memez, a zo bet digemeret abalamour d'ar zantelez-se, en tu deou d'an Tad er baradoz; tamall a raio barnedigez ar bed, rak Hor Zalver, p'en deus trec'het ar maro, en deus barnet ha koundaonet an diaoul, prins ar bed-man. Jesus en deus dinerzet da viken galloud an drouk spered.

KENTEL 90. — Disparti hag unani.

Hor Zalver a lavaras ouspenn: « Eur pennadik amzer c'hoaz, ha n'am guelot mui, hag eur pennadik all goude, hag e velot ac'hanoun adarre, rak mont a ran d'am Zad. Hiniennou euz an diskibien en em c'houlenne: « Petra verk ar c'homzou-ze? » Jesus a respountas: « E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, lenva a reot ha klem, epad ma c'hoarzo ar bed. Tristidigez o pezo, met an dristidigez-se a vezo chenchet e levenez. »

« E guirionez, hel lavaret a ran d'eoc'h, ma c'houlennit eun dra benag em hano digant va Zad, hen roio d'eoc'h. Beteghen n'o peus goulennet netra em hano, goulennit hag o pezo, evit ma vezo parfet ho levenez. Deut oun euz a Zoue, ha diskennet oun er bed; breman e tilezan ar bed, hag e tistroan d'am Zad. »

Dre he varo glac'harus var ar groaz, Hor Zalver a dfe leunia kalon he ziskibien a dristidigez: etretant, pennou bras ar Juzevien a vije laouen, rak sonjal a dlient: « Breman n'hon dezo mui Jesus a Nazareth var

hon hent. » Anken an diskibien a badfe daou pe dri dervez hebken, rak Hor Zalver a dlïe sevel euz ar bez leun a vuez, ha sec'ha ho daelou. Jesus a zesk d'he ebestel ha d'an oll gristenien var ho lerc'h e tleont pedi. Nerz ar beden a dlïe kreski kalz dre varo Hor Zalver var ar Groaz, setu perak e lavar d'ezho, araok he Basion : « Pedit heb aon, pedit gant fizians, na vezo nac'het netra ouzoc'h, gant ma c'houlennoc'h em hano, da lavaret eo, gant ma c'houlennot traou mad evit hoc'h ene. »

KENTEL 91. — Peden vras Hor Zalver.

Jesus a zavas he zaoulagad varzu an nenv, hag a lavaras : « Tad, an heur a zo deut, roit gloar d'ho Mab evit ma rento gloar d'eoc'h ; ha pa 'z eo guir o peus roet d'ezhan galloud var bep den, ma roio ar vuez eternal d'ar re o peus fiziet ennhan. Ar vuez eternal a zo hoc'h anaout, c'houi, ar guir Doue n'eus nemethan, hag an hini o peus digaset, Jesus Christ. Rentet em eus gloar d'eoc'h var an douar, achuet em eus al labour o poa fiziet ennoun. Ha breman, c'houi, va Zad, rentit d'in en ho kichen ar gloar am oa ennoc'h, araok m'eo bet krouet ar bed. »

« Diskleriet em eus ho c'hano d'an dud oc'h eus roet d'in diouz a greiz ar bed ; anavezet o deus oun deut ac'hanoc'h, ha kredet o deus e peus va digaset. Evitho eo e pedan ; na bedan ket evit ar bed, mes evit ar re o peus roet d'in, abalamour ma 'z int d'eoc'h. Ho diouallit en ho c'hano, ma vezint unan evelomp. Na c'houlennan ket diganeoc'h ho zenna dioc'h ar bed, mes ho diouall d'eoc'h an drouk.

N'o pedan ket evit va diskibien hebken, mes evit ar re a gredo ennon, var ho ger d'ezho, evit ma vezint unan, evel m'emaoc'h ennon, c'houi, va Zad, ha m'emaoun ennoc'h. »

« Me a fell d'in, va Zad, e vefe ganen, ar re o peus roet d'in. »

Peden Hor Zalver a zo hir, ne roomp ama nemet eun diverra anezhi. C'hoant en doa merka he respet evit he Dad, c'hoant en doa merka sklear d'he ziskibien eo Doue evel dhan. C'hoant en doa, ouspenn, rei fizians d'ezho ha merka d'eomp e tleomp pedi gant hon oll galon goude m'hon eus resevet ar gommunion zantel. Lavaret en doa d'he ebestel, araok ar beden vras-man : « Bezit fizians, treac'h oun bet d'ar bed » ; hag epad ar beden, e tisklerias : « Va Zad, n'em eus kollet nikun euz ar re o peus roet d'in, nikun, nemet an hini a oa da veza kollet. » An den-ze a oa Judas.

KENTEL 92. — Hano euz ar Basion. Aliou da Ber.

P'en devoue Hor Zalver trugarekeat he Dad, ha pedet pell evit he ziskibien hag ar gristenien, ez eas dioc'h ar Senakl gant he ebestel. Lavaret a reas neuze d'ezho : « Kemeret a reot oll gual skouer diouzin en noz-man, rak skrivet eo : Skei a rin ar pastor, hag an derved a zispartio. Goude ma vezin savet euz a varo da veo, me a vezo en ho raok er Galilee. Simon, Simon, an diaoul en deus goulennet ho ridella evel guiniz, te ha da vignouned, met pedet em eus evit na golli ket da greden, ha te, pa vezi distroet da vad, starta da vreudeur er feiz. »

Per a respountas : « Mestr, me a zo prest da vont d'ar prizoun ha d'ar maro ganeoc'h, ha pa deufe ar re all da goueza er pec'hed abalamour d'eoc'h, evidon-me na gouezin ket. » Jesus a respountas : « E guirionez, m'hel lavar d'id, hirio, en noz-man, araok m'en dezo ar c'hillok kanet diou vech, te pezo va nac'het teir guech. » Per a gendalc'he da

zifenn: « Ha pa rankfen mervel ganeoc'h, n'ho nac'hin ket. » Ar re all a lavare evelldhan.

Eur vech muioc'h, Hor Zalver a ra menek euz he Basion, met an ebistel ne ententont ket. Diskleria a ra d'ezho e savo euz a varo da veo, evit kreski ho fizians, met ne gredont ket c'hoaz. Neuze, Hor Zalver a ro aliou da Ber. An diaoul, goude m'en doa gounezet Judas, a c'houlennas tenti an ebistel all, esper en doa ho c'holl, evel m'en doa kollet Judas. Mes Jesus a reas eur beden evit Per he unan. Per a dlle koeza hag ar re all ive, mes abalamour ma tlie beza mean diazes an Iliz, rener an oll gristenien varlerc'h Hor Zalver, Jesus a bed evithan ispisial, evit ma savo buan euz he bec'hed, ha ma zikouro ar re all da c'houde. Per hag an ebistel all, keit ha ma oant e kichen Hor Zalver, ne oant ket evit kredi e kousesfent er pec'hed.

KENTEL 93. — Jesus er Jardin Olived.

Goude m'en devoue treuzet dour Sedron, Hor Zalver a ieaz gant he ziskibien da jardin Jethsemani, e kichen menez Olived. Pa oue erruet eno, e komzas evelhen outho: « Azezit ama, c'houi, epad ma 'z in ahont larkoc'h da ober va feden. » Gouiskoude e kasas ganthan tri euz he ebistel: Per, Jakez ha Ian, ha pa oue he-unan gant an tri-ze, e lavaras d'ezho: « Va ene a zo ankeniet betek ar maro; gortozit ac'hannoun ama, ha beillit ganen ». Neuze e pelleas dioutho eun tammik, hag o veza en em strinket d'an daoulin, he benn harp en douar, e reas ar beden-man da Zoue he Dad: « Va Zad, ra 'z aio ar C'halir-ze ebion d'in, ma n'eo ket red d'in he eva; gouiskoude, ho polontez-c'houi bezet great, ha nan va hini-me ». O veza pedet evelse, e tistroas da gaout he ebistel; mes kousket oant. Ha Jesus a lavaras da Ber: « Simon, kousket out? N'ec'h euz ket gellet beilla ganen

eun heur ebken? Beillit ha pedit, gant aon na veac'h trec'het gant an dentasion. An drouk-spered a zo krenv, e leac'h an den a zo simpl. » Goudeze, ec'h en em dennas adarre a gostez da bedi, hag e lavare evel ar vech kenta: « Va Zad, ma rankan eva ar c'halir-ze, ra vezo great ho polontez! » Ha setu ma savas Jesus evit dont da gaout he ziskibien evit an eil guech, mes kousket e oant evel en dro genta: ho fenn a ioa ker pounner ma ne c'hellent ket choum



dihun. En dro-ma Hor Zalver ho lezas e peoc'h, hag a yeas da bedi evit an trede guech. Hogen, en he beden e lavare atao ar memez tra. Neuze, e koezas en angoni, ha ken tenn e teuas da veza varnhan, ma fivere euz he gorf var an douar evel eur c'houezen a c'hoad. Mes eun eal a ziskennas euz an nenv evit rei nerz d'he galon. Erfin, e teuas adarre da gaout he ziskibien, hag ho c'havas kousket a nevez. Prest goude, e lavaras d'ezho: « Savit brema ha deomp ac'han; setu deut an heur ma tle Mab an den

beza lakeat etre daouarn ar bec'herien. An hini en deus va guerzet n'ema mui pell ».

Na fall eo an ebestel da zikour ho Mestr en he an-goni spountus ! Bez' e oant o paoues ober ho Fask kenta, o paoues reseo ar grason kaera, a c'helle eun Doue rei d'ezho, hag, e leac'h he drugarekât, ec'h en em roont d'ar c'housked.

Jesus a zo guasket he ene betek ar maro, mes choum a ra beo, dre m'eo sikouret gant he Dad da herzel ouz ar boan. Peden Hor Zalver a verk e oa den penn da benn, den evel peb hini ac'hanomp : aon en doa rak ar boan. Dies e kave kaout poaniou he Basion da c'houlzanv, dies e kave gullet he ene beuzet e lousdouni oll bec'hejou an dud, rak respount a rea evit an oll dirak justis he Dad. Dies e kave gullet kalz eneou, en despet d'an oll boan a dlle divoaska evitho, oc'h en em goll, o koeza en ifern, hag e c'houlzanvas eur c'houezen a c'hoad. En hor poaniou, en hor glac'har, leveromp da Zoue gant Hor Zalver : « Ho polontez beza great, o va Doue, n'eo ket va hini eo. »

An eal a gennerras Hor Zalver ne zeskas netra d'ezhan, sklear eo kement-se, mes digas a reas da zonz d'ezhan euz bolontez he Dad.

Eur c'hristen hag a ya da goves a dle sonjal bevech : « Va fec'hejou a zo kaoz m'en deus Hor Zalver divoasket poaniou ker spountus, er Jardin Olived. »

KENTEL 94. — Jesus guerzet gant Judas.

Judas a oa bet roet d'ezhan eur vanden soudardet evit kemeret Jesus, hag e teuont var he lerc'h, klezeier, bizier ha leterniou gantho en ho daouarn. Lavaret en devoa d'ezho : « An hini ma roin eur pok d'ezhan, hennez eo ; krogit ennhan. » Pa vel eta Jesus er jardin, e tosta outhan, hag e ro d'ezhan eur pok en eur lavaret : « Salud d'eoc'h, Mestr. — Va mignoun, eme Jesus, d'ober petra oc'h-hu deut ama ? » Jesus a ya neuze abenn d'ar zoudardet

hag a c'houlenn digantho piou a glaskent. « Jesus a Nazareth, emezho. — Me eo, » a lavar Jesus. Ker-kent e konesjont d'an douar. Goulskoude Hor Zalver a c'houlennas digantho evit an eil guech : « Piou a glaskit ? » Hi o veza respountet evel ar vech kenta : « Jesus a Nazareth, » Hor Zalver a lavaras : « Deut oc'h d'am c'hemeret ama gant klezeier ha gant bizier, evel pa ve eul laer e vefen. Perak n'o peuz ket sonjet kregi ennon kentoc'h, p'e guir edon bemdez en ho touez o kelen ar bobl en templ ? Goulskoude, mar deo me eo a glaskit, list va diskibien e peoc'h. » Neuze ar zoudardet a astennas ho daouarn da gregi ennhan. O velet kement-se, he ziskibien a lavaras : « Mestr, ha ma skofemp gant ar c'hleze ? Ha ker buan Per a gemeras he gleze, hag o veza darc'hoet eun taol var Malkus, unan euz a zervicherien ar beleg bras, a trouc'has d'ezhan he skouarn zecu. Mes Hor Zalver a lavaras da Ber : « Lakit ho kleze en he feur. Ha ne c'houlzoc'h-hu ket n'emeus nemet pedi va Zad, hag e tigasao raktal d'am zikour kement ha ma kirin a elez. Mes penaoz e teufe neuze da vir ar pez a zo merket er Skritur Zakr divar va fenn ? Ha ne dleanme ket eva ar c'halir en deus roet Va Zad d'in da eva ? O veza komzet evelse, Hor Zalver a bareas he skouarn da Valkus en eur douch outhi hebken : ha goudeze, ec'h en em lakeas etre daouarn ar zoudardet. Var gement se, he ziskibien a gemeras oll an teac'h. Evelato, Per ha Ian a heulias ho Mestr a zia-bell.

N'eus nemet eun den-Doue hag a c'helfe rei d'eomp ar skouer a bardoun hag a vadelez a gavomp er gentelman. Jesus o pokat da Judas, an den fallakr guerzet d'an diaoul ! Jesus o rei graso bras d'ezhan gant ar pok-se, ha Judas oc'h ober fae varnho ! Dionalloomp na zisprijfemp graso Doue !

Gant eur ger, Jesus a bil an oll dud fall a zo dirazhan : an Oll C'halloudek eo. Na fell ket d'ezhan en em zifen, miret a ra na rafe drouk he ebestel, rak c'hoant en deus mervel evit silvidigez an dud.

Ober a ra eur burzud evit rapari an drouk a zo bet great gant sant Per, mes he enebourien n'eo ket tenerreat an distera ho c'haloun evit kement-se.

KENTEL 95. — Jesus barnet gant ar Juzevien.

An toullad tud fall, souarded ha mevelien ar pennou bras, a amarras douarn Jesus, hag her bountas dirazho betek kear. Kaset e oue da genta da di Annas, tad kaer ar beleg bras, Kaiphas. Heman a c'houlennas kalz traou digant Hor Zalver divarbenn he ziskibien hag he gelennadurez. Jesus a respountas : « Komzet em eus atao dirak an oll. Perak e rit goulennoù d'in? Goulennit digant ar re o deus va c'hlevet. » Unan euz ar mevelien a oa eno a zistagas kerkent eur javedad gant Hor Zalver : « Daoust hag evelse, emezhan, eo e respountes d'ar beleg bras? — M'em eus komzet fall, eme Jesus, diskouezit d'in va mank; mes m'en eus respountet mad, perak va skei? »

Euz ti Annas, Jesus a oue kaset da di ar beleg bras, rak eno eo e oue bodet an doktored, pennou bras ar Juzevien, ha tud al lez-varn. Beleben al Lezen goz a glaske eun testeni evit lakât Jesus d'ar maro, ha n'her c'havent ket, rak an teston en em zislavare. Ar beleg bras, Kaiphas, a zavas neuze e kreiz an oll, evit lavaret : « Ne respountes netra? » Mes Hor Zalver a joume sioul. Neuze, Kaiphas a c'houlennas : « Ha bez' ez out ar C'hrist, Mab an Doue benniget? » Jesus a respountas : « Ia, bez ez oun. Ha guelel a reot Mab an den azezet en tu diou d'an oll C'halloudek, o tisken var goabrennoù an nenv. » Ar beleg bras a rogas kerkent he zillad, en eur ziskle-

ria : « N'eus mui ezom a destou, rak klevet o peus ar blasphem. Petra sonjit? » Hag an oll a respountas : « Meritout a ra ar maro. » Jesus a oue neuze lakeat etre daouarn eun toullad kos mevelien.

Jesus a zo skoet gant eun den fall heb an disterra guir, mes ne ra drouk ebet d'an neb a sko ganthan. Pebez pasianted !

E ti Gaiphas, ar beleg bras en doa bodet ar varnerien a c'helle kastiza pe bardouni Jesus a Nazareth. Ar varnerien-ze, leun a gasouni, ne glaskent nemet eun dra : koll Hor Zalver, he varn d'ar maro, hag evit-se, e c'houlennont falz testou. Mes an teston en em drouc'he. Neuze Kaiphas a c'houlenn digant Jesus eun testeni eun, sklear : « Ar C'hrist oc'h? » Jesus a respount ia. Dever ar varnerien a oa neuze guelel ha guir en doa Jesus da gemeret an hano-ze, ha pa 'z eo guir Jesus a rea burzudou bras, he loskel da vont kuit didammall. Met ar varnerien, e leac'h klask ar virionez, o doa c'hoant lakât Jesus d'ar maro.

KENTEL 96. — Per a nac'h Jesus. Eil barnedigez.

Barnet d'ar maro gant ar vistri, Jesus a oue roet da zioqall, hed an noz, d'ar mevelien ha d'ar zoudarded. Pebez nosvez spountus evit Hor Zalver benniget! Lod a vount anezhan, lod all a zistag ganthan javedadou; hiniennou a granç ouz he vizaj sakr, a vouch he zaoulagad, hag a sko ganthan en eur c'houlenn : « Lavar d'eomp, Christ, prophet, piou en deus da skoel! »

Etretant, Per a nac'he he vestr. Heuillet en doa Jesus, eat e oa var he lerc'h e pors ar beleg bras, eno ar mevelien o doa c'houezet tan, ha Per a yeas da domma en ho zouez, rak yen e oa an amzer. Unan euz plac'hed ar beleg bras a zellas ouz Per, hag a lavaras d'ezhan : « Te oa gant an Nazarean,

te! » Per a nac'has, en eur respount: « Ne enten-tan ket ar pezh a leveres. » Ar c'hillok a ganas.

Ar plac'h a damallas Per a nevez, mes an abos-tol, en dro-man, a douas var he le ne anaveze ket an den-ze.

Eur pennad divezatoc'h, ar re a oa eno a lava-ras da Ber: « Te a oa ganthan, rak te a zo, dioc'h da gaoz, euz ar Galilee. » Per a nac'has, eun trede guech, en eur doui hag en eur laoskel malloziou, ha kerkent, ar c'hillok a ganas eun eil guech.

Per a deuas da zonz d'ezhan, pa glevas ar c'hil-lok, euz komzou Hor Zalver. D'ar mare-ze, eme eun Aveliér, Jesus a reas eur zell var Ber, hag heman a yeas er meaz, eur ar pors, en eur lenva dourek.

Na ker oump bet prenet ! An dud fall, en nosvez-se, a voallgasas Hor Zalver, o klask gouzout piau a rafe ar goasa d'ezhan.

Epad an amzer-ze, Per, ar c'henta euz an ebestel, a roe rann galon d'Hor Zalver. Kaout a rea d'ezhan e oa krenv, mes n'en doa ket pedet er Jardin, eat e oa heb ezom e kreiz enebourien Jesus, setu neuze, eur plac'h diste a zo aoualc'h evit ober d'ezhan nac'h he Zoue. « N'hen anavezan ket ! » emezhan. Hag e tou var he le ! Hag e pec'h ! Paour keaz Per, pegen diste eo an den pa jour gant he nerz he unan !

Perak en deus permittet an Aotrou Doue e vije koue-zet Per ? Abalamour d'ezhan da gaout muioc'h a druez ouz ar re all pa deufent da goueza d'ho zro. Skouer sant Per, eur pec'her ker bras, a ra d'ar veleien kaout muioc'h a druez ouz ar bec'herien, er gador goves.

**KENTEL 97. — Ar guzulierien vras. Judas.
Pons Pilat.**

Pa c'houlouas an deiz, Jesus a oue kaset a nevez dirak ar beleg bras, rak eno e oa bodet ar guzule-rien a varne ar Jusevien en afferiou bras. Kaiphas

a c'houlennas: « Mab Doue oc'h eta? — Ia, eme Jesus, bez' ez oun ». Hag an oll a zougas ar zetans: « Din eo euz ar maro. »

Met ar Juzevien n'o doa mui ar guir da lakât eun den d'ar maro, ar galloud-se a oa neuze etre daouarn ar Romened, setu ma kasjont Jesus dirak Pons Pilat, ar gouarnier romen. Etretant, Judas, sa-vet spount en he galon, a yeas da gaout ar veleien d'an Templ: « Pec'het em eus, emezhan, o verza goad eun den santel » hag ez eas d'en em grouga, goude beza taolet he arc'hant var leur an Templ. P'en em gavas Jesus dirak Pons Pilat, heman a c'houlennas digant ar Juzevien: « Petra rebechif d'an den-ze? — Eun den fall eo, emezho, diskleria a ra eo roue. — Barnit anezhan, c'houi, eme Bilat. — Ni, emezho, n'hon eus guir ebet da lakât den d'ar maro. »

Pons Pilat a c'houlennas neuze digant Jesus: « Daoust ha roue out ?

— N'oun ket eur roue evel ar rouaned all, eme Jesus, anez, va zud o defe va difennet. » Pilat a jeas neuze da gaout ar pennou bras: « Ne gavan abeg ebet en den-man, » emezhan. Mes ar Juzevien a youc'has: « An den-ze a laka freuz er vro, difen a ra paea an taillou da Zesar, touellet en deus ar bobl, azalek ar Galilee betek ama. » Pa glevas Pons Pilat menek euz ar Galilee, e kasas Jesus dirak Herodes, roue ar Galilee, a oa evit ar goueliou e Jerusalem.

Eur zetans douget en noz n'e doa talvoudegez ebet, en amzer Hor Zalver, setu perak Kaiphas a vod ar var-nerien kerkent ha goulou deiz.

Judas, trubuilhet o velet Jesus koundaonet d'ar maro, a yeas d'en em grouga: n'en doa ket eur guir gontrision, rak n'en doa ket a fizians e trugarez an Aotrou Doue, an dizesper a rene en he galon.

Pons Pilat gouarnar ar Judee en hano ar Romened, a oa desket bras var lezennou he vro, met ne oa ket eun den a zevel : aonik e oa. Setu perak, pa glevas e oa Jesus euz bro ar Galilee, e kasas buan anezhan dirak Herodes : n'en doa ket a c'hoant barn Jesus a Nazareth. Peger gaouiad eo ar Juzevien pa ziskleriont e tifen Jesus paea an taillon ! Ar c'hountrol heo en doa lavaret.

KENTEL 98. — Herodes ha Pilat. Jesus ha Barrabas.

Ar roue Herodes a oue laouen bras pa velas Jesus, rak sonj en doa e raje eur burzud benag dirazhan. Ober a reas kalz goulennou d'Hor Zalver, mes ne resevas respount ebet diganthan. Ar roue neuze, ha tud he lez a reas goap euz Jesus. Goude beza guisket Hor Zalver gant eur zae ven, dre zisprijans, Herodes her c'hasas en dro dirak Pilat, ha divar neuze, heman hag hen a oue mignouned : betek neuze, e oa bet yenien etrezho.

Pa velas Jesus en distro, Pilat a lavaras d'ar Juzevien : « Digaset o peus dirazon an den-man, tamallet ganeoc'h da veza touellet ar bobl, mes n'em eus kavet abeg ebet ennhan, nak Herodes ken nebeut. He gastiza a rin eta, ha da c'houde, m'hen dichadenno ».

Evit klask miret n'en defe eur zetans a varo da zougen eneb Jesus, ar barner romen a deuas da zonz d'ezhan e roe he frankiz bep bloaz d'eur prizounier benag, evit gouel Pask. Bez' en doa neuze er prizoun eun torfetour brudet, Barrabas he hano. Setu ma c'houlennas digant ar Juzevien, en esper savetei Jesus a Nazareth : « Pehini anezho ho daou a zichadennin, Jesus pe Varrabas ? »

— Barrabas ! » eme ar bobl. — Petra rin neuze euz ar C'hrist ? — Stagit-hen ouz ar groaz ! emez-

ho — Mes pe zrouk en deus great ? — Ouz ar groaz ! » emezho krenvoc'h c'hoaz.

Jesus na respountas netra da Herodes : ne oa ket diskenet euz an nenv var an douar evit ober plijadur d'eun den hag a roe skouer fall. Pilat a ouie ervad n'en doa Jesus a Nazareth great torfed ebet ; hen barner, pa 'z eo guir en doa galloud, a dlíe hé zavetei, setu perak e sonjas : « Ma lakan Jesus e kem gant Barrabas, eur muntre, ar bobl a zavo gant Jesus, madoberour an dud dister. Ar pennoù bras, en ho guarizi, a vage kasouni ar maro ouz Jesus, a c'houezas ar gasouni-ze e kalon an dud, hag a reas goulenn ma vije saveteat Barrabas. Pebez fallagriez ! Ar zantelez a zo lakeat e kem gant ar pec'hed, hag ar bobl en em zav eneb ar zantelez, eneb Mab Done ! Pebez dallentie ! »

KENTEL 99. — Jesus skourjezet. Kurunen spern.
Ecce homo !



Pilat a reas eta skourjeza Jesus. Pa oue achu, ar zoudardet a viskas Har Zalver gant eur vantel ruz-mouk, a reas eur gurunen gant spern, hag he mous-

tras var he benn, epad ma lakeant eur benduen en he zourn deou, ha ma plegent eur c'hlin dirazhan, en eur lavaret : « Salud, roue ar Juzevien ! » Hag e kranchent outhan, epad ma skoent varnhan gant ar benduen.

Pa oue skuiz ar zoudarded oc'h ober judazêrez, Pilat a reas digas Hor Zalver dirak ar Juzevien, hag a zisklerias d'ezho : « Setu aze an den ! » Ar pen-nou bras hag ar mevelien a youc'has : « Stagit-hen ouz ar Groaz ! — Me, eme Bilat, ne gavan torfet ebet da rebech d'ezhan. — Ni hon eus eul lezen, eme ar Juzevien, hag hervez al lezen-ze e tle mervel, rak c'hoant en deus beza kemeret evit Mah Doue ».

Jesus en deus gouzanvet beza skourjezet ; c'hoant en doa paea an oll boan dleet d'ar pec'hejou kountrol d'ar burete.

Rouaned an douar o deus kurunennou aour, Jesus, dindan he gurunen spern a lavar d'eomp ober fae var ar bed hag he henoriou faoz. Pa oue digaset, da c'houde, Hor Zalver dirak ar Juzevien, e oa eun druez he velet, mes ho c'halon ne oue ket tenerreat : peur e skuillimp-ni daelou, o velet Jesus merzeriet evidomp ?

KENTEL 100. — Jesus barnet d'ar maro.

Ar barnet a c'houlennas, en dro-man, digant Jesus : « Euz a beleac'h out ? » mes Hor Zalver ne respountas grik. Pilat a zisklerias neuze : « Ne respountes netra ? Daoust ha ne ouzot ket ema em galloud da renta libr pe d'az staga ouz ar Groaz ? » Jesus a respountas : « N'o pefe galloud ebet var-noun panevede m'eo bet roet d'eoc'h euz an nenv : an hini en deus va lakeat etre ho taouarn en deus brasoc'h pec'hed ». Pilat n'en doa ket a c'hoant barn Jesus d'ar maro, met ar Juzevien a youc'has :

« Ma leskit anezhan libr, n'oc'h ket mignoun Sezar ». Pilat a lavaras c'hoaz : « Setu ho roue ! — Ouz ar Groaz ! emezho, ouz ar Groaz ! — Penaoz, eme Bilat, ho roue a stagin ouz ar Groaz ? — N'hon eus ken roue, nemet Sezar, » emezho.

Neuze Pilat, o velet ne c'hounenze netra, hag e save ar youc'hadennoù krenvoc'h c'hoaz, a reas digas dour, hag a voalc'has he zaouarn dirak ar bobl, en eur lavaret : « Me a zo divlam euz goad an den just-se. — « Ra gouezo he c'hoad varnomp ha var hor bugale ! » eme ar Juzevien.

Neuze Pilat a zougans ar zetans a vâro.

Pilat a voalc'has he zaouarn, mes an dour-ze n'en deus ket gualc'het he ene. Ni, daoust ha ne bec'homp ket, evel dan, dre zempladurez ?

KENTEL 101. — Jesus o tougen he Groaz. Staget ouz ar Groaz.



Jesus a rankas dougen ar Groaz ma tle mervel varnhi. Eun den, Simon ar Syreneen he hanô, a

zistroe euz he bark, great e oue d'ezhan sikour Hor Zalver. Kalz tud a deue da heul, ar merc'hed a ouele, mes Jesus a lavaras d'ezho : « Na lenvit ket varnoun, lenvit kentoc'h varnoc'h ha var ho-pugale ».

Pa oue savet var ar menez, e oue roet d'Hor Zalver eur banne guin da eva, guin hag a oa ennhan myrrh ha vestl. Da c'houde e oue staget ouz ar Groaz etre daou laer : kresdeiz e oa neuze. Var ar Groaz e oa skrivet : Jesus a Nazareth, roue ar Juzevien. Hor Zalver, savet etre an nenv hag an douar, a lavaras he gomz kenta : « Va Zad, pardounit d'ezho, rak ne ouzont ket petra reont ». Neuze ar pevar zoudard a rannas etrezho guiskamanchou Jesus hag a dennas d'ar blouzen verr he zae hag a oa eur peñ dillad heb gri.

Ar Juzerien avius a deue e kichen ar Groaz da c'hoapât Jesus, ha da lavaret : « Saveteat en deus ar re all, ha ne c'heil ket en em zavetei he unan ». mes Hor Zalver na respounte ger.

Ar Juzevien a c'houlennas ma konesfe varnho goad Jesus : selaouet int bet gant Doue.

Ar zoudardet a reas da Zimon sikour Jesus da zougen he Groaz, rak ar pennou bras o doa aon na vije marvet en hent. Hor Zalver a oa eat ker skuiz, kear feaz gant ar goad en doa kollet, ma kuezas meur a vech, eme ar zent, var hent ar C'halvar. A veac'h m'eo savet ar Groaz, m'en deus mall Hor Zalver da c'houlenn pardoun evit he vourrevien, « hag evit an holl bec'herien », eme zant Augustin. Ia, Salver benniget, pardounit d'ezho ha d'eomp-ni !

KENTEL 102. — Hor Zalver ouz ar Groaz. He varo.

Epad ma c'hoapea ar pennou bras, unan euz an daou laer a flipate ive Hor Zalver. Al laer deou, evelato, a reas rebechou d'ezhan : « Ni, emezhan,

a zo kastizet evit hor pec'hejou, mes hen n'en deus great neb drouk. Ho pet sonj, Aotrou, emezhan da Jesus, sonj ac'hanoun pa viot en ho rouantelez. — E guirionez, eme Hor Zalver, hirio e vezi ganen er baradoz ».

« Eürusa laer, eme zant Augustin, p'en deus laeret ar baradoz ! »

Jesus a reas neuze eur zell var he vam, en he zav e kichen ar Groaz, gant sant Ian, an abostol muia karet, hag a lavaras d'he vam : « Setu aze ho Mab », ha d'an abostol : « Setu da vam ». Divar neuze, an Abostol a gemeras ar Verc'hez en he di.

Euz a gresdeiz da deir heur, an denvalijen a c'holoas ar bed. Hor Zalver a lavaras neuze : « Va Zad, perak o peus-hu va dilezet? »

Prest goude e tisklerias : « Sec'hed am eus ». Eur zoudard a zoubas eun tam spouen er guinegr, hag her roas e beg eur gorzen d'Hor Zalver, hen a lavaras neuze : « Achu eo ! ».

Lavaret a reas da ziveza he zeizved komz, gant eur vouez krenv : « Va Zad, etre ho taouarn me a laka va spered ». Var ar c'homzou-ze, e plegas he benn, hag e tremenas.

Neuze, goel an Templ a oue roget e daou, azalek an eac'h betek an traon, an douar a grenas, ar reier a fraillas, ar beziou a zigoras, ha meur a gorf santel a oue gulet e buez. Mestr ar zoudardet, o velet ar burzudou-ze, a zisklerias : « E guirionez, he-man a oa Mab Doue ! » Hag ar re a oa eno a zistroas d'ar gear, en eur skei var boull ho c'halon.

Peger mad eo Jesus ! Goulennet en doa digant he Dad pardon evit ar bec'herien, ha rei a ra dioc'htu ar pardon-ze d'al laer deou.

Gant truez-ouz he Vam zantel, Jesus her ro evit Mam da zant Ian, ha d'eomp oll er memez amzer. Bezomp fizians ennhu.

Evit konsoli an eneou santel, hag a joum, heb saour en ho fedennou, en ho c'hommunionou, Jesus a lavar d'ezho : « Me, ive, em eus bet da c'houzanv sec'hor em ene, pa oan o rei va goad evit silvidigez an dud. Bezit fizians-en despet d'ar zec'hor-ze, meritet em eus d'eoc'h nerz da drec'hi an drouk-spered. »

« Sec'hed am eus. » Ia, Hor Zalver en doa kollet he c'hoad, setu m'en doa sec'hed, mes he zec'hed bras a oa gounit eneou ar bec'herien. « Achu eo », da lavaret eo, great en doa penn da benn bolontez he Dad, deut e oa da vir, dreizhan, kement a oa bet diskleriet gant ar bropheted divar he benn.

Komz diveza Hor Zalver a zo eur ger a fizians, da c'houde, e pleg he benn : prenet en deus an oll dud.

An dud a zisken divar ar C'halvar, o skei gant keuz var boull ho c'halon ; daoust ha glac'haret oump pa zellomp ouz Kroaz Hor Zalver ?

KENTEL 103. — Korf Jesus lakeat er bez

Hor Zalver a oa bet lakeat d'ar maro d'ar guener d'abardaez. Hogen, ar zadorn-Fask a oa eun dervez bras evit ar Juzevien. Evit ne jomche ket eta korfou ar re a oa bet koundaonet d'ar maro a istribill euz ar groaz abenn an deiz-se, ar zoudardet a beur-gasas an daou laer en eur derri d'ezho ho divesker. Evit Hor Zalver, pa veljont e oa tremenet, ne skoijont taol ebet var he zivesker ; mes unan anezho a zigoraz d'ezhan he gostez gant eun taol lans, ha kerkent e tiredaz ac'hano dour ha goad.

Dioc'h an abardaez, Joseph a Arimathii, unan euz a ziskibien Jesus, hag unan ive euz a bennou bras Jerusalem, (gant aoun rak Juzevien n'en doa ket anzavet betek neuze edo diskibl Jesus), a deuas da c'houlen korf Jesus digant Pilat, hag ar gouarnner hen roas d'ezhan. Joseph a yeas neuze, eun all, hanvet Nikodem, hag hen, da zistaga korf Jesus dioc'h ar groaz. An daou-ze en em zikouras da

skuill louzou a c'houez vad var ar c'horf sakr, ha d'he liena gant eul linser ven ; ha goudeze, e lakejont anezhan en eur bez nevez a oa e liorz Joseph, hag a oa bet toullet en eur roc'h. Lakât a rejont, ouspenn, eur mean bras da stanka var ar bez.

Ar gragez santel, da lavaret eo ar Verc'hez, Mari Madalen, Marie Salome hag eun nebeudik re all a zikouras Joseph a Arimathii, Nikodem ha sant Ian, an abostol muia karet, da renta an henoriou diveza da gorf Hor Zalver.

Gant pebez tENEREDIGEZ e pokas ar Verc'hez da c'houliou sakr he Mab Doue !

Pa oue lakat ar c'horf santel er bez, ar Pharianed ha prinsed ar veleien a yeas da gaour Pilat : « Aotrou, emezho, ar gaouiad-se en deus diskleriet, pa oa c'hoaz beo : « A benn tri dervez, me a zavo euz a varo da veo. Lakit eta goardou da ziouall ar bez, gant aon na deufe he ziskibien da laeres ar c'horf ha da droumpla an dud ». Pilat a respountas : « Goardou o peus, lakit anezho e kichen ar bez ». Ar Juzevien a yeas eta betek ar C'halvar evit lakât ar ziel var ar mean bras a stanke ar bez, hag a gasas goardou d'he ziouall.

Ar zent a lavar d'eomp : « Kerkent ha m'eo maro Jesus, Nikodem a zo deut da veza hardis ha dispount. Goad Hor Zalver a roe nerz.

An ebistel o doa kollet kalon o velet maro Hor Zalver, n'o doa sonj ebet euz ar c'homzou en doa lavaret : Me a zavo euz ar bez, abenn tri dervez. Ar re fall, hi, a zalc'he sonj, hag a lakeas goardou e kichen ar bez : « Evelse, emezho, den ebet na gredo tostât ouz ar bez, na laerez ar c'horf. Pa vezo deut an trede dervez, ni a c'halyo an dud d'ar bez : « Deuit 'ta, sellit ouz ar c'horf a zo aze, guelit peger gaouiad eo Jesus ! »

KENTEL 104. — Jesus a zav euz a varo da veo.

Korf Jesus a oa lakeat er bez d'ar guener d'abardaez. D'ar zul vintin, an douar a grenas, hag Hor Zalver a zavas euz ar bez leun a vuez. Eun eal a oa diskennet euz an nenv evit lamet ar mean a stanke ar bez, ha goudeze, e oa azezet var c'horre ar mean. O velet an eal-ze, a oa guen evel an enc'h, ha skeduz evel eul luc'heden, ar goardou a oue spountet ha strafuillet-oll; koueza a rejont a stok ho c'horf d'an douar evel tud hanter-varo gant ho enkrez, ha goudeze, e tec'hjont kuit kenta ma c'heljont. Goulskoude, Mari-Madelen, Mari, mam Jakez, ha Salome a deuaz ive en deize-se d'ar bez, kerkent ha sav-heol, evit skuill louzou a c'houez-vad var gorf Hor Zalver. Hag hi a lavare etrezho en eur zont gant an hent: « Piou a zavo d'eomp ar mean a zo o stanka ar bez? » Hogen, pa errujont, e veljont ar mean lamet euz he blas, hag ar bez goullou. O velet kement-se, Mari-Madalen a ieas dioc'htu en dro da gas ar c'helou d'an ebestel. Ar gragez all a jomas eno; mes, o veza guelet an eal, e kemerjont kement a aon ma ne gredent ket sevel ho daoulagad dioc'h an douar. Mes an eal a lavaras d'ezho: « N'o pezet aon ebet. Me oar e klaskit Jesus a Nazareth; mes perag klask etouez ar re varo an hini a zo leun o vuez? Savet eo euz ar bez; n'ema mui ama; setu al leac'h n'eo ket lakeat he gorf. It buan da lavaret d'he ziskibien, ha dreist oll, da Ber, eo savet euz a varo da veo, hag e vezo en ho raok er Galilee; eno e c'helloc'h he velet, evel m'en deus he-unan diskleriet d'eoc'h. » Prestik goude m'oa eat ar gragez-se kuit, ec'h en er gavas ive an daou Abostol Per ha Ian: Mari-Madalen e doa diskleriet d'ezho n'edo mui korf Jesus er bez. Dont a rejont eta ho daou betek ar bez, mes ne gavchont ennhan nemet ar pezh

a oa bet, o liena ar c'horf santel, ha var gement-se ez ejont raktal en dro d'ar gear.

Jesus, Mab Doue, a zavas euz ar bez dre he c'halloud he unan, heb loc'h ar mean a stanke ar bez. Kenta a reas Hor Zalver, hervez lavar an doktored, a oue mont da velet he Vam benniget, mes an Aviel ne ra kaoz ebet



euz a gement-se. Ar gragez santel n'o doa ket gelllet entent ouz korf sakr Jesus evel ma oa dleet, d'ar guener, setu ma teujont abred d'ar bez, pa darzas sklerijen an deiz sul.

An Iliz santel a zo laouen da genver an deiz-man, deiz Pask, ar c'haera euz gouelioù ar bloaz evithi, ni bezomp laouen ganthi, rak pa 'z eo guir Jesus a zo resussitet, ni a resussito ive eun deiz.

KENTEL 105. — Jesus en em ziskoues da Vari Madalen.

Mari Madalen a oa distroet da gichen ar bez, hag a joume en dianveaz, pa velas daou eal, guisket e

guen, azezet e kichen al leac'h ma oa bet lakeat korf Jesus, unan e pep penn. Int-hi a c'houlennas : « Merc'h, perak e ouelit-hu? » Mari a respountas : « Laeret o deus korf va Mestr, ha n'ouzon ket e pe leac'h o deus hen lakeat. »

Goude ar c'homzou-ze, Mari Madalen a reas eun dro varnhi he unan, hag a velas dirazhi Jesus en he zav, met n'heir anavezaz ket. Jesus a c'houlennas diganthi : « Perak e ouelit? » Hi, o sonjal e oa ar jardiner dirazhi, a zisklerias d'ezhan : « Aotrou, mar deo c'houi eo o peus he gaset ganeoc'h, livirit d'in e pe leac'h eman, ha me her c'hemero. » Jesus a respountas d'ezhi : « Mari! » Hi, o sellet outhan, a respountas : « Rabboni; da lavaret eo: Mestr. » Hor Zalver a lavaras neuze : « Arabat eo d'eoc'h touch ouzin, rak n'oun ket pignet c'hoas da gaout va Zad. It da gaout va breudeur, ha diskleriet d'ezho ez an da gaout va Zad hag ho Tad, va Doue hag ho Toue. » Mari Madalen a yeas kerkenet da ziskleria kement-se d'an diskibien.

Jesus en em ziskouezas ive d'ar gragez all, Mari, mam sant Jakez ha Salome, hag a zisklerias d'ezho : « It da lavaret d'am breudeur mont d'ar Galilee, eno e velint ac'hanon. » Ar gragez santel a velas an unnek abostol, mes ar re-man n'ho c'hredjont ket var ho ger.

Pa yeas ar goardou da ziskleria d'ar Pharisianed e oant ket spountet gant eun eal hag en doa pilet ar mean bez, ar re-man a roas arc'hant d'ar zoudarded, gant an urz-man : Lavaret a reot eo deit an ebestel da laeres ar c'horf epad ma oac'h kousket. » Ar goardou a gemeras an arc'hant, hag a zentas ouz ar Juzevien.

Doue a gar ar pec'her, p'en deus guir geuz d'he zizursiou, rak Mari Madalen, ar bec'herez vrudet, a velas Hor Zalver araok an ebestel. C'hoant e doa, mechans,

pokat d'he dreid sakr, mes Jesus a lavaras d'ezhi : « N'eo ket em c'hichen eo d'eoc'h choum, it buan da gas kelou mad va resurreksion d'am breudeur, rak amzer o peus d'am gullet c'hoaz araok ma 'z in da gaout va Zad. »

Hor Zalver en doa diskleriet, meur a vech, d'he ebestel, e rankfe mervel hag e savje euz a varo da veo, mes goude he varo zoken, an ebestel ne gredent ket, ha ne ententent ket. E leac'h an zav ar virionez, ar Juzevien hag ar goardou a livas gevier divar benn resurreksion Hor Zalver : « An ebestel o deus laeret ar c'horf epad ma oamp kousket ! » — Mar doac'h kousket, eme zant Augustin, penaoz ho peuz guezet ? Ha mar ho peus gullet laeres ar c'horf, perak n'ho peus ket miret ? »

Ni, goulennomp digant Doue kreski hor feiz.

KENTEL 106. — **Hor Zalver ha daou ziskibl Emmaüs.**

D'ar zul Fask, dioc'h an abardaez, daou ziskibl a yea da Emmaüs, eur bourk hag a zo diou leo benag dioc'h Jerusalem. En eur vont gant ho hent, an daou-ze a zivize etrezho divar benn Hor Zalver. Ha setu Jesus he-unan oc'h en em ziskoues en ho c'hichen evel eun den hag en doa da vale dre ar memez hent gantho. Mes hi n'hen anavesjont ket. Neuze Hor Zalver a c'houlennas digantho : « Euz a betra e komzit evelse ho taou, ha perak eo ken tenval-ze ho penn? » Hag unan anezho, he hano Kleophas, a respountas : « C'houi n'oc'h ket eta euz a Jerusalem, ma ne ouzoc'h ket petra zo c'hoarvezet eno en deiziou-man? » Var gement-se, an daou ziskibl en em lakeas da gounta o devoa kredet e oa Jesus a Nazareth ar Messias, abalamour d'an traou kaer ha burzuduz a rea. « Mes, emezho, prinset ar veleien ha pennou bras kear o deuz lakeat he goundaouni d'ar maro, ha setu hirio an trede deiz abaoe m'ema he gorf er bez. » Neuze Hor Zalver

guen, azezet e kichen al l Jesus a lavaras d'ezhi: Jesus, unan e pep peñs e propheted! « Merc'h, perak e ouest ar poa- « Laeret o deus korf leac'h o deus hen leor

Goude ar c'hom dro varnhi he ur a vech, d'he ebesez he zav, met n'he nas diganthe: ar jardiner d'ar mar deo c'hoarvezet, ar Juezien d'in e pe a respour a respour Hor Ze touch'kibi ez Tiibl

re daou, her c'hinnigas da eabl. Kerkent daoulagad ar re e c'hanavesjont ho mestr: mes veljont mui Hor Zalver. a rejont neuze an eil d'egile: « Daoust oa ket tom bero hor c'halon en hor c'hreiz, ma tislepe d'eomp ar Skritur Zakr, hed an hent? » Sevel a rejont prim, ha mont a rejont da Jerusalem; eno an ebestel a lavaras d'ezho: « Hor Mestr a zo savet euz a varo da veo, hag a zo en em ziskouezet da Zimon. » Int-hi a zisklerias neuze, d'ho zro, kement a oa c'hoarvezet gantho: « Hen anavezet hon eus, emezho, p'en deus rannet ar bara d'eomp. »

Pa lennomp komzou Doue, er Skritur Zantel, daoust ha toma a ra hor c'halon en hor c'hreiz? Goulennomp digant Hor Zalver benniget kreski hor feiz hag hor c'harantez.

KENTEL 107. — Hor Zalver en em ziskoues d'he Ebestel

Epad m'edo an ebestel hag an diskibien o tiviz gant daou ziskibl Emmaüs divarbenn Hor Zalver, klozet mad an dorjou varnho, setu Jesus he-unan ec'h en em ziskoues dirazho en eur lavaret: « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h! » An ebestel a oue strafuillet ha spountet-oll en eur velet ho Mestr; rak kredi a'reant e oa eur spered eo a oa dirazho Neuze Jesus a gomzas outho evelhen: « Rak petra oc'h eus c'houi aon, ha perak e lezit-hu ar zonjouze da c'hounit ho kaloun? Sellit ouz va daouarn hag ouz va zreid, me va unan eo; touchit ouzin hag e velot piou oun: eur spered n'en deus na kig nak eskern evel ha velit am eus-me. » Hag, o veza komzet d'ezho evelse, e tiskouezas d'ezho he zaouarn hag he dreid. Goudeze, e c'houlennas digantho: « Bez' o peus eun dra benag ama da zibri? » An ebestel a ginnigas d'ezham eun tam pesk poaz hag eun nebeudik mel; ha Jesus ho debras dirazho.

Neuze e lavaras: « Diskleriet em oa d'eoc'h ar pez a dlle c'hoarvezout, pa oan c'hoaz ganeoc'h; ia, red e oa e teufe da vir kement a zo diskleriet diwar va fenn e Lezen Moysez, er Bropheted hag ar Psalmon.

Neuze e tigoras ho spered, evit m'o dije entenet ar Skritur Zakr. Goudeze, e lavaras c'hoaz:

« Skrivet e oa, ar C'hrist a dlle divoaska poan, ha sevel en trede deiz euz a douez ar re varo. Ar binijen ha pardoun ar pec'hejou a dle beza prezeget en he hano d'an oll boblou, mes e Jerusalem da genta. C'houi a zo testou euz ar pez a zo c'hoarvezet. Me a zigaso d'eoc'h an Hini a zo bet promettet d'eoc'h gant va Zad, evelato, choumit e Jerusalem

betek ma viot guisket euz nerz an nenv. Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h ! Evel m'oun bet digaset gant va Zad, evelse me ho kas breman. Da c'houde, e c'houezas varnho, en eur lavaret : « Resevit ar Spered Santel ! Ar pechejou a vezo pardounet d'ar re m'ho fardounoc'h, na vezint ket pardounet d'ar re n'ho fardounoc'h ket. »

Sant Thomas n'edo ket gant an ebestel all, pa oa en em ziskouezet Hor Zalver d'ezho. Pa ziskle-rias eta ar re-man o doa guelet ho Mestr, Thomas ne fellas ket d'ezhan kredi. « Ne gredin ket, emezan, ken n'am bezo guelet merk an tachou en he zaouarn, ha lakeat va biz e toullou an tachou, ha va dorn e goul he gostez. » Hogen, eiz dez goude, an diskibien a oa adarre asamblet, ha Thomas gantho. Evel er vech all, an dorojou a oa sarret-kloz var al leac'h m'edont. Ha setu Jesus oc'h en em ziskoues adarre en ho zouez, hag o lavaret d'ezho : « Ar peoc'h ra vezo ganeoc'h » Goudeze, e lavaras da Dhommas : « Lakit ho piz ama, ha sel- lit ouz va daouarn, tostait ive ho torn, ha lakit-hen e goul va c'hostez, hag hiviziken ne 'z it ket da ober an den diskredik, mes bezit den a feiz beo. » Neuze Thomas en em strinkas da dreid Hor Zalver en eur lavaret : « Va Mestr ha va Doue ! » Ha Jesus a respontas : « Kredet e peus Thomas, abalamour m'e peus guelet. Eurüs re a gred heb beza guelet ! ».

Nak a boan a gemer Hor Zalver evit digeri ho daoula- gad d'he ebestel ! Mont a ra dirazho heb digeri na dor na prenestr, evit merka sklear eo an Oll C'halloudek ; debri a ra dirazho, euz ar boued o deus gantho ; lava- ret a ra da Dhommas touch ouz he c'houlion sakr. Pro- metti a ra d'ezho, eur vech muioc'h, he Spered d'ho sklerijenna ha d'ho c'hennerza. Rei a ra d'ezho, er me- mez amzer, eur galloud burzudus var an eneou : ar galloud da bardouni ar pechejou. Trugarekaomp an Aotrou Doue euz ar galloud-se roet d'an ebestel koulz

ha d'an eskibien ha d'ar veleien var ho lerc'h, keit ha ma pado ar bed.

KENTEL 108. — Pesketêrez Burzudus. Per e penn an Ebestel.

Meur a hini euz an ebestel a oa asambles er Gali- lee, pa lavaras Per d'ezho : « Mont a ran da beske- ta. — Ni a ya ganes, » emezho. Sevel a rejont e bag, mes en nosvez-se ne gemerjont netra.

Pa c'houlaozas an deiz, Jesus a oa en he zav var an aod, mes an diskibien n'hen anavesjont ket. Lavaret a reas d'ezho taoler ar roued en tu deou d'ar vag, ha neuze e pakjont eur maread pesked bras : trizek ha seiz ugent.

Goude m'o devoue debret, Jesus a c'houlennas digant Simon Per : « Simon, mab Ian, ha va c'ha- ret a res-te muioc'h eget ar re-man ? » An abostol a respontas : « Ia, Mestr, gouzout a rit ho karan. — Bes pastor va oanet, » eme Jesus d'ezhan.

Eun eil guech, Hor Zalver a c'houlennas : « Si- mon, mab Ian, ha va c'haret a res-te ? — Ia, Mestr, eme Ber, gouzout a rit ho karan. — Bes pastor va denved yaouank », eme Jesus d'ezhan.

Evit an trede guech, Hor Zalver a reas ar goulen : « Simon, mab Ian, ha va c'haret a res-te ? » Per a cue glac'haret, o klevet goulen diganthan ar me- mez tra evit an trede guech, hag a lavaras : « Mestr, c'houi a oar peb tra, gouzout a rit ho karan. — Bes pastor va danvadezed », eme neuze Jesus.

Perak en deus Jesus great tri c'houlen a garantez digant Per ? Abalamour, marteze, eme ar zent, m'en doa nac'het he Vestr teir guech, en noz ar Basion. Ra- pari a ranke.

Oc'h en em ziskoues alies d'he ebestel epad an daou ugent dervez ma choumas var an douar araok sevel d'an

nenv, Hor Zalver a startea he ziskibien er feiz. Pa la-
keas 'Per da bastor var he oll oaned ha danvadezed,
Jesus a roe d'an abostol galloud da ren an oll gristenien
var he lerc'h. Pa lavare d'he ebestel : « Badezit an oll
boblou », Hor Zalver a roe d'ezho ha d'ar re all var ho
lerc'h, galloud var an oll dud, ha galloud betek fin
ar bed.

Epad an derveziou benniget-se, eme ar zent, Hor Zal-
ver a zavas ar zakramanchou diveza : mil bennoz d'ez-
han !

KENTEL 109. — Hor Zalver o pignat en nenv.

D'an daou ugentved dervez abaoe ma oa savet
euz a varo da veo, Hor Zalver a oa gant he ziski-
bien : « Na bellait ket diouz Jerusalem, emezhan,
mes gortozit an Hini a zo bet promettet d'eo'h
gant va Zad. Iañ, emezhan c'hoaz, en deus badezet
en dour, mes c'houi a yezo badezet er Spered San-
tel, dindan eun nebeut derveziou ». Int-hi a c'hou-
lennas neuze digant Jesus : « Daoust ha breman eo
e savot rouantelezh Israel? »

Hen a respontas : « Va Zad ne zisklerio ket
d'eo'h an amzer hag ar mare ma raio an traou a
zell outhan. Reseo a reot nerz ar Spered Santel a
ziskenno varnoc'h, ha c'houi a yezo va-zestou e
Jerusalem, er Samarie, ha betek ar penn pella euz
ar bed. Goude ar c'homzou-ze, er c'houlz ma oa
gantho var ar menez Olived, Jesus ho bennigas.
epad ma save divar an douar, ha ma sellent outhan.
Eur goabren he guzas dioutho. Epad ma choume ho
daoulagad troet varzu an nenv, daou eal guisket e
guen a deuas dirazho : « Tud a C'halilee, emezho,
perak choum da zellet ouz an nenv? Ar Jesus-se,
e peus gaset o sevel en nenv, a ziskenno adarre
eun deiz, evel m'o peus he velet o pignat. » Neuze
an diskibien a zistroas da Jerusalem.

Ar zent a lavar d'eomp : Jesus a zo savet divar ar-
menez Olived d'ar baradoz, abalamour m'en doa gou-
zanvet ar poaniou kenta euz he Basion oc'h torgen ar
menez-se. Diskleria a ra d'eomp dre eno : « Dre ar
boan eo e c'hounezer ar baradoz. »

« Pa vennigas Jesus he ziskibien, eme an doktored, e
reas douetus bras, sin ar groaz varnho. »



Hor Zalver a zigoras dor ar baradoz d'an oll dud
santel a oa choumet betek neuze el Limbou : Abraham,
Moysez, David. Ha breman, ar baradoz a joum atao di-
gor. Pegen eurus eo pep hini ac'hanomp, pa zonj ez
eus eur plas evithan eno ! Eun tam poan benag a zo da
gaout, guir eo, mes dister eo e skoaz an tourmanchoù
en deus divoasket Hor Zalver evidomp.

Mil bennoz d'ezhan da viken !

**KENTEL 110. — Ar Spered Santel o tisken
var an Ebestel.**

Goude ma oue pignet Hor Zalver en nenv, Ma-
thias a oue savet e renk an ebestel, e leac'h Judas.
An Ebestel a oa choumet e Jerusalem, dastumet

e oant en dro d'ar Verchez, en eur gampr vraz han-
vet ar Senacl; eme ne ehanent da bedi-evit en em
lakât e stad da reseo ar Spered Santel. Deiz ar Pan-
tekost, dioc'h ar mintin, e klevjont, en eun taol-
kount, an ti m'edont ennhan o tregarni penn-da-
benn gant eun trouz bras, a deue euz an nenv, hag
a oa henvel ouz trouz eur gorventen; ha kerkent e
veljont ive evel teodou tan o strinka en ho zouez,
hag o tont da blava, unan var benn pep hini anezho.
Raktal e ouent oll leun euz ar Spered Santel, hag
ec'h en em lakejont da gomz a bep seurt yesiou
dishenvel. Hogen, d'ar mare-ze e oa e Jerusalem.
Juzevien euz a gement korn a zo er bed, tud santel
deut di da dremen gouel ar Pantekost. Ar brud euz
ar pezh a oa c'hoarvezet gant an ebistel o veza eat
dre gear, eur maread euz ar Juzevien-ze en em vo-
das dirak an ti m'edont ennhan, hag oll e ouent
souezet-marô oc'h ho c'hlevet o komz e pep hini
euz ar yeziou a gomzent ho-unan. « Biskoaz kement
all, a lavare ar Juzevien-ze dre ho estlamm, daoust
hag an dud-se n'int ket euz ar Galilee? Penaoz eta
e c'hellont-hi prezeg er yeziou a gomzer er broiou
m'emaomp o chomm ennhô? »... Neuze Sant Per a za-
vaz en he zav, hag an ebistel all en dro d'ezhan, hag
en em lakeas da gomz evel-hen a vouez huel: « Tud
euz ar Judee, ha c'houi oll a zo a chomm e Jerusa-
lem, selaouit ac'hanon!... Jesus a Nazareth, an den-
ze en deus diskouezet d'eoc'h ker sklear, dre ar
burzudou a rea en ho touez, e teue a berz Doue, hag
o peus goulskoude lakeat d'ar marô var eur groaz
dre zaouarn ar vourrevien, an den-ze a zo brema
en env, azezet en tu deou da Zoue, hag hen eo en
deus lakeat hirio he Spered da zisken varnomp-ni. »

Var dro tri mil den a oue badezet en deiz-se, var-
lerô'h prezegenn Sant Per.

Ar Juzevien a lide gouel ar Pantekost evit derc'hel

sonj euz an dervez ma oa bet embannet lezen Doue var
menez Sinai, ar gristenien a lid ar gouel-ze abalamour
m'eo bet diskennet ar Spered Santel var an Ebistel, en
dervez-se ive. Hervez lavarou ar Skritur Zakr e oa, er
Senakl ouspenn ar Verchez hag an daouzek apostol,
diskibien, meur a hini euz ar gragez santel, vardro
c'houec'h ugent den. Pedi a reant a vir galon, ha pe-
naoz ne vijent ket bet selaouet, pa 'z eo guir ar Ver-
chez Vari a oa en ho zouez. Ar Spered Santel a reas
euz an ebistel tud nevez, rak betek neuze e oant bet di-
barfet; en dervez-se e ouent starteat e gras an Aotrou
Doue evit mad; betek neuze o doa aon o prezeg an Aviel,
hag e prennent an dorjou varnho, divar neuze, e tis-
kleriont heb aon lezen Hor Zalver, er Judee da genta,
hag er broiou tro var dro da c'houde. N'o deus mui neb
aon rak an tourmanchoù na rak ar marô.

Divar deiz ar Pantekost, an Iliz a zo savet, rak ar
Spered Santel a zo he buez. Doue eo a ren var ar bed,
an diskibien genta a rent gloar hag honor d'ezhan, ha
divar neuze, ez aint bemdez var gresk. Ar boblou paian
o deuiô, hini hag hini, gant ar c'hanvejou, da adori Mab
Doue marô var ar Groaz evit savetei an oll dud.

KENTEL 111. — Sant Per.

Goude gouel ar Pantekost, pa 'z ea sant Per da bedi
en Templ gant sant Ian, e kavas var he hent eur
paour o c'houlén an aluzen. Daou ugent vloaz e oa
ar paour-ze, ha seizet e oa he izili abaoue ma oa
anezhan. Ar zant a brezegas neuze d'ar bobl, ha
pemp mil den a gredas e Jesus. Doue a roe eur gal-
loud ker bras d'he Vikel var an douar, ma paree
an oll glanvourien a veze goloet gant he skeud, pa
'z ea ha pa deue dre ruiou Jerusalem.

Pa oue tamallet an ebistel dirak barnerien lez-
varn Jerusalem, e ouent skourjezet oll, mes da
c'houde e ouent losket libr. Prestik divezatoch,

e oue merzèriet sant Stephan, ar merzer kenta goude Hor Zalver.

O veza ma rea kristenien an amzer-ze kalz burzudou goude m'o deveze resevet sakramant ar Gouffirmasion, eur Maj pe mar kirit eun doare sorser, he hano Simon, a ginnigas arc'hant d'an ebestel evit kaout ar galloud da rei, evelldho, ar Spered Santel d'an dud. Sant Per a respountas da Zimon: « Ra yelo da arc'hant da netra, ha te ganthan, pa 'z eo guir e kav d'id e c'heller prena donezon Doue. » Goude m'en devoue heuillet ar gristenien epad eur pennad, Simon a droas fall.

Hor Zalver en doa gourc'hemennet d'he ebestel prezeg an Avel d'ar Juzevien da genta; eun dervez ma oa eat sant Per da Joppe; en devoue sklerijen digant Doue evit merka d'ezhan e oa deut ar mare da reseo ar baianed en Iliz. Reseo a reas eta dioc'htu eur c'hantener euz Cesaree, Cornelius he hano, ha divar neuze, an ebestel a yeas dre ar bed, hag a roas ar zakramanchou d'ar baianed koulz ha d'ar Juzevien, gant ma kredfent e Jesus.

Ar roue Herodes, goude m'en devoue merzèriet sant Jakez, a reas prizounia sant Per, mes pedennou ar gristenien genta a oue ken nerzus, ma kasas Doue eun eol da zichadenna an abostol. Sant Per a yeas neuze da joum da Antioch, a oa brasa kear euz ar Zav Heol d'ar mare-ze, hag ac'hano da Rom, mes-trez ar bed.

An abostol kalonek a gasas eur maread tud santel, dre ar bed, evit sikour an ebestel da brezeg an Avel, mes diskuillet e oue d'an impalaer fallak Neron. Taolet e oue, e Rom, er prizoun enk ha tenval hanvet Mamertine, eno e c'hounezas d'ar feiz he c'hoardou, hag e c'hellas ho badezi gant dour eun eienen hag a oa tarzet er prizoun var he beden, eienen hag a red c'hoaz hirio.

Mervel a reas var ar groaz, mes staget e oue, var he c'houlèn, he benn d'an traon : « Ne oa ket d'in, emezhan, da vervel he benn en eac'h, evel he Vestr. »

KENTEL 112. — Sant Paol, Abostol.

Sant Paol a ves great anezhan: guech an Abostol bras, guech Abostol ar baianed. Dishenvel eo diouz sant Paol a Leon, eil patron eskopti Kemper, ganet e Pennoc'hen, e Bro-Zaoz, ha marvet e Kastell. Skeuden sant Paol a Leon a zo eur skeuden a eskop,



o stolia dragon enez Vaz a zo eharz he dreid; e leac'h sant Paol abostol en deus en he zorn deou eur c'hleze abalamour m'eo bet dibennet, hag en he zorn kleiz eul leor evit merka he zeskadurez, he spered dispar hag al leoriou santel en deus skrivet.

Hervez an doktor sant Jerom, an abostol sant Paol en deus great he-unan, evit skigna an Avel, muioc'h a labour eget an oll ebestel all asambles. Evelato, sant Paol n'eo ket bet o selaou kenteliou Hor Zalver pa brezege d'an dud, n'eo ket unan euz

an daouzek a zo bet dibabet gant Jesus he unan prestik araok he brezegen var an eiz eürustet.

Goude beza desket lezen Moysez e skol Gamaliel, e Jerusalem, sant Paol, hanvet neuze Saol, a reas brezel, goude maro ha resurreksion Hør Zalver, d'an ebestel ha d'an diskibien genta. Pa oue lazef sant Stephan a daoliou mein. Saol a zioualle dillad ar re a roas ar maro d'ar merzer. Ar zant a varvas en eur bardouni d'he vourrevien, mes ar Pharisianed hag ar pennou bras a gendalc'has da ober brezel d'ar re a grede e Jesus a Nazareth, ha Saol a oa a du gantho.

Sklerijennet gant Jesus Christ he unan pa oa var hent Damas, Saol, deut da veza sant Paol, a jenchas evel eun all en he leac'h.

Mont a reas da veva he unan gant Doue, epad tri bloaz, pell diouz an dud, araok prezeg an Aziel, neuze e oue sklerijennet gant Jesus. Ober a reas teir veach vras er penn huella euz an Asie vian (*Mineure*), er Macédoine, hag en Ephèse, o prezeg Jesus d'an oll: tud desket ha tud azen.

Tamallet gant ar Juzevien, ha prizouniet er Judee, ar zant a c'houlennas beza barnet e Rom, setu ma oue kaset di. Sikour a reas eno sant Per da brezeg an Aziel, ha skriva a reas kalz lizeri kaer d'ar bobladou tud en doa sklerijennet var ar guir feiz. Taolet e oue er prizoun gant sant Per, ha barnet e oue d'ar maro, er memez dervez ganthan.

Liziri an Abostol sant Paol a zo, gant an Aziel eur sklerijen presius evit an doktored hag an oll gristenien.

FAZI

Er bajenn 220 ez euz eul linenn hag a zoug he lizerennou var ho fenn: chenchit penn d'al leor, evit lenn mad al linenn-ze.



Taelenn an Histor Zantel

Eur ger araok.....	1
Leoriou ar Skritur Zakr ha Skrivanerien	

TESTAMANT KOZ

KENTA PENNAD

Euz Adam betek Abraham

Kentel	1	Krouidigez ar bed.....	5
	2	An den kenta.....	6
	3	Krouidigez an elez. Baradoz an douar	8
	4	Dizentidigez an den. Ar pec'hed orijinel	9
	5	An den kastizet. Eur Zalver pro- mettet	10
	6	Kain hag Abel.....	11
	7	Seth hag he lignez.....	12
	8	An dour beuz.....	13
	9	Sakrifis Noe goude an dour beuz..	15
	10	Tour Babel.....	17

EIL PENNAD

Euz Abraham betek Moysez

	11	Abram, tad bugale Doue.....	18
	12	Galloud Abram	19
	13	Abram a bed evit Sodom.....	20
	14	Sakrifis Abram.....	21
	15	Isaak a zimes da Rebeka.....	24
	16	Agar. Maro Abraham.....	26
	17	Jakob hag Esaü.....	27
	18	Jakob ha skeul an nenv.....	30
	19	Maro Isaak (1845 a. J. K.).....	32
	20	Joseph. He huvreou. Guerzet eo...	33
	21	Trubuill hag eürusdet.....	36
	22	Joseph, rener an Ejipt. He vre- deur a 'z a di.....	39
	23	Benjamin a 'z a d'an Ejipt.....	41
	24	Me eo ho preur Joseph!.....	42
	25	Maro Jakob ha Joseph en Ejipt...	45

26 An den santel Job. Eürusted ha Gualheuriou	46
27 Poan hag eürusted.....	48

TREDE PENNAD

Euz ginivelez Moysez betek ar roue David (1430-1013)

28 Ginivelez Moysez.....	50
29 Moysez galvet gant Doue.....	51
30 Goaligner gastiz an Ejipt.....	53
31 An dekved goalen.....	55
32 Israel a dreus ar mor Ruz.....	56
33 Ar c'hoailled. Ar Mann.....	58
34 Eienen Roc'h Horeb. An Amalestid	60
35 Al Lezen embannet var ar Sinai..	61
36 Al leue aour. Nerz eur beden....	64
37 An Tabernakl. Beleien. Goueliou..	67
38 Bloavez, an ehan. Jubile. Tabernakl benniget	70
39 Spierien e bro Kanaan.....	71
40 Kore, Dathan hag Abiron. Guialen Aaron	73
41 Difizianz Moysez. Maro Aaron. Aer kouevr	74
42 An diviner Balaam.....	76
43 Maro Moysez.....	77
44 Josue. Israel a dreuz ar Jourden. Jeriko	78
45 An heol a joum a zav. Maro Josue..	80
46 Ar Varnerien. Jedeon ha Jephthe...	82
47 Samson, an den krenv.....	84
48 Booz ha Ruth.....	85
49 Samuel ez-yaouank.....	87
50 An Arc'h. Philistined kastizet. Eur Roue	88
51 Ar Roue Saül (1053-1013).....	90
52 David ha Goliath.....	92
53 Saül ha David.....	94

PEVARE PENNAD

*Euz ar roue David betek ar prophet Daniel e
Babylon (1013-605)*

54 David Roue (1013-973).....	96
55 Pec'hed ar roue David Kastizet eo.	97
56 Pec'hed a ourgouill ar roue santel. Kastizet eo ive.....	100
57 David, ar skrivagnier santel.....	101
58 Ar Roue Salomon (973-932).....	103
59 Salomon a zav Templ Jerusalem..	104
60 Salomon. He vuez hag he varo....	105

Ar Judee

RANN KENTA : rouantelez Israel

61 Ar roue Jeroboam.....	107
62 Ar Bropheted.....	109
63 Ar prophet Eli.....	110
64 Ar bara burzudus. Guinien Naboth. Eli d'an nenv.....	111
65 Naaman, an den lor pareet.....	113
66 Bloaveziou diveza rouantelez Israel	114
67 Tobias, divroet e Niniv.....	116
68 Tobias hag an arc'heal Raphael..	118

EIL RANN : rouantelez Juda

69 Josaphat ha Joas.....	121
70 Ar prophet Jonas e Niniv.....	121
71 Ezekias ha Manasses.....	123
72 Judith. Trouc'ha a ra penn Holo- phernes.....	125
73 Josias, ar roue santel	126

PEMPED PENNAD

Euz ar Bropheted e Babylon betek amzer Hor Zalver

74 Pobl Doue e bro Babylon. Ezekiel.	128
75 Daniel, an den yaouank fur.....	130
76 Suzanna, ar c'hreg divlam.....	131

77 Daniel a sklerijenn ar roue var he huvreou.....	133
78 An tri zen yaouank en tan. Klen- ved Nabuchodonosor.....	134
79 Koan vras Balthasar.....	136
80 Daniel e fos al leoned.....	138
81 Daniel ha beleien Bel.....	140
82 Daniel hag al leoned enn eil guech	141
83 Ar Messias a benn 70 sizun.....	142
84 Pobl ar Juzerien goude an harlu..	143
85 Esther, pried Assuerus (478).....	145
86 Esther hag Aman.....	146
87 Esdras ha Nehemias.....	148
88 Heliodor kastizet.....	149
89 Antiokus, ar roue dizakr Eleazar.	150
90 Merzerenti ar 7 Breur Makabee hag ho mam.....	151
91 Mathathias en em zifen.....	154
92 Judas Makabee hag Antiokus.....	155
93 Maro Judas Makabee. Var c'hed euz ar Messias	156

Histor an Testamant Nevez

BUEZ HOR ZALVER JESUS-KRIST

*Mab Doue en em c'hreat den. Eur ger araok. Bro-
ar Judee. Renerien ar vro. Ar Relijion er Judee.
Leoriou an Testamant Nevez. An Aviel. An
Avielerien. Lizeri an Ebestel. An Apokalyps* 161

PENNAD KENTA

Buez kuzet Hor Zalver

Kentel 1 Pobl Israel var c'hed euz ar Messias.	170
2 An Inkarnasion.....	171
3. Ar Verc'hez a 'z a da velet Eliza- beth	172

4 Ginivelez sant Ian Vadezour.....	175
5 Ginivelez Jesus Christ : ar Rouaned.	176
6 Ar Mabik Jesus kaset d'an Templ..	178
7 Ar Famill Zantel a dec'h d'an Ejipt.	
8 Ar Mabik Jesus e kreiz an Doktored.	182
9 Buez kuzet Hor Zalver e Nazareth	184

EIL PENNAO

AN AVIEL PREZEGET : an daou vloaz kenta

10 Sant Ian Vadezour hag Hor Zalver.	186
11 Jesus tentet gant an diaoul.....	187
12 An diskibien genta.....	188
13 Eured Kana.....	190
14 Jesus ha marc'hadourien an Templ. Nikodem.....	191
15 Jesus hag ar Zamaritanenez.....	192
16 Jesus e Nazareth.....	194
17 Jesus var lenn Jenesareth.....	196
18 Eun nebeud pareansou burzudus..	197
19 Sant Vaze, galvet. An den seizet pareet	199
20 Jesus kaseat abalamour da lezen ar zadorn	200
21 An daouzek Abostol	202
22 Testamant Nevez. An eiz eürusdet	203
23 Al Lezen Goz n'eo ket torret, met nevezet	206
24 Lezen ar Garantez	207
25 Bezomp fizians e Doue	209
26 Diskouezit ho karantez dre hoc'h oberou	210
27 An den lor. Ar c'hantener	212
28 Mab intañvez Nain	213
29 Testeni sant Ian Vadezour	214
30 Jesus hag ar bec'herez. Mari Ma- dalen	216
31 Kasouni ar pennoù bras. Beelzebub	217

32 Ar guir eürusdet. Eur Burzud en nenv	219
33 Parabolennou Hor Zalver. An ha- der	220
34 Parabolennou an Draok	222
35 Parabolennou all. Guall amzer dor- ret	223
36 Daou zen diaoulek Jerasa	224
37 Merc'h Jaïr resussitet	225
38 An Ebestel kannadet Hor Zalver. He gelennadurez d'ezho	226
39 Merzerenti sant Ian Vadezour ..	228
40 Distro an Ebestel. Bara kresket..	229
41 Simon Per a vale var an douër ..	231

TREDE PENNAD

AN AVIEL PREZEGET : *Trede Bloavez*

42 Jesus a zo ar bara a vuez	232
43 Merc'h ar Gananeanez	233
44 Pare eun den bouzar ha mut	234
45 Bara kresket eun eil guech	235
46 Pare eun den dall. Testeni kaer sant Per	236
47 Jesus a ra kaoz euz he Basion	237
48 Hor Zalver var menez Thabor	239
49 Ar paotr pareet diouz an diaoul mut	240
50 Jesus o tiskleria eo Doue	241
51 Pare eun den ganet dall	243
52 Ar Pastor mad	246
53 Bezit henvel ouz ar vugale	247
54 An daouzek diskibl ha tri ugent..	249
55 Samaritan madeleuz	250
56 Ar Beden	252
57 Pardoun an ofansou	254
59 Dor striz ar Baradoz. Martha ha ha Mari	225
59 Diskleria a ra Jesus a nevez eo Doue	257

60 Eur pare d'ar zadorn. Beza humbl	258
61 Parabolennou ar goan vras. An diga- reziou	260
62 Danvad dianket. Pez arc'hant	261
63 Ar Mab Prodig	263
64 Ar reseyour disleal	264
65 Ar falz pinvidig ha Lazar	266
66 Lazar savet euz a varo da veo...	267
67 Ar Pharisianed eneb Jesus. An dek den lor	269
68 Pharisian ha Publikan	271
69 An den yaouank pinvidig	272
70 Promesaou Hor Zalver d'he ziski- bien	273
71 Labourerien ar viniek	274
72 Kaoz euz ar Bassion. Dall Jeriko	275
73 Jesus e ti Zachee	277
74 Mari Madalen e koan vras Bethanie	278
75 Henor da Jesus, d'ar zul Bleuniou	279
76 Daelou skuillet var Jerusalem. Je- sus en Templ	281
77 Ar vezen fiez. Pennou bras fallakr.	282
78 Parabolennou ar Pred eured	283
79 Paea an taillou da Zesar	285
80 Ar Gourc'hemen brasa	286
82 Distrui Jerusalem diskleriet pell	
81 An amzer da zont. Prof an intañvez araok	287
83 Mab an den a deuio	288
84 Parabolennou an dek guerc'hez	290
85 Parabolennou ar zervicherien fall ha mad	291
86 Setans ar Varn Ziveza	292

PEVARE PENNAD

Passion ha Resurreksion Hor Zalver Jesus-Krist

87 Oan Pask. Treid gualc'hiet	295
88 Jesus a zav Sakramant an Aoter..	298

89 Digas a rin d'eoc'h ar Spered Santel	299
90 Disparti hag unani	301
91 Peden vras Hor Zalver	302
92 Hano euz ar Basion. Aliou da Ber	303
93 Jesus er Menez Olived	304
94 Jesus guerzet gant Judas	306
95 Jesus barnet gant ar Jusevien....	308
96 Per a nac'h Jesus teir guech	309
97 Ar guzulerien vras. Judas. Pons Pilat.	310
98 Herodes ha Pilat. Jesus ha Barrabas	312
99 Jesus skourjezet, kurunet a spern. Ecce Homo !.....	313
100 Jesus barnet d'ar maro	314
101 Jesus o tougen he Groaz	315
102 Maro Hor Zalver var ar Groaz	316
103 Korf Jesus lakeat er bez.....	318
104 Jesus a zav euz a varo da veo...	320
105 Jesus en em ziskoues da Vari Madalen	321
106 Hor Zalver ha daou ziskibl Emmaüs	323
107 Hor Zalver en em ziskoues d'he Ebestel	325
108 Pesketêrez burzudus. Per e penn an ebestel.....	327
109 Hor Zalver o pignat en nenv...	328

PENNAD DIVEZA

An Iliz Savet

110 Ar spered Santel d'ar Pantekost..	329
111 Sant Per.....	331
112 Sant Paol, Abostol.....	333